



**HAL**  
open science

# Studiañ un nebeud araogennoù brezhonek diwar skridoù eñvorennoù Jarl Priel

Guillaume Morin

► **To cite this version:**

Guillaume Morin. Studiañ un nebeud araogennoù brezhonek diwar skridoù eñvorennoù Jarl Priel. Linguistics. 2024. dumas-04694070

**HAL Id: dumas-04694070**

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-04694070v1>

Submitted on 11 Sep 2024

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0  
International License

Université européenne de Bretagne

Université Rennes 2

**Master Langues, Littératures et Civilisations Etrangères et  
Régionales - Parcours BRETON**

**Studiañ un nebeud araogennoù  
brezhonek diwar skridoù eñvorennoù  
Jarl Priel**

Guillaume MORIN

Rener : Erwan HUPEL

2024

# Trugarekadennoù

Trugarez vras

d'am rener Erwan Hupel, evit e evezhiadennoù hag e alioù talvoudus,

da Dudual Huon, Riwanon Kervella, ha *Kuzul ar Brezhoneg* evit an dielloù hag an danvez zo bet gallet bezañ em c'herz,

da Ivona Konan evit he fasianted a zo bet ivez ur skoazell brizius evit kas al labour-mañ da benn.

# TAOLENN

<u>Trugarekadennoù.....</u>	<u>2</u>
<u>Digoradur.....</u>	<u>5</u>
<u>Berradurioù.....</u>	<u>10</u>
<u>An doareoù araogennoù.....</u>	<u>12</u>
<u>Araogennoù eeun.....</u>	<u>15</u>
<u>DA.....</u>	<u>15</u>
<u>1. Soñj ar fin, ar pal, an ezhomm pe ar redi.....</u>	<u>15</u>
<u>2. Renadenn-dra dieeun.....</u>	<u>19</u>
<u>3. Perc'henniezh.....</u>	<u>22</u>
<u>4 Amzer.....</u>	<u>23</u>
<u>5. Keñver .....</u>	<u>24</u>
<u>6. Enebadur.....</u>	<u>29</u>
<u>7. Renadennoù pe ereoù .....</u>	<u>30</u>
<u>8. Troiennoù.....</u>	<u>33</u>
<u>DINDAN.....</u>	<u>35</u>
<u>1. Izeloc'h (en egor).....</u>	<u>35</u>
<u>2. Darempred beli, urzhaz.....</u>	<u>36</u>
<u>3. E liamm gant ur gorread pe gant an amzer.....</u>	<u>37</u>
<u>4. Heñvelster WAR.....</u>	<u>38</u>
<u>5. Troiennoù .....</u>	<u>38</u>
<u>DIOUZH.....</u>	<u>41</u>
<u>1. Pellaat, dispartiañ.....</u>	<u>41</u>
<u>2. Disheñvelaat.....</u>	<u>43</u>
<u>3. Amzer.....</u>	<u>44</u>
<u>4. Orin, abeg.....</u>	<u>45</u>
<u>5. Dave, keñver .....</u>	<u>46</u>
<u>6. Troiennoù.....</u>	<u>48</u>
<u>DIWAR, A-ZIWAR.....</u>	<u>51</u>
<u>1. Orin.....</u>	<u>51</u>
<u>2. Doare.....</u>	<u>55</u>
<u>3. Dave ha keñver.....</u>	<u>57</u>
<u>DRE.....</u>	<u>59</u>
<u>1. Egor.....</u>	<u>59</u>
<u>2. Amzer.....</u>	<u>61</u>
<u>3. Kont, muzul.....</u>	<u>63</u>
<u>4. Abeg, doare.....</u>	<u>64</u>
<u>E.....</u>	<u>68</u>
<u>1. Egor.....</u>	<u>68</u>
<u>2. Amzer.....</u>	<u>70</u>
<u>3. Stad fizikel, neuz fizikel.....</u>	<u>72</u>
<u>4. Danvez, muzul.....</u>	<u>74</u>
<u>5. Spered.....</u>	<u>74</u>
<u>6. Deskrivañ all.....</u>	<u>76</u>
<u>7. Renadennoù a verk un darempred .....</u>	<u>77</u>
<u>8. Troiennoù.....</u>	<u>79</u>
<u>EVIT.....</u>	<u>80</u>
<u>1. Pal.....</u>	<u>80</u>
<u>2. E plas.....</u>	<u>81</u>
<u>3. Abeg.....</u>	<u>82</u>

4. Goulezet.....	82
5. Dave, keñver.....	84
6. Amzer.....	86
<u>GANT.....</u>	<u>87</u>
1. Emheuliañ, darempred meur a dra pe a zen, tra-den.....	87
2. Tu gouzañv.....	91
3. Doareañ all.....	92
4. Lavarennoù divizout .....	97
5. Oc'h ober un dra bennak a bad .....	98
6. Renadennoù verb dieeun.....	98
7. Stummoù dic'hour .....	101
8. Troiennoù.....	102
<u>OUZH.....</u>	<u>104</u>
1. Egor.....	104
2. Heñvelded.....	106
3. Rannoù ar c'horf.....	107
4. Darempredoù.....	108
5. Renadennoù verboù all.....	114
6. Troiennoù.....	116
<u>WAR.....</u>	<u>118</u>
1. Egor.....	118
2. Amzer.....	122
3. Neuz, blaz, kleñved.....	125
4. Darempred pe levezon meur a dra, a zen, tra-den .....	127
5. Dave .....	131
6. Renadennoù all.....	133
7. Troiennoù.....	135
<u>Araogennoù deveret.....</u>	<u>138</u>
A-benn.....	138
A-du .....	140
A-dreñv.....	141
A-us.....	143
<u>Araogennoù rannadus.....</u>	<u>145</u>
Diwar-goust .....	145
E-touez.....	147
War-dro.....	148
War-lerc'h.....	150
<u>Klozadur.....</u>	<u>155</u>
<u>Stagadenn.....</u>	<u>157</u>
<u>Levrlennadur.....</u>	<u>159</u>

# Digoradur

Mont donoc'h en anaoudegezh eus ar brezhoneg. Sed aze ar mennozh kentañ en deus lakaet ac'hanon da vont gant hent ar master, a dalvez sevel ur c'hounskrid stag outañ. Un ezhomm pa daolen pled abaoe pell amzer eus an daou dra-mañ. Da gentañ e oa kalz traoù dianav din, ha ne oa na souezhus na re chalus din pa ouien n'eus fin ebet d'an deskiñ pa vez kaoz eus yezhoù. Da eil, ha displijet muioc'h e oan gant se, e santen a-walc'h n'aen ket war-raok en deskiñ-se koulz lavaret, daoust ma 'z eus eus ar brezhoneg ur yezh labour ha yezh an tiegezh evidon. Reizh a-walc'h eo moarvat pa zarempred an den mui pe vui ar memes traoù hag ar memes tud en e vuhez pemdeziek peurliesañ. Mont da furchal e lec'h all eta, evit deskiñ pelloc'h. Kaout ur stern gant un disoc'h da dermen, evel ur broud da dizhout ur pal.

A-viskoazh, abaoe m'on krog da zeskiñ ar yezh on bet dedennet gant kompren mont en-dro ar frazenn, disheñvelerioù ar brezhoneg diouzh ar galleg hag e zibarded er c'heñver-se.

Prederiet ivez gant stad hon yezh e meur a geñver : he flas er gevredigezh lakaet da netraig e-kichen hini ar galleg, alese an diaesterioù a sav evit aozañ un treuzkas anezhi a galite, ha gant se holl, ur yezh ac'h a war baouraat, koulz gant ar braz eus ar vrezhonegerien a-vihanik n'o dez ket kement a zigarezioù d'ober ganti, ha gant an nevez-vrezhonegerien a vank skouerioù dave dezhe er boblañs.

Lakaat war-wel penaos eo emdroet, a-fet yezhoniezh, ar brezhoneg implijet er gevredigezh dindan ur c'hantved bennak zo bet soñj kentañ ar pezh a c'hallfe bezañ bet kudennadur ma c'hounskrid. Lakaat keñver-ha-keñver gallekadurioù a gaver er yezh a-vremañ, ha stummoù reizh pe a glot muioc'h gant spered ar yezh. N'eo ket evit ober an hu ouzh ar re a ra gant stummoù na zereont ket, den ebet zo disi. Kentoc'h evit adlakaat war-wel ar pezh a zo e-kerzh an holl ac'hanomp e teñzor ar brezhoneg, teurel evezh ouzh kalite ar yezh, kuit da zegemer tamm-ha-tamm tremen eus emdroadur ordinal ur yezh a zeu diwar zarempred an hini pe ar re zo en-dro dezhi, d'ur yezh divouedet, distreset, ha na ra ket ken gant he reolennoù diazez. Petra eo un emdroadur «ordinal» avat hag adalek pegoulz e teu ur yezh bennak da vezañ divouedet pe distreset ? Sed aze goulennoù a zigor war danvez studiadennoù all.

## **Diwar beseurt korpus labourat ?**

Ar mennozh labourat diwar ur c'horpus skridoù pe skrivagnerien keñveriet, e berr gomzoù

traoù mat ha traoù n'int ket ken mat, zo bet dilezet buan. E pep koulz, e-kerzh ar c'hantved diwezhañ hag e deroù hemañ, e kaver meur a live yezh, ha kement-se ivez gant ar memes den diouzh an degouezh, meur a zoare skridoù (barzhoniezh, lennegezh uhel, skridoù skañv), skrivagnerien dave ha re all na vefent ket aliet da Yann deskard. Arvarus em eus kavet an hent-se. Ha gwell e oa ganin lakaat amzer da studiañ skridoù skouerius a-fet kalite yezh.

Skrivagnerien deroù an XXvet kantved evel Yeun ar Gow, tud Gwalarn evel Youenn Drezen, Jakez Riou pe Abeozen a oa anat din e oa brezhoneg reizh ha talvoudus gante. Puilh eo an danvez gante ha dre veur a wech int bet studiet pe enoret e stumm pe stumm<sup>1</sup>. Soñjet em eus e oa mat mont da deurel ur sell ouzh unan all a oa bet studiet nebutoc'h, hag a zo brezhoneg talvoudus gantañ da lakaat war-wel. Soñj am eus pegen plijet e oan bet gant skridoù Jarl Priel pa oan gant ma lennadennoù brezhonek kentañ. Diasur e oa ma brezhoneg, kavout a rae din ne oa ket kontammet e hini gant an doare ma saver frazennoù e galleg, hag e c'halle gant se bezañ kemeret da skouer evit an deskard ac'hanon. Staliet m'emaon e Treger pell zo bremañ em eus soñjet e vefe war an dro digarez da zaremprediñ ha lakaat war-wel stummoù eus ar vro dre skridoù Jarl Dremel, bet ganet e Priel, tost da Landreger.

Ar pal n'eo ket studiañ yezh Priel avat, pe e vefe kaoz eus ar skrivagner pe eus al lec'h. Studiañ hon yezh voutin, gant skridoù savet gant Jarl Priel da gorpuz.

### **Termeniñ an dachenn studi.**

*Spered ar yezh ha stummoù dibar d'ar brezhoneg. Skouer oberennoù Jarl Priel.* Sed aze an titl kentañ am eus kinniget d'am rener Erwan Hupel, da heul ma holl frederiadennoù hag an eskemmoù kentañ hon doa bet. Diwar 10% eus levr *Va zammig buhez* em boa renablet frazennoù pe lodennoù frazennoù, enne traoù a gaven dedennus studiañ war an tem-se : araogennoù, islavarennoù, ereadur, implij an anv verb (pa ra ar galleg gant un anv kadarn)... Renablet em boa ivez geriaoueg, troiennoù ha troioù-lavar. Div gudenn a save avat. Diaes eo termeniñ "petra eo spered ar yezh" zo bet respontet din gant gwir abeg. Ha re ledan e oa an danvez renablet, pa c'h ae hennezh savet diwar ur meni korpus, d'ober dija ur 25 pajenn bennak a skouerioù, rak-rummataet, met hep na vefe bet c'hoazh an dielfennañ yezhoniel a oan en-sell d'ober.

Divizet em eus neuze mont gant studi an araogennoù. Stag-mat ouzh pep yezh eo an doare ma c'hoari gant he araogennoù ouzhpenn m'eo dibar ar yezhoù keltiek pa reont gant araogennoù displeget (JOUITTEAU, Arbres : Les prépositions). Ha seul bouezusoc'h e brezhoneg dibab

<sup>1</sup> Da skouer : *Geriaoueg ha notennoù yezh Yeun ar Gow* (BIHAN, KERVELLA, 2000), *An islavarennoù e-barzh oberenn Yeun ar Gow* (BRUGALÉ, 2001), *Ur studiadenn gant Stefan Moal diwar-benn an oberenn* An Dour endro d'an Inizi gant Youenn Drezen (MOAL, 2014), *Drezen-Riou-Kerrien : hadenn ar yezh o kelliñ e Bro-Spagn* (ROUZ, 2020), anv Jakez Riou roet da hini skolaj Diwan Kemper, *Fanch Eliès-Abeozen (1896-1963) : sa vie, son œuvre* (DENIS, 1988), *Gwalarn : Histoire d'un mouvement littéraire en Bretagne* (HUPEL, 2010)

an hini a zere, hag an doare d'he implijout, m'eo fonnus o implij en hon yezh. Ar pal amañ n'eo ket sevel ur renabl klok da briziañ pegen stank en em gav araogenn pe araogenn e skridoù ar c'horpus. Kentoc'h gwelet an degouezhioù disheñvel ma ra an oberour gante ha diwar-se kaout un tañva eus an implijoù liesseurt stag ouzh pep araogenn. Dibabet zo bet bodañ skouerioù - frazennoù pe tammoù frazennoù - liesseurt o soñjal eo un doare pleustrek da gompren ha deskiñ pegoulz e implijer an araogenn-mañ araogenn, ha pehini (pere a-wechoù) a zereo diouzh an degouezh-mañ degouezh. Se zo kaoz eo rummet dre implij ar pennadoù ac'h a d'ober lodenn kement araogenn.

Un tañva n'eo ken avat, pa glot ar pezh a zo dastumet amañ gant yezh ha tro-pluenn Jarl Priel. Lakaat a ra war-wel, memes-tra, dibarded ar brezhoneg e-keñver ar galleg, koulz a-fet implijoù stag ouzh pep araogenn, hag a-fet doare da sevel ar frazenn ganti. Ar pezh a gord gant ma mennozh kentañ.

### **Hentenn labour dibabet.**

"Setu roll an araogennoù bet implijet gant Jarl Priel en oberennoù studiet" am boa soñjet skrivañ da zigeriñ ma studiadenn. Diwar lennadennoù e yezhadurioù, geriadurioù ha skridoù all em eus desket buan e oa gwelloc'h bevenniñ al labour d'un nebeud araogennoù hepken, kuit d'ober labour diwar-c'horre. Dibabet em eus dek araogenn eeun en dousennad kinniget evel araogennoù pennañ e yezhadur Kervella. Seul zedennusoc'h a gav ganin int da studiañ ma ra anv ar yezhadurour eus «*un nebeud araogennoù hag a vez implijet kalz aliesoc'h eget ar re all, ha dre-se e kollont alies o zalvoudegezh diazez hag e vezont kavet en un niver bras a droioù lavar a bep seurt*» (YBBK 592). Puilh an danvez gante neuze, ha ken met en oberenn *Va zammig buhez* em eus kavet boued stank. Ar pep brasañ eus an danvez studiet, en ur ger ar c'horpus implijet ganin, zo tennet eus an oberenn-se, daoust ma zo bet pigoset ivez skouerioù e-barzh *Va buhez e Rusia*, hag *Amañ hag Ahont*. An teir oberenn-se bet strollet e stumm trilogiezh gant An Alarc'h Embannadurioù e 2022 evit kinnig er memes levr e holl eñvorennoù bet skrivet gant Priel. Diwar al levr-se eo bet studiet an traoù. Ouzhpennet em eus d'ar studiadenn eizh araogenn gevrennek, a zo disheñvel o doare da verkañ ar gour, gant ar pal lakaat kement-se war-wel .

E pep lodenn gouestlet da gement araogenn studiet e vo pledet gant implijoù a glot ganti a-fet semantik neuze, ha diouzh an dro gant ur sell a-fet e-readur, yezhadur dre-vras ha keñveriañ gant araogennoù all a c'haller ober gante en degouezh-mañ degouezh.

**Un evezhiadenn bennak diwar-benn yezh Jarl Priel a-raok kregiñ.**



Anv e gumun zo bet dibabet da anv pluenn gant hon skrivagner. E Priel (Treger) eo bet ganet an oberour, *Charles Joseph Marie Tremel* diouzh an anv enrollet gant ar velestradurezh, e 1885. Luskellet eo bet gant brezhoneg korn-bro Landreger, a zo stok kumun Priel outi, en ur mare ma oa bev birvidik ar yezh. Hag abred e voe desavet gant e vamm-gozh, brezhonegerez anezhi evel-just, pa gollas e vamm e-kreiz e vugaleaj. Brezhoneger a-vihanik e oa Jarl Priel neuze, hag ur yezh yac'h ha pinvidik a oa bet treuzkaset dezhañ. Troet gant ar skrivañ eo bet adalek e vugaleaj, plijet ma oa da sevel pezhioù c'hoari, ha kalz a draoù en deus bet skrivet, e galleg da gentañ<sup>2</sup> hag ivez e yezhoù all. Galleg en deus kelennet e Rusia a-raok ar brezel bras, jubennour eo bet en arme rusian hag evit ar gouarnamant gall e Pariz, troet en deus oberennoù diwar ar rusianeg, an alamaneg, al latin. E brezhoneg en deus savet pezhioù c'hoari, romantoù, troidigezhioù, kontadennoù.

Padal, hag eñ lennek, war an diwezhat eo en deus desket skrivañ brezhoneg ha n'eo nemet «*1942, e krogas da skrivañ e yezh e gavell*» (RAOUL, 1992, p.400) hag un tamm mat a-drugarez da Roparz Hemon eo hervez Jarl Priel e-unan, evel a lenner el lizher en doa skrivet Priel da Hemon :

«*E-kenver an 8 a viz Gouhere, fellout a ra din skrivan d'eoc'h al lizher-man.*

*Keit ha ma chomin bev, anaoudegez am bo da viken ouzh Fr. Even, eus Landreger, o vezan ma roas din da lenn e-kerzh ar brezel ho levr « Ur Breizhad oc'h adkavout e vro » hag un toulladig niverennoù « Gwalarn ».*

[...]

*M'am eus addisket va yezh, mar don deut da vezan ur c'har-e-vro, m'am eus labouret un tammig evit hor Breizh, c'hwi, Aotrou, a zo kiriek da gement-se...*

[...]

*Bevet « Gwalarn » hag he c'hrouer, ha dezhan trugarez, kant ha kant gwech trugarez» (HUPEL, 2010, p.384)<sup>3</sup>.*

*An dakenn dour eo bet e oberenn gentañ, ur pezh c'hoari «displeget da geñver gouelioù Bleuñ-Brug Landreger, e miz Eost 1942, gant Jarl Priel e penn ur strollad c'hoarierien savet ha renet gantañ» (RAOUL, 1992, p.400). Ronan Huon en doa broudet anezhañ da skrivañ e eñvorennoù hag embannet e skridoù pa oa e penn Al Liamm, en deus adlennet e skridoù brezhonek.<sup>4</sup> En tu-hont da se, dibaboù skrivañ zo bet graet gant Jarl Priel ivez, na glotent ket tre gant an doare ma tistage moarvat. Dibaboù a glot gant ur c'houlz, *Va zammig buhez* ha*

<sup>2</sup> Sekretour Charles Dullin eo bet. Ha Dullin en deus displeget e bezh kentañ c'hoariet e Pariz gant e strollad (VBRU 197).

<sup>3</sup> En «*PRIEL J. "Lettre à Roparz Hemon", le 3/07/1950, 402/26, 7/72, Fonds Roparz Hemon, BN du Pays de Galles*» (HUPEL, 2010, p.384).

<sup>4</sup> Er stagadenn e c'haller gwelet un alberz eus ar pezh c'hoari *En-dro da Vari Sent*, diwar skriverez Jarl Priel, hag eus an eskemmoù gant Ronan Huon.

neket "Ma zammig buhez" da skouer, hag a adkaver diwezhatoc'h gant skrivagnerien ha skrivagnerezed all, evel Anjela Duval.<sup>5</sup>

E-maez eus se, setu ar pezh a zispleg Riwanon Kervella, he deus darempredet Jarl Priel, en he fennad da zigeriñ an drilogiezh a envorennoù skrivet gant Jarl Priel (embannadur 2022 gant *An Alarc'h*). Kaoz zo eus Soaz Sapeur, mamm-gozh ar skrivagner pa skriv kement-mañ : «*Treuzkaset he doa dezhañ ur yezh ha ne oa ket hepken hini e gorn-bro met unan binvidik, leun a fent, a vommoù dic'hortoz hag a droioù-lavar.*». Ur yezh a c'haller kavout danvez talvoudus enni, ivez, evit a sell studiañ araogennoù ha stumm ar frazenn vrezhonek.

Sed amañ un nebeudig skouerioù pigoset e pajennoù kentañ *Va zammig buhez* hag e fin an oberenn-se evit an daou diwezhañ :

- *Darn, eme an dud, a sell gwell verr **ouzh** o bleud hag **ouzh** o brenn; houmañ 'vat a sile ar yod, evel ma lavarar, **dre** lostenn hec'h hiviz (diwar-benn ur vaouez tost-daonet)*
- *bep tro e tape un dra bennak **da** gloukañ, met dalc'hmat e veze, hervez ma kave **dezhañ**, blaz ar re nebeut **gant** e vannac'h; **en** ur ger, liv al lonker a vleunie **war** e fri keit hag un ibil **da** blantañ kaol, ha rusoc'h ar beg-begig anezhañ eget ur vouarenn hanter-veür*
- *jilgammat **war** an daou du a rae ar paourkaezh, krennoc'h eget ur c'hornandon ha tort daonet **war** ar marc'had; hervez ma lavarar **dre** amañ, aet e oa e gof **en** e gein*
- *ne baouezen ket **d'**ober gwad fall ha tremen a raen **gant** hanter-voued, kement ha ken bihan ma teuas an hini gozh, **gant** an druez he devoa **ouzhin**, a-benn d'ober **d'**an den dirollet se plegañ **d'**he c'hoant*
- *Mar degouezh **din** bremañ, **dre** vont **war** goshaat, bezañ gwisket evel ma teu e teu, ur paotrig faro a oan **d'**ar c'houlz-se*
- ***gant** ur vouezhig flour, daoulagad dic'hoarzh **en** e benn, ha **warnañ** stumm un den a zoare, netra n'hellent nac'h **ouzh** un ibil eveltañ*
- *bep tro ma vez komzet **diwar** e benn e sav **em** c'halon truez **outañ**, trugarez ha keuz **dezhañ***

Gwelet a reer pegen stank ha liesseurt eo implij an araogennoù gant Jarl Priel, ha penaos e vo kavet en e skridoù peadra evit a sell ouzh an danvez a fell dimp studiañ amañ.

---

<sup>5</sup> Mouezh Jarl Priel a c'haller klevet o lenn e skrid war lec'hienn *Kuzul ar Brezhoneg* : [https://www.brezhoneg.org/sites/default/files/documents/1.2\\_kenta\\_bandenn\\_-\\_ma\\_zammig\\_buhez\\_-\\_penaos\\_e\\_varvas\\_ma\\_mamm.mp3](https://www.brezhoneg.org/sites/default/files/documents/1.2_kenta_bandenn_-_ma_zammig_buhez_-_penaos_e_varvas_ma_mamm.mp3), ha [https://www.brezhoneg.org/sites/default/files/documents/1.1\\_kenta\\_bandenn\\_-\\_ma\\_zammig\\_buhez\\_-\\_ma\\_zonton\\_yann\\_cor.mp3](https://www.brezhoneg.org/sites/default/files/documents/1.1_kenta_bandenn_-_ma_zammig_buhez_-_ma_zonton_yann_cor.mp3).

# Berradurioù

\* : lakaet dirak un destenn pe ur ger a zo fazius

ag. : anv-gwan

ak. : anv-kadarn

db. : diwar-benn

d.l.e. : da lavaret eo

Emb. : embannadur

gw. : gwelet

udb. : un dra bennak

ub. : unan bennak

vb. : verb

Berradurioù implijet evit al levrinnadur (a vo kavet e fin ar studiadenn-mañ) :

- Korpus :

**AMAH** : *Amañ hag ahont*. En : PRIEL, 2022.

**VAZA** : *Va zammig buhez*. En : PRIEL, 2022.

**VAZA 1975** : *Va zammig buhez*. En : PRIEL, 1975.

**VBRU** : *Va buhez e Rusia*. En : PRIEL, 2022.

- Levrinnadur :

**DBTG** : Vallée, 2014. *Dictionnaire du breton du Trégor-Goëlo et de Haute-Cornouaille*.

**DEVRI** : MENARD, LE BIHAN, KERVELLA. *Devri : Le dictionnaire diachronique du breton*. <http://devri.bzh>

**GBAHE** : An Here, 2001. *Geriadur brezhoneg*.

**GBDT** : LE CLERC, 1908. *Grammaire bretonne du dialecte de Tréguier*.

**GBEC** : CHALM, 2022. *La grammaire bretonne pour tous*.

**GBMK** : KERRAIN, 2010. *Le guide du bretonnant*.

**GBFF** : FAVEREAU, 2018. *Grammaire du breton contemporain - Yezhadur ar brezhoneg a-vremañ*.

**GERVEN** : GERVEN. *Kentelioù yezhadur* Yann Gerven. <https://www.reseau-canope.fr/tes/yanngerven/index.php?p=listenn>

**GMFF** : FAVEREAU, 2016. Geriadur Meur Francis Favereau  
<https://www.skolvreizh.com/geriadur-meur-francis-favereau/>

**GReg** : *Dictionnaire françois-celtique ou françois-breton par le P.F. Grégoire de Rostrenen.*  
Julien Vatar, imprimeur-libraire. Rennes 1732.

**Meurgorf** : Meurgorf, Ofis publik ar brezhoneg. Dictionnaire historique du breton.  
<https://niverel.brezhoneg.bzh/fr/meurgorf>.

**NYVF** : FAVE, 1998. *Notennou yezadur.*

**TDBP** : GROS, 1996. *Le Trésor du breton parlé (Eléments de Stylistique Tégorroise) - Première Partie - Le Langage figuré.*

**VALL** : VALLEE, 1980. *Grand dictionnaire français – breton suivi du «supplément».*

**YBBH** : HEMON, 1979. *Yezhadur Berr ar Brezhoneg.*

**YBBK** : KERVELLA, 1976. *Yezhadur Bras ar Brezhoneg.*

**YIBR** : HEMON, 2000. *Yezhadur Istorel ar Brezhoneg.*

Goude ar berradur e vo kavet niverenn ar bajenn nemet :

- evit GBFF, GERVEN, YBBK, YBBH, YIBR ma raio an niverenn dave d'ar pennad

- evit DEVRI, GBAHE, GMFF, Meurgorf, NYVF, TDBP, VALL pa gloto ar sifr pe an heuliad daveoù gant ar sifr pe an daveoù er rannbennad a glot gant hini an araogenn studiet, pe an termen meneget, el lec'hioù-se.

Da skouer, "TDBP 9" en ur pennad kinniget ganimp diwar-benn GANT a gaso war-du ar pennad 9 gouestlet d'an araogenn-se e TDBP. "YBBK 592" a gaso war-du ar rannbennad 592 er yezhadur, ha neket war-du ar bajenn.

# An doareoù araogennoù

Un 300 araogenn bennak zo e brezhoneg diouzh ar pezh a skriv Mark Kerrain en e levr *Le guide du bretonnant*, ar pezh a dalvez tost-da-vat div wech muioc'h evit e galleg (**GBMK p.53**).

An doare d'o rummañ, koulz hag an termennoù implijet evit renkañ an araogennoù e rummad pe rummad, a c'hall cheñch diouzh al lennegezh a bled gant an dachenn-mañ.

Daou rummad a zeu gant **Mark Kerrain** el levr-se, araogennoù eeun («*prépositions simples*») diouzh un tu, hag araogennoù kevrennek («*prépositions composées*») diouzh an tu all, savet diouzh ar patrom "araogenn eeun + anv", («*préposition simple + nom*») (**GBMK, p.53**).

E *Grammaire Bretonne du dialecte de Tréguier*, **Le Clerc** a ginnig daou rummad ivez, disheñvel avat : araogennoù end-eeun («*prépositions proprement dites*») ha troiennoù araogenn («*locutions prépositives*»). Dindan ar rummad kentañ e vod araogennoù eeun («*prépositions simples*») ha araogennoù kevrennek («*prépositions composées*»). Met ober a ra eus araogennoù kevrennek ar re savet diwar ar rakger «*di*» lakaet dirak an araogennoù eeun «*gant, eus, ouz, rak, war*». (**GBDT, p.104-106**) ha «*war dro*» pe «*diwarbenn*» n'emaint ket e-mesk an araogennoù kevrennek evel e listenn Mark Kerrain met er rummad troiennoù araogenn.

**Geriadur brezhoneg an Here**, e termenadurezh ar ger *araogenn*, a ginnig daou rummad heñvel o anvioù ouzh re Mark Kerrain, ha deskriet evel-henn : «*savet diwar daou c'her ereet gant ur varrennig-stagañ*» evit an araogennoù kevrennek, ha «*n'eus barrennig-stagañ ebet enno*» evit a sell an araogennoù eeun (**GBAHE, p.63**).

*Notennou yezadur Visant Fave* a bled gant 50 araogenn, renket e div lodenn anvet «*An araogennou*» evit an eil, hag «*An araogennou kevrennet*» evit eben ma kaver enni araogennoù gant ur varrennig-stagañ ha re all hep hini ebet (*anez, daved, estreget*, da skouer) (**NYVF p.5-42**)

C'hwec'h strollad disheñvel a ginnig **Eugène Chalm** da renkañ an holl araogennoù, eeun ha kevrennek, diouzh an doare ma verker ar gour, pa c'haller. (**GBEC, p 195**)

**Frañsez Kervella** a ra gant *araogennoù eeun*, *araogennoù kevrennek*, hag ivez *eilaraogennoù* ac'h a da harpañ araogennoù zo ha na «*gemmeskont ket war-eeun gant ur raganv*» (evel a ra *ouzh*, da skouer : *ouzhin, ouzhit...*) . «*Degaset e vez hemañ gant un*

*araogenn all ha gant houmañ eo e kemmesk ar raganv» («a-du, a-du gantañ» da skouer) (YBBK 582, 583, 585). An eilaraogennoù-se a c'hall harpañ araogennoù kevrennek ur varrennig-stagañ enne (*a-us*, da skouer) koulz hag araogennoù hep barrennig-stagañ, ur ger hepken dezhe (*betek*, da skouer) pe meur a hini (*hep gouzout*, da skouer). Troiennoù kemplesoc'h pe hiroc'h a ro ivez evel skouerioù (*en tu-se*, da skouer) (YBBK 585). Kemm a lak, hep reiñ termenou a-ziforc'h avat, etre an araogennoù kevrennek harpet gant eilaraogennoù (evel *a-us*, roet da skouer uheloc'h) hag an «*araogennoù kevrennek hag a vez lakaet hep eil araogenn dirak an anv» (YBBK 587) (war-dro hag e-touez*, da skouer). Ar re ziwezhañ-mañ, evel a welimp en hon studiadenn, ne gemmeskont ket evel ar re gentañ : merket e vez ar gour gant an anv-gwan-perc'hennañ lakaet e-kreiz (*war-dro, war he zro*, da skouer). En hon studiadenn, evit aesaat an diforc'hañ, e refomp gant an termenou "**araogennoù deveret**" evit ar re gentañ (skouer *a-us*) ha gant "**araogennoù rannadus**" evit an eil re all (skouer *war-dro*) ar pezh a glot mui pe vui gant an doare m'eo termenet an traoù gant Hemon ha Favereau, evel a zo displeget pelloc'h. Kervella a ro ivez ur roll eus araogennoù ur rummad all, a c'hall bezañ lakaet dirak un anv, met «*na vezont ket kavet dirak ur raganv» (abaoe, e-barzh, war-zigarez, goude*, da skouer) (YBBK 589).*

Setu penaos eo kinniget an traoù gant **Roparz Hemon** e *Yezhadur berr ar brezhoneg*. «*An araogennoù implijet aliesañ a vez kenstaget gant ar raganvioù-gour» ( evit, evitañ*, da skouer) (YBBH 199). "**Araogennoù eeun**" a refomp anezhe en hon studiadenn, hag an termen-se a zeu gant Hemon pelloc'h. Ar re all a renk e tri rummad : «1) *ar re a vez kenstaget gant ar raganvioù-gour dre harp un araogenn all» («a-dreñv din»*, da skouer) (a glot gant hon rummad "araogennoù deveret") «2) *ar re a vez rannet ; 3) ar re na vezont ket morse kenstaget gant raganvioù-gour» (YBBH 200). En e rummad 2) e lak «araogennoù kevrennek, furmet gant un araogenn eeun hag un anv-kadarn», («war-dro», da skouer, hag «a-berzh») (YBBH 202) a renkomp-ni dindan an anv "araogennoù rannadus" neuze.*

Klotañ a ra ivez hon doare da dermeniñ an traoù gant ar pezh a zo e *Grammaire du breton contemporain Yezhadur ar brezhoneg a-vremañ* gant **Frañsez Favereau**. Ma lakaer a-gostez ar pevare rummad a vod an araogennoù digemm («*prépositions invariables»*, GBFF 780-781) ha na vint ket studiet ganimp, e kinnig Favereau tri rummad all : «*prépositions basiques» (GBFF, p.408-418) (a gloto gant hon "araogennoù eeun")*, «*prépositions dérivées» (GBFF, p.418-421) ("araogennoù deveret")*, «*prépositions fractionnables» (GBFF, p.421-423) ("araogennoù rannadus")*.

Teir lodenn ac'h aio d'ober hon studiadenn neuze.

An hini gentañ a blede gant araogennoù eeun. Al lodenn vrasañ eo ivez rak soñjet hon eus e vefe kavet aze ar muiañ a zanvez liesseurt : «*un nebeud araogennoù hag a vez implijet kalz aliesoc'h eget ar re all, ha dre-se e kollont alies o zalvoudegezh diazez hag e vezont kavet en un niver bras a droioù lavar a bep seurt*» a skriv Kervella (**YBBK 592**). Diwar al listenn a ro evit an araogennoù-se ne bledimp ket gant A nag EUS, ac'h afe moarvat d'ober o-unan ul lodenn gwall vras, ha n'hon eus ket miret DIGANT na RAK, a seblante dimp bezañ nebeut a implijoù stag oute<sup>6</sup>. Kement-se zo dibaboù graet evit chom gant ur studiadenn na vefe ket re hir met n'eo nemet o plediñ gant ar re-se ivez a-benn ar fin, e c'halljemp kadarnaat ha mat e oa hon soñj pe get. D'an nav araogenn a chome hon eus ouzhpennet un dekvet, DRE, pa soñjemp e vije peadra da gaout implijoù liesseurt dedennus, ha kadarnaet eo bet gant hon studiadenn. Gant-se e vo studiet an araogennoù eeun-mañ :

**DA, DINDAN, DIOUZH, DIWAR, DRE, E(N), EVIT, GANT, OUZH, WAR.**

Divizet hon eus plediñ ivez gant un nebeud araogennoù kevrennek a zo disheñvel o doare da verkañ ar gour.

An eil lodenn a ginnigo peder araogenn deveret :

**A-BENN, A-DU, A-DREÑV, A-US**, kement ha kinnig araogennoù savet holl diwar A met a gemmesk o gour gant eilaraogennoù disheñvel : "gant" ha "da" dreist-holl.

Hag en trede lodenn e vo gwelet peder araogenn all :

**DIWAR-GOUST, E-TOUEZ, WAR-DRO, WAR-LERC'H.**

Dibabet int bet evit plediñ gant araogennoù kevrennek savet diwar araogennoù eeun disheñvel hag a vo bet studiet el lodenn gentañ : "diwar", "e", "war".

An div lodenn gouestlet d'an araogennoù kevrennek zo pell berroc'h evit an hini gentañ gouestlet d'an araogennoù eeun, o vezañ m'eo strishoc'h an implijoù a-fet ster gant ar re-se.

---

<sup>6</sup> Berr eo pennadoù DIGANT ha RAK e yezhadur Kervella (**YBBK 643 k**)-**644** ha **638**) koulz hag e GBAHE.

# Araogennoù eeun

## DA

### 1. Soñj ar fin, ar pal, an ezhomm pe ar redi

#### Soñj ar fin :

- Dilec'hiañ betek an degouezh :

Goude verboù a verk an dilec'hiañ, da zegas ur renadenn-doareañ d'ar verb (renadenn lec'hiañ) «*e kaver an araogenn da gant e ster diazez*» (YBBK 608), ar pal en dilec'hiañ :

*poent eo din kerzhout d'ar gêr, anez-se trubuilh am befe digant Soaz Sapeur* (VAZA 15).

Sed aze respont tad-kozh Jarl Priel d'ur martolod all a ginnige dezhañ *chom gantañ ER vourc'h da c'hoari kartoù*. Kerzhout EN e liorz, E kêr, ER vourc'h, evel chom ER vourc'h, a zeskriv un ober a bad er memes lec'h. Er frazenn-se avat e lakaer war-wel e kerzho gant ar pal en em gavout er gêr.

Diwar dremen, taolomp pled ouzh an dra-mañ. "Poent eo din mont d'ar gêr" zo un droienn implijet alies war ar pemdez. Gant "kerzhout" e plas "mont" e titourer ouzhpenn e vo graet war-droad, kement-se gant daou c'her hepken, ar verb hag an araogenn da heul.

Er skouer-mañ, gant ar memes verb,

*evel torfedourien o kerzhout d'ar groug* (VAZA 55)

eo splann e talvez d'«*ober anv eus termen un dilec'hiadenn*» (GBAHE I.A1), al lec'h degouezhout. Keñveriañ gant an araogenn OUZH e troienn GBAHE, **kroug** : «*mont ouzh ar groug : mont d'en em grougañ*». N'eo ket an dilec'hiañ a verker.

Ma zo anv eus un den, ha neket ul lec'h, e vo lakaet DAVET e-lec'h DA (NYVF, 1).

Skrivet e vefe neuze "torfedourien o kerzhout DAVET o bourev".

Skouerioù all, gant verboù all :

*A-zruilhadoù e tirede ar saverien o fri d'ar gousperoù war zigarez skrignal hag ober goap*



(VAZA 27) ;

*e-giz ar mitizhien diwar ar maez a rede da varc'had Landreger gant ur pikol podad laezh gwintet sonn war o zal (VAZA 52).*

Aze ivez, redek WAR un dachenn-sport a c'haller, pa chomer warni, dres. Ul laer bennak a c'hallfe redek E marc'had Landreger, kuit da vezañ lakaet e grabanoù warnañ gant ar c'henwerzhour en dije gwelet anezhañ. Met er frazenn-se DA a verk n'emañ ket c'hoazh rener ar verb, *ar mitizhien diwar ar maez*, e Landreger.

Damheñvel eo amañ :

*n'am boa nemet pemp pe c'hwec'h vloaz pa voe douget d'ar vered (VAZA 13).*

Moarvat e oa bet douget mamm ar skrivagner ER vered ivez : pa oa enni dija, a-raok lakaat an arched en douar. Gant implij an araogenn DA, avat, e teskriv an dilec'hiañ eus ar gêr d'he lec'h diwezhañ.

Disheñvel an traoù, en div skouer-mañ avat. N'eo ket ul lec'h a zeu gant an araogenn DA, ha savet eo ar frazenn en un doare all :

*Douget on bet a-viskoazh da garout al loened (VAZA 19)*

*ur gwaz ken sioul, ken douget d'ar pedennoù hag ul leanez pilpave (VAZA 32)*

Kaoz a vo eus se el lodenn diwar-benn ar renadennoù pe ereoù, pelloc'h.

*kel lies gwech ma ranke ar mailh ostiz-se pignal d'ar gambr vras da gas un toullad bannac'hoù d'an dud (VAZA 49)*

«Pignat er c'hrignol» a gaver e geriadur *An Here* memes-tra : E a c'hall merkañ ur pal a dizher goude ur verb dilec'hiañ (GBAHE, e, I.A.3).

*Treiñ kein ha mont kuit? Ya, met da belec'h? (VAZA 130)*

Ret eo an araogenn DA aze. "DA belec'h emaut o vont ?" a ranker lavaret ha neket "\*Pelec'h emaut o vont ?" ha gant-se "Ya met \*pelec'h" a vefe ur fazi peogwir ne vefe ket merket an dilec'hiañ.

- Ar fin en amzer :

*Brudet eo pleg-mor Biscaye dre ma ren ennañ un amzer vrein ha kriz eus an eil penn ar bloaz d'egile (VAZA 118).*

N'eo ket eus dilec'hiañ zo kaoz aze met eus fin ar prantad.

- Emdroadur :

*E-keit ma 'z oa he fried o vale bro war wor (...) e tegouezhas da Soaz Sapeur **mont da vagerez d'an Trevoù da** gastell Koatriou (VAZA 17).*

DA «*marque le but après un verbe de mouvement*» a skriv Jules Gros (TDBP 1). Skouerioù hon eus gwelet ma oa anv eus al lec'h degouezh, hemañ o vezañ pal an dilec'hiañ, ha skouerioù all a welimp ma vez merket ar pal hep na vefe a zilec'hiañ. Amañ emeur gant an droienn *mont da* a verk un emdroadur.

Daoust ma teu an araogenn DA goude ar verb *mont* n'eo ket an dilec'hiañ a zo merket e *mont da vagerez*. Dirak un anv-kadarn, DA a c'hall talvezout «*d'ober anv eus ur vicher, ur garg*». (GBAHE V.2). En daou implij all eus DA a gaver er skouer-se zo anv a zilec'hiañ avat : *d'an Trevoù da gastell Koatriou*. Jules Gros a renk an implijou-se er memes lodenn. Hag e weler er skouer-mañ eo stag pep tra ouzh ar memes pal.

Gant-se, taolomp pled : teir gwech DA diouzh renk pa lavarfed e galleg «*dans le château de Koatriou*».

Evel er frazenn-mañ ivez ma reer gant DA div wech :

*Kent na zimezas, **mont** a rae bemdez **da** labourat **da** di an aotrou Goaster* (VAZA 21) (ha neket "\*e ti").

Favereau a veneg an dra-se : «*Emplois fréquents en cascade*» (GBFF 792).

Lavarennoù all a gaver gant "mont da", evel an droienn "mont da get" amañ :

*Aet eo ar Frankiz **da get!*** (VAZA 113).

DA «*a dalvez da c'heriañ un emdroadur*» (GBAHE VI). «*Mont da fall. Mont da sot*» ivez.

Ha gant ar memes mennozh, "dont da vezañ" :

*pemp breur, tud dister a-walc'h o tont war an douar – “Arthur n'avait pas de richesses! ” eme ar glaskerez-bara – ha daoust da se **deut da vezañ** senedourien, priñsed, rouanez, pe zoken... impalaer* (VAZA 131).

Setu, gant ur verb all, ur skouer ma vez anv eus ur garg ivez :

*ar besadmiral Boué de Lapeyrère, bet Prefed e Brest hag **anvet, nevez 'oa, da vinistr** gant e vignon Briand* (VAZA 136).

DA a liamm *anvet* ouzh e renadenn a verk ar garg-se.

Ar pal :

Sellomp en-dro ouzh ur skouer bet gwelet uheloc'h :

*kel lies gwech ma ranke ar mailh ostiz-se **pignal d'ar gambr vras da gas un toullad bannac'hoù d'an dud** (VAZA 49)*

Dedennus eo aze ivez gant an araogenn DA o tont div wech da heul ar verb *pignal*. Gwelet a reer e c'hall DA bezañ dirak ur verb ha dirak un anv-kadarn, dirak daou anv-kadarn, dirak daou verb. Liesdoare eo.

Amañ, *pignal* a ra an ostiz gant ar pal degouezhout en ul lec'h, ar gambr, kement-se gant ur pal seveniñ un ober : kas un toullad bannac'hoù d'an dud.

An eil anv-verb, renadenn d'ar verb kentañ hag a verk an dilec'hiañ (*pignal*), zo degaset gant DA gant «*e wir dalvoudegezh*» a bal (**YBBK 277 b**)

*Rankout a reas ivez Jaureguiberri hag e ofiserien **kluchañ** war ballennoù kaer **d'evañ te** gant bent ha gwestell, **ha da selaou hep rannañ grik ar jubennour** (VAZA 124) .*

Un araogenn all, WAR, eo a zo lakaet da heul ar verb *kluchañ* evit doareañ al lec'h. An araogenn DA, hag a zeu div wech goude zo lakaet dirak bep a verb, hag a verk pep hini ur pal.

*tud a feiz **daoubleget da drugarekaat** an Aotrou Doue evit kened ur bed en deus bet ar vadelezh da grouiñ* (VAZA 128).

Mennozh diazez ar pal a gaver e degouezhioù all, e-maez al lec'hiañ.

*un draïg **aozet a-ratozh da gas d'ur mirdi** (VAZA 34)*

Splann eo ar pal amañ gant *aozet a-ratozh*

Skouerioù evel-se a vo kavet er rannbennad 8.

*Rankout a rae 'ta poaniañ war e gozhni **da c'hounit e vara** (VAZA 15)*

Merkañ a ra an dalvoudegezh a zo da boaniañ abalamour d'ar pal lakaet a-geñver. Gros : DA «*indique un rapport de destination, d'intention, de but, d'utilité*» (**TDBP 3**).

An darempred-se a gaver er skouer-mañ :

*mar bize degouezhet d'ar republikaned ober o zaol tri deiz kentoc'h, e vije bet tapet roue, rouanez hag ofiserien gall p'edont hanter-bred, ha ni o **seniñ dezho** gwellañ m'hellemp* (VAZA 122).

Mesket eo an araogenn hag ar gour a glot, ha n'eo ket dirak ur strollad anv-verb eo lakaet DA.

DA a gaver en ur stumm all meneget e geriadur *An Here*. Renadenn un anv-kadarn e c'hall bezañ an anv-verb lakaet dirak, hag evel-se e verk an arc'hwel : «*Ur forc'h da balat. Ur mekanik da wriat*» (GBAHE V.1).

Talvoudegezh :

*fellout a ra din menegiñ un darvoud dister a-walc'h, met biken ne gavin gwelloc'h pleg da ziskouez anat ha splann pegen dilorc'h ha distro e veze an darempredoù etre ofiserien ha martoloded* (VAZA 136)

*unan ha kant tenn evit e Veurded, hag unan warn-ugent ouzhpenn da drugarekaat ar ganolierien war zouar* (VAZA 145)

Ma n'emeur ket tre gant an arc'hwel, emeur gant mennozh an dalvoudegezh ha n'emañ ket pell diouzh ar pal kennebeut.

Ezhomm, redi :

An ezhomm, ar redi a vez geriet gant an droienn "kaout DA ober udb."

*Krog oc'h marteze da intent gant peseurt tud am beze d'ober* (VAZA 132)

Kaoz zo aze eus keneiled Priel na vezent ket soutil bepred met a ranke mat ober gante. Ne zibaber ket piv a vez lakaet war e lestr, en arme bepred.

*Netra n'ho pije bet da damall d'e zistagadur* (VAZA 148)

Aze, ma n'eo ket ar redi, eo an ezhomm a zo a-dreñv. Kontañ a ra diwar-benn an tsar Nikolaz Aleksandrovitch bet kelennet galleg dezhañ e skol-veur Pariz. N'eus redi ebet da damall da zistagadur un tsar evel-just, met ezhomm na vije ket bet zoken, ken brav e teue gantañ diouzh a zeskriv Priel.

*ne voe ket da dortañ, rankout a rejomp teurel eor hep dale* (VAZA 99)

Er stumm nac'h e kaver an droienn-se, hag e dostaat a c'haller ouzh an droienn "arabat e oa" er stumm gra, met troiennoù evel-se a gaver er stumm gra : "da ziwall zo" da skouer.

## 2. Renadenn-dra dieeun

Gant DA e vez degaset renadennoù d'ur bern verboù.

*ur paotr brav e vijen bet war gein ul loen-kezeg; nemet hag unan plouzet evel hini straed Siam a vije bet **roet din**, petra an diaoul am bije graet me gant ur marc'h (VAZA 135)*

Favereau : «*le datif (d'attribution)*» (**GBFF 794**)?

*Piv 'oar, ha du-hont ivez e vije marteze **degaset** da zibenn-pred pep a bodig sukr **d'ar gouvidi**? (VAZA 123)*

Anv zo a reiñ *pep a bodig sukr d'ar gouvidi* rak traoù da zebriñ int. Emeur aze gant ar pezh a ginnig Favereau neuze, hag ivez gant an dilec'hiañ abalamour d'ar verb. Taolomp pled eo disheñvel evit *da zibenn-pred* er memes frazenn : emeur aze gant ur renadenn amzer degaset gant DA.

Goude verboù all e vo lakaet DA da zegas ur renadenn dezhe.

**krozal da ub. :**

*eno e veze **krozet dezho** (VAZA 14)*

***krozal a rae dimp** didruez (VAZA 44)*

**pokat da ub. :**

*Damañ din va faotr bihan,” eme ar glañvourez dare da vervel, “**ma pokin dezhañ** c'hoazh ur wech!”(VAZA 46)*

*ur chopinad hini kreñv az po mar **pokez d'ar verc'h** yaouank-se (VAZA 111)*

Pa seller mat, n'emeur ket pell aze ivez diouzh mennozhioù ar fin hag al lec'h degouezh. An pok, evel ar c'hroz pa vez anv eus krozal, zo kaset d'an hini a resev. Fin e veaj eo en ur mod, e lec'h degouezhout, ha tizhet eo ar pal (pal dilec'hiañ, eus ar vuzell d'ar jod, amañ).

**treuzkas da :**

***treuzkaset** he devoa, am eus aon bras,ar si-se **d'he mab henañ** (VAZA 24)*

**teurel da ub.:**

*kement e **taole dezhañ** e vab Salaun m'ho pije touet e oant daou c'hevell (VAZA 22)*

Kement ha "tennañ da" e talvez. Jules Gros a ginnig ur skouer damheñvel met gant an amzer gevrennek : *Ar verh he-deus tôlet d'he zad*, la fille tient de son père (**TDBP 2**).

**tevel da ub. :**

*“Nom de va ene!” e vleje eñ a-nerzh e benn, “**tavit din**, rak pep ki a zo roue en e di. (VAZA 50)*

Verb-gwan eo "tevel" : ne c'haller ket lakaat ur renadenn-dra ouzh e heul (**YBBK 212**). Implijet e vez kalz hep renadenn dieeun zoken. Posupl eo lavaret "tavit !" evel a c'haller lavaret "roit peoc'h !" pe "roit peoc'h din !". Er skouer-mañ *din* a bouez war ar fed eo poazh an

den gant ar rebechoù a vez graet outañ gant e vamm-gaer. N'eo ket an trouz hepken, a c'hallfe direnkañ tud all, a lak anezhañ da zistagañ ar gerioù-se.

Padal, ma seller en-dro ouzh ar skouer a-raok e weler ne c'haller ket tennañ an araogenn DA. "Teurel d'ub." N'en deus ket ar memes ster ha ha "teurel" e-unan.

Goude troiennoù-verb e tegas DA renadennoù ivez.

#### **dougen bri :**

*hep mar, gallout ha zoken dleout a rae Tregeriz **dougen bri d'o c'henvroad holl-vrudet** (VAZA 56)*

*Graet o devoa kement-se, emichañs, evit **dougen bri d'ar Vikel Vras ha d'an Aotrou 'n Eskob**, hag e gwirionez, deut oa ganto* (VAZA 37)

Liammet eo kement-se ouzh mennozh an doujañs. Hag aze eo mat teurel pled e lavarer "doujañ DA ub." ha "kaout doujañs EVIT ub." evel a weler er pennad diwar-benn EVIT. E Devri eo kinniget "dougen doujañs DA" gant ar memes ster a zoujañs (**DEVRI, doujañs, II.2**).

Met mennozh an doan eo a zo gant "bezañ doujañs DA ub." : «*doujans a ioa d'ezhan*» (**DEVRI, doujañs, II.1**). Ar memes mennozh a gaver ivez en termenadur-mañ tennet eus geriadur *An Here* : «*aon en devez ub. dirak ub. all en deus beli warnañ*» gant ar skouer «kaout doujañs OUZH ub.» (**GBAHE, doujañs, 1**).

#### **ober vil :**

*re vil, war a grede dezhañ, e veze graet d'an Aotrou Doue en ilizoù, ha hervezañ re griz holl e oa ar veleien* (VAZA 26)

Er skouerioù-se emeur gant «*lavarennoù anezho ur verb hag ur renadenn eeun*». Un toullad skouerioù all a seurt-se a ro Kervella : "treiñ kein", "treiñ penn", "ober vad", "ober droug", "ober plijadur" (**YBBK 610 b**).

Ha setu da-heul un nebeud skouerioù all ma teu DA goude anvioù-kadarn zo (**TDBP 12**).

*Krog eo adarre merc'h Sapeur **da zougen kañv d'he bramm kentañ!*** (VAZA 17)

Met amañ eo an araogenn WAR a zeu da heul kañv :

*Siwazh, ranket am boa **ober va c'hañv war ar gensonerezh**, ur gevrenn a denne kalz re d'ar jedoniezh* (VAZA 117).

Emeur aze gant daou verb disheñvel, "dougen" hag "ober", a ra gant araogennoù disheñvel en degouezh-se : "dougen kañv DA" hag "ober e gañv WAR".

*kerse 'oa ganin **da Grec'h-Eliez*** (VAZA 51)

*Ne oa ket c'hoazh peurc'hraet kañv ar paourkaezh pa stagas va zad da lonkañ: dre geuz d'e wreg, eme an amezeien.* (VAZA 59).

Skouerioù all zo roet gant Favereau : "diegi da", "c'hoant da", "damant da" en e bennad «*da entre un mot et un infinitif*» (GBFF 803). Jules Gros a veneg ivez "ezhomm da" en e lodenn «*après certains substantifs*» (TDBP 12). Gant-se e weler e c'haller renkañ an traoù e meur a lodenn, diouzh an doare ma seller ouzh an araogenn. Heñvel e vo en hon studiadenn.

### 3. Perc'henniezh

Ar berc'henniezh pe an aparchantiz a verk an araogenn DA (NYVF 2).  
*un nebeudig gwerzh butun d'ar vatezh* (VAZA 122)

*ez aen alies da Gervarzhin o vezañ ma veve eno ur c'henderv-kompez d'am zad* (VAZA 131)  
DA a dalvez ivez da c'heriañ ar gerentiezh (GBAHE III.A.1).

E liamm gant ar berc'henniezh e c'hall merkañ ur perzh ivez :

*ur veleganez he daoulagad glas-oabl, ha dezhi ur mousc'hoarzh doanius* (VAZA 19)

Disheñvelaat a ranker ur pezh a zo d'an den, liv e vlev da skouer, diouzh ur berc'henniezh dibad. Gant-se n'haller ket ober gant GANTI e plas DEZHI, nemet ma vije kaoz eus mousc'hoarzh ur maskl lakaet warni da skouer, hag a c'hallfe tennañ diouzh he dremm.

*ur pezh kolier lem-laka, dek meudad dezhañ* (VAZA 25).

Un doare all a c'haller ober gantañ, oc'h implijout an araogenn A e plas DA, hag en ur mod disheñvel e vo savet al lavarenn : "Ur c'holier A zek meudad". Daou zoare disheñvel int met degas reont ar memes tra : ar renadenn-anv (YBBK 363 b)II).

*Kanaam – ne ouie den anv all ebet dezhañ – a oa ur c'hozhiad berr berr e zivhar* (VAZA 111)

Gallout a ra DA merkañ an doug, ar berc'henniezh, anezhe eilsterioù d'e verk diazez a zo ar pal en dilec'hiañ a zispleg Kervella (YFFK 607). Er skouer-mañ e komzer eus an anv douget gant an den, pe a rae an holl gantañ d'an nebeutañ.

## 4 Amzer

Un darn vat eus ar renadennoù-amzer zo degaset gant an araogenn DA (**YBBK 609**).

*boubou diston ar raned e-kerzh an hañv da serr-noz* (VAZA 125)

*d'an dibenn-pred kristen ebet n'en divije bet truez ouzh hor c'hof* (VAZA 122)

DA « *a dalvez da verkañ ur c'houlz* » (**GBAHE I.B.1**). Ha kment-se ivez pa vez anv eus ur c'houlz n'eo ket anavezet :

*den ne oar da be vare e teuio war e dro al laer diarc'hen ma reer dioutañ an Ankoù* (VAZA 128)

Keñveriañ gant ar skouer *Ya, met da belec'h ?* uheloc'h, ma ranker ober gant DA pa zo anv eus MONT kuit ha dilec'hiañ neuze. Amañ e c'hallfe bezañ graet hep an araogenn DA avat.

*D'an deiz ha d'an eur merket, e voemp heñchet hogos dre laer betek un tammig strizh-douar* (VAZA 124).

Gwelet Jules Gros : DA «*marque un rapport de temps* (l'époque, l'âge, le jour, l'heure) (**TDBP 6**).

Kement-se a c'hall bezañ en amzer-dremenet, en amzer-vremañ, en amzer da zont :

*"Da viz Here", emezi, "kerkent ha ma tigo adarre ar c'hloerdi, kaset e vo ar paourkaezh minor-mañ da Landreger"* (VAZA 51)

*gallout a rafe bezañ degemeret da vloaz er c'hlas eil-izelañ kloerdi bihan Landreger* (VAZA 40).

Kement hag "a-benn bloaz" e talvez, hag implijet e vez evit merkañ an dazont, dre ret. Ne c'hallfe ket bezañ skrivet "da vloaz e \*oa bet degemeret"

Se a c'haller keñveriañ gant lavarennoù evel "da zimeziñ emaint". Bezañ DA + anv-verb : «*d'ober anv eus udb zo bet divizet, a zle c'hoarvezout*» (**GBAHE IV.A.1**), en dazont neuze. "Da c'hoarvezout e oa" a c'haller lavaret ivez. En amzer-dremenet emañ, met o komz eus an dazont e-keñver ar mare ma komzer.

Merkañ an urzh zo renkañ an traoù en amzer. Gwelet Favereau : «*référence au temps*» (**GBFF 797**).

*ret e veze da gentañ pellaat diouzh Brest, Cherbourg hag an Oriant* (VAZA 115)

*"Aotrou Prezidant," emezañ, "plijet ganeoc'h en anv Doue, mont er penn kentañ!" "Nann da," eme ar c'hozhiad, "ober a rin evel ar re all; pep hini d'e dro evel da goves."* (VAZA



141)

E galleg, "*chacun son tour*" hep araogenn, ha "*chaque chose EN son temps*". E brezhoneg DA er skouer-mañ evel e *pep tra D'e goulz*. Taolomp pled ivez er skouer-mañ ouzh *da gofes* evit *da vare kofes*.

## 5. Keñver

Mennozh ar c'heñver, gant un dra bennak pe unan bennak, a verk DA a-wechoù.

Lec'hiañ e-keñver an dra-mañ tra :

*bete serr-noz e veze klevet o vouboual hag o veogal eus an eil korn d'egile* (VAZA 81)

Amañ n'eo ket an dilec'hiañ, evel er pennad 1, a zegas an araogenn DA. Kaoz zo eus ur c'heñver el lec'h gant implij an div araogenn A ha DA enebet (**YBBK 595**).

E plas DA e kaver ivez BETEK da enebiñ ouzh A/EUS. Met en degouezhioù-se he devez neuze EUS talvoudegezh resis ADALEK (**YBBK 595**) evel er skouer-mañ :

*anez-se e vefe al levr-mañ hiroc'h c'hoazh eget lost ki Bastiou a dape eus Landreger betek an Trevoù* (VAZA 112)

Dangorelezh :

Gant deskriañ un dra bennak e-keñver sell pe soñj unan bennak emeur war tachenn an dangorelezh, da lavaret eo ar pezh a zo subjektiv. Ar c'heñver-se a c'hall bezañ degaset gant an araogenn DA.

An dangorelezh a c'hall bezañ degaset gant troiennoù n'o deus verb displeget ebet.

*bez' oa, din da welout, levenez e-leizh e kalon an den santel* (VAZA 37).

Unan bennak all a c'hallfe chomp hep gwelet kement-se. E-keñver ar pezh a wele-eñ avat, bezañ a oa levenez. Heñvel eo er skouer-mañ :

*ur bern skorngrec'hiou, darn diouto ken uhel, dimp da welout hag ar C'hreizkêr e Kastell-Paol* (VAZA 98),

dreist-holl p'eo start priziañ mat. E plas *dimp da welout* "diouzh a welemp" a c'hallfe bezañ bet skrivet, gant un araogenn all hag ar verb displeget en amzer a zere.

Jules Gros a ro ur skouer all dedennus en e bennad «*selon, de l'avis de, d'après la pensée de,*

*l'impression de*» diwar-benn DA :

«*Penegwir me a veze mezo dezo ordinal*, puisque j'étais toujours ivre selon eux» (TDBP 8).

Aze emañ an araogenn hec'h-unan da verkañ soñj an dud-se, a-walc'h eo.

***D'am meno***, *bez' eo ar pleg-mor-se kaerañ tra 'zo dindan an heol.*(VAZA 127)

Ne vo ket soñjet heñvel gant an holl evel-just.

Skouerioù all gant Favereau ouzhpenn da "da veno ub." : «*d'am grad*, à mon gré, *d'am santimant*, à ma convenance» ouzhpenn da «*d'am soñj*» anavezet mat evit «*l'avis*» (GBFF 798).

Gant DA e c'haller ivez sevel an adverb "gouez da" (DEVRI, gouez 3, I):

***Gouez d'am c'herent all***, *tamm ebet ne denne na d'e dad na d'e vamm* (VAZA 24).

«*Peurvuiñ ez eus ur ger-rener o c'houzañv pe oc'h ober ar pezh a vez roet da c'houzout gant ar verb*» (YBBK 220). Er frazenn "pokat a rin da Drifin" ec'h eo rener ar verb, merket gant ar gour kentañ unan, a ra an ober, ha DA zo lakaet dirak an hini a resev. Lavarennoù all zo direner, evel ar re a ra anv eus an amzer : "glav a ra". Da verkañ ar subjektiviezh e c'haller ober gant ur seurt lavarennoù all, al lavarennoù dic'hour. Deskrivañ a reont un dra bennak e-keñver ar pezh a denn d'an den ha na vo ket heñvel gant unan bennak all.

Lavarennoù dic'hour.

*en em zibab a raen gant va benveg, an trombon, met arabat e oa din* strivañ da bignal uheloc'h (VAZA 117)

Unan bennak all, barrekoc'h, a c'hallfe moarvat.

***brav e veze dimp-ni***, *sonerien, o vezañ ma tegouezhe dimp mont alies a-walc'h er maeziou da vale ha d'ober chervad* (VAZA 53)

Evit a sell ar soudarded all a zo er c'hazarn, n'eo ket lavaret eo brav ar jeu kement-se. Evit ar sonerien meneget er frazenn avat, bez' ec'h eo.

***"ur vezh eo dezho"***, *emezañ, "leuskel hor Salver da baouranteiñ e noazh-pilh, koulz eo lavarout, war e groaz"* (VAZA 26)

N'eus nemet an hini a gomz moarvat a soñj zo peadra da gaout mezh, ha n'eus ket mezh GANTO (a c'haller tostaat ouzh *mezh o deus*).

Gwelet ivez troiennoù "gwell eo din/ganin", "kerkoulz eo din/ganin". Displegañ a ra Kervella diwar-benn DA lakaet goude al lavarennoù dic'hour e «*verkfe muioc'h un nerzh diavaez, tra ma verkfe GANT emañ ar stad meneget dindan youl ar renad*» (YBBK 645).

“Arsa, Yann,” eme va zad, “**petra eo dit** leuskel ar re-mañ d’ober `vel ma karont? Kent na vo pell, ne vano netra eus ar gwele benniget-se!” (VAZA 131).

E-mesk implijoù DA, Mark Kerrain a ginnig «*parfois (mais rarement !)* avec le verbe **bezañ**, notamment pour exprimer un accord, un projet» (GBMK 5. p56).

Ar skouer-mañ a c'haller keñveriañ gant ar goulenn a glever aliesoc'h : "Mat eo dit ?"

Aze e ra an den un evezhiadenn d'ar paotr Yann diwar-benn un ober graet gantañ, pe en degouezh-se diwar-benn ar fed chom hep ober netra kentoc'h, ha na sav ket a-du gantañ. N'emeur ket pell diouzh "penaos e c'hallez". E galleg e c'hallfed treiñ se gant ur goulenn evel "qu'est ce que tu as a à", "ça ne te fais rien de", "comment peux-tu" pe zoken, diouzh an ton, hag an gendestenn, "n'as tu pas honte de".

### Verboù dic'hour.

Ouzhpenn d'al lavarennoù gant "bezañ" ha "kaout", e c'haller sevel verboù dic'hour gant DA (YBBK 610). An dra-se a c'haller ober gant verboù gwan pe dic'hour hag ivez gant verboù kreñv. «*Ar verboù kreñv pe verboù TRE eo ar re a c'hell lakaat an ober da dremen war ur renaden-dra pa vezont en tu-gra*», ar c'hontrol d'an tu-gouzañv a welimp gant GANT (YBBK 208) : gant «*va zud a garan, kanañ a ra ur ganaouenn*» e weler mat ec'h eo *karout* ha *kanañ* verboù kreñv.

Verboù zo ne c'hallont ket bezañ kreñv.

**c'hoarvezout da** : *mar c'hoarveze d'ur martolod all e bediñ ur sulvezh da noz* (VAZA 15)

**dichañsañ da** : *Ne zichañs ken din parañ va selloù war vouchoueroù lirzhin gwechall* (VAZA 36)

**degouezhout da** : *degouezhout a rae d'am zad-kozh ha d'e bried tañva evel-just tammou a bep seurt met en em ober a raent eus ar c'hentañ evel gwenn ha melen ur vi* (VAZA 15)

**fellout da** : *va lakait war he barlenn, eno e fell din mervel* (VAZA 48)

Ne vije ket heñvel dibab gant unan all moarvat, met he c'hoant eo. Ouzhpenn d'ar pezh a zo a-fet ster, disheñvel eo ar verboù *degouezhout* ha *fellout* er c'heñver-mañ : *degouezhout* n'eo ket ur verb dic'hour dre ret : "degouezhout a ran bep beure da 8 eur 30" da skouer. Evit a sell "fellout", ur renadenn diecun a rank bezañ dalc'hmat ouzh e heul. "Falvezout" en deus ar memes ster, ha dic'hour eo ivez, dre ret, met GANT a lakaer kentoc'h e-lec'h DA (YBBK 221).

Mat eo gouzout ivez e c'hall bezañ sterioù all da *fellout da* :

*Mar felle d'e wreg plegañ d'ur reuziad poan-spered, ne veze ket pell Biz Kamm o frealziñ anezhi* (VAZA 15)

Amañ "fellout da a dalvez kement ha "bezañ war-nes, war var da". (**DEVRI III.A.4** : «être sur le point de»). Ur stumm kreñv a gaver ivez e Devri, gant "fellel", lakaet asambles gant "fellout" ar stumm a implijer bremañ. E geriadur ar Gonideg : «*Manquer son coup, tr. «fellel e daul»»* (**DEVRI, fellel, fellout, fallout, I.A**).

Setu un nebeud skouerioù all gant verboù kreñv lakaet da vezañ dic'hour gant an araogenn DA lakaet da heul.

**frankaat da ub** : *"Ma ! frankaat a ra dezhi, ouzh a ra !" "Frankaat eme darn-all, ya, mar karan, hag un tamm mat zoken"* (VAZA 45)

Distaget gant tud en-dro da vamm Jarl Priel goude ma vefe bet tapet louzoù ganti : "soulager" e galleg.

**karout da** : *jistr ha gwin da bep pred, kement ha ma kare da bep hini* (VAZA 51)

Reizh e vije bet ar memes frazenn hep an araogenn DA. Daoust hag un diforc'h zo etre an daou stumm ? E GBAHE, evit termenadur "karet", pa vez verb kreñv eeun, hep DA neuze, e kaver : kaout karantez, kaout plijadur vras gant udb. (**GBAHE, karet, I**). Disheñvel diouzh ster skouer Priel eo. Kinnig a ra GBAHE ar stumm dic'hour "karet da ub." evel ur stumm rannyezhel gant ar ster "kaout c'hoant", ar pezh a glot amañ (**GBAHE, karet, IV**). E Devri, estroc'h evit ar sterioù "kaout plijadur vras" pe "kaout karantez" e kaver meur a skouer gant "karet" hep DA : «*na garan ket ar pun*», «*aimer, trouver bon*» (**Devri, karout/karet/kariñ, I.4**), «*evel ma kar : comme il veut*» ( **Devri, karout/karet/kariñ, II.8**), «*(ar) pezh a gar : ce qu'il veut, son content*» (**Devri, karout/karet/kariñ, II.2**).

Ma adaptomp skouer Priel, e plas *kement ha ma kare da bep hini*, e vefemp gant ar memes mennozh o skrivañ hep hon araogenn "kement ha(g ar) pezh a gare pep hini" pe "kement ha ma kare pep hini".

**krediñ da** :

*ne gred ket din e vefen ken kalon vat ha hi* (VAZA 17)

*krediñ a rae din en divije truez ouzhin ar Mabig Jezuz* (VAZA 45)

Er frazenn-mañ ivez e vije bet posupl ober hep an araogenn DA ha skrivañ "krediñ a raen". Muioc'h a bouez e vije bet lakaet d'an ober (*krediñ*) marteze, ha moarvat e fell d'ar skrivagner lakaat war wel eo eñ, e-keñver re all na reont ket, a gred, pa oa faziet avat.

*o vezañ ma komze hanter-c'halleg ha hanter-vrezhoneg e krede d'an holl o devoa d'ober gant ur gwaz desket kaer* (VAZA 108)

**plijout da** : *dre ma plije dezhañ kanañ ar gousperoù e brezhoneg* (VAZA 27)

«Daoust dezho kaout un displegadur reizh e vez displeget ivez, gant un dalvoudegezh aratozh, un nebeud verboù war skouer fellout», en o mesk "kavout", "plijout", "soñjal" (YBBK 222).

**terriñ da** : *Ken prim all e torre d'he glac'har* (VAZA 17).

Sellomp ouzh ar pezh a ginnig geriadur *An Here* evit ar verb "terriñ" : «v. dic'hour TERRIÑ DA, WAR UB., UDB. : sioulaat, koll nerzh, koll lañs» (GBAHE, terriñ, III) met a c'haller kavout e stumm vb. gwan (GBAHE, terriñ, II.2) gant ar memes ster : "e torre he glac'har" a vefe neuze.

Vb. kreñv eeun (GBAHE, terriñ, I.B.1) e c'hall bezañ ivez evel-just. Met disheñvel e vefe ar ster : "e torre he glac'har" a dalvezfe e paouezfe glac'har an den glac'haret da heul un dra bennak deuet digant rener ar verb, "he gwaz a rae ar furlukin ha kerkent e torre hemañ he glac'har" da skouer.

Verboù pe troiennoù diwar stummoù all.

Amañ n'emeur ket gant lavarennoù dic'hour. DA a verk e-keñver piv pe betra eo graet an ober pe deskivet ar stad a zo meneget. O vezañ m'eo lakaet da zegas renadenn ar verb e vefe posupl renkañ ar skouerioù-mañ er pennad diwar-benn ar renadennoù pe ereoù ivez.

**bezañ trec'h da** : *Neuze 'vat e roen beuz d'ar jalod-se... gant ma vijen trec'h dezhañ* (VAZA 31).

E-keñver an degouezh meneget, hag e-keñver an den-se e vije trec'h ar skrivagner. Bezañ trec'h WAR unan bennak a c'haller lavaret ivez (GBAHE, trec'h, 1), met gwech ebet ne ra Priel gant an araogenn-se, ha bepred eo ar stumm gant DA a vez implijet gantañ.

**ober da** :

*ober a raen dezhañ displegañ darvoudoù eus e vuhez krennard* (VAZA 21)

*graet e oa bet din mont d'am gwele evel boaz* (VAZA 46)

Skouerioù all gant "ober da ub. ober udb." zo en ul lodenn all pelloc'h diwar-benn troiennoù.

**plegañ da ub.** : *tamm ebet ne oa tuet da blegañ da Soaz Sapeur* (VAZA 50).

E GBAHE e kaver : «plegañ da ub., ouzh ub., da youl ub. : ober diouzh e youl» (GBAHE, plegañ, II). Ar ster kontrol da hini "trec'hañ DA ub." eo well-wazh "plegañ DA ub.". Met hep an araogenn e c'hall bezañ ar memes ster, gant "plegañ ub." a dalvez «trec'hiñ» (GBAHE, plegañ, I.B.2), hag er c'hontrefed daoust ma n'eus araogenn ebet amañ ivez, "plegañ e benn, e zaoulagad" a zo «diskouez ez asanter, anzav ez eur trec'het» (GBAHE, plegañ, I.A.2).

**plegañ da udb.** : *Mar felle d'e wreg plegañ d'ur reuziad poan-spered, ne veze ket pell Biz*

*Kamm o frealziñ anezhi (VAZA 15)*

E Devri e kaver «*Plegañ da udb. : se soumettre à qqc*» (qqc : quelque chose) (**DEVRI, plegañ II.2**). En hon skouer e c'hallfe bezañ troet e galleg gant "céder" moarvat. GBAHE a ro evit "plegañ da ober udb." : «*asantiñ e ober*» (**GBAHE IV.2**). N'emeur ket pell diouzh ar pezh a zo bet gwelet gant "plegañ da ub."

Gallout a reer renkañ an droienn adverb "da vihanañ" el lodenn-mañ.

*deus d'ar gêr da ziskuizhañ ul lajadig da vihanañ (VAZA 43)*

Ar c'heñver live a zo merket aze, an hini izelañ (**GBAHE IV.B.2**) : war ton an ali e talvez lavaret d'an den ne c'hall ket ober nebeutoc'h. Heñvelster : "da nebeutañ" gant ar memes araogenn, "d'ar muiañ" o vezañ enepster (**YBBK 561 b**).

## 6. Enebadur

DA a c'hall geriañ un enebadur etre meur a dra. «*Dezhañ da vezañ kozh-mat n'eo ket divemor koulskoude*» (**GBAHE IV.B.4**). Favereau : «*L'opposition : dit da c'hoarzhin même si tu ris*» (**GBFF 799**). Ha Jules Gros : «*bien que, quoique : Hennez a zo c'hwezet, dezañ da vezañ paour*» (**TDBP 10**).

N'eus ket bet kavet e *Va zammig buhez* skouerioù gant an araogenn DA displeget ha lakaet dirak "da" : "din da", "dit da", "dezhi da"... Marteze ne ra ket Priel gant an doare-se. Diwar "EVIT da" e sav frazennoù da verkañ an enebadur avat, ha gwelet e vo kement-se el lodenn diwar-benn EVIT.

An enebadur gant DA a gaver memes-tra dindan pluenn Priel gant "daoust DA" ha "goude DA" :

*daoust din da stourm ouzh ar c'hoant kousket, krog e oan da vorediñ pa ziredas va zad d'am bete (VAZA 56)*

*Ha goude d'he bro bezañ hini ar meskl hag an istr, ne ouie ket petra 'oa ar meuz a veze an deiz-se kement a skrap warnañ, rak evit doare n'eus ket ar seurt kregin war-dro Rochefort (VAZA 161).*

Un enebadur a lak Priel war-wel da-gentañ : eus bro ar boued-mor eo ar plac'h met ne anavez ket an ourmel a zo kaoz anezhe a-raok. An displegadenn a zeu da heul avat, degaset gant an

araogenn "rak" : ourmel na gaver ket war-dro Rochefort.

## 7. Renadennoù pe ereoù

Amañ ne c'hall ket DA kemmeskañ gant ar raganvioù-gour, digemm e chom.

Ere etre daou verb e c'hall bezañ DA :

**reiñ da c'houzout** : *kement ha reiñ da c'houzout d'an holl e oa eno listri brezel* (VAZA 100)

Amañ an eil verb, "gouzout" kemmet e *c'houzout* war-lerc'h DA, zo ur renadenn doareañ d'an hini kentañ, *reiñ*, ha degaset eo gant DA. Titouriñ a ra war ar pezh a roer. Tostaat ouzh "reiñ da gompren".

**chom da** : *arabat eo din chom da dermal, anez-se e vefe al levr-mañ hiroc'h c'hoazh eget lost ki Bastiou a dape eus Landreger betek an Trevoù* (VAZA 112)

**dirollañ da** : *Neuze e tirollas Ivonañ gozh da skrignal* (VAZA 18)

**diwall da** :

*diwall da ouelañ* (VAZA 47)

*diwallit, jaloded, da fistilhat re dost d'an ebeulezed-se: anez-se e vo graet un tamm krennañ deoc'h el lec'h m'ouzoc'h!* (VAZA 124)

«An araogenn a gaver an aliesañ o tegas un anv-verb renadenn eo DA». Her c'havout a reer goude verboù zo : pe ur verb gwan evel "derc'hel", "diwall", "mont", "kregiñ" pe ur verb kreñv evel "pediñ", "lakaat", "lezel" (YBBK 277 a). Ur skouer gant "pediñ" zo amañ, un tamm pelloc'h.

**kaout da** : gw. §1. ezhomm, redi

**mirout da** : *mirout da voustrañ ha da zirenkañ bleuniou reizhet en un doare ken dispar* (VAZA 43)

**stagañ da** : *Pevar bloaz am boa nemetken pa stagas va mamm d'ober gant he fennhêr un denig desket* (VAZA 18)

Ne zeu ket an anv-verb diouzhtu goude DA dre ret. Gallout a ra bezañ un dra bennak all etre an daou verb, anezhañ ur renadenn all.

**mirout ouzh ub. da ober udb.** : *den ne vane da virout ouzh an intañv d'ober diouzh ma troje en e benn* (VAZA 50)

Ur renadenn dieeun zo degaset gant OUZH aze.

**pediñ ub. da ober udb.** : *e c'hourc'hemennas din ar c'habiten **pediñ** an aotrou Farigoul **da zont d'e vete*** (VAZA 136)

Ur renadenn-dra eeun eo *an aotrou Farigoul*, lakaet etre ar verb hag an araogenn DA a zegaso ur renadenn all.

Goude un anv-gwan e c'hall bezañ lakaet DA :

*“Damañ din va faotr bihan,” eme ar glañvourez **dare da vervel**, “ma pokin dezhañ c'hoazh ur wech!”*(VAZA 46)

«Renadenn an anv-gwan a vez staget outañ atav gant un araogenn, peurvuiñ DA, a-wechoù unan all» (YBBK 521).

*Tremen a rae Lom evit ur gwaz ken sioul, ken **douget d'ar pedennoù** hag ul leanez pilpave* (VAZA 32)

Diwar-benn *leanez pilpave*, notenn an embanner : «*Ur plac'h yaouank kozh pe un intañvez hag a vez dalc'hmat e-dro d'an iliz*» ; notenn ar skrivagner e VAZA 1975 : «*fausse dévote*».

**Douget on bet a-viskoazh da garout al loened** (VAZA 19)

Gwelet hon doa e verk DA an dilec'hiañ betek an degouezh : kaoz a oa eus mamm Jarl Priel *pa voe douget d'ar vered*.

Met en div skouer amañ, anv-gwan eo "douget", ha degas a ra DA renadenn an anv-gwan : «*gant DA eo ivez e vez degaset renadenn ur verb kevrennek stummet gant bezañ hag un doareenn, evel bezañ trec'h, bezañ mestr, bezañ douget h.a.*» (YBBK 610)

Peuzheñvel eo talvoudegezh "douget da" ouzh hini "troet da" aze. Gwelet e Devri : «enclin à» pa vez "douget" anv-gwan hag en droienn "bezañ douget da" + vb. pe ak (**DEVRI, douget**) .

En ul lodenn all, pelloc'h, e welimp ur skouer all gant *douget d'ar red*, m'emeur gant un droienn adverb.

Gant-se e weler pegen liezimplied e c'hall bezañ an araogennoù, an ereadur a ditouro peurliesañ. Ha diouzh implij araogenn pe araogenn e cheñch ar ster, da vat. A-wechoù n'eo ket a-walc'h an ereadur, hag ar gendestenn a vo ezhomm : "douget d'ar groug" a c'hall bezañ un torfedour bennak bet kastizet d'ar marv, evel a c'hall bezañ ur barner bennak techet da gondaoniñ betek re diouzh ar stumm-se.

*hini en hon touez ne oa **na kar na par da** Rothschild na da Vanderbilt* (VAZA 122)

«*An anvioù-gwan doareañ-mañ a c'houlenn war o lerc'h un araogenn degaset gant DA : par, ingal, kontrol, dreist*» (YBBK 615).



Un nebeud skouerioù all :

*din da vezañ ar primañ gwellañ e-tailh da c'honit va bara (VAZA 63)*

*Biskoazh betek-henn n'am eus gwelet divalavoc'h den eget e Veurded Carlos II. Evel-just ne oa ket kiriek da gement-se (VAZA 121).*

*Fañch 'vat (...) a veze marteze re dechet da c'hoari anezhi (VAZA 32)*

*Tonket e oa da gemer skouer diwar Alan, e vreur eil-henañ (VAZA 49)*

Goude anv-kadarn e c'haller lakaat DA ivez :

*emañ bremañ an dud o klask tu d'en em zizober diouzh al lazherien-se (VAZA 88).*

Diwar-benn mangousted enbroet da lazhañ an naered e kont Priel.

*gant ur ger hepken e veze Kanaam e-tailh da c'houlenn peseurt tra en devoa ezhom da gaout (VAZA 111)*

*c'hoant am befe d'evañ ur bannac'hig layout! (VAZA 111)*

Klozomp ar pennad-mañ gant div skouer disheñvel o ster.

An het :

*gallout a ra n'eus forzh piv dont war an douar deiz ganedigezh (..) Landru pe ar rouanez Mari-Antoneta, hep bezañ tonket (...), Doue da viro, da vezañ dibennet (VAZA 13)*

En amzer da zont emañ ar verb da-heul DA met stummoù gant un anv-verb da-heul DA a c'haller kavout ivez. Favereau e-barzh «L'optatif» a ro ar skouer-mañ : «*Doue d'ho telc'hen bepred er memes kleñved ! Que Dieu vous conserve toujours dans la même maladie !*» (GBFF 802 ).

Hag an danevelliñ :

*Roet e voe din 'ta un higenn hag ul linenn, ha me da chom ur pennad brav ken didrouz hag ur sac'had gwinizh, gant va fenn stouet ganin a-us d'ar mor. (VAZA 100)*

*Diwar va ali, ez eas raktal en ur stal-levrioù ne oa ket anavezet enni, hag eñ da "brenañ" – war dermen, evel-just! – tri bikol levr war an dro (VAZA 162)*

Dirak un anv-verb eo e vez lakaet (YBBK 613 d) ha dirak ar ger a verk an hini a ra an ober.

## 8. Troiennoù

Un nebeud troiennoù a c'haller menegiñ, daoust ma c'haller renkañ lod anezhe e lodennoù all, diouzh an doare ma seller ouzh an traoù. Evit "troienn" e kaver e geriadur brezhoneg *An Here* : «*kenstrollad gerioù, eur boazet da implijout a-gevret, a ya d'ober un unvez prezeg*» (GBAHE, troienn, 3).

**ober da ub. ober udb. :**

*e-pad ar pred e veze graet dezhañ evel-just kanañ gwerz Mariana (VAZA 109)*

*Tremen a rae alies e Priel ur c'hlasker-bara a rae d'an holl vugale krenañ dirazañ (VAZA 110)*

**damañ da :** *Damañ din va faotr bihan,*” eme ar glañvourez dare da vervel, “*ma pokin dezhañ c'hoazh ur wech (VAZA 46).*

Diwar-benn *Damañ da* : evezhiadenn an embanner (2022) : «*Roit din*» ; evezhiadenn ar skrivagner e VAZA 1975 : «*Damañ da : roit din diouzhtu*».

Gant-se, adkavout a reer ar mennozh kinniget er pennad 2 diwar-benn ar renadennoù-tra dieeun, hag ivez hini ar pennad 1 gant soñj an dilec'hiañ betek an degouezh pa zeu *Damañ* diwar *Deuit amañ (DEVRI, damañ)*.

*douget d'ar red gant va zad o pignal gant ar viñs teñval (VAZA 46)*

Skouerioù all gant "douget da" hon eus gwelet a-raok. Amañ emeur gant un droienn-adverb, d'ober anv eus an doare ma reer an traoù (GBAHE da, IV.B.1).

Setu un nebeud troiennoù-verb all.

**dont da vezañ :** *pa zeuas da vezañ va mamm-gozh ha war an dro va maeronez (VAZA 18)*

Da dostaat ouzh skouer "mont da vagerez" er pennad 1 : afer a emdroadur zo aze ivez.

**dont da soñj :** *neuze e teuas din da soñj va fezh-c'hoari (VAZA 29)*

**tennañ da :** *tennañ a ran dezhi e-keñver meur a dech (VAZA 17) ; tennañ a rae e baourkaezh vuhez d'ur gozh vuoc'h dreut, trenk put he laezh (VAZA 23)*

Tennañ d'ub., d'udb. : «*bezañ heñvel pe zamheñvel outañ*» (GBAHE, tennañ IV.B.1).

Kavout a reer DA evel eilaraogenn (YBBK 585 ha 616) en ur bern araogennoù deveret (GBFF 770). Niverus-bras eo ar skouerioù hag ul lodenn gouestlet d'an araogennoù deveret zo kinniget pelloc'h er studiadenn-mañ. Sed amañ un nebeudig skouerioù memes-tra, gant an

eilaraogenn DA :

**damdost da** : *plijout a rae dezhañ kanañ e sonioù hag e werzioù war lein **un dosenn damdost d'e di** (VAZA 27)*

**e-dro da** : *Dilhad martolod a veze ar peurliesañ **e-dro din** (VAZA 31) ; an archerien o trolal **e-dro d'e garr brav** (VAZA 57)*

**en desped da** : *Netra ne raen a-hed an deiz nemet barailhat en ur faziañ, kement ha ken bihan ma teuis **en desped d'am youl vat** da intent e oan ken tonket da labourat en un ti-bank hag ur velc'hwedenn da vezañ paotr al lizheroù (VAZA 72)*

**panevet da** : ***panevet d'ar soudarded** war-droad eus Gwengamp ha d'ar houzarded eus Dinam, tanfoeltr gouel ne vije bet ar sulvezh-se (VAZA 58)*

**rageneb da** : *Savet e oa ar c'hloerdi **rageneb da Grec'h Eliez** (VAZA 40)*

# DINDAN

## 1. Izeloc'h (en egor)

*savet e vo **ul leur-c'hoari** er porzh a-dreñv, **dindan ar c'hled** bras ma stign ennañ ar vartoloded o c'houez da sec'hañ* (VAZA 82)

Ar c'hled pe ar gwasked meneget aze a c'hall e doenn gwareziñ ar c'hoarierien hag o averstourien e-pad an abadennoù.

Kalz e vez implijet an araogenn-mañ da lec'hiañ en egor un dra bennak « *izeloc'h eget ar pezh a zo a-uc'h dezhañ* » (**GBAHE I.A.1**). An araogenn gevrennek A-US he deus ar ster kontrol evel a weler er skouer-mañ :

*reuz a save e-dro hag **a-us dimp pe dindanomp*** (VAZA 116)

Kentoc'h evit «*udb.*» evel m'eo meneget aze e geriadur An Here, e c'hall bezañ kaoz eus ub. pe eus ul lodenn eus ar c'horf :

***he fenn** kuzhet ganti **dindan ar pallennoù gwele*** (VAZA 170).

Hag el lavarenn-mañ :

*krenañ a rae va zivhar **dindanon*** (VAZA 84)<sup>7</sup>

en defe gallet ar skrivagner ober hep an araogenn p'eo anat d'al lenner pelec'h emañ e zivc'har. Aze emañ da skeudenniñ pouez ar c'horf, n'emañ ket divhar ar skrivagner evit e sammañ koulz lavaret, en degouezh-se m'emañ tapet gant an droug-mor. Kement ha reiñ da soñjal e c'hallfe kement tra a zo a-us d'e zivhar, hag ar c'horf a-bezh da-heul, kouezhañ izel war leur ar vag.

Ober gant ur yezh skeudennet a blij da Jarl Priel :

*Ha va c'hemener mac'hagnet da lammat er porzh ken prim hag ur bleiz e vefe **sanket** dezhañ ur skod-tan **dindan e lost**.* (VAZA 33).

Skeudennet aze an toull a gaver dindan lost ar bleiz, hag ar prim ma fellas d'ar c'hemener tec'hout, goude ma vefe bet komzet fall outañ gant Soaz Sapeur, mamm-gozh ar skrivagner.

---

<sup>7</sup> va divhar ivez e VAZA 1975

## 2. Darempred beli, urzhaz

Dre astenn, pa n'eus ket amañ anv a egor, e c'hall merkañ an araogenn DINDAN emañ unan bennak izeloc'h evit unan bennak all en un darempred a veli pe a urzhaz.

Splann eo e bed an arme :

*hag e pleustre pep hini gant e venveg **dindan renerezh** aketus hag hegarat un is-ofiser (VAZA 79),*

*ar pikol kazarn-se a oa evel-just **dindan veli** un den a renk uhel (VAZA 81).*

Amañ e c'hallfed enebañ DINDAN ouzh an araogenn WAR, daoust m'eo DIWAR an hini a zo araogenn enep WAR. Rak m'emañ ar c'hazarn *dindan veli un den a renk uhel* en deus an dense beli WAR ar c'hazarn-se. «*Kaout beli war udb. : avoir de l'influence sur qqe chose, déterminer son fonctionnement*» (DEVRI, beli, 2). Ar beli a c'haller kaout war ub. : «*avoir du pouvoir sur qqn*» (DEVRI, beli, 3);

Ha pelloc'h o komz eus ar rener a oa war al lec'h :

*gwech ebet ne dremene hep ober anaoudegezh gant kement paotr yaouank nevez zegouezhet **dindan e bav** (VAZA 81);*

Aze e santer mat gant implij ar ger *pav* piv eo ar mestr hag ar veli en deus WAR an dud.

Er frazenn da heul, n'eus ket kaoz eus un darempred urzhaz staliet diouzh reolenn, hogen eus ur c'heñver-nerzh a zo e go.

*Pouilhet on bet re bell amzer gant ho merc'h n'on ket e-sell da vezañ **moustret dindan dreid** gant ur wrac'h evel doc'h c'hwi (VAZA 50)<sup>8</sup>*

a gred tad Jarl Priel embann ouzh e vamm-gaer, nebeut war-lerc'h marv e wreg. Lemel ar renadenn-verb *dindan dreid* ne cheñche fet ket ster pennañ ar frazenn : ne fell ket d'an den bezañ moustret. Met skeudenn an treid, implijet da broduiñ efed ar moustrañ, a zegas pouez ouzhpenn d'e gaoz evit reiñ da gompren n'eo ket evit asantiñ e vefe graet dezhañ evel a c'hall ober neb a gar gant ul loen en em gavfe dindan e droad.

En degouezh-se adarre e c'haller gwelet an araogenn DINDAN evel araogenn enebañ WAR : gwaskañ WAR unan bennak, ha moustrañ DINDAN dreid unan bennak. El lodenn diwar-benn an araogenn WAR e vo gwelet e c'hall WAR merkañ ar sujañ, ar girriegezh. Menegin a ra Jules Gros ar memes implij evit an araogenn DINDAN : « *un rapport de dépendance ou de soumission* » (TDBP 2). Pelloc'h e welimp ivez e c'hall DINDAN talvezout kement ha WAR.

---

<sup>8</sup>Mat eo teurel pled ivez e tegas DINDAN ur c'hemmadur dre vlotaat d'an anv a zeu d'e heul (YIBR 13, 3).

### 3. E liamm gant ur gorread pe gant an amzer

*Kalz splannoc'h e spurmanten bremañ ar gêr ken hir ha ken ledan, ar menezioù dindan goad en-dro dezhi (VBRU 215).*

Diwar-benn ar gorreadoù douar, DINDAN «*a implijer d'ober anv eus un trevad, ur barrez, h.a., zo kement-mañ-kement a c'horread dezhañ*» (GBAHE I.A.3). Ma vefe displeget zo koad war ar menezioù ne vefe ket tre ar memes tra. Gant an araogenn DINDAN implijet amañ evel-se e talvez int goloet a goad, koad zo e pep lec'h war ar menezioù. Mennozh ar plantañ a c'hall bezañ ivez pa gomzer eus "douar dindan ed" da skouer.

Kavout a reer ivez DINDAN e frazennoù ma zo kaoz eus an amzer a ra.

*tapet gantañ ur gwall gleñved, "an difluksion boitrin", hervez ma lavar Tregeriz, o tont gleb dour-teil eus an aod e-kerzh ar goañv ha dindan ar glav a-bil (VAZA 40)*

N'eus ket kaoz eus beli pe urzhaz, p'emeur e darempred gant un dra bennak difetis, met tostaat a c'haller ouzh mennozh an efed, pa dalvez kement ha «*hep bezañ gwarezet diouzh*», db. an amzer a ra (GBAHE : I.C.2). Splann eo gwered ar gwall amzer amañ.

Hag e adkaver an displegadenn roet gant Favereau, «*exposé aux intempéries*» (GBFF 881), amañ ivez :

*P'edo ar re-mañ dindan ur c'hast amzer nepell eus an Douar Nevez (VAZA 54).*

Un dra bennak ledan, evel an amzer a ra en-dro pe a-us d'an dud, a zo eus steredenn an heol ivez. Er frazenn-mañ :

*D'am meno, bez'eo ar pleg-mor-se kaerañ tra 'zo dindan an heol (VAZA 127),*

e komz eus kêr Naplez. Skeudenn an heol a ra ganti evit komz eus ar voull-douar a vevomp enni. N'eo ket liammet gant ar soñj chom hep bezañ gwarezet avat.

Bepred gant an heol :

*Bez' e oa e penn araog ar vag ur pikol morverc'h arc'hantet o sevel d'an nec'h etre he divrec'h noazh ur gurunenn aour a lugerne dindan lagad an heol (VAZA 120)*

Eus an amzer a dremen e c'hall bezañ anv gant DINDAN ivez.

*gant se 'ta e oa ret mat din erruout du-hont dindan an termen merket (VBRU 200)*

*ne bade ket pell al labour, m'hen tou; gant tri pe bevar c'halvez akuit e veze graet an taol dindan un nebeud devezhioù* (VBRU 278).

E geriadur An Here, d.b. an amzer e kaver : «*en ur ober ar c'heitad-mañ keitad amzer*» (GBAHE, I.B.1).

## 4. Heñvelster WAR

*pa 'z oan e ti hent-houarn Brest, dindan mont d'ar gêr, e tistroe va spered war-du ar vuhez-se* (VAZA 171)

Dirak un anv-verb e c'hall DINDAN talvezout kement ha WAR-NES (GBAHE I.B.4).

Kerkoulz all e vije bet posupl skrivañ "pa 'z oan e ti hent-houarn Brest, WAR-NES mont d'ar gêr". Da dostaat ouzh implij WAR pa dalvez kement ha "da c'hoarvezout prestik" : "bezañ war zimeziñ", da skouer, hag a zo displeget pelloc'h el lodenn WAR. Ha pelloc'h en e eñvorennoù e ra meneg eus an dimeziñ o tont, dres :

*Pebezh glac'har 'ta, pegement a wad fall adal ma teuje da c'houzout e oan dindan dimeziñ, ha gant piv?...* (VBRU 178)

Ha ma troer alies ar galleg «sur» gant WAR e brezhoneg, e reer gant DINDAN e degouezhioù zo evit an dilhad. «*DINDAN correspond au français sur, en parlanat des vêtements qu'on porte : Me am-oa lakeet eur bern dillad dindannon, j'avais mis un tas de vêtements sur moi*» (TDBP 3). Dre eilpennañ eo, ha rannyezhel hervez geriadur an Here a dro DINDAN en degouezhioù-se gant WAR-C'HORRE (GBAHE I.C.7).

## 5. Troiennoù

*Rom ar vro a zo ken gwenn, ken sklaer ha dour; tamm ebet ne denn war ar moc'haj damc'hell, liv an hañvoez warnañ, a werzher dre amañ dindan an anv-se* (VAZA 87).

Evit a sell prenañ udb., ma reer dre chekenn, e c'haller sevel e chekenn EN anv ar gwerzher pe WAR e anv (GBAHE, chekenn). Kaoz zo eus gwerzhañ amañ hag e ra Priel gant DINDAN

met daoust ha gallout a reer displegañ se o lavaret e vefe DINDAN araogenn gontrol WAR en degouezh-se, evel m'emañ "gwerzhañ" vb. kontrol "prenañ" ? Ar gwerzher a werzh dindan e anv dezhañ, hag e reer ur chekenn war e anv. Neuze faziek e vefe un seurt displegadenn moarvat.

*kustum e veze hor martoloded da vouskanañ ar mentoù diwezhañ en ul lakaat dindano gerioù ijinet ganto* (VAZA 119)

War un dachenn all emeur met un dra bennak boutin zo en div skouer-se marteze : en hini kentañ eo liammet DINDAN gant un *anv* hag en eil gant *gerioù*. N'eo ket splann an traoù memes-tra ha Kervella a skriv penaos «*araogennoù evel WAR, DIWAR, DINDAN a c'hall ivez koll o zalvoudegezh strizh evit bezañ implijet e troioù-lavar zo*» (YFFK 592). Marteze n'eus ket da glask pelloc'h. Geriadur *An Here* a zispleg ec'h eo DINDAN «*ur ger a verk e vezer e dalc'h udb. (...)* Ni zo dimezet hon-daou, ni zo dindan an embannoù» (GBAHE I.C.5). Daoust hag e c'haller gwelet ur seurt dalc'h ivez en hon div skouer : etre ar moc'haj hag an anv rom, er skouer gentañ, hag etre ar mentoù hag ar gerioù en eil hini ?

#### **dindan kazel ub. :**

*un ucher e vragoù berr, gant ur chadenn arc'hant en e gerc'henn ha dindan e gazel ur pikol boestad segalennoù* (VAZA 139)

Gant "dindan warez" e c'hall bezañ troet e galleg diouzh a gaver e DEVRI (DEVRI. Kazel. III : «*aile, protection*»).

*chom a raen du-hont va-unan a-hed un hanter-devezh gant ul levr bennak dindan va c'hazel* (VAZA 107).

Aze ne zle ket bezañ kaoz eus gwareziñ avat, ha n'eo ket gwall bouezus e levr pa zispleg pelloc'h n'en deveze c'hoant ebet da lenn hag e veze gwell gantañ arvestiñ ouzh an natur. Emeur kentoc'h gant un doare skeudennet da gontañ e veze ul levr gantañ.

#### **sellout dindan e dao :**

*dalc'hmat e veze war evezh e "vagerez", ur gigenn vat a vartolod gant ur pezh kof hag ur varvenn abostol, ha sellout dindan e dao a rae hemañ ouzhimp kel lies gwech ma tichañse d'ar c'hrouadur en e garg tostaat ouzh ar sonerien, torfedourien en o had* (VAZA 168).

Gwelet an displegadenn-mañ e DEVRI diwar ar pezh a gaver e kelaouenn lennegel GWALARN : «(1931) GWAL 136-137/431. (kornbro Perroz, Treger-Vras) **Tao** : gwareg an abrant. Nebeut anavezet eo ar ger-mañ. Hogen «*sellout dindan e dao (pe : he zao)*» a vez klevet ken alies ha bemdez ; e galleg : *regarder par dessous, ou froncer les sourcils (gourel)*»



(DEVRI, tao, 1).

Sellout dindan e dao ouzh ar vugale a ra an den neuze, ar pezh a dalvez e oa ar vugale DINDAN e selloù pe DINDAN e zaoulagad, da lavaret eo a-wel dezhañ (GBAHE I.A.2).

Dre skeudenn e c'hall DINDAN merkañ gwered udb. war udb. all, evel e «*aet e oa ar vag d'ar strad dindan he c'harg*» (GBAHE I.C.1) pe ober anv a oad, evel ma tipleger ec'h eo ar vinored tud DINDAN 18 vloaz : dirak ur ger a verk an oad e talvez dindan kement ha «*nebeutoc'h eget*». (GBAHE I.B.3). N'eus ket bet kavet skouerioù a seurt-se en eñvorennoù Jarl Priel avat. A-benn ar fin, ne ra ket kement gant an araogenn-se ha gant ar re all a studiomp amañ.

Troiennoù adverb hag a verk an doare a c'haller sevel gant DINDAN :

"dindan eñvor", "dindan guzh" (GBFF 881). Ne ra ket Priel gante en e eñvorennoù. Ober a ra gant an araogenn DRE avat, ha gant ar memes ster : "dre 'n eñvor", "dre guzh" ha gwelet e vint el lodenn diwar-benn an araogenn DRE neuze.

War ar memes patrom e c'haller menegiñ un droienn adverb all : "dindan boan a gastiz".

Ur skouer zo e *Va buhez e Rusia* m'eo un tamm hiroc'h an droienn gantañ zoken :

*kement paotr en deveze darempred dre ahont a ranke lemel a-dizh e dog pe e gasketenn dindan boan a drubuilh ha zoken a gastiz, rak noz ha deiz e chome war-dro un archer digor mat gantañ e zaoulagad* (VBRU 224).

Kontañ a ra Priel ar pezh a rankent ober pa dremenent dirak skeudenn ar Werc'hez Vari.

# DIOUZH

## 1. Pellaat, dispartiañ

Stank eo ar skouerioù m'en em gav DIOUZH dirak un anv-kadarn pe dirak ur raganv da verkañ mennozh ar pellaat pe an dispartiañ :

*Pa zeuis e maez, ken bamet, ken fromet hag ur pirc'hirin o pellaat diouzh un iliz vrudet (VAZA 130)*

*Chom a rejomp war eor pell diouzh Mogador (VAZA 123)*

Setu ur skouer damheñvel, met displeget eo an araogenn amañ :

*o vezañ ma choment pell dioutañ dre zoujañs, setu ma voent pedet gant ar Vikel vras da dostaat (VAZA 61).*

Stag eo hon araogenn ouzh ar ger *pell*, hag «eilaraogenn» a ra Kervella anezhi en e yezhadur (YBBK 585) : eilaraogenn eo evit sevel an araogenn *pell diouzh*. Roparz Hemon a ra *araogenn gevrennek eus pell diouzh*, evel a ra evit "tost da", "daoust da" (YBBH 204).

*P'edo hor bag o tistokañ diouzh al lestr war-lerc'h hini an admiral (VAZA 124)*

*forzh ne rae gant ma tremenjemp hep klask tennañ arc'hant diouzh e yalc'h (VAZA 73)*

E plas DIOUZH e vije bet gallet ober gant an araogenn EUS (gw. GBAHE, tennañ, I.A.1 : «*tennañ mein eus ur vengleuz*») met « *A hag EUS a verk an orin, an dilec'hiañ pa veneger al lec'h-orin* » (YBBK 592). Marteze, implij an araogenn DIOUZH amañ a zegas gwelloc'h mennozh an disparti a vefe poanius d'an den evit doare ? DIOUZH a c'hall merkañ an orin ivez memes-tra, evel a vo gwelet en ur pennad all pelloc'h. Ha c'hoarvezout a ra e vefe mesket A, EUS ha DIOUZH.

*Kaoz a savas d'ober din mont kuit diouzh ar c'hloerdi ha dibab ur vicher (VAZA 63)*

Er skouer-mañ e venner lakaat war-wel an disparti hag a zegasfe cheñchamant bras e buhez Jarl, ha n'eus ket bet soñjet ennañ dre blijadur met abalamour d'an diouer a arc'hant da baeañ e studioù.

A-wechoù, "mont diouzh" hep "kuit" a c'hall bezañ a-walc'h evel er skouer gant Favereau :

«mont a ran diouzh an ostaleri pe 'vin meyv ! Je m'en vais du bar ou je vais être soûl !»

**(GBFF 852)**

War-nes dispartiañ emeur amañ :

Ha p'edo o **kimiadiñ diouzhin**, setu ma c'houlennas: “Ac’hanta, e-sell out bepred da vont da Sant-Brieg?” (VAZA 64).

Met lavaret "kimiadiñ DIGANT unan bennak" a c'haller ivez (**GBAHE** : kimiadiñ).

An disparti a c'hall bezañ dibabet evit tennañ un dra bennak displijus :

dont a ris hag a **zivec'his** va c'henseurted **diouzh** an truj ken kazus (VAZA 80)

Er frazenn-mañ zo kaoz eus mangousted bet degaset da lazhañ an naered :

emañ bremañ an dud o klask tu d'**en em zizober diouzh** al lazherien-se, ken stank ma 'z int deut d'o zro da vezañ ur c'hastiz hag ur walenn. (VAZA 88).

Gant lodenn diwezhañ ar frazenn e komprener mat ar c'hoant dispartiañ ha pellaat. Met "en em zizober A, EUS" a gaver ivez e DEVRI hag a ra dave da c'heriadur Gregor a Rostrenn : «(1732) Greg 254b. Se défaire d'un importun, d'une charge, tr. « En em zizober, eus a &c. »» **(DEVRI, dizober/dizoberiñ III)**.

Keñveriomp gant ur skouer roet gant Jules Gros ha ma zo kaoz eus loened ivez : «*Eno e vez oh ober diouz al loened, c'est là qu'il fait des bêtes (qu'il soigne des bêtes)*». Hag e tislep Gros : «*DIOUZ suit OBER et GOUZOUZ dans le sens de : s'occuper de, soigner, savoir soigner*» (**TDBP 9**). Tre ar soñj kontrol diouzh an hini a zo stag ouzh ar skouer gant mangousted. Ar memes araogenn, DIOUZH, a vez implijet evit displegañ daou ober kontrol. N'eo nemet an daou verb a zo kontrol an eil diouzh egile : ober / dizober.

Sellomp ouzh ar skouer-mañ avat :

“*Dégage de là donc, distag ar yod diouzh da dreid* (VAZA 116)

Ha pa rafe Priel gant un droienn skeudennet emeur gant ar patrom vb. + OUZH a c'haller enebañ a-fet ster ouzh ur patrom vb. enep + DIOUZH : "distagañ DIOUZH" ha "stagañ OUZH".

Ar pellaat pe an dispartiañ a c'hall dont diwar ur c'hoant gwareziñ.

*dleout a raen bezañ war roll ar ganfarded da zivall diouto* (VAZA 117)

Merk an disfiz zo aze a-berzh tud a c'halle soñjal e oa bet Priel re dost d'an admiral.

*dalc'het e veze ar re-mañ war vourzh evit o diwall diouzh an abostolerezh ruz* (VAZA 166)

E Rusia emañ Priel d'ar mare-se ha kavout a rae da lod e oa gwelloc'h lezel an dud pell diouzh levezon ar gomunouriezh.

Ur skouer all :

*Ne ouie na skrivañ na lenn,*

*Netra nemet diwall e revr diouzh ar c'hwen* (VAZA 137)

Un toullad araogennoù a c'hall bezañ lakaet da heul *diwall* ha diouzh implij pe implij e cheñcho ar ster (**DEVRI, diwall**). Menegomp DA dirak ur verb all evel e "diwall da gouezhañ", kement ha teurel pled eo savet en un doare all ar frazenn e galleg a lakao ar verb er stumm nac'h : "*attention à ne pas tomber*".

## 2. Disheñvelaat

Er chabistr gouestlet d'an araogennoù en e yezhadur (*Grammaire Bretonne du dialecte de Tréguier*, embannet e 1908) e kinnig Le Clerc un dasparzh anezhe e daou rummad : araogennoù anezhe o-unan («*prépositions proprement dites*») ha troiennoù araogennoù («*locutions prépositives*»). Daou isrummad ac'h a d'ober e rummad kentañ : araogennoù eeun («*prépositions simples*»), hag araogennoù kevrennek («*prépositions composées*»), ma tispieg en eil isrummad ec'h a ar rakger DI lakaet dirak araogennoù eeun da sevel un toullad araogennoù evel «*digant*», «*diouz*», «*dirak*», «*diwar*» (**GBDT p.104-105**).

Diwar-benn an «*araogennoù gant DI*» e kont Kevella penaos «*un nebeudig araogennoù a zo hag zo dezho daou stumm, unan eeun hag unan enep savet gant harp ar rakger DI- :*

*war, diwar*

*ouzh, diouzh*

*gant, digant,*

*rak, dirak*» (**YBBK 584**).

Ar mennozh eeun/enep a glot gant displegadenn Hemon a ra rakger-dioueriñ eus DI- en e yezhadur istorel. «*Ar rakger-dioueriñ "di-" hag "ouz;ouzh" a ya d'ober an araogenn*» (**YIBR 62, 26, Notenn 1**).

Gant-se, en e bennad «*A-zivout implij an araogennoù pennañ*» (**YBBK p.593-646**) e pled Kervella gant OUZH ha DIOUZH er memes rannbennad. Goude bezañ displeget «*e vo kavet alies verboù o c'houlenn bezañ heuliet gant "ouzh" ha re all gant "diouzh", o lavarout ar c'hontrol an eil eus egile*» - tostaat ouzh / pellaat diouzh, da skouer, evel hon eus gwelet a-raok - (**YBBK 626**) e tispieg e c'hoarvez heñvel gant anvioù gwan : «*heñvel ouzh, disheñvel diouzh*» (**YBBK 627**).

Sed amañ ur skouer kavet dindan bluenn Jarl Priel pa lak ar gaoz diwar-benn jedoniezh :

*intent un dra evel houmañ: 5x + 3 + 2x - 1 **disheñvel diouzh** 3x - 2 + 12 (VAZA 40)*

Aze e c'hallfe bezañ lakaet "n'eo ket par da" e plas.

*an impalaer Neron, marteze un den kriz meurbet, met da vihanañ **disheñvel krenn diouzh***

*Viktor Emmanuel, Carlos II ha Fallières (VAZA 129)*

NB : *krenn* zo lakaet da heul *disheñvel* evit pouezañ met n'eo ket "krenn" a vo lakaet da heul "heñvel" gant ar memes pal : "heñvel mik" pe "heñvel poch" a c'haller skrivañ avat.

Mat eo teurel evezh ouzh un dra bennak all ivez, p'hon eus kinniget DIOUZH evel araogenn enep OUZH. Ne vez ket kont evel-se bepred. «*E verboù a zo n'eo ket diouzh, hogen da, eo a zo da vezañ enebet ouzh ouzh : stankañ ouzh an dour, distankañ d'an dour*» (YBBK 633).

### 3. Amzer

Gwelet hon eus e tispieg Kervella en e yezhadur e verk DIOUZH ar pellaat, an diforc'hañ, en enep da OUZH, a verk an tostaat, ar c'hevreañ, evel a vo kinniget el lodenn gouestlet d'an araogenn-se. Met renkañ a ra ivez an araogenn DIOUZH e-mesk ar re implijet ar stankañ, hag a c'hall koll o zalvoudegezh diazez (YBBK 592). Gant-se e c'hall ivez merkañ an amzer (GBFF 854). En gwelet a reer gant *diouzh ar beure* ha *diouzh ar mintin* er skouerioù da heul :

*ul leue, ne oa ken! ha **diouzh ar beure** pa save, bep tro, m'hen tou, e lakae treid ul leue en e votoù (VAZA 132)*

*daoust d'ar gor-ifern-se, e kenderc'he va mamm, war bennoù he daoulin e-kreiz an hent abaoe seizh eur **diouzh ar beure**, da boanial gant he faneradoù glazur ha bleunioù (VAZA 43)*

*war ar pemdez **diouzh ar mintin** adal eizh eur bete nav eur hanter, e studie hag e pleustre pep hini gant e venveg (VAZA 79)*

Evel hon eus gwelet el lodenn diwar he fenn ec'h eo gant an araogenn DA e vez savet alies lavarennoù adverb amzeriañ. DA an hini a zegas ar renadenn-amzer met graet e vez ivez gant an araogenn DIOUZH neuze (YBBK 531 ha 609, evezhiadenn I.)

Dedennus eo sellet ouzh ar skouer da heul :

*Diouzh ar beure ha d'abardaez pa veze ar vicherourien hag ar gargidi o vont d'o labour pe o tont d'ar gêr* (VAZA 150).

An araogenn DIOUZH a c'haller ober ganti (*diouzh ar beure*), evel a c'haller ober gant an araogenn DA (*d'abardaez*). Implijout an eil diouzhtu war-lerc'h eben a skañva ar skrid, un tamm mat muioc'h evit na rafe oc'h ober div wech diouzh renk gant ar memes araogenn ("diouzh ar beure ha diouzh an abardaez" pe "da veure ha d'abardaez"). Un abeg all a c'hallfe bezañ, liammet ouzh dibaboù yezh Jarl Priel en e skridoù. An droienn "diouzh an abardaez" a reer ganti e Bro-Dreger (**TDBP, diouz 7**) met ne zeu gwech ebet dindan bluenn Jarl Priel en e eñvorennoù. Na ne zeu gwech ebet an droienn "da veure".

A-fet yezhadur e c'haller teurel pled ivez ouzh un diforc'h reolenn en div droienn :  
ar ger-mell resis *ar* a zeu etre an araogenn *diouzh* hag an anv-kadarn *beure*, pa ranker tremen heptañ, ha lakaat an anv-kadarn diouzhtu goude an araogenn en droienn *d'abardaez*.

## 4. Orin, abeg

DIOUZH dirak un anv-kadarn a c'hall merkañ an orin (**GBAHE I.A.3**) :

*touristed diredet da welout gwele sant Erwan, ha pep hini da dapout ur gontell **ha da droc'hañ ur skilfenn vat a goad dioutañ*** (VAZA 130)

Gwele ar sant eo lec'h orin an tamm koad eo aet an douristed da dapout.

*taolet e voe al loustoni-se er mor, seier hag all, kerkent ha ma voe al lestr a-ziwar wel eus an douar, rak den ne bade gant **ar c'hwezh a save diouti*** (VAZA 126)

Displeget eo DIOUZH en 3de gour unan d'ober dave d'an anv-kadarn loustoni, a zo a-raok er frazenn. N'eo ket savet rik evel ar frazenn skouer roet e GBAHE, «*diouzh an deñved ez eus gloan*» m'emañ geriet an orin gant an anv-kadarn en em gav diouzhtu goude DIOUZH.

*Ken lart, ken teuc'h e oa Carlos II m'ho pije gallet **tennañ dioutañ danvez d'ober daou Fallières**, daoust ha ne oa ket hon aotrou eus an torad treutañ* (VAZA 121).

Amañ ar gour merket e DIOUZH, a ra *dioutañ*, a ra dave da *Carlos II* meneget a-raok.

Disheñvel eo amañ a-fet yezhadur :

*krog e oad du-hont d'**enbroañ diouzh n'ouzon ket pelec'h mangousted*** (VAZA 88)

Un islavarenn eo ("*diouzh n'ouzon ket pelec'h*") a dalvez da renadenn-doareañ ar verb ("*enbroañ*") evit merkañ an orin.

Amañ-dindan n'emeur ket gant un orin a-fet lec'h. War tachenn difetisoc'h ar spered kentoc'h :  
*ar "priz" gounezet ganin e Landreger hag e oan e sell da dennañ dioutañ danvez ur pezh-  
c'hoari evit va strollad* (VAZA 44)

N'emeur ket kennebeut gant un enebadenn "lakaat ouzh" / "tennañ diouzh"... "ar voger" da skouer. An orin eo a zo merket.

Dre astenn, an orin a c'hall bezañ an abeg.

"En abeg da", "abalamour da" a c'hall talvezout DIOUZH e frazennoù zo (**GBAHE I.A.9**).

*Goût' ouzer pegement a drubuilh a c'houzañvas an Tad Vallée diouzh e berzh, kement ha ken  
bihan ma rankas paouez d'embann Kroaz ar Vretoned* (VAZA 61)

Priel a gomz aze eus eskob Sant-Brieg en deus gouzañvet GANT an aotrou Morelle-se kement  
ha ken bihan ma rankas paouez d'embann Kroaz ar Vretoned, ar gazetenn vrezhonek  
sizhuniek lañset gant Frañsez Vallée e 1898.

## 5. Dave, keñver

Amañ emeur gant un implij eus DIOUZH a zo pell diouzh e dalvoudegezhioù diazez a verk ar pellaat, an diforc'hañ.

Dirak un anv-kadarn, un anv-verb pe un adverb e c'hall DIOUZH talvezout kement ha "hervez" (**GBAHE I.A.4**) :

*strivañ da vont da bokat d'am mamm-gozh, diouzh ar c'hiz a rene er mare-se* (VAZA 61)

Mennozh an dezverk zo kinniget gant Favereau e degouezhioù zo (**GBFF 856** : «*critère ou référence*»).

*karout a raen a-greiz kalon ur genvroadez yaouank, ur plac'hig diouzhin e pep keñver* (VAZA 66)

"Ur plac'hig a zere ouzhin e pep keñver" a vije bet gallet skrivañ (**GBAHE I.A.7** : «*o tereout ouzh*».) Ar memes displegadenn a ro Vallée (**DBTG, DIOUZH** : «*Bezañ diouz = convenir à*»). Berroc'h an traoù hep ober gant ar verb *dereout* avat, ar pezh a zegas lusk. Ar verb *bezañ* zoken a dremener heptañ, kuit d'ober gant ur stumm hiroc'h a vefe "ur plac'h a oa diouzhin".

Nerzh an araogenn vrezhonek a c'haller priziañ amañ : ur ger zo a-walc'h.

Diwar-se an droienn "diouzh ret" :

*Ne chomjomp ket da **lugudenniñ** nemet **diouzh ret e Jameston** hag alesont e krogas hon daou lestr da verdeiñ a-gevret (VAZA 91)*

Ma klot gant dezverk ar redi e reer ar pezh a zo "diouzh ret".

*n'eo ket **diouzh he ment**, na moarvat **diouzh he fri**, e vez prenet ur wiz! (VAZA 69).*

Setu ar pezh en dije gallet Jarl vihan respont, emezañ, d'ar vaouez e oa bet lakaet a-gostez ganti war-zigarez e oa re vihan e vent ha re verr e fri, pa oa kaoz koulskoude eus priziañ e varregezhioù c'hoari ar pezh.

Amañ e talvez *diouzh* kement hag E-KENÑVER (**GBAHE I.A.5**).

OUZH hag a vo studiet pelloc'h a c'hall degas renadennoù-doarañ «*o verkañ ur c'hempred en ober*» a zispleg Kervella o reiñ skouer «*labourat ouzh ar gouloù*» (**YBBK 631**). Hag e tegas da soñj en-dro ar mennozh ober eus DIOUZH araogenn enep OUZH, dre ma verk DIOUZH «*an dezastum diwar un ober kempred*» . Er skouer roet uheloc'h, prenañ ar wiz a zeufe pe na zeufe ket diwar/da heul priziañ he ment/he fri. «*Ac'hano en deus diouzh kemeret un dalvoudegezh o tennañ da "hervez"* » en un niver bras a lavarennoù evel : "diouzh ma vo", "ober diouzh e soñj", "gwerzhañ diouzh ar pouez", "gouzout diouzh ur c'hleñved" (**YBBK 631**).

Ma c'haller gwerzhañ DIOUZH ar pouez ha gwerzhañ DIOUZH ar munud (**Vallée, 1926, p.195**) e c'haller en ober digant marc'hadourien DRE vras ivez, evel a welimp el lodenn gouestlet da DRE pelloc'h.

Skouerioù all ouzhpenn d'ar re roet amañ gant Kervella a zo kinniget ivez pelloc'h er rannbennad troiennoù.

DIOUZH a verk al lec'hiañ ivez (**Vallée, 1926, p.195**) a-wechoù gant "tu" (**GBFF 855**).

*A-vec'h dimp bezañ dimezet, daoust ha rankout a rajemp en em zisrannañ ken abred hag e-pad ken hir amzer, skampañ, ar wreg diouzh an tu-mañ, an ozhac'h diouzh an tu-enep (VBRU 234).*

Kaoz zo aze eus ar fed e oa kinniget da Jarl Priel ul labour en ur gêriadenn gwall bell diouzh an hini ma veve e wreg enni.

*n'ouzon ket penaos e teuis a-benn da herzel ouzhin da zifronkañ dirazañ, ha **diouzh e du** ne*



*baoueze ket da barañ warnon selloù doanius (AMAH 467)*

Dre astenn, n'eo ket al lec'h kement-se a verker, daoust ma teu ar selloù diouzh al lec'h m'emañ an den. Aze, daoust ma teu ar ger "tu" evel e-barzh "tu kleiz", "tu ar c'hornôg"... e c'hallfe bezañ erlec'hiet *diouzh e du* gant "evit ar pezh a sell outañ". Emeur gant ar c'heñver neuze.

Hep resisaat ar ger "tu" e c'hall bezañ degaset al lec'h oc'h ober dave d'ar roudoù-avel (**GBAHE I.A.11**). Kement-se zo graet dre veur a wech e kanaouenn Youenn Gwernig : «*diouzh ar c'hornôg e c'hwezh an avel o vlejal war lein an ti*».

## 6. Troiennoù

Estroc'h evit troiennoù a verk an amzer, bet gwelet er rannbennad-se (*diouzh ar beure...*), hag evit an droienn sonn *diouzh ret*, a gaver en oberenn Jar Priel.

*graet e veze evelkent anezhi ur plac'h feuls ha zoken gouez a-walc'h, da vihanañ ouzh ar re na ouient ket ober diouti (VAZA 17).*

E *Dictionnaire du breton du Trégor et de Haute-Cornouaille (DBTG, DIOUZH)*, savet gant Herve Seubil Kernaodour diwar skridoù Frañsez Vallée emañ an displegadenn kinniget gant Vallée : «*ober diouz unan bennag = Faire la volonté de quelqu'un*». "Ouzh ar re na ouient ket plegañ d'he youl" a vije bet un doare all, damheñvel e ster, da achuiñ ar frazenn (gwelet "plegañ da ub" e lodenn an araogenn DA). "Plegañ diraki" ivez, kement hag ober gant un araogenn all da heul ar verb.

Gant ar memes talvoudegezh :

*Adal ma felle d'ur c'hrouadur grignouzat pe ober diouzh e benn e-unan (VAZA 110).*

Meneget hon eus a-raok, er rannbennad diwar-benn an dilec'hiañ hag an dispartiañ, e c'hall bezañ un dalvoudegezh all. Gwelet hon eus ur skouer all gant "ober diouzh" : «*e troiennoù sonnet Ober diouzh (ub pe udb) : ober war e dro*» (**GBAHE I.A.14**) ha (**TDBP 9**).

Skouerioù all a gaver gant sterioù liesseurt :

*Ur ramz, setu petra 'oa e gwirionez Frederig seizh, met ur ramz habask-tre na baoueze ket da vousec'hoarzhin evel p'en divije kavet aes-tre ober diouzh e vicher e bro Danmark (VAZA 143).*

Amañ e verk ar c'heñver... daoust ma n'emeur ket pell diouzh ar ster "ober war-dro".

Met gallout a ra ivez dont "diouzh e vicher" diouzhtu goude un anv-micher dres : "bezañ kalvez diouzh e vicher" a zo bezañ kalvez e vicher.

*redek a reas pep den war vourzh d'ober diouzh e garg evit ar sav-eor* (VAZA 149).

Amañ ivez e klot gant ar c'heñver. Met disheñvel eo er skouerioù da heul :

*"Arsa, mic'hieg," emezañ, "daoust hag ur vardell az pefe c'hoant d'ober diouzhin?"* (VBRU)

Bardell : «*bavard*», «*bonimenteur*» e Devri.

*gallet e vefe gant gwir abeg ober diouzh ar gêrbenn-se Venezia an Hanternoz, rak sed amañ ster gwirion ar ger Stockholm: "savet war beulioù"* (VAZA 150).

Reiñ un anv e talvez en eil skouer. Hag en hini gentañ n'emeur ket pell diouzh se.

Evit ar pezh a zo "*appeler*" e galleg e reer alies gant an araogenn EUS e-lec'h DIOUZH da heul "ober". Hag e lec'hioù zo, dre un ober rannyezhel, e vez mesket an araogennoù A, EUS, OUZH, DIOUZH (GBFF 754, 826, 851) evel a welimp diouzhtu.

Sellomp ouzh ar pezh a zeu gant Priel evit "ober goap".

*e veze techet ar grennarded d'ober goap diouzh ar re a zouge an disterañ bouchig barv ouzh o groñj* (VAZA 95)

*daoust ha ma 'z oamp troet ivez d'ober goap dioutañ, ne voe ket gwell bell ar c'hofek-se o c'hounit doujañs ha karantez kement hini 'oa war vourzh* (VAZA 139)

Gantañ ne gaver ket "ober goap" + OUZH. E geriadur *An Here* eo kinniget an droienn-se gant meur a araogenn posupl : «*ober goap a, eus, ouzh, diouzh, diwar, gant ub. : e c'hoapaat*» (GBAHE, goap I.A.1).

Hag amañ, evit "ezhomm" :

*ezhomm bras e vije bet diouti* (VAZA 62)

*kristen ebet ne oa e-tailh da reiñ din ar skoazell am boa ezhomm diouti* (VAZA 71)

Devri a ginnig skouerioù gant "ezhomm" + A, EUS, OUZH, DIOUZH «*dirak un anv-kadarn*». Ledan eo an dibab neuze ha hini ar skrivagner eo ober gant DIOUZH.

Evit traoù all n'eo ket ken sklaer avat.

*Heug am eus betek-henn diouzh ur boultrenn villiget am beze da gas d'an traoñ bep beure war-yun* (VAZA 39).

E Devri, GBAHE hag e Meurgorf (Vallée 1931) e kaver "heug ouzh" hepken. N'eus nemet e geriadur Favereau enlinenn e kaver : «*kaji heug deus se (T pratiquement écoeuré de ça)*» .

An araogennoù EUS, OUZH, DIOUZH a vesker dre gomz e lec'hioù zo (GERVEN, A5).

Daoust hag-eñ ne vefe ket ur meskaj gant Priel ? Ar pezh a lak Gerven war-wel a c'hallfe displegañ e klask Priel reizhañ dre skrid e DIOUZH... met betek re ?

Peadra zo d'en em c'houlenn gant skouerioù evel ar re da heul. Ober gant an araogenn EUS e plas DIOUZH a c'haller ober bepred. Gant DIOUZH e ra Priel :

**ober diouzh** : *c'hoant am befe d'ober diouzhit un den a zoare* (VAZA 67)

**ober meneg diouzh** : *Er mare ma ran meneg dioutañ* (VAZA 79)

**komz diouzh** : *Diouzh va flanedenn e komze 'ta ar varkizez* (VAZA 72)

**klemm diouzh** : *klemm diouzh an degouezh-se* (VAZA 165)

Araogennoù all a c'hall dont da heul "klemm" aze gant sterioù a bep seurt : WAR, DIWAR-BENN, DA, GANT (**DEVRI, klemm**).

Daoust ma n'eus ket bet gouestlet ul lodenn a-ratozh d'an araogenn EUS, talvezout a rafe ar boan he studiañ donoc'h evit gwelet sklaeroc'h.

# DIWAR, A-ZIWAR

## 1. Orin

DIWAR a c'hall geriañ orinoù liesseurt, war tachennoù disheñvel da vat.

Un nebeud araogennoù a zo dezhe ur stumm eeun hag ur stumm enep hag a zo savet gant harp ar rakger DI- : WAR, DIWAR en o mesk (YFFK 584). Gant-se pa verk WAR, e degouezhioù zo, an orin a-fet lec'h e c'haller ober gant DIWAR evit degas «renadennoù-lec'hiañ enebet» (YBBK 634). Kervella a ro da heul skouerioù evel «*pignat war varc'h, diskenn diwar varc'h*», ha «*lakaat war an daol, tennañ diwar an daol*».

E *Va zammig buhez* avat, n'eus bet kavet koulz lavaret skouer ebet a seurt-se gant an araogenn DIWAR o verkañ an orin lec'h, nemet gant troiennoù evel *diwar ar maez*, a zo kinniget ganimp pelloc'h diwar-benn lec'h orin udb. pe ub.

Padal, an araogenn A-ZIWAR a gaver stank a-walc'h dindan bluenn ar skrivagner. Heñvel eo he zalvoudegezh nemet kreñvaet eo diouzh a zispleg Favereau en e yezhadur, diouzhtu goude e rannbennad diwar-benn WAR : «*La préposition DIWAR (et, par renforcement, a-ziwar – variante diar, a-ziar W) indique l'inverse*» (GBFF 873).

Sed amañ un nebeud skouerioù :

*n'hellen ket lemel troad a-ziwar al leur-c'hoari* (VAZA 61)

Da enebiñ ouzh ar fed eo lakaet e droad WAR ar leur-c'hoari.

Yann Gerven a zispleg kement-mañ : «*WAR a verk ur fiñv evel lakaat, renkañ, pe neuze un ober hep fiñv evel bezañ, chom ; implijet e vez DIWAR gant verboù evel tennañ, kas kuit, lemel, etc...*» (GERVEN, B4).

Implijet e vo an araogenn-mañ evit traoù difetis ivez :

*lagad ebet ne dennen a-ziwar vizied an dall o kas en-dro dornikell ar viell* (VAZA 38)

*drouksantout a raen ne denne lagad ebet diwarnon* (VBRU 292)

En div skouer-mañ, panevet da blas ar renadenn-dra eeun *lagad ebet*, a zo lakaet a-raok pe goude ar verb, eo damheñvel al lodenn eus ar frazenn savet gant ar strollad-verb "tennañ

lagad" hag e rennadenn-lec'hiañ "diwar/a-ziwar ub., udb." P'emañ ar gour displeget en araogenn e ra gant DIWAR (*diwarnon*) avat, ha n'eo ket gant A-ZIWAR a implij stank Priel en e skridoù. "Ne denne lagad ebet a-ziwarnon" a vije bet posupl skrivañ kerkoulz all. Met pa seller en drilogiezh a-bezh e kaver 9 gwech an araogenn DIWAR displeget, ha gwech ebet ne gaver A-ZIWAR displeget, gant forzh peseurt gour e vefe. Un dibab a-berzh ar skrivagner neuze.

*div graouenn gouezhet a-ziwar an hevelep skourr* (VAZA 22).

Amañ, «gant ur verb a denn d'an dilec'hiañ» e talvez «da c'heriañ un dilec'hiadenn eus al lec'h a vezer warnañ» (GBAHE, diwar, I.A.1). Gwelet a reer amañ ivez ec'h eo heñvel DIWAR hag A-ZIWAR. Gant-se n'eus ket da vezañ souezhet gant an droienn da heul :

*tec'hel a-ziwar va hent* (VAZA 43).

Jules Gros a lak ivez war-wel ec'h eo araogenn enep WAR hag e komz eus «*éloignement, séparation*». Ar skouer-mañ a ro : «*Me a oa o soñjal trei diwar ar c'hamion*», *j'avais l'intention de me détourner (de m'écarter) de la route du camion*».

Ur skouer damheñvel zo en eñvorennoù Priel :

*lakaet am boa em spered ne drojen ket na zoken war ledander un ivin a-ziwar ma roudenn* (VAZA 64).

Amañ avat emeur war tachenn ar spered. P'he deus divizet e vamm-gozh ec'h afe d'ar c'hloerdi e tispleg d'e dad a zo o kimadiñ dioutañ "*N'eus ket ennon danvez beleg*" (...) "*ha dre-se n'in ket da Sant-Brieg*".

*ne oan ket, ha pa vije bet kinniget din holl vadoù ar bed, evit distreiñ va spered a-ziwar kement tra am boa bet an eurvad da barañ va selloù warno* (VAZA 130)

Eus santadoù, santadurioù, soñjoù zo kaoz, ha war an dachenn difetis neuze (GBAHE I.B.2)

Mennozh kentañ an orin a c'hall mont pelloc'h evit an dilec'hiañ. Ha ma verk DIWAR «*an dispartiañ, an diframmañ*» (GBAHE I.B.1) e ra A-ZIWAR ivez neuze.

*A greiz-holl unan bennak a ziframmas ac'hanon a-ziwar ar gwele* (VAZA 47)

*Mirout a reas 'ta e stolikennoù merket A.A. ken na voent diframmet a-ziwar e skoaz, an deiz ma krogas an dispac'herien d'ober dioutañ ar c'horonal Romanov, hep muiken* (VAZA 146)

Kaoz zo eus an impalaer Aleksandr III, Aleksandr Alexandrovitch.

Dre astenn d'ar ster kentañ-se (orin a-fet lec'h) e c'hall DIWAR talvezout «*d'ober anv eus lec'h orin udb.*» (GBAHE I.A.2) pe unan bennak :

*N'eo ket degouezhet ganin gwelout nemeur a wragez diwar ar maez ken mistr* (VAZA 20)

Jules Gros a ro skouer un droienn implijet gant tud bord ar mor :

*Brum diwar ar mor, tomm ken a hor* (TDBP 1).

Pelloc'h, ma n'eo ket an orin a-fet lec'h, gallout a ra ivez merkañ an orin a-fet lignez (GBAHE I.B.7)

*ar re o devoa an eurvad da vezañ diwar dud a vor* (VAZA 100)

Taolomp pled amañ eo kemmet ar ger "tud" e «*dud*» daoust m'eo ar ger-mañ stag ouzh ar gerioù «*a vor*» dre ul liamm renadenn-anv. Padal Kervella a zispleg en e yezhadur : «*Kement abeg o tistrannañ daou c'her a vo techet da virout ouzh ar c'hemmadur da vezañ graet.*» Hag e ro ar skouerioù «*hep kemmadur ebet : "war morioù ar C'hreisteiz" pe "war morioù diaes", en abeg d'ar renadenn pe d'ar stagenn a zistrann "morioù" diouzh "war"*» (YBBK 170).

Skouerioù all a gaver e lodennoù all eñvorennoù Priel, e-barzh *Va Buhez e Rusia*, hag *Amañ hag ahont*.

*Ar re na oant ket diwar noblañs pe vourc'hizien vras* (VBRU 178)

*A-viskoazh e plijas al loened d'am gwreg ha din-me, ha diwarnomp hon daou o deus tapet ivez ar si pe ar perzh-mat-se koulz va merc'h hag he fennhêrez Mari-Eva.* (AMAH 470)

Ar memes mennozh zo er skouer diwezhañ-mañ met eus un doug bred treuzkaset evel hêrezh eo a zo kaoz.

Liesseurt da vat eo an orin a zo degaset gant DIWAR neuze.

*n'anaveze Breizh nemet diwar lenn barzhonegoù Corbière, hag oberennoù he c'henvroad Loti* (VAZA 164)

Emeur aze gant un implij all hag «*hep ober dave war-eeun d'an egor, d'an amzer*» e talvez an araogenn «*d'ober anv eus orin udb. komzet pe skrivet*» (GABHE I.A.4).

Dirak ur verb (a verk un ober) eo lakaet an araogenn. An ober-se (lenn oberennoù daou skrivagner, amañ) eo en deus degaset e anaoudegezh (skañv) eus Breizh. Gallout a ra an araogenn bezañ dirak un anv-kadarn ivez (GBAHE I.B.3) hag amañ, "diwar lennadenoù" a vije bet posupl skrivañ ivez.

An orin en amzer a c'hall merkañ DIWAR :

*diwar an deiz ma krogas merc'h Thompson da vale bro ganimp* (VAZA 92)

Kement hag "adalek" e talvez DIOUZH dirak ur renadenn-amzer, met ne c'hall ket bezañ lakaet dirak un islavarenn (YBBK 635). Er skouer-mañ e teu *an deiz* diouzhtu goude *diwar* ha ne c'hallfed ket skrivañ \**diwar ma*, pa c'hallfe bezañ skrivet "adalek ma krogas" avat.

*Morse, koulz eo lavarout, n'en em gavas yac'h diwar c'hanidigezh va c'hoar vihan, met an dro-mañ tapet he devoa he marv da Sul ar Sakramant* (VAZA 41).

Amañ e verk ganedigezh ar c'hoar vihan deroù ar prantad ma vo klañv ar vamm betek he marv. Jules Gros a dro DIWAR gant «à partir de, à dater de, dès, après (*point de départ dans le temps ou dans les comptes*) (TDBP 3). Emaomp aze gant an deroù en amzer, hag e ro ur skouer all evit a sell ar c'hontoù : «*ar re-ze n'int ket taget diwar o henta gaou, ceux-là ne sont pas étranglés dès leurs premier mensonge (:ceux-là sont menteurs)*».

Ur skouer all zo roet gantañ war an dachenn-se : «*diwar wilioud oa marvet, elle est morte des suites de couches*» (TDBP 2) da lavaret diouzhtu goude ar gwilioudiñ, pa zo kaoz e skouer Priel eus deroù ur prantad, hag aze emeur kentoc'h gant an abeg, orin udb. a zispleg an disoc'h a zo meneget el lavarenn, ar pezh a welimp pelloc'h. N'eo ket bras-bras an diforc'h e gwirionez rak kement-se tout zo un afer orinoù. Gant un ereadur all, e lec'h *diwar c'hanedigezh va c'hoar vihan* e vije posupl skrivañ "adalek ganedigezh va c'hoar vihan" pe "diwar an deiz ma voe ganet va c'hoar vihan" evel er skouer gentañ.

*“Diwar vremañ,” emezañ, “laoskit ho plev da greskiñ ken na dapint deoc’h betek ho tivskoaz* (AMAH 562)

Kaoz a vo ivez eus ar skouer-mañ er rannbennad "3. *dave ha keñver*".

DIWAR a vez implijet da c'heriañ un abeg (GBFF 876).

*diwar an disterañ digarez hag alies hep tanfoeltr abeg ebet, e stage da leñvañ druz* (VAZA 17)

*mont a ris da Vrest gant ur c'henvroad eus Priel, e-sell hon-daou da dremen arnodenn ar fourrierien diwar ali un tonton segont-mestr* (VAZA 76)

*pep gwech e veze distaget an notennoù diwezhañ evel a daolioù morzhol kent echuiñ war*

*unan uhel-uhel ha ken hirbadus ma krede dimp e vougje diwarni ar soner (VAZA 127)*

Krediñ a rae dezhe e vougje ar soner en abeg d'an notenn diwezhañ uhel-uhel ha hirbadus. Diwar-benn soñjoù e c'hall bezañ an abeg pe diwar-benn yec'hed (**GBAHE I.B.4**).

*Diwar c'hourc'hemenn an admiral e voe difennet ober war vourzh an disterañ trouz (VAZA 99)*

Kement hag "urzh" e talvez "gourc'hemenn". "Bezañ E gourc'hemenn udb." a c'haller bezañ, ha da heul e reer traoù "WAR c'hourc'hemenn" an den-se. "Derc'hel DA c'hourc'hemenn ub." a gaver e geridur An Here ivez : «*ober diouzh e urzhioù*» (**GBAHE, gourc'hemenn**). Ober gant DIWAR e skouer Jarl Priel a verk orin an disoc'h (**GBAHE I.B.3**). «*DIWAR indique un rapport de conséquence, de suite, de cause à effet*» (**TDBP 2**). WAR c'hourc'hemenn an admiral e labourer an holl vartoloded, Jarl Priel en o mesk hag a oa e labour-eñ seniñ. Met e-pad o zrez betek Sant-Pêr-ha-Mikelon en em gavont e-kreiz ur *vougasenn euzhus*, a lak an admiral *gant aon rak freuzañ ur vag all breskoc'h egeto* da reiñ urzhioù nevez en degouezh-se. Difenn oute ober an disterañ trouz eo an disoc'h.

*Petra lavarout diwar-se? (VAZA 130)*

Sed ar pezh en em c'houlenn Priel, mantret goude bezañ gwelet ur c'heneil dezhañ o skrivañ un dra sot war ur voger e diabarzh santual kozh Isis e Pompei.

## 2. Doare

«*Diwar (et a-ziwar), en plus de son emploi pour rendre le rapport physique exprimé en français par "de dessus" (...) est très usité pour exprimer la provenance et parfois aussi le moyen ou la manière*» (**Vallée, p.197**)

*ha pa rankfemp bevañ diwar yod, avaloù-douar gant laezh ribot, krampouezh ha bara sec'h, ne varvimp ket gant an naon (VAZA 73)*

Amañ, DIWAR a vez lakaet dirak «*udb. a ro tu da vastañ d'un ezhomm*» (**GBAHE I.B.6**).

*adkregiñ a rae raktal d'ober dle ha da vevañ diwar bouez e ivinoù, rak en e groc'hen e varvo ul louarn nemet hag e gignat a rafes ez vev (VAZA 161)*



DIWAR zo araogenn ha DIWAR-BOUEZ, gant ur varrennig-stagañ, a gaver renket evel araogenn e geriadur *An Here* ha gant Jules Gros, gant ar sterioù-mañ dreist-holl : «gant skoazell, a-drugarez da» (**GBAHE 1**), «en ur sachañ war (udb.). Stlejañ ub. diwar-bouez e vlev» (**GBAHE 3**), dalc'het gant pe dedennet gant : «hennez diwar-bouez eur bannah a yee partoud, celui-là allait n'importe où, attiré par (*s'il y avait*) un coup à boire (**TDBP, diwar-bouez**). N'eus barrennig-stagañ ebet en hon skouer met deskriavañ a ra ar skrivagner un den pizh o skeudenniñ jestr ar bizied a zastum war e du. Kement hag ober gant un araogenn gevrennek all, a vo gwelet e lodenn an araogenn rannadus, bevañ a rae an den DIWAR-GOUST ar re all. Mat eo teurel evezh ouzh un dra a zo kinniget e geriadur *An Here* : ne vez displeget an araogenn DIWAR-BOUEZ «nemet pa vez ganti ar ster diwar-benn», ur ster disheñvel diouzh hon hini neuze.

*panevet da vugale Mari Robin ar bastell-vro, kaset holl diwar zifrae da Landreger (...) tanfoeltr gouel ne vije bet ar sulvezh-se* (VAZA 58)

Kaoz zo aze eus archerien kaset da Landreger pa oa ar gouel en arvar abalamour d'ar reuz war sevel etre an dud evit abegoù politikel. Emile Combes, e penn ar Stad d'ar mare-se a oa da vont da Landreger ha gant-se e komprenet mat an difrae : «*hâte, célérité, diligence*» (**DEVRI, difrae, 2**). *Diwar zifrae* a zo adverb amañ. Adverboù a saver war ar patrom-mañ : ar. + ak. Kement ha "diwar dizh" e talvez an droienn-adverb.

Gwelet hon eus e tegas WAR ha DIWAR renadennoù-lec'hiañ enebet, evel "pignat war varc'h" ha "diskenn diwar varc'h". «*WAR ha DIWAR o deus kemeret ac'hano aes-tre un dalvoudegezh neuziañ : mont war varc'h (...) war nij*» ha «*kalz eus al lavarennoù-se a zo dezho stummoù enep gant "diwar" : diwar nij eo bet paket al laouenanig gant ar sparfell, diwar yun edo-eñ d'ar mare-se tra m'edo egile diwar e walc'h. WAR a verk neuze ar stad, ha DIWAR ar stad da heul*» a zispleg Kervella (**YBBK 634**).

*prenet am boa ur pikol levr «Le russe sans Maître», marteze diwar skañv ha dre lorc'h , hep gouzout tamm ebet e vijen un dro bennak e-tailh da c'hounit va bara bennozh d'an ardoù-se* (VAZA 117)

Amañ eo dirak un anv-gwan eo lakaet DIWAR, da sevel an droienn-adverb *diwar skañv*. Sevel a reer adverboù diwar ar patrom-mañ ivez : ar. + ag.

Skouerioù all a ro Kervella : «*bezañ diwar ar boeson, diwar re nebeut*», «*bevañ diwar e leve*», «*bezañ diwar aon*» (**YBBK 634**).

### 3. Dave ha keñver

*al Loupillon 'ta, ar gwin aozet e domani bihan Fallières e Mezin, e Lot ha Garon! diwar lavar ar c'hodiserien a-vicher (VAZA 138).*

Kement ha "hervez" e talvez DIWAR aze. Anv-kadarn eo ar ger *lavar* ha neket verb. Skouerioù all e geriadur an Here : «*diwar dent ar c'hezeg, ez anavezer e oad*», «*n'eo ket diwar da lavarou e kredonp an dra-se*» (GBAHE I.B.8).

A-wechoù e c'hall talvezout DIWAR kement ha "diwar-benn" (GBAHE I.B.5) evel er skouer-mañ :

*sarmon a rae mestr an ti, ha bep tro diwar fallagriezh ar veleien: "Bete pegoulz," emezañ, "e laoskint o Mestr hag o C'hrouer kuit a lostenn hag a vragoù?" (VAZA 27)*

Mestr an ti-se zo ur goureont da Jarl Priel hag a zispleg a-raok *n'eus bet biskoazh ha biken ne vo gwelet sebezusoc'h oristal o vale heñchoù Priel*. Er skouer-mañ e kont penaos e klemme an den diwar-benn fallagriezh ar veleien neuze, abalamour ma laoskent jesus en noazh war e groaz.

*Diwar-benn* a gaver e frazennoù all, evel homañ :

*ar re a dabute diwar-benn va micher da zont (VAZA 63)*

Un araogenn anezhi hec'h-unan eo DIWAR-BENN. Un araogenn-gevrennek evel DIWAR-GOUST a vo gwelet en ur pennad a-ratozh, el lodenn araogennoù rannadus.

Daou zen, pe daou dra a c'hall bezañ lakaet keñver-ha-keñver gant DIWAR:

*Tonket e oa da gemer skouer diwar Alan, e vreur eil-henañ (VAZA 49)*

An Alan-se en devoa kaset e stal *dre c'hoari lapavan ha c'hoari an douilhez*, da lavaret eo riboulat ha mont da verc'heta. Gant an araogenn DA, o skrivañ "kemer Alan DA skouer" e talvezfe un dra all diouzh a zispleg geriadur *An Here* : «*Den da vezañ drevezet en abeg d'e berzhioù mat. Kemer da vreur da skouer*» (GBAHE I.B.2). Ar geriadur, gant DIOUZH ha DIWAR, a ro ar memes ster da «*kemer skouer diouzh, diwar ub. : ober, en em zelc'her evel ma ra*» ha Devri a ginnig ar memes talvoudegezh-se gant OUZH ha WAR ouzhpenn d'an

daou-se (**DEVRI, skouer, 2.II.1 ha 2**). Favereau a ginnig WAR ha DIWAR (**GMFF, skwer**). Diouzh dibab ha kustumioù pep hini e vo graet gant unan eus an araogennoù-se neuze moarvat ha Priel a ra gant an araogenn DIWAR en ur frazenn all gant ar memes troienn : *kemerit skouer **diwarnon-me*** (VAZA 78).

Taolomp pled ouzh ar raganv-gour "me", kentañ gour unan, lakaet evel ger-pouezañ (**YFFK 424**) da heul an araogenn a zo kemmesket dija gant ar memes gour.

En div skouer diwezhañ, DIWAR a zegas ar renadenn d'an droienn-verb "kemer skouer".

*aozet e voe zoken ur vojenn **diwar skouer** La Fontaine: Le Président, sa fille et Lannes* (VAZA 139).

Amañ eo lakaet DIWAR dirak "skouer" hag ur renadenn-doareañ d'ar verb *aozet e voe* .

A-fet yezh e c'hall bezañ ar c'heñver :

*E stumm-se e c'hoarvezas ganin **treiñ a-ziwar ar galleg** prezegenn hon admiral* (VAZA 93)

Gwelet a reer emeur aze ivez gant an orin e gwirionez. Ha kerkoulz all e vije bet ober gant DIWAR e plas A-ZIWAR.

Amañ emeur war tachenn an amzer :

***diwar neuze** e tarzhas reuz, charre ha trubuilh em Bro-Dreger* (VAZA 57).

Adverboù zo, evel *neuze*, a c'hall bezañ implijet o-unan pe gant harp un araogenn (**YBBK 523a**). An adverb *neuze* harpet gant araogenn *diwar* ac'h a da sevel un adverk kevrennek en ur mod. Pelloc'h e tispleg Kervella zo eus *diwar neuze* ha *diwar vremañ* adverboù a verk ur c'heñver en amzer. «*Pa ne vez ger all ebet da spisaat (displeget pe gouzispieg) e vez diazezet ar c'heñveriañ-amzer war an daou c'her BREMAN evit an amzer-vremañ ha NEUZE a denn d'ur pred en amzer dremenet pe en amzer da zont*» (**YBBK 532**).

*"**Diwar vremañ**," emezañ, "laoskit ho plev da greskiñ ken na dapint deoc'h betek ho tivskoaz* (AMAH 562)

N'hallfe ket bezañ skrivet "diwar neuze" er skouer diwezhañ-mañ neuze.

Ha pa vefe bet kinniget an holl skouerioù-mañ, hag ac'h a d'ober al lodenn gouestlet d'an araogenn DIWAR, e-barzh pennadoù disheñvel e weler emañ ar pep brasañ anezhe liammet well-wazh gant un orin.

# DRE

## 1. Egor

Implijet e vez DRE da verkañ al lec'h a dreuzer pe ac'h eer hebiou dezhañ, evit mont eus ul lec'h d'ul lec'h all (NYVF 1) :

*e tistrojomp war-du an hanternoz en ur dremen dre borzhioù-mor Philadelphia ha Boston (VAZA 97).*

War hent an hanternoz emañ ar porzhioù-mor meneget.

*alies e tremene dre Briel un dall o klask e vara (VAZA 37)*

*pa dremene dre ar vourc'h ur goantenn bennak (VAZA 111)*

Er skouerioù-se e tegas DRE ar renadenn-lec'hiañ d'ar verb "tremen".

Taolomp pled ivez e ra Priel gant *ar vourc'h* e plas "ar bourk" a vez implijet muioc'h e Treger.

Un dibab ober evel-se dre skrid moarvat.

Araogennoù all a c'hall bezañ implijet da heul ar verb "tremen" ha disheñvel a-grenn e vo ar ster.

"Tremen GANT udb." a dalvez kement ha «*kaout e walc'h gant udb. (nebeut anezhañ prl.)*» (GBAHE, tremen, II.C.2) ha skouerioù a vo gwelet el lodenn diwar-benn GANT.

"Tremen DA ub." a vez implijet en ur stumm dic'hour, hag a zo ur stumm a reer kalz anezhañ gant skoazell an araogenn DA. «Tremen a ray dezhañ : *sederaat a ray, ne vo ket mui e spered gant an dra-se*» (GBAHE, tremen, III)

Gant "tremen" er stumm emober e c'haller ober gant araogennoù all ivez. «En em dremen ouzh, diouzh ub. : *en em glevet gantañ, bezañ deuet mat gantañ*» (GBAHE, tremen, IV).

Tremen a ra ur c'hlasker bara GANT ar pezh a roer dezhañ neuze, hag e-pad merdeadennoù bras war vor e vez gwelloc'h en em dremen OUZH ar vartoloded all.

Estroc'h evit ar verb "tremen" a vez degaset renadennoù-lec'hiañ dezhañ gant DRE :

*anez-se, e rankin lamm a-dizh e-maez ho ti, ha pa vefe dre ar prenestr (VAZA 39),*

*hor bag kempennet e-giz un aerouant flistrañ tan dre e c'henoù hag e doulloù-fri (VAZA*

169).

*N'hellen ket evel-just tremen hep arvestiñ ouzh mirdi kaer, **brudet dre holl** er mare-se (VAZA 128)*

Al lavarenn *dre holl* a dalvez "e pep lec'h".

Souezhus eo ar frazenn-mañ hep renadenn ebet da *mirdi kaer*, na ger-mell ebet. Heñvel eo an destenn en embannadur VAZA 1975. Marteze un ui-koukoug n'eo ket bet divanket ?

Evel an araogennoù all a ginnigomp er studiadenn-mañ, DRE a c'hall bezañ displeget.

*ne oa ar C'hremlin nemet ul leurgêr voutin **ma tremene drezi** neb a gare (VBRU 207-208)*

Amañ zo kaoz a lec'h neuze, pa ra dave an araogenn displeget en trede gour unan benel d'ar gêr *leurgêr*:

*ne baoueze ket ar vitizhien da grial e toull an draf ma veze **degemeret ar pladoù drezañ***: Et un ormeau pour un!... Et un ormeau pour deux, deux!...(VAZA 161)

Ar verb "degemer" zo doareet gant *drezañ* met aze ivez «*e talvez da c'heriañ an tremen, an treuziñ*» (**GBAHE I.A.1**) : *e toull an draf* ne ra ar pladoù nemet tremen, evit mont eus ar gegin da ostizien an ostaleri.

Amañ ivez eo ar gendestenn a ro ar ster rak gant un ereadur heñvel-mik e c'hall bezañ ur ster all hag a gaver e geriadur An Here : «Mont dre ub., udb. : *tremen warnañ*» hag e ro ar skouer «Aet e oa ar rod *drezañ*» (**GBAHE I.A.4**).

*er mare-se ne veze ket klevet ar vugaligoù o trailhañ gallegach **dre an heñchoù** (VAZA 14)*

*ne vez ken kavet **dre amañ** kemend-all a oristaled (VAZA 112)*

N'eus ket kaoz a dreuz nag a zilec'hiañ amañ. Merkañ a ra an trowardroioù tost kentoc'h.

Da geñveriañ gant *brudet dre holl* er skouer uheloc'h.

Setu ur skouer all gant an droienn *dre amañ* :

*jilgammat war an daou du a rae ar paourkaezh, krennoc'h eget ur c'hornandon ha tort daonet war ar marc'had; hervez ma lavarer **dre amañ**, aet e oa e gof en e gein (VAZA 32)*

Da reiñ da gompren pegen a-dreuz e oa paourkaezh deskrivet gantañ e ra Priel gant an droienn skeudennet *aet e oa e gof en e gein*. En e vro pe en-dro dezhañ e vez, pe e veze, graet gant an droienn-se. An dra-se eo a gont d'al lenner bepred.

Un droienn all, e-mesk kantadoù a droiennoù a gaver dindan e bluenn, a zo hon araogenn DRE enni :

*Darn, eme an dud, a sell gwell verr ouzh o bleud hag ouzh o brenn; houmañ 'vat a sile ar yod, evel ma lavarer, dre lostenn hec'h hiviz* (VAZA 22).

Graet eo da zeskrivañ un den pizh-pizh : er frazenn a-raok dija e ouie teskrivañ ar plac'h-se evel ur vaouez ken lart hag ur vlongenn ha mat-tre ar stal ganti, met daoust da se tost-daonet (VAZA 22).

## 2. Amzer

*Dre ma tostae d'hol lestr bag ar roue, horellañ ha diwintañ a rae gwashoc'h eget ur graoñkelvezenn en ur c'hibellad dour fourdouilhet gant dornig ur bugel* (VAZA 118).

Diwar an araogenn DRE eo savet ar stagell amzeriañ *dre ma* hag a dalvez "a-feur ma", "bep ma" (GBAHE II.A.2). "Dre ma" a c'hall merkañ un abeg ivez (GBAHE III.A.1 ha DEVRI III.A.1 : «*du fait que, parce que*»). Un afer abeg a c'hallje bezañ er skouer-mañ : ma vije bihan lestr ar skrivagner, ha pell brasoc'h hini ar roue, hag a raje dezhi hejañ abalamour d'ar gwagwennoù produet ganti e-kichen bag Priel. Ar gendestenn a ditour war ar ster neuze, ha neket an ereadur a chom heñvel gant e batrom "*dre ma* + vb. displeget". Er frazenn a-raok e skriv Priel :

*Brudet eo pleg-mor Biscaye dre ma ren ennañ un amzer vreïn ha kriz eus an eil penn ar bloaz d'egile.*

"DRE ma" a zo e deroù un islavarenn abegiñ, a zispleg ar perag eus brud ar pleg-mor. Displegañ a ra er frazenn-se neuze perak, er frazenn goude, e hej lestr bag ar roue. An abeg n'eo ket an ober tostaat met ar pezh a zo kontet er frazenn a-raok.

Er skouer gentañ emeur gant daou ober kempred : tostaat, hag ivez horellañ ha diwintañ.

Visant Fave a ro ar soñj-mañ : «*marteze e vije gwelloh miret ar stagell dre ma evid an izlavarenn amzeria ; evid an abega ez eus stagellou all : Pa – Peogwir – Abalamour ma – En abeg ma – O veza ma – Evel-se*» (NYVF 7). Priel a implij DRE MA evit an daou.

*dre lenn an envorennoù-mañ, gwelout a reot marteze n'on ket trec'h betek-henn d'an tech-se...* (VAZA 61)

DRE zo lakaet dirak un anv-verb ar wech-mañ. Posupl e vije bet skrivañ "dre ma lennot" en e lec'h. Emeur aze ivez gant daou ober graet asambles. Posupl e vije erlec'hiañ DRE gant "en

ur". Met ne c'haller ket ober bepred. Sellomp ouzh ur skouer all :

*e reder a dlee bezañ ensellet eno el lennaozañ, o vezañ ma 'z oa bet gwastet e staoñ da vat **en ur vont d'Orleans Nevez (VAZA 103).***

Kignet e oa bet staoñ ar vag e-pad ar veaj.

Yann Gerven a sach evezh an dud war fazioù a vez graet alies gant tud a zrougvesk EN UR ha DRE MA hag e tispieg kement-mañ da-heul. An eil a egile a liamm daou ober graet er memes mare. Met diforc'hioù zo. «EN UR a c'hell bezañ implijet pa vez daou ober graet **gant ar memes rener**, ober ar bennlavarenn (= principale) o vezañ kempred gant hini an islavarenn (= subordonnée)». Ha «DRE MA a c'hell bezañ implijet evit daou ober **kempred ha padus o-daou**, gant ar memes rener pe daou rener disheñvel» (GERVEN, B.12).

Mont da Orléans zo un ober padus met gwastañ staoñ ar vag zo bet graet buan. Ne c'haller ket ober gant DRE MA neuze. Er skouer a-raok e c'haller ober gant DRE MA pe gant EN UR peogwir eo ar memes rener a lenn an eñvorennoù hag a wel, marteze, n'eo ket trec'h d'an tech meneget, peogwir eo kempred an daou ober-se, ha peogwir int padus o-daou.

*Mar degouezh din bremañ, **dre vont war goshaat**, bezañ gwisket evel ma teu e teu, ur paotrig faro a oan d'ar c'houlz-se (VAZA 31)*

Implij an araogenn WAR e-barzh an droienn-verb "mont war goshaat" a verk ivez un emdroadur en amzer, evel a vo gwelet pelloc'h el lodenn diwar-benn WAR.

***Dre chom dilabour**, e tegouezhe dimp alies bezañ warv hent ar re a boanie a lazh-korf (VAZA 116)*

An abeg, an doare, an amzer a c'hall bezañ liammet evel a ziskouez an droienn "gant poan hag amzer a-benn a bep tra e teuer".

Pa glasker e geriadur Vallée penaos treiñ "*à force de*" e kinnig meur a dra : «(*devant un infinitif*) dre, dre ... a-walc'h, dre hir, a-bouez, war-bouez» hag ivez «e ser» e rannyezh Leon ha «dré soul, a-soul» e rannyezh Gwened (VALL, p.312). DRE e-unan n'eo ket meneget e geriadurioù galleg-brezhoneg all evel hini Ar Glev (LE GLEAU, 1983), hini Martial Menard (MENARD, 2012), ha geriadur meur Favereau en internet (GMFF).

Ur skouer gant *dre hir* a zeu gant Priel :

***Dre hir gortoz** e teuas a-benn ar fin an deiz ma tigorjont dirazon dor-dal an Dépot evit ar wech diwezhañ, ha me da Briel an eil warn-ugent a viz C'hwevrer, 1911. (VAZA 171)*

Kavout a reer an droienn-se e geriadur An Here, gant ur c'hemmadur avat : «(*en amzer*) Dre (hir) amzer, dre hir c'hortoz : *gant gortoz pell*» (GBAHE I.C).

Un droienn all a zeu meur a wech dindan bluenn Priel :

*ne gouste ket madoù: ugent real er miz, **ha fin dre eno!*** (VAZA 112).

Kaoz zo eus feurm ur gambr e Brest.

*kavet e vije bet abeg da gunujenniñ ha da dabutal un nebeudig, **ha fin dre eno*** (VAZA 56)

"Eno" a ra ar peurliesañ dave d'an egor met e degouezhioù rouez e c'hall ober dave d'an amzer evel gant "betek eno" ma talvez "betek neuze". Geriadur *An Here* a lak ivez : «ha setu eno, ha fin dre eno, echu dre eno : *ha mat, hag echu evel-se*» (GBAHE, eno, II). Damheñvel ouzh an droienn "hag achu pateroù" neuze.

### 3. Kont, muzul

«*An niveroù pegementiñ a c'hell kemmesk gant an anvioù-gwan perc'hennañ hag an araogennoù A ha DRE evit reiñ adverbioù-neuziañ*» (YFFK 453). N'eus ket bet kavet skouerioù evel ar re a ro Kervella : «*dre zaouioù, dre bempoù, dre ugentoù*». Marteze ne glot ket gant danvez ar skrid. Gallout a reer menegiñ an dregantad memes-tra, hag ar skouer a zo en *Amañ hag ahont* :

*Hervez darn, e c'houlenne digant ar skrivagnerien o deveze d'ober gantañ **ur c'hement-mañ-kement dre gant** diwar o gwirioù da zont; hiniennoù a ranke zoken paeañ al lodenn vrasañ eus ar mizoù* (AMAH 494)

Er skolioù, pa bleder gant danvez ar matematikou e reer muioc'h gant "un dregantad", berroc'h e stumm. Setu un doare all neuze.

N'eo ket resis an dregantad er skouer p'eo amresis *ur c'hement-mañ-kement*.

"10%", diouzh an doare matematikel da skrivañ an traoù a c'haller skrivañ ivez "dek dre gant". Gant DIWAR e ro Jules Gros ur skouer all m'emeur gant ar pezh a zo tennet pe diskontet diwar ur sammad resis «*pevar real he-doa roët din diwar ma deg lur, elle m'avait donné (rendu) un franc sur mes dix francs*» (TDBP, diwar, 1). E geriadur *An Here* e klot implij DIWAR evit feurioù ivez : «*n'eus nemet un annezad diwar bevar zo gouest da gomz yezh ar vro*» (GBAHE I.C.2).

*ur rummad Gallaoued, **marc'hadourien dre vras**, ijinourien ha mistri-labouradeg annezet e Meksiko* (VAZA 92)



E galleg e c'haller "*acheter EN gros à un marchand qui fait du commerce DE gros*". E brezhoneg e reer gant an araogenn DRE.

Muzul DRE vras a c'hall bezañ, ha DRE ar munud ivez :

*Ned in ket 'ta da glask flabotal bardellachou war zigarez disklêriañ dre ar munud pe dre vras petra 'oa eno* (VAZA 123).

Frañsez Vallée a ginnig ivez DIOUZH evit gwerzhañ DIOUZH ar munud, DIOUZH ar pouez, DIOUZH ar walenn «*au mètre* (à l'aune)» (VALL, 195).

## 4. Abeg, doare

Tost a-walc'h ha tanav e c'hall bezañ ar vevenn etre an abeg hag an doare a-wechoù. Gant-se int aet d'ober ur pennad boutin. Skouerioù zo a c'hall bezañ en eil rannbennad evel en egile. Evit re all eo o sellet pishoc'h ouzh al liamm a-fet yezhadur pe ereadur a zo etre ar gerioù er frazenn e vint renket en eil kentoc'h evit en egile.

*ur peder gwern dre lien o tont er porzh* (VAZA 98)

*razelloù stlejet gant bigi dre dan* (VAZA 114)

Geriadur *An Here* a zispleg e c'hall an araogenn DRE, dirak un ak., gant ur vb. pe un ak., talvezout «*d'ober anv eus ar pezh a ro tu da dizhout pal pe bal*» (GBAHE I.F.1), hag e ro ur skouer heñvel gant «*ur vag-dre-lien*» panevet d'ar barrennigoù-stagañ a liamm an araogenn ouzh an daou ak., d'ober gant an hollad un anv-kadarn dezhañ e-unan.

Emeur gant ur patrom ak. + ar. + ak.

Gallout a reer merkañ an doare ma c'hoarvez pe ma reer an traoù diwar patromoù all, gant an araogenn dirak ar vb. da skouer :

*tri bloaz goude, dre gĩañ warni evel-just, e oan deut da vezañ ofiser* (VAZA 79)

Mennozh ar pal zo aze ivez : n'eo ket dre vurzud e oa aet da ofiser, met dre un ober merket gant ur verb. Gwelet «*dont a-benn dre boaniañ*»\_roet evel skouer evit an doare ma reer an dramañ-tra (GBAHE I.F.3), savet diwar ar patrom vb. + ar. + vb.

*dre lonkañ, ez eo aet e holl vadoù en e gorf* (VAZA 62)

Aze n'emeur ket pell eus tachenn an amzer ivez hag ar pezh a glot gant ar galleg "*à force de*"

hon doa gwelet a-raok. Rak ma c'haller mervel prim dre lonkañ un died ampeozonet, ec'h eo amañ dre forzh lonkañ war hir amzer *ez eo aet e holl vadoù en e gorf* : kalz a arc'hant zo aet gant an alkool, bet lonket gant an den. Da geñveriañ gant "EN UR lonkañ" a dalvezfe n'en doa a vadoù nemet e voutailhad

Dirak un ag. e c'hall bezañ DRE :

***n'ouzon ket dre sur*** (VAZA 117)

E meur aze gant ur patrom all : vb. + ar. + ag.

E DEVRI e vez kinniget "dre-sur" evel trienn adverb (**DEVRI, sur, III.A.3**) savet diwar an anv-gwan *sur* lakaat da heul an araogenn neuze. Doareañ a ra ar verb "gouzout". Ur varrennig-stagañ a zo er pennger kinniget e Devri : «***dre-sur adv. D'une manière sûre, avec certitude***». Met n'eus ket er skouer a lak hag a zo tennet eus Pipi gonto skrivet gant E. Ar Moal e 1902 : «Herve a respontaz na ouie ket dre zur» Gwelet a reer n'eo ket stabil merk ar barrennigoù-stagañ e brezhoneg, en amzer, a skrivagner da skrivagner ha diouzh penaos e vez sellet ouzh an traoù : un araogenn lakaet dirak un anv-gwan eo pe un adverb savet diwar ar patrom ar. + ag. hag ac'h a d'ober ur ger hepken.

E Devri evel e geriadur Vallée embannet dindan renerezh H. Seubil Kernaodour, ne gaver *dre sur* nemet gant "gouzout dre sur" (**DBTG, dre**). Un droienn sonn e vefe neuze, nemet ma vefe kavet e lec'h all gant ur verb bennaket all. Kentoc'h evit gant mennozh ar pal ec'h eo gant deskrivañ emeur amañ bepred.

Deskrivañ doareoù ober a c'haller ober diwar ur patrom all c'hoazh : vb. + ar. + ak.

*taolennoù gant gisti noazh warno,ur seurt skeudennoù treuzwelus na vezont **gwerzhet** nemet **dre guzh*** (VAZA 91)

*a-benn pemzek deiz, e-tailh e voen dija da **seniñ dre 'n eñvor** ha kuit a fazi "An hini gozh"* (VAZA 40)

***goût*** 'ouien ***dre 'n eñvor*** ar c'hanaouennoù aozet gant Botrel diwar-benn merzherien an Douar-Nevez (VAZA 99)

"Dre eñvor" a c'haller skrivañ kerkoulz all gant ar memes ster. Ha gant un araogenn all e c'haller ober ivez : DINDAN eñvor, pe A-ZINDAN eñvor a dalvez ar memes tra (**GBAHE, eñvor, I.2**).

Un toullad troiennoù all a zo, hag a zeskriv an doare ma reer an traoù. Menegomp "dre gaer" ha "dre heg" pe an eil hag eben er memes troienn :

*N'ouzon ket da bet martolod hag isofiser e tegouezhas bezañ sachet dre gaer pe dre heg e ti bourc'hizien pe noblañs (VAZA 143).*

*treiñ war du-mañ-tu, ha tu evit tu, ar skouadrenn a-bezh pe dre rann listri an eil war-lerc'h egile (VAZA 114)*

Mark Kerrain a ro : «*treiñ tu evit tu : treiñ penn-da-benn, faire volte-face*» (Kerrain, 2017, **Levrenn 7, 13**). Anv zo er skouer-mañ eus pleustradegoù a bep seurt a veze d'ober gant ar soudarded war vor.

Ur skouer all a zeskriv penaos e oa kont gant ur strollad Rusianed kaset da Bariz «*da ouel broadel ar C'hallaoued*» :

*Ar Rusianed a renke o soudarded dre o ment (AMAH 351)*

DRE a zo implijet evit merkañ an urzh : «*an dud a vo renket dre oad, dre vent, dre vro (pe dre an oad / ar vent / ar vro)* (NYVF 5).

Gallout a reer lakaat ar ger-mell pe get, evel en droienn "dre eñvor".

Sellomp ouzh ur skouer all :

*o vezañ ma choment pell dioutañ dre zoujañs setu ma voent pedet gant ar Vikel vras da dostaat (VAZA 61).*

E geriadur *An Here*, evit DRE : «*(dirak un ak. hep gm. dirazañ) Termen a dalvez da c'heriañ un abeg*» (GBAHE I.E.1). Skouerioù "dre gasoni", "dre fazi", "dre chañs" a ginnig.

Aze eo disheñvel diouzh skouerioù a-raok : ne c'hall ket bezañ lakaet ar ger-mell. An doujañs n'eo ket un doare a chom pell met un abeg evit chom pell. Abalamour m'o doa doujañs, pe d'an nebeutañ abalamour ma tiskouezent doujañs, e choment pell.

*un niz klañvidik, na chome bev nemet dre vurzud hag a-drugarez d'he louzoù (VAZA 39)*

*gwech ebet en he buhez n'eo bet klañv da vat, ha mervel a reas dre gozhni (VAZA 63)*

Eus abeg ar marv zo kaoz aze, pa oa kaoz er skouer a-raok eus an abeg ma chome bev, deskrivet dre skeudenn evel-just.

Daoust da veneg geriadur *An Here*, lakaet uheloc'h (GBAHE I.E.1) e c'hall a-wechoù DRE merkañ an abeg, o vezañ lakaet dirak un anv-kadarn gant ur ger-mell :

*ezhomm en devoa eus un tabouliner dispar hag eus ur soner en em zibabje mat a-walc'h gant an trombon; dre un taol degouezh, ar benveg end-eeun e oan bet ur mailh warnañ e kloerdi Landreger! (VAZA 66)*

Devri a dro *taol degouezh* gant «*coup du hasard*» (DEVRI, **degouezh, 6**). Kavout a reer ivez

e rannbennad geriadur *An Here* ur skouer gant ur ger-mell, en un droienn all : «*dre un taol chañs*» lakaet goude «*dre chañs*» (**GBAHE I.E.1**).

*un dra difennet groñs evel-just war al listri brezel, met houmañ a oa merc'h ar senedour Thompson, ministr ar Verdeadurezh-stad abaoe ur pennad, ha dre-se kalz hiroc'h e oa e vrec'h eget e vañch* (VAZA 92)

Anv zo eus ar fed e felle d'ar plac'h «*chom da vevañ war vourzh gant he den*», ar pezh na oa aotreet e mod ebet, sañset.

"Dre-se" a c'hallfe bezañ erlec'hiet gant "gant-se", a verk ivez an abeg, o tisplegañ al liamm heuliad etre daou ober. E Devri : «*Par conséquent*» (**DEVRI, dre-se, II**).

Dedennus eo teurel un tamm sell ouzh ar galleg, ha keñveriañ implij an araogennoù evit un nebeud skouerioù hon eus gwelet a-raok :

DE gré ou DE force : DRE gaer pe DRE heg,

PAR respect : DRE zoujañs,

DE vieillesse : DRE gozhni

A voile : DRE(-)lien

PAR coeur : DRE ('n) eñvor

EN cachette : DRE guzh

Diskouez a ra pegen talvoudus ha pouezus eo studi an araogennoù evit gouzout implijout an hini pe ar re a zere e brezhoneg : stag eo araogennoù ar yezh ouzh he mont en-dro, ouzh he dibarded, ha ne c'haller ket lakaat keñver-ha-keñver un araogenn bennak en ur yezh gant un araogenn all en ur yezh all, o soñjal o deus ar memes talvoudegezh.

# E

## 1. Egor

«Gant E e vez degaset renadennoù doareañ o verkañ : a) al lec'h, gant ul lusk pe nann» (YFFK 620).

*kentañ porzh e taoljomp eor ennañ a voe Las Palmas, en enezenn Grande Canarie (VAZA 84)*

An daou stumm kinniget gant Kervella zo er skouer-se.

Da gentañ eo merket al lec'h m'en em gavo an eor : *ennañ* oc'h ober dave da *kentañ porzh* gant merk an trede gour unan gourel kemmesket gant an araogenn E. Hag *ennañ* zo renadenn doareañ ar verb "teurel" a verk ul lusk. Gant-se e weler e c'hall E merkañ an dilec'hiañ daoust m'eo DA en gra alies. Hervez Kervella an diforc'h er c'heñver-se eo ar fed zo ur merk a bal gant DA, ha n'eus ket gant E (YBBK 608).

Da eil eo doareet *Las Palmas* gant ar renadenn lec'h «*enezenn Grande Canarie*» degaset gant EN. Met n'eus lusk ebet, p'eo difiñv *Las Palmas*, dre natur.

*savet e vo ul leur-c'hoari er porzh a-dreñv, dindan ar c'hled bras ma stign ennañ ar vartoloded o c'houez da sec'hañ (VAZA 82)*

Jules Gros a ginnig an implij-mañ : «*devant les mots désignant l'espace, le lieu*» (TDBP 1).

Daoust hag araogennoù all a c'haller ober gante ? Ma chomomp gant ar *porzh* e c'hall ar vugale "c'hoari WAR porzh ar skol", peogwir zo un darempred a stok etre ar vugale hag ar porzh (GBAHE, war, I.A.1). Gallout a reer "mont D'ar porzh evit un abardaevezh bageal" peogwir e verk DA ar pal en degouezh-se.

Lakaat a ra Mark Kerrain ar gaoz war ar fazioù stank a vez graet e-keñver implij E e plas DA, diwar levezon ar galleg. «*Utiliser e avec les verbes de mouvements, mont, dont, kas, degas, quand ils doivent être suivis de da est une faute courante de débutants, le français ne distinguant pas les prépositions de mouvement.*» Rankout a reer skrivañ : «*dont a ra da Vreizh bep miz*». «*On ne confondra pas, si on a le souci de la nuance, Mont d'an ostaleri, aller au*

bistrot, *action volontaire ou habituelle*. Mont en un ostaleri, entrer dans un bistrot, *fruit du hasard ou décision soudaine*» (GBMK, p.61). Un toullad skouerioù enep a ro ivez, ma vez ur fazi ober gant DA (GBMK, p.57-59).

Dindan pluenn Priel e lenner :

*Du-hont 'vat, e tapis gwelout ur pedergwern dre lien o tont er porzh* (VAZA 98)

N'emeur ket gant ar pezh a ra Kerrain «*fruit du hasard ou décision soudaine*» anezhañ met aze emeur dirak ar porzh, evel a lavarer "mont EN ti" pe "mont tre EN ti" pa vezer e toull an nor.

Vallée a zispleg kement-mañ da heul. «*Il faut noter l'emploi fréquent de e, en, dans après des verbes de mouvement dont le régime est précédé de "à" en français pour indiquer qu'il y a mouvement pour aller dans*» : «il se jette à l'eau, *en em stlepel a ra en dour*». War ar memes skouer e galleg : "*arriver au port*". (Vallée, 1926, p.193).

Hag ivez :

*Bez' e vez amañ bep Sul ha bep gouel bagadoù martoloded na fell ket dezho mont en kêr d'ober an diaoul hag e bevar* (VAZA 81).

E diavaez kêr e vezer a-raok mont en kêr, met nebell memes-tra, evel er c'hemm a zo etre kreiz-kêr ha peurrest ar gumun. Ma vezer e Plijidi hag e vezer gant ar c'hoant prenañ traoù e Gwengamp, e ranker mont DA gêr Gwengamp avat.

«*Gand ar ger kêr (Kêr-Vrest...) e vo lavaret atao e : Mond a ran e kêr.*» «*A-hend-all : kêr (an ti annez el leh emañ o chom) Mond a ran d'ar gêr*» (NYVF p.15 1.b).

Diforc'h a lak Seite etre an annez, "ar gêr", ha lec'h ar gumun.

E skouer Priel n'eo ket "mont E kêr" met "EN kêr". Displegañ a ra Kervella e teu E da vezañ EN dirak ur vogalenn (YFFK 619) met un dra all a lak Jules Gros war wel : «*En K.L.T., E s'emploie devant les noms commençant par une consonne e EN devant une voyelle ; mais en trégorrois on dit EN dans tous les cas*» (TDBP E,EN).

*e lakeas va c'henitervez Janed un hanter-c'houlou soav da deuziñ en e voued* (VAZA 108)

*sellout ouzh ur varc'harid-gouzoug-hir o pakañ kranked munut el lec'hid* (VAZA 107)

En div skouer-se, renadenn-anv ar verb ne verk tamm dilec'hiadenn ebet : en e voued e vo dija pa grogo an hanter-c'houlou soav da deuziñ, evel m'emañ ar c'hranked el lec'hid pa vezont tapet. Al lec'h ma c'hoarvez an ober eo a zegas an araogenn : «*le lieu (locatif ou inessif)*» (GBFF 807).

Heñvel eo gant ar skouerioù-mañ :

*teurel eor e Dakar* (VAZA 92)

*e kement porzh mor e tegouezhe dimp douariñ ennañ* (VAZA 94)

Da genderc'hel gant ar c'heñveriañ a c'haller ober gant ar galleg, sellomp ouzh un nebeud skouerioù a denn d'ar c'horf. E brezhoneg e reer gant an araogenn E/EN pa rafe ar galleg gant «à» evit an div gentañ d'an nebeutañ :

*Bez' e veze en e gerc'henn ur pezh kolier lem-laka* (VAZA 25)

*ur re votoù-koad en e dreid* (VAZA 26)

*bez' oa en he fenn daoulagad damc'hlas* (VAZA 17)

Er skouer diwezhañ, ne rafe ar galleg gant araogenn ebet moarvat, hag ec'h implijfe ar verb «avoir», traken : «elle avait des yeux...». Alese ar pech eo ret diwall outañ pa vez anv a dreñ «avoir». Hag en degouezh-mañ, ne vefe ket gwelloc'h treiñ «avoir» gant "bezañ gant" kennebeut-all, evel a welfomp pelloc'h er pennad diwar-benn GANT.

*o vezañ ne gavas ennon na si na namm, ha netra da damall d'am c'halon, d'am skevent na d'am avu, e tisklêrias e oan dellezek da vezañ martolod* (VAZA 79)

An araogenn E a dalvez da c'heriañ bezañs ub. pe udb. (**GBAHE I.A.1**), hag amañ o vezañ m'emañ ar frazenn er stumm-nac'h e lak war-wel an diouer a vezañs, evit a sell kudenn yec'hed a-fet korf.

## 2. Amzer

Gallout a ra E degas renadennoù doareañ a verk an amzer (**YBBK 620**).

*eno e teue holl vrini ar vro da gludañ en noz ha d'ober o neizh* (VAZA 107)

*Aet e oa ar paourkaezh Biz Kamm da Anaon er bloaz 'raok* (VAZA 40)

Amañ, n'eus ket anv a badelezh a vefe liammet gant ur prantad bennak : en un deiziad resis e oa aet Biz Kamm, ha pa ne vefe resisaet nemet ar bloaz.

*E miz C'hwevrer e teuas da Vreizh* (VAZA 158)

Aze ivez eo meneget ar miz met ne dalvez ket e oa e Breizh adalek deiz kentañ ar miz betek an deiz diwezhañ.

*Fall daonet e veze an amzer er goañv-se, glav pe erc'h a rae bemdez Doue* (VAZA 159)

Ar stumm boas ouzhpenn d'ar pouez ma lak ar skrivagner da zoareañ an amzer, *fall daonet*, a

ro da soñjal e oa d'an nebeutañ er pep brasañ eus devezhioù ar goañvezh e oa bet amzer fall, ma n'eo ket an holl. Met n'eo ket an araogenn E a ra.

Er skouer-mañ e reer hep an araogenn zoken :

***Hañv-goañv**, forzh penaos e teurveze d'ar mor bezañ, splannoc'h eget ur melezour pe ken kounnaret hag un diaoul dichadennet, boulc'het ha kaset e veze da benn, a-wechoù **deiz ha noz**, pleustradegoù a bep seurt (VAZA 114)*

Sellout ouzh skouerioù all :

*kas a rae dimp **div pe deir gwech er bloaz** pikoloù pakadennoù leun a draoù a bep seurt (VAZA 39).*

*ken pizh e oa ar priejoù-mañ m'o divije a c'hrad-vat touzet ki ha kazh **div pe deir gwech er bloaz** gant m'en divije kavet fret ar c'hrev anezho (VAZA 138).*

Klevet a reer ivez "div pe deir gwech ar bloaz", e Treger d'an nebeutañ, hep an araogenn E. En div skouer-mañ eo lakaet ar pouez war ar fed e tistro an ober dre veur a wech, kentoc'h evit war ar prantad.

*C'hwec'h **kant lur er bloaz** a ranke diyalc'hañ ar re binvidikañ hag a rae kerkoulz tinell hag ar veleien (VAZA 51).*

***pemp lur ha daou-ugent er miz** am beze da gaout (VAZA 91).*

En eil skouer diwezhañ, kaoz zo eus priz ar bloavezh. Hag en hini diwezhañ eus ar pezh a reseve war prantad ur mizvezh. Hep resisaat ar gendestenn, o vezañ m'emañ ar verb "bezañ" er stumm boas, e c'haller en dro-mañ lakaat DRE e plas *er*, o viret ar memes ster. Kerkoulz all e vije bet posupl ober gant "bep".

*kerkent all e respontas din e oa erru va lizher **e koulz hag en amzer** (VAZA 77)*

Gallout a reer tostaat an droienn-mañ ouzh an hini roet gant Favereau «*e poent hag en eur en temps et en heure*» (**GBFF 808**). Eus ur momed resis zo kaoz.

Disheñvel eo amañ :

*ne oamp ket evelkent evit brifañ **e berr amzer** kemend-all a voued (VAZA 153)*

E DEVRI, brifal/brifañ : «*fam. Manger, baffrer*»

Kaoz zo eus ur prantad, ur badelezh, ha pa vefe berr.

*ar vougasenn euzhus-se, ken tev, ken divoull hag ur vantell stoub kouezhet warnoc'h **en ur serr-lagad** (VAZA 99)*

E DEVRI, serr-lagad (2) : «*en un clin d'oeil*». Keñveriañ gant "en ur ober" pa zegas ur



renadenn amzer :

*skubet int bet o fevar en ur ober daou vloaz (AMAH 492),*

o komz eus pevar den aet d'an Anaon dindan daou vloaz. Ar prantad zo berroc'h en eil skouer diwezhañ, pa ra dave d'an hini a zo ezhomm anezhañ evit ober ur serr-lagad. Un doare da skeudenniñ ar prim ma c'hoarvez evel-just, kentoc'h evit ar muzul resis.

### 3. Stad fizikel, neuz fizikel

E meur a geñver e c'hall E degas renadennoù doareañ a verk ar stad fizikel pe an neuz fizikel.

*hag e gwenn-sin penn-da-benn e vezemp gwisket er broioù tomm (VAZA 89)*

An araogenn E zo ur «ger a dalvez da verkañ liv an dilhad, an traoù» (GBAHE III.A.3).

*lietennoù a bep seurt liv, melen, gwenn, ruz, glas, ha me oar, ha warno anv hol lestr e lizherennoù aour (VAZA 144)*

Pa vefe evit a sell al liv pe pa ne vefe ket, pa vez anv a zilhad evel er skouer gentañ, e kaver e geriadur *An Here* meur a zoare deskrivañ degaset gant E : «bezañ gwisket e gwenn, e du, e ruz» (GBAHE III.A.3), «bezañ gwisket e plac'h» (GBAHE III.A.4). «Bezañ e tog. Ur vaouez e koef, e bragoù. Bezañ e leon, en ul leon : *bezañ heñvel e neuz ouzh hini ul leon*» (GBAHE III.A.5).

Sellomp bremañ ouzh ur skouer kavet e skrid Priel :

*un ucher e vragoù berr, gant ur chadenn arc'hant en e gerc'henn (VAZA 139)*

"Bragoù berr" zo lakaet da gemm dirak "e" : raganv-gour perc'hennañ eo aze, dre ret.

Ma vije bet "un ucher e levitenn du" en dije gallet bezañ "e" raganv-gour perc'hennañ koulz hag araogenn evel e skouer GBAHE « Ur vaouez e koef, e bragoù ».

*Kerkent ha ma pignas ar ministr war vourzh, kentañ tra 'reas a voe amwelout ar strollad regennet war ar pont, pep hini evel-just en e gaerañ (VAZA 136).*

Amañ n'eo ket dirak un anv-kadarn evel er skouerioù a-raok eo lakaet an araogenn. Dirak un anv-gwan eo. Hag ar ger-perc'hennañ zo etre an daou war ar patrom-mañ : ar. + ger-perc'hennañ + ag. en e zerez uhelañ. GBAHE a ginnig daou stumm evit an anv-gwan, en e zerez plaen pe uhelañ : «*termen a dalvez d'ober anv eus kaerder an dilhad, ar c'hinkladurioù.*

Gwisket e oant en o c'haer, en o c'haereañ : *gant o c'haerañ dilhad*» (GBAHE III.A.2).

Ha Favereau : «adverbalisation» dirak un anv-gwan (GBFF 817) .

Kaoz a liv a c'hall bezañ met da verkañ un neuz a-fet korf.

*jeneraled ha ministred stipet eus ar c'haerañ, met gant liv ar marv en o c'herc'henn rak aet e oa moarvat o c'halonig e foñs o bragoù* (VAZA 119).

Gwelet e vo el lodenn diwar-benn WAR e c'hall bezañ "liv ar skuizh, ar yec'hed WAR ub." met aze eo an araogenn E zo implijet.

Taolomp pled ouzh *eus ar c'haerañ* a c'haller tostaat ouzh ar stumm "en o c'haerañ" a oa bet gwelet a-raok, ha troet e GBAHE gant "GANT o c'haerañ dilhad". Goude "eus" n'eo ket ar ger-perc'hennañ zo lakaet met ar ger-mell. "En o c'haerañ" : diouzh ar c'haerañ ma c'hallont bezañ. Hag "eus ar c'haerañ" : diouzh ar c'haerañ ma c'haller bezañ. Tostaat ouzh an droienn "eus ar c'hentañ !".

*pa weljomp war ar baperenn degaset dimp pegement hor boa da baeañ e savas liv ar spont en hor c'herc'henn* (VAZA 122)

*Ul lañchore bras-divent anezhañ, pe gentoc'h ur pikol jelgennad kig ha lard, kerzhout a rae en ur stumm iskis-tre* (VAZA 108)

Da dostaat ouzh skouer Kervella evit renadennoù doareañ o verkañ «*an neuz* : en doare-se» (YBBK 620 k).

Setu skouerioù all a zeskriv ar stad fizikel.

*un delwenn vras, ma weler warni Napoleon war varc'h, en noazh, gant ur gurunenn lore war e benn* (VAZA 131).

Dirak an anv-gwan *noazh* eo lakaet hon araogenn aze, d'ober an adverb *en noazh*. Adverboù all a c'haller sevel evel-se dirak "bihan", "bev" ha kemm a c'hall ober stumm an araogenn diwar se : "ez-vihan" (gwelet DEVRI, ez 1), «*e bev, en bev, er bev*» (DEVRI, bev 1, I.C).

*ha pa veyfen kant vloaz ouzhpenn, gant ne gouezhfen ket em bugaleaj, biken n'ankounac'hain ar gerioù distaget gantañ* (VAZA 132).

Amañ e adkaver ar ger-perc'hennañ : EM = EN + MA.

Gwelet ivez « un den en e vrud, en e vleuñv » m'eo an araogenn ur «*ger a dalvez da verkañ stad korf an dud, al loened*» (GBAHE IV.C.1).

## 4. Danvez, muzul

*porpantoù hir e krev dañvad gant ar gloan dindan hag al lêr war c'horre* (AMAH 212).

Danvez an dilhad zo degaset gant an araogenn E : krev dañvad zo aet d'ober ar porpantoù-se.

Uheloc'h hon doa gwelet ur skouer all :

*lietennoù a bep seurt liv, melen, gwenn, ruz, glas, ha me oar, ha warno anv hol lestr e lizherennoù aour* (VAZA 144)

Er skouer-se, n'eo nemet diouzh ar gendestenn e c'haller gouzout ha kaoz zo eus danvez pe eus liv, ha n'eo ket eus danvez an hini eo.

«E, EN entre dans les périphrases exprimant le poids, la dimension, la contenance, l'augmentation, la diminution» (TDBP 7).

N'eus ket bet kavet kalz a dra war an dachenn-se, traoù zo bet c'hwitet warne marteze. Marteze ivez n'eus ket bet kalz a zigarez gant Priel da lakaat ar gaoz war seurt traoù en e eñvorennoù.

Ar skouer-mañ a c'haller menegiñ memes-tra :

*stlepel a ris er mor ar voest ken kaer na vane ken netra enni* (VAZA 91)

hag e dostaat ouzh unan all gant Gros :

*ar varrikenn-ze na n'eus mann ebed enni*, cette barrique-là il n'y a rien en elle (*elle ne contient rien*) (TDBP 7)

*el lec'h m'emañ ar stêr Taj en he ledanañ* (VAZA 120)

Eus muzul zo kaoz en ur mod met savet eo al lavarenn diouzh ur stumm all : ar. + ger-perc'hennañ + ag. en e zerez uhelañ evel hon eus gwelet a-raok.

Taolomp evezh ouzh ar fed e vo goulennet "pet kilo (pe lur) zo ENNOUT ?" daoust ma ra ar galleg diouzh un doare all gant ar ger "*faire*". Meur a skouer zo roet gant Jules Gros evel-se, koulz hag evit ar vent ma ranker lavaret da skouer zo "seizh troatad EN ur plankenn surf".

## 5. Spered

Ouzhpenn da zeskrivañ an dud pe an traoù war an dachenn fizikel (gwelet ar rannbennad §3) e c'haller ober implij eus E evit deskrivañ traoù liammet gant stad an dud a-fet spered :

«état» (GBFF 813), «sentiment» (GBFF 816).

*o c'hedal war doull he dor, lorc'h ha stad enni* (VAZA 23)

*Biz Kamm, daoust ha ma veze ar peurliesañ ken dibreder hag ur vi nevez dozvet, a lavare neuze, ur sac'had droug ennañ:* “*Va Doue ivez 'ta gant homañ!*” (VAZA 17)

*bez' oa, din da welout, levenez e-leizh e kalon an den santel* (VAZA 37)

An «*termen a dalvez da c'heriañ santadoù, trivliadoù an dud*» (GBAHE I.C) zo lakaet a-raok an araogenn E en tri skouer-se.

Ar frazenn a c'hall bezañ savet diouzh un doare all, o lakaat an araogenn E goude ur verb ha dirak an termen a verk stad spered an dud, al loened. Gallout a reer bezañ "e fulor", "e kounnar", "e kañv" (GBFF 813) gant ar patrom : bezañ + ar. + ak.

Diouzh un doare all eo stummet an traoù amañ er skouer da heul : mont + ar. + ag.

*mont a rae diouzhtu e gouez:* “*Nom de va enel!*” emezañ, “*un dro bennak korreoù a dennin diouzhit, spier daonet a zo ac'hanout!*” (VAZA 49)

Tennañ korreenn diouzh ub. : «*troc'hañ ul louan groc'hen diwar gein ub., ha dre skeud., kastizañ kalet*» (GBAHE, Korreen). Liester Korreenoù, Korreoù. Diwar dremen, "tennañ korrenn DA, DIOUZH, DIWAR ub. Sede ur skouer dibab araogennoù evit ar memes implij.

*bep tro ma vez komzet diwar e benn e sav em c'halon truez outañ, trugarez ha keuz dezhañ* (VAZA 147)

Lakaet e druz teir araogenn disheñvel en em gav asambles en ul lodenn vihan eus ar frazenn ma vez kaoz eus trivliadoù gant an teir araogenn-se : truez OUZH, keuz DA a zo kinniget el lodennoù a glot gant an araogennoù-se. Amañ EM (= EN + MA) a c'haller gwelet evel an araogenn a verk al lec'hiañ, en enep d'ar skouerioù a-raok, daoust ma zo anv a drivliadoù.

Perzhioù an dud a c'hall bezañ deskrivet ivez gant harp an araogenn :

*ur c'hwil all, pa lavaran, itrik e-leizh ennañ* (VAZA 26),

*ha buhez enni evel n'hoc'h eus gwelet biskoazh* (VAZA 17),

o teskrivañ petore plac'h e oa e vamm-gozh.

«*E, EN sert aussi à former les idiotismes exprimant les émotions, les traits de caractères*» a zispleg Jules Gros (TDBP 8)

Mui pe vui diouzh ar memes stumm hag ar skouer a-raok eo savet an div skouer-se : itrik, buhez EN ub. diouzh un tu, ha truez, keuz E kalon ub. diouzh an tu all.

Gant-se n'emeur ket pell diouzh tuadur bred an dud. Hag e c'haller menegiñ an droienn "treiñ e penn ub." :

*Evitañ d'ober gant ar brezhoneg ken brav, **pa droe en e benn** (VAZA 22)*

ma kont J. Priel hag en deus darempredet anezhañ, ampartiz Ernest Renan war ar brezhoneg hag an dismegañs en doa outañ war an dro, pa ra meneg eus ul lizher skrivet gantañ e 1879 : “*un idiome a toujours assez vécu quand il a été aimé et que de bonnes études philologiques ont fixé son image pour la science*”.

## 6. Deskrivañ all

*diaes eo d'un admiral krog e pemp bloaz ha tri-ugent chom ur pennad brav **en e gluch** ha kuit a fiñv war un dorchenn (VAZA 125)*

«*Dirak un ak. unan pe lies degaset gant ur g. perc'h.*» e talvez E «*da verkañ emzalc'h korf un den, ul loen*» (GBAHE I.A.6).

***En he sav sonn** e chome al loa er skudell evel ur bal sanket en ur bern pri (VAZA 108).*

Damheñvel eo amañ met kaoz zo eus an doare ma vez lakaet, dalc'het udb.

Amañ emeur gant un deskrivañ difetis war un dachenn all :

*e tegouezhe din adwelout, ha zoken **en deñvalijenn** ha serret ganin va daoulagad, an draoñienn digenvez-se (VAZA 107)*

***en disheol** war doull an nor, edo an impalaer (VAZA 124)*

Gallout a ra E doareañ ar yezh.

*dre ma plije d'an dud klevout an disklêriadurioù **en hon yezh** (VAZA 109)*

“Tiens, tiens, c'est toi, Colin?” “Oui 'vat, admiral,” eme Jakez, **e galleg saout** (VAZA 137)

Hag evel-just posupl eo treiñ EN ur yezh bennak DIWAR ur yezh orin. E(N) a zo neuze ur renadenn doareañ a verk an treuzfurmader (YBBK 620 d). Gant ar verb "treiñ" e c'hoarvez dreist-holl a zispleg Kervella. Met "mont E" koulz ha "treiñ E" a c'hall geriañ emdroadur an traoù, an dud ha talvezout «*dont da vezañ* : aet e oa o dilhad e pilhoù» da skouer (GBAHE III.C.1). "Troc'hañ e daou damm" zo un doare emdroadur en ur mod. Ha Gros a ro ur skouer gant ur verb all c'hoazh : «*ma zad-koz e-noa digaset an ti-ze e daou estaj*» : «mon grand-père

avait transformé cette maison-là en (*maison à*) deux étages» (TDBP 11).

*Ar peurliesañ, ne ouie ket ar sonerien e pe stumm diverrañ o amzer* (VAZA 116)

Gwelet Favereau : «*le moyen : ur paotr yaouank e(n) moto*» (GBFF 811).

*sinañ a reas e ganaouenn e stumm ma rae an holl varzhed d'ar c'houlz-se* (VAZA 109)

Gwelet hon doa a-raok, er pennad gouestlet d'an neuz fizikel : *kerzhout a rae en ur stumm iskis-tre*. Aze e tegas ul lavarenn, ha gwelet a reer n'eus ger-mell ebet dirak pe mesket gant E.

*E pebezh stad truezus e oa* (VAZA 120)

Ar stad, ar stuz a c'hall merkañ. Kaoz zo aze eus Portugal.

*ar sonerien, torfedourien en o had* (VAZA 168)

Gwelet eo ar sonerien evel danvez torfedourien, a zeuint da vezañ pa vo bet diwanet an «had torfedour» en ur mod. Keñveriañ gant "gwez en o bleuñv" ma verker ur stad. E skouer Priel, ar stad n'eo ket e bleuñv avat, met e had.

## 7. Renadennoù a verk un darempred

*paourkaezh tud ar peurliesañ, lakaat a raent evelato temz ha pebr en ur vuhez a-wechoù gwell divlaz paneveto* (VAZA 112)

Goude ur verb a denn d'ar stekiñ e c'hall E merkañ al lec'h kejañ etre daou dra, etre un den hag udb., etre daou dra, h.a. (GBAHE I.A.4). Emeur aze gant skeudenn ar boued ma vesker meur a dra, evel an holen hag ar pebr lakaet er soub.

Ur bern doareoù all hag a verk un darempred bennak a vez degaset gant E.

*ar son-mañ zo bet kompozet en enor d'e vuiañ karet* (VAZA 109)

Gallout a ra merkañ un darempred etre meur a zen, etre an dud hag an traoù, etre meur a dra (GBAHE V).

*deut a-ratozh eus Cherbourg en gourc'hemenn an admiral* (VAZA 96)

Un darempred a urzhaz etre daou zen a zo. Er skouer-mañ :

*sentiñ ouzhin ha bezañ an nozvezhioù-se em gourc'hemenn* (VAZA 94)

e teu dre ziv wech ar mennozh-se, gant implij ar verb *sentiñ* ivez, a zo doareet gant un araogenn all avat, OUZH. Kemmesk ar ger-perc'hennañ, er gour kentañ unan, gant an

araogenn EN a ra dezhi mont da *em*.

*ur pikol korn-butun eus ar c'haerañ gant ur c'harenn wer ma veze diskennet enni dour c'hwezh vat, e gwirionez* un narghileh *e-giz an Durked* (VAZA 84)

Aze emeur gant un darempred o lakaat keñver ha keñver an daou dra a zo a bep tu d'an droienn *e gwirionez*. Ha pa ne vefed ket tre ha tre gant ar wirionez-rik bepred, evel a ziskouez an div skouer-mañ :

*peseurt gwalenn eo e gwirionez ar vougasenn euzhus-se* (VAZA 99)

*Ur ramz, setu petra 'oa e gwirionez Frederig seizh* (VAZA 143)

Ne oa ket ar Frederig-se ur gwir ramz, hag un tamm dreist d'ar gont ec'h a ar skrivagner pa ra *gwalenn* eus ar vrumenn dev a lak ar vartoloded en ur gwall blegenn. Implijet eo aze «*evit pouezañ war ar pezh a lavarer*» (GBAHE V).

Gwelet a reer amañ e ra Priel gant «EN gourc'hemenn» met «E gwirionez». Ne glot ket tre e stumm ober na gant ar pezh a zo kinniget gant Kervella (EN dirak ur vogalenn), na gant ar pezh a zo displeget gant Gros (EN bepred, e Treger). Goulakaat a c'haller eo levezonet e skrid gant doareoù skrivagnerien all ar c'houlz-se, evel en implij a ra eus "va" (*Va zammig buhez*) daoust ma tistage-eñ "ma", hep mar ebet. Tud all eveltañ o deus graet dibaboù skrivañ damheñvel, evel Anjela Duval da skouer a rae ivez gant "va" en he skridoù, hag hi Tregeriadez eus ar C'houerc'had.

Ur ster all he deus an droienn "e gwir" amañ :

*ne oa ket e gwir, eviti da vezañ merc'h ur ministr, da vevañ keit-se war ul lestr brezel* (VAZA 103).

Kaoz zo aze eus gwirioù, ha DA lakaet da stagell a ra al liamm gant ar pezh a zo gwir d'ober pe get, amañ bevañ keit-se war ul lestr brezel.

Gant-se, da ziwall zo pa droer ur frazenn a grog gant an droienn "*en vrai*" e galleg.

*A-hed ur sizhun e veze bemdez kaset ur rummad martoloded da goaniañ war ul lestr estren bennak, amerikan, rusiat, italian, alaman, danek, japanat ha me oar, en ur ger e pep lec'h* (VAZA 96)

Amañ emeur gant un darempred kevatalder etre an aridennad listri meneget evel lec'hioù hag an droienn *e pep lec'h* implijet goude da ziverrañ anezhi. Talvezout a ra "kement ha lavaret an traoù en ur mod berr".

*daoust ha ma kroge ennañ an droug-kof adal ma save dirazañ kaoz eus Breizh-Veur* (VAZA 90)

*ma vanjomp bamet, krog ennomp ar c'hoant strakal daouarn en ur sellout outo* (VAZA 121)

*trec'het e vezen bep tro ma kroge ennon ar c'hoant butunat* (VAZA 91).

Devri a ginnig «*en plt d'un sentiment, d'une sensation, d'une maladie, etc.*) Kregiñ e : *saisir qqn, s'emparer de qqn*» gant ar skouer «(1867) BUE 164» : «*hag e krogaz eunn dinerded hag eur c'hren hep paouez enn he izili*» (DEVRI Kregiñ I.C.)

## 8. Troiennoù

Kalz troiennoù brezhonek a zo stummet gant an araogenn E. Lod a c'hallfe bezañ renket en ur pennad all. Ha n'eo ket renablet amañ an holl a ra Priel gante. Mesk-ha-mesk e c'haller reiñ un tañva eus ar pezh a ginnig Jules Gros «*«devant certains noms abstraits et dans quelques expressions expressions figées*» (TDBP 12) o terc'hel da skritur an embannadur :

**e-sell da, e-gortoz, en ezomm euz, e droug outañ, en aon,** (kaout udb.) **en aluzen, e gin** (e lakain ma loerou), (lakâd toaz) **e go,** (chomet) **e gor, e petore stumm,** (n'on ket) **en dalvoudegezh da** (honezh), **en oad emaint, en oad dit-te,** (honnez a oa) **en oajou ganin-me, el liou da** (homañ), **el liou-se,** (klañv c'hoazh : n'eo ket arru c'hoazh) **en e liou,** (an amann : n'emañ ket) **en e vlaz** (ken), (ma ... ne vije ket ar zoubenn) **er vlaz-mañ, en hed da** (de la longueur de), **en deoder/uhelder-ze, er venchou-ze** (de cette dimension), **el ledander da, en he flên** (d'aplomb), **en e blomm** (verticale), **e feurm,** (lizer-feurm) **en heh ano** (à son nom), **en ano Doue, tapet** an dud **e gir** (pris au mot), (eno e vezont o son, o kana,) **en eur vouez** (à l'unisson), (ar vuoh a oa) **loue (leue) enni, 6 miz leue a oa enni,** neuñ **en noaz**

Ha klozañ gant un nebeud re a lenner dindan bluenn Priel :

**bezañ e gopr : e gopr e vi gantañ kent na vo pell** (VAZA 147)

**lakaat / bezañ e gwerzh : lakaat a raent ivez e gwerzh e Koc'hu Pariz ar gedon, ar c'hilheien gouez hag ar glujiri lazhet a-vil-vern e koadoù-stad Rambouillet** (VAZA 138)

**dont er bed : ur vro ma teuas er bed enni ar voraerien Magellan, Vasco Gama, Albuquerque** (VAZA 120)

Div wech diouzh renk e teu an araogenn E rak "dont er bed" zo un droienn sonnet.

**bezañ danvez en ub., udb. : Nag em zad nag ennon ne oa danvez marc'hadourien** (VAZA 117)



# EVIT

## 1. Pal

*studiañ er gêr evit bezañ barrek deiz pe zeiz da vont da Di-Bank Meur Bro-C'hall (VAZA 72)*

E plas EVIT, DA a c'hall merkañ ar pal ivez met kreñvoc'h eo gant EVIT. Gerven a ro div skouer da aroueziñ an diforc'h :

*«a) Roet am eus dezhañ an toaz a chome, d'ober ar pezh a garfe gantañ.*

*b) Roet am eus dezhañ an toaz a chome, evit ober ur gwign amann gantañ» (GERVEN, A69).*

Un arliv zo etre an daou bal-se, merket dindan stumm ur strollad anv-verb a zispleg Gerven, hag a ra «pal gwan» eus ar stumm kentañ, ma ne vezer ket nec'het gant ar pezh a raio ar paotr gant an toaz, ha «pal kreñv» eus an eil m'eo pouezusoc'h e rafe e wastelenn, hag amann enni.

Evezh an dud a sach war un dra all : ma c'haller kregiñ ar frazenn b) gant ar stumm anv-verb degaset gant EVIT, ne c'haller ket kregiñ a) gant ar stumm-se degaset gant DA. Peogwir e lakaer e brezhoneg al lodenn bouezusañ e deroù ar frazenn. Ha p'eo gwan ar pal degaset gant DA, n'eo ket ur pal pouezus e-keñver ar peurrest eus ar frazenn (GERVEN, A70).

Er skouer uheloc'h a zo tennet eus eñvorennoù Priel eo splann emeur gant ur pal kreñv : ur pal war hir dermen zo meneget da gentañ, ha strivet e vo evit e dizhout. Posupl e vije eilpennañ urzh an traoù ha skrivañ : "evit bezañ barrek deiz pe zeiz da vont da Di-Bank Meur Bro-C'hall, studiañ er gêr".

*sevel abred evit hon arnodenn (VAZA 77)*

Dirak un anv-verb hag ivez dirak un anv-kadarn, evel amañ, e c'hall EVIT merkañ ar pal (GBAHE A.2). Kreñv eo ar pal ivez, ha n'eus ket kaoz eus "sevel abred DA gaout un tamm amzer, kement hag ober", liammet strizh eo degouezh an arnodenn gant an diviz sevel abred.

A-fet yezhadur e vefe direizh al lavarenn "sevel abred d'hon arnodenn". Kervella a zispleg e c'hall bezañ lakaet «da hag evit an eil evit egile : mont da gerc'hat boued d'ar chatal pe evit ar chatal. A-wechoù all avat, ne glotont ket. Ar frazenn da heul a roio ar c'hemm etrezo : Ro dezhañ al levr evit e vreur» (YBBK 612). Hag adkavout a reer mennozh an arliv pal gwan pe bal kreñv. Ar pal pennañ eo en em gavfe er fin gant e vreur.

Damheñvel eo amañ gant Priel :

*n'emañ ken va mamm-gozh, hervez ma zad, e-sell da baeañ evidon* (VAZA 67)

Implijet e vez EVIT pa vez «*anv da blediñ gant mab un den, un aozadur h.a.*» (GBAH A.1).

Evel er skouerioù-mañ ivez :

*ur gwele evidomp hon daou* (VAZA 77)

*daou gemener, Lom ha Fañch, an daou vreur ar C'hourtez, a labour e vit va ziegezh* (VAZA 32)

## 2. E plas

Kavout a reer EVIT e lavarennoù ma vez anv a eskemm (GBAHE B.1) (NYVF 1), war tachenn an arc'hant da skouer.

*pa gavas tro da bakañ hanter-kant lur digant ur segond-mestr evit unan anezho, e stagas raktal d'aozañ ur c'hant ouzhpenn* (VAZA 148)

*eskemm evit galoñsoù ha nozelennoù aour bananez ha frouezh all ar vro* (VAZA 91)

*netra ne c'hounezemp evel-just; evit netra e roen va amzer ha va foan* (VAZA 75)

*un dra ken brav evit dister briz* (VAZA 93)

Alese e verk amañ an dalvoudegezh a-fet ster :

*ne veze graet nemet ar Jul dioutañ: ur ger, anat da bep hini, hag a dalv gant respet e-touez soudarded ha martoloded evit ur pod-kambr* (VAZA 113)

Dirak anvioù-kadarn a dalvez da aroueziñ ur garg pe ur vicher bennak e kaver EVIT ivez (GBAHE B.3) :

*un ofiser a rae ar peurliesañ evit kolist* (VAZA 92),

*Leur an ti a rae dimp evit c'hoari-lec'h* (VAZA 28).

Kaoz zo eus ur pezh-c'hoari aozet gantañ.

### 3. Abeg

«*Evit n'indique pas la cause*» a skriv Mark Kerrain o tiforc'hañ ar galleg a lavar «*on obtient un prix pour un film ou un livre*» diouzh ar brezhoneg a lavaro : «*ur priz en deus bet gant e levr diwezhañ*» (GBMK, p.64). M'eo pal al levr-se gant Mark Kerrain lakaat war-wel ar fazioù a zeu ingal gant nevez-vrezhonegerien, e renabl memes-tra implij an abeg evit EVIT en e levrig *An araogennoù e brezhoneg gouestlet d'an araogenn-se* ( KERRAIN, 2017, **Levrenn 7, p.6**) hag e ra Fave kement all (NYVF 3). Setu div skouer gant Priel :

*gwez siprez gweet ha krommet gant ar seizh avel war-du an donvor, evel tud a feiz daoubleget da drugarekaat an Aotrou Doue evit kened ur bed en deus bet ar vadelezh da grouiñ* (VAZA 128)

*ho trugarekaat a ran a-greiz kalon evit ur sonadeg ken dudius* (VAZA 139)

Er c'hontrol e c'haller sachañ evezh Yann desker war ar fed e lavarer "trugarez d'ub. EVIT bezañ graet udb." ha neket "da vezañ graet udb.", evel a drugarekaer ub. EVIT e skoazell (GBAHE, trugarez).

### 4. Goulezet

*Evidomp da vezañ klevet pe lennet ar bourdoù-se ha meur a hini all ouzhpenn, daoust ha ma 'z oamp troet ivez d'ober goap dioutañ, ne voe ket gwell bell ar c'hofek-se o c'hounit doujañs ha karantez kement hini 'oa war vourzh* (VAZA 139)

Daou stumm disheñvel da zegas un islavarenn goulezet a gaver er frazenn-mañ : an eil gant EVIT hag egile gant DAOUST. Posupl e vije bet skrivañ kement-mañ oc'h erlec'hiañ an daou :

"Daoust m'hon doa klevet pe lennet ar bourdoù-se ha meur a hini all ouzhpenn, evidomp da vezañ troet ivez d'ober goap dioutañ..."

*evitañ da vezañ treutoc'h eget ur geuneudenn, bez' oa warnañ meurbed ur chaloni ha zoken ur c'hardinal* (VAZA 136)

Un doare all zo kinniget e GBAHE evit an islavarennoù goulezet degaset gant EVIT, ha gallet

e vije bet skrivañ :

"Evit bezañ ma oa treutoc'h eget ur geuneudenn, bez ' oa warnañ meurded ur chaloni ha zoken ur c'hardinal". E deroù un islavarenn goulezel «*EVIT MA , EVIT BEZAÑ MA : daoust ma*» (GBAHE IV.B.1).

Taolomp pled p'emaomp gant ar skouer-se e ra Priel gant *eget* ha neket gant *evit* goude an anv-gwan en derez-uheloc'h : gallet en defe skrivañ "treutoc'h EVIT ur geuneudenn". «*Kemmesk zo bet etre an daou c'her war a hañval*» a zispleg Roparz Hemon en e yezhadur istorel. «*E rannyezh Leon dreist-holl e vez graet gant eget hiziv. Dibaot a wezh e vez graet gantañ er rannyezhoù all*» (YIBR, 36). N'eo ket dibab an oberour dre skrid avat.

*ar mestr-soner, evitañ da vezañ va rener hag ur sac'h-c'hwezh anezhañ, a ranke sentiñ ouzhin* (VAZA 94).

Posupl e vije sevel ar frazenn diouzh stummoù all, evel-se :

"evit d'ar mestr-soner bezañ va rener hag ur sac'h-c'hwezh anezhañ, rankout a rae sentiñ ouzhin" pe

"evit ar mestr-soner da vezañ va rener hag ur sac'h-c'hwezh anezhañ, rankout a rae sentiñ ouzhin"

Ha DA a lakaer dirak ar rener en eil stumm-se (YBBK 278).

*Daoust dezhañ bezañ bet e-pad bloavezhioù pell eus ar gêr n'en doa ket ankounac'haet e vrezhoneg evit kelo-se* (VAZA 5)

Gallout a ra bezañ troet *evit kelo-se* gant "pour autant" e galleg. DEVRI a ro «*pour le peu*» (DEVRI kelo/kelav/keloù) : "pour si peu" a c'hallfe bezañ troet kerkoulz all er skouer-mañ.

Tostaat a c'haller an droienn-se ouzh *nag evit-se* a lenner e skridoù Priel pelloc'h en e eñvorennoù pa gont diwar-benn lezennoù-arme ar Rusianed :

«*difennet strizh e oa skeiñ gant ar soudarded*». *Nag evit-se!* van ne rae an ofiserien hag an isofiserien ouzh ar berzh fentus-se (AMAH 563)

A c'hallfe bezañ troet gant «Et alors !» (DEVRI, *evit-se*) pe «Tant pis !» (Kerrain, 2017, Levrenn 7, p.13)

## 5. Dave, keñver

Merkañ a ra EVIT ar c'heñver etre daou dra pe etre un den hag un dra (**GBAHE E.1**).

*tapout a ris an notenn-mañ: 19/20 evit ar galleg* (VAZA 69)

*tri dervezh e pade an abadenn: d'al Lun evit ar pennoù bras, d'ar Meurzh evit an dudigoù...*  
(VAZA 17)

*Aet eo ar Frankiz da get!... ar pezh a oa gwir, da vihanañ evit ar venec'h hag al leanezed en harlu, hag evit Breizh a-bezh.* (VAZA 114)

Goapaat a ra Jarl Priel, er pennad-mañ eus e levr, an anvioù roet gant ar gouarnamant d'al listri brezel «*anvet kuit a fent: République, Vérité, Démocratie ha Liberté*» a-raok kontañ e oa bet skrivet er c'helaouennoù : «*Aet eo ar Frankiz da get!*» pa oa tarzhet al lestr-se derc'hent ar brezel diwezhañ. Gant fent e sil aze e kav dezhañ eo gwir penaos n'eus frankiz ebet ken evit a sell ouzh Breizh, koulz hag evit an dud a relijion en ur mare ma oa ar galloud gant ar republikaned.

*redek a reas pep den war vourzh d'ober diouzh e garg evit ar sav-eor* (VAZA 149)

E-keñver al labour sevel an eor hag ober d'ar vag mont kuit e ra pep den diouzh e garg. Taolomp pled er memes lavarenn ouzh implij DIOUZH a verk ivez ar c'heñver evel m'eo kinniget el lodenn diwar-benn an araogenn-se.

An droienn "evit gwir" a dalvez kement hag "e gwirionez" hag a zo bet kinniget er pennad diwar-benn an aoagenn E :

*Na person na kure ne daolas fed ouzh al lezenn-se, hag evit gwir, laosket e voe pep hini d'ober evel ma kare* (VAZA 59)

A c'haller tostaat ouzh «*evit gwir lavarout : pour dire vrai*» (**DEVRI, gwir 1, II.B**).

Da ziwall d'he meskañ gant "e gwir", hon eus gwelet e lodenn an araogenn E, hag he deus un dalvoudegezh all : "bezañ e gwir da ober udb."

Implijet e vez EVIT da aroueziñ un den, un dra zo anv anezhañ, a sell outañ (**GBAHE G**) :  
*n'eo bet evidon na muioc'h na nebeutoc'h eget holl verc'hed all ar bed-mañ* (VAZA 66),  
*ur mestr evidomp ni, paotred an trombon* (VAZA 79).

Hag e c'haller menegiñ an droienn "tremen evit" :

*biskoazh ne dremenas Yann Vartolod evit ur gwaz re sammet gant an doujañs* (VAZA 113)  
*tremen a rae Lom evit ur gwaz ken sioul, ken douget d'ar pedennoù hag ul leanez pilpave*

(VAZA 32).

Evit ober dave d'ar pezh a soñj an den e c'haller ober gant an araogenn EVIT, "evidon-me" o talvezout kement ha "d'am meno" en degouezh-se da skouer : «*evidon-me e ray glav a-raok an noz*» (GBAHE I.C.4). Un droienn all zo amañ :

*evit va c'heloù, ne vezen ket seizhdaleetoc'h o kavout pleg da ziduiñ va amzer en ur c'horn sioul bennak* (VAZA 116).

Dont a ra goude bezañ deskrevet *tud na raent nemet morvitellat, pe chaokat ha butunat dibaouez en ur drailhañ kaojoù a bep sort, re gamm ha re dort, dic'horzhailhet ganto kant ha mil gwech.*

*Evit va c'heloù, hogos bemnoz e tistroen war vourzh kollet ganin holl nozelennoù va forpant diframmet didruez gant merc'hed n'o devoa ket tapet kaout ul lietenn seiz evit derc'hel soñj eus gwazed ar Vérité* (VAZA 144).

Aze e teu goude bezañ kontet e veze profet ur bern lietennoù, kinniget *da gêriz, itronezed ha dimezelled, d'ar re goantañ, na petra 'ta!*

Degas a ra *evit va c'heloù* ar pezh a zispleger diwar e benn hag a zo lakaet a-geñver gant ar pezh a zo kontet a-raok.

Un araogenn gevrennek eo, hag a zispleger gant ar raganv-gour perc'hennañ lakaet e-kreiz. Ar pezh a reomp araogenn rannadus anezhañ hag a zo kinniget en ul lodenn all, pelloc'h.

"Evit keloù ub." a zispleger evel-mañ : "evit va c'heloù", "evit da geloù", "evit e geloù"...

Da dostaat ouzh "evit a sell ouzhin" : «*Evit kelo = quant à (souvent avec nuance de mépris)*» hag "evit ma c'helo(ù)" : «*pour ce qui me concerne personnellement, avec mon consentement*» (DBTG, Keloù).

Lod santimantoù a c'hall bezañ displeget gant skoazell an araogenn EVIT (NYVF 20) :

*da viken e vagin evit pep hini anezho doujañs, trugarez ha karantez* (VAZA 67).

Lakaet goude an araogenn, nemet e vefe ar gour displeget enni, eo merket e-keñver piv emañ ar santimant : *pep hini anezho* amañ.

Merkañ a c'hall ivez ar varregezh pe an diouer a varregezh.

An droienn "bezañ evit" a vez implijet dirak an anv-kadarn pe dirak un anv-verb gant ar ster «*bezañ gouest da seveniñ un ober bnk.*» (GBAHE I.F.1). Alies e teu er stumm-nac'h :

*daoust din poanial warno, mentoniezh, lizherjedoniezh, tric'hornventouriezh, ne oan ket evit ar seurt gastach* (VAZA 61),

ma kont Priel d'e lennerien ne oa ket ampart war ar matematikou.

*n'on ket evit lazhañ div voualc'h gant ur maen (VAZA 139).*

## 6. Amzer

*E-sell emañ da bediñ da goaniañ evit an deizioù un toullad tud a beadra (AMAH 454)*

An araogenn EVIT zo un «*termen a dalvez d'ober anv eus ur c'houlz a-vremañ*» (**GBAHE I.D.3**). Nebeut a dra a seurt-se, da verkañ ur c'houlz a-vremañ, a gaver er c'horpus-mañ abalamour m'eo eñvorennoù, ha gant-se e kont an oberour an amzer-dremenet.

Troiennoù all war ar patrom-se zo roet da skouer gant Mark Kerrain, lod en amzer-vremañ evel «*evit ar beure*», «*evit bremañ*», «*evit c'hoazh*», «*evit ar goañv*», «*evit an noz*», ha re all en amzer-dremenet avat : «*evit ar bloavezh tremenet*» (**Kerrain, 2017, Levrenn 7, p.3-4**).

Sellomp ouzh ur skouer all a zeu abretoc'h en eñvorennoù Priel :

*n'en devoa kavet nemet tri c'hant lur, ha c'hoazh evit ar bloaz kentañ nemetken, ha se ne oa ket trawalc'h da baeañ lojeiz en ur gêr vras (VAZA 71).*

*Evit ar bloaz kentañ a verk ar c'heñver aze, etre ar sammad hag ar prantad-se, ha ne c'hallfed ket erlec'hiañ evit ar bloaz gant "er bloaz-mañ".*

Da ziwall ouzh ar gendestenn hag ouzh an ereadur a vez d'ober evit kavout ster an araogenn-mañ araogenn.

*ur c'hozhiad, warnañ struj ha barv ur ribler tec'het evit ul lajad eus ar "maquis" (VAZA 130)*

Amañ, EVIT a verk ar pad (**Kerrain, 2017, Levrenn 7, p.4**) hag *evit ul lajad* a dalvez "e-pad ur pennadig".

# GANT

## 1. Emheuliañ, darempred meur a dra pe a zen, tra-den

«*Ar renadennoù doareañ eo ar re a spisa an doare ma vez graet an ober, pe e c'hoarvez ar stad, e-keñver al lec'h, an abeg, ar pal, an neuz (pe "doare" ez-strizh), an tu, an derez, h.a.*» (YBBK 724). Ha pa vefe renket an emheuliad en o mesk gant Kervella, e kinnigomp anezhañ en ul lodenn a-ziforc'h diouzh renadennoù doareañ all hag a vo gwelet pelloc'h.

***kerzhout a reas gant he zad war-du ar vourc'h*** (VAZA 46)

Ur renadenn-doareañ hag a verk an emheuliad eo *gant he zad* amañ. Favereau a ra anv eus «*l'accompagnement (ou le comitatif)*» (GBFF 828).

***mont a raen gantañ bemdez da vageal war al lenn Maêlar*** (VAZA 151)

Er skouer-mañ koulz hag er skouer gantañ n'eo ket gwall zisheñvel an doare brezhonek da verkañ an emheuliañ diouzh an hini gallek, ha ne vez ket lakaet diaes an deskerien gant se.

Kaoz zo e geriadur *An Here* eus «*un darempred kevredañ zo etre meur a zen pe etre meur a dra*» (GBAHE I.A.1) :

***debret hor boa an noz-se kig-sall gant fav ruz*** (VAZA 85),

***rom gant skorn drailhet munut, gwellañ tra am eus biskoazh tañvaet*** (VAZA 87),

***darn all a rae bemdez ur revrad, ha netra aesoc'h evit an neb en deveze darempred gant tud ar gêrbenn, rak plijout a rae d'ar re-mañ o bannac'h*** (VAZA 151).

Amañ eo un darempred etre un den hag ul lec'h a zo meneget :

***Soñj am eus evelkent eus va c'hentañ darempred gant douar Afrika*** (VAZA 86).

Degas a ra GANT ar renadenn d'ar strollad anv *va c'hentañ darempred*.

Gant verboù a denn d'an darempredañ e vo implijet ivez (GBAHE I.B.1) :



*hag e felle dezhi chom da vevañ war vourzh gant he den* (VAZA 92),  
*c'hoarvezet e oa ganin ober anaoudegezh war vourzh gant un aotrou pinvidik-tre* (VAZA 151),  
*gwech ebet e-keit ma vevis eno n'eo degouezhet din kejañ gant ur vaouez divalav* (VAZA 91).  
Kervella, pa zispleg eo an araogenn «GANT eo a vez kavet dirak ar renadennoù-emheuliañ»  
ac'h a pelloc'h o kinnig «ac'hano implij ret gant dirak renadenn ar verboù-mañ : lezel,  
degouezhout, en em gavout, erruout, kejañ» (YBBK 640). Vallée a ginnig ivez an araogenn  
OUZH da heul "kejañ" (VALL, rencontrer, p.643). E skouer Priel meneget a-raok e ra Priel  
gant kejañ gant avat.

M'eo ret implijout gant da heul degouezhout evit merkañ an emheuliañ hervez Kervella, ne  
dalvez ket e vo kaoz a emheuliañ dre ret e "degouezhout gant".

Er skouer-mañ :

*N'eo ket degouezhet ganin gwelout nemeur a wragez diwar ar maez ken mistr* (VAZA 20),  
koulz hag er skouer-mañ gwelet a-raok  
*gwech ebet e-keit ma vevis eno n'eo degouezhet din kejañ gant ur vaouez divalav* (VAZA 91)  
e implijer ganin ha din e stumm dic'hour ar verb degouezhout, dirak ul lavarenn a verk un  
ober all. Kaoz zo eus se er pennad "7. stummoù dic'hour", kinniget el lodenn-mañ (GANT)  
hag e lodenn DA.

*ur sae du pe c'hlas teñval gant teir pe beder riblenn danvez-flamm, melen-aour, glas-mor pe  
ruz-gwad* (VAZA 154)

*gwisket e oan evel ar segond-mistri, hep galoñs evel-just: ur porpant gant div regennad  
nozelennoù alaouret* (VAZA 83)

Afer zo eus nozelennoù ha dilhad en ur pennad all, ma ra ar skrivagner gant un araogenn all :  
*Evit pezh a sell ouzh o chupenn, dibrenn e veze laosket dalc'hmat, en desped d'an teir  
nozelenn wriet outi* (VAZA 34).

Er skouer ma teskriv ar porpant e vije bet gallet skrivañ "outañ" e lec'h "gant". Met meur a  
dra a c'haller kinnig da glask displegañ e zibab ober gant GANT. Dont a ra da heul hep galoñs  
: n'eus galoñs ebet GANTañ, div regennad nozelennoù alaouret zo avat. Er pennad-se e fell  
d'ar skrivagner lakaat war-wel pegen kran eo gwisket, «mar plij ganeoc'h!». Marteze eo un  
doare da bouezañ war ar fed eo an nozelennoù-se un dra ouzhpenn, ha n'emañ ket kont evel-se  
gant an holl chupennoù. An araogenn OUZH a vo gwelet pelloc'h zo ivez da lakaat keñver-ha-  
keñver gant an araogenn enep DIOUZH : gwriat udb. OUZH ur chupenn bennak a c'haller

ober, ha diwriat anezhañ DIOUZH ar chupenn-se ivez.

GANT a c'hall talvezout «*da venegiñ un den, ul loen, pe un dra zo udb. en e gerz*» (GBAHE I.E.1).

*bep gwech e veze ganti, e-pign ouzh las he zavañjer, un tammig c'hwezhigell leun-kouch a vutun* (VAZA 24)

Jules Gros a zispleg kement-mañ diwar-benn GANT : «*précédé du verbe être, [il] forme une périphrase qui traduit le verbe avoir exprimant la détention, la possession momentanée, actuelle (par opposition à la propriété absolue)*». Ha goude bezañ diforc'het «*Al levr a zo gand Pier*» diouzh «*Al levr zo da Bier*» e lak war-wel penaos eo boutin an dra-mañ d'ar yezhoù keltiek :

*«Cette tournure pour rendre AVOIR est commune aux langues celtiques. Le gallois dit : Y mae genyf lyfr; il est avec moi un livre : j'ai un livre. Et l'irlandais : ta leabhar agam, dont le sens est identique. En breton elle est d'un usage courant, plus courant même que l'emploi du verbe am-eus (ou : kaoud, endevoud) dans le cas exposé ci-dessus» (TDBP 9).*

Menegomp ar skouer dedennus roet gantañ pelloc'h :

«*Ar park-mañ a zo da Yann ive med gant Ar Bihan emañ, ce champ-ci appartient aussi à Jean, mais c'est Le Bihan qui l'a (en location), qui le tient, qui le cultive.*»

Gwelet a reer n'emeur ket, er c'hontrol diouzh an emheuliañ kinniget e skouerioù kentañ al lodenn-mañ, diouzh ar memes doare ma saver an traoù e galleg.

Gant-se e sach MK evezh an dud war ur fazi a glever stank diwar levezon ar galleg :

«**Blev du zo gantañ war e benn. Il ne peut s'agir ici que d'une perruque, sinon il faudra dire : Blev du zo dezhañ (notion de possession)**» (GBMK, p.65-66).

Ar skouer-mañ a zeu gant Priel avat, ha n'eus ket kaoz eus blev faos :

***ur c'hoziad gant blev ha barv gwenn*** (VAZA 80).

Sellomp ouzh ar frazenn gloc :

*Renner gwirion an Dépôt a oa ur c'hentañ-mestr "prinsipal" ginidik eus Plougastell-Daoulaz, ur c'hoziad gant blev ha barv gwenn, met ken lemm e lagad hag hini un naer o c'hedal war-lein ur c'hleuz* (VAZA 80).

Perak e ra Priel gant an araogenn GANT ? Klaskomp kinnig un displegadenn. Daoulagad c'hlas zo d'ar c'hoziad marteze, peotramant gwer pe gell, met liv e zaoulagad ne cheñchint ket. Liv gwenn e vlev hag e varv n'eo ket ur perzh orin avat. Hag un dibab, hag a c'hall bezañ dibad, eo lezel e varv da greskiñ. Met un diforc'h bras zo a-fet eradur dreist-holl e-keñver ar

skouer kinniget gant Mark Kerrain. Dont a ra ar renadenn da heul an anv-kadarn, *ur c'hozhiad*, er c'hontrefed d'ar skouer roet gant Mark Kerrain.

E brezhoneg e vo kavet GANT e degouezhioù ma teskriver traoù dre o blaz, traoù pe tud dre o c'hwezh :

*bep tro e tape un dra bennak da gloukañ, met dalc'hmat e veze, hervez ma kave dezhañ, blaz ar re nebeut gant e vannac'h; en ur ger, liv al lonker a vleunie war e fri* (VAZA 32).

Jules Gros : «*Extension du sens de AVOIR*» (TDBP 10).

Gant ar verb bezañ e vez lakaet GANT «*dirak gerioù a zezverk ur stad, ur santadur*» ivez (GBAHE I.E.4) :

*un derzhienn spontus a oa gantañ* (VAZA 86).

Kaoz zo amañ eus kleñved, ha meur a skouer kleñvedoù pe boanioù zo gant skouerioù Jules Gros (TDBP 12). Kement ha klotañ gant an urzh meneget e geriadur *An Here*, hag a gaver e skouerioù Jules Gros ivez, e vije bet posupl skrivañ kerkoulz all : "gant un derzhienn spontus e oa". Skouerioù en urzh-se zo roet gant Favereau a lak «*terzhienn zo ganti (& gant an derzhienn 'ma) elle a (de) la fièvre*» en e rannbennad «*la maladie (passagère)*» (GBFF 835). Mennozh un dra dibad zo aze, ha n'eo ket hini ur perzh. Gant-se ne vo ket graet gant ar verb kaout kennebeut.

E degouezhioù zo e talvez GANT da c'heriañ un hevelebiezh a denn d'ur perzh :

*stumm iskis ar benveg-se a vent ganin-me war vete nebeut* (VAZA 53)?

Un astenn d'ar ster emheuliañ eo, hag e ra Gros gant «*extension au rapport d'identité du rapport d'accompagnement local*» (TDBP 2).

Kement-se a gaver «*goude adverboù a zezverk ur perzh, zo savet diwar an ar. a pe diwar ar stl.<sup>9</sup> ken*» (GBAHE I.A.5). Ar strollad gerioù *a vent* savet diwar an aoragenn "a" hag an anv-kadarn "ment" en deus un dalvoudegezh adverb amañ hag a c'hallfe bezañ skrivet "a-vent". E geriadur *An Here* e kaver ar skouerioù-mañ :

«*Tud a oad ganin, kenoad ganin. (...) Un ti a-vent gant ma hini*».

Gwelet a reer diwar dremen e teu *a oad* hep barrennig-stagañ met *a-vent* gant unan.

Kervella a ginnig ur stumm damheñvel met renadennoù anvioù-gwan int : «*(dirak anvioù ha raganvioù) kempred gant, kenoad gant, kenliv gant*»... (YBBK 521).

Gant-se, ar skouer-mañ :

---

<sup>9</sup> stagell

*bez ' veze war-benn ar ganfardezed-se ur boned danvez a liv gant ar sae* (VAZA 155)  
a c'hallfe bezañ savet diouzh ur stumm all : "ur boned danvez kenliv gant ar sae".

## 2. Tu gouzañv

*«Alies-tre (tu gra) e ra ar rener an ober merket gant ar verb. Pa vez ar verb en tu gouzañv, avat, ne ra ar rener nemet gouzañv an ober gant un oberour bennak, bev pe nann»* (YFFK 722).

*c'hoant ebet n'en devoa Moulay-Hafid da vezañ kabestret gant Bro-C'hall* (VAZA 171)

An ober kabestrañ a zo liammet gant *Bro-C'hall* lakaet da oberour, ha degaset gant GANT da sevel ar renadenn oberour. Ne fell ket da *Moulay-Hafid*, a zo bet o ren Maroko e deroù an XXvet kantved, gouzañv kabestr Bro-C'hall.

*«Dieeun e vez dalc'hmat ar renadenn oberour ha degaset gant an araogenn GANT»* (YFFK 722).

*Mizioù 'oa, e oan bet heget gantañ* (VAZA 162)

Dave a ra an trede gour unan a zo e *gantañ* d'e geneil Toto. Hennezh an hini eo a oa bet o hegañ Priel, a ra dave anezhañ e-unan e *oan*, hag a zo merk ar rener ennañ. Ar rener a c'houzañv an ober eta.

Ma zo anv a c'houzañv eo a-fet yezhadur evel-just, ha n'eo ket a-fet ster dre ret, evel a ziskouez ar skouerioù-mañ :

*evit gwir, ne oan ket ken dedennet gantañ hag e oan bet gant impalaer Rusia, met da vihanañ ne veze ket kement a reuz nag a ardoù e-dro dezhañ. Doujet ha karet gant e bobl* (VAZA 153).

Kaoz zo eus roue Sveden, Haakon e anv.

*ouzh va gortoz e Moskov ar vaouez a garen hag e oan karet ganti* (VAZA 171)

Er skouer-se e teu ar stumm gra hag ar stumm gouzañv an eil war-lerc'h egile.

Hag amañ eo skeudennet ober ar c'houmoul war ar stered a c'halle gwelet an den :

*Steredenn ebet ne vane en oabl, lonket e oant bet holl gant ar c'houmoul* (VAZA 157).

Ar verk "skeiñ" en e stumm kreñv eeun a vez implijet en tu gouzañv diwar-bernn ar c'hleñvedoù, an diaezoù korf gant an dalvoudegezh *«bezañ lakaet da gleñvel, bezañ gwall dizhet»* (GBAHE, skeiñ, I.A.2) :

*setu ma kouezhas gwall glañv ur soner, skoet gant kleñved lostennig ar vouzellenn dall* (VAZA 85).

Ar brezhoneg a ra kalz aliesoc'h gant an tu-gouzañv evit na ra ar galleg, hag a ra aliesoc'h gant an tu gra (**TDBP 5**) :

*ha me da horjellat gwashoc'h eget ur mezhvier graet gantañ ur c'horfad chufere* (VAZA 83).

Un doare all da sevel al lavarenn-se a vije bet achuiñ anezhi gant "ur mezhvier en dije graet ur c'horfad chufere". Muioc'h diouzh stumm ar frazenn c'hallek e vije bet avat.

GANT a c'hall degas ar renadenn-oberour hep na vefe meneget ar verb :

«*Trugar Gwener-ar-Groaz*» *gant Wagner* (VAZA 92),

«*Le Roi s'amuse*» *gant Victor Hugo* (VAZA 94).

Ar anvioù-gwan verb "savet" evit ar skouer gentañ ha "skrivet" a ziviner er skrid daoust ma n'emaint ket e-barzh. E galleg e vefe troet GANT en div skouer-se gant "de", daoust ma c'haller klevet tud oc'h ober gant "avec", levezonet m'eo o galleg gant ar brezhoneg.

### 3. Doareañ all

Diwar ster diazez an emheuliañ zo deveret sterioù kreñvoc'h, hag ouzhpenn d'ar renadennoù emheuliañ neuze, ha d'ar renadennoù oberour bet gwelet a-raok, e tegas GANT renadennoù doareañ all (**YBBK 641**).

#### a) Doare :

Evel-se, an araogenn GANT a dalvez a-wechoù d'ober anv eus an doare ma vez graet an ober (**GBAHE I.D.5**) :

*miret gant evezh dindan ur pezh boull wer* (VAZA 20),

*kerkent ha m'am boa lonket va fred gant ur galon digor frank* (VAZA 83).

N'eus ket ur renadenn oberour eus *gant ur galon digor frank* : ar gour kentañ unan a zo e *am boa lonket* a verk gant piv eo douget an ober.

*Madigoù graet gant sukr-rous* (VAZA 112)

Heñvel eo amañ. N'eo ket ar sukr en deus graet ar madigoù. Ar skiant vat a ditour ha neket an ereadur a vije heñvel hag o tegas ur renadenn oberour koulskoude gant "graet gant tud lous"

pe "graet gant Sukr rous" da skouer, ma vije "Sukr rous" anv un embregerezh fardañ madigoù. *daoust ha ne zeu ket ar c'hizhier a-benn da zisklêriañ **gant o Miaou** petra 'fell dezho? Ac'hanta, **gant ur ger hepken** e veze Kanaam e-tailh da c'houlenn peseurt tra en devoa ezhomm da gaout* (VAZA 111)

Emeur aze gant un doare da vezañ komprenet hag a zo benveg ar gomz pe an trouz evit ul loen. Hag e weler n'emañ ket pell an doare diouzh ar benveg a-wechoù.

#### b) Benveg :

Dirak an anvioù traoù e c'haller lakaat GANT neuze «*d'ober anv eus ur benveg, eus un dra a ro tu da gas an ober da benn*» (GBAHE I.D.2).

*abuziñ e amzer gant ul linenn-besketa* (VAZA 100)

*e-sell e oan da vutunat kent mont da gousket ur c'hornedad gant va narghileh* nevez brenet (VAZA 83)

Favereau a renk er memes pennad «*l'instrumental*» «*et le moyen*» (GBFF 830) :

*va zad o pignal gant ar viñs teñval* (VAZA 46),

*Ne weljomp nemet un damskeud eus ar roue Haakon, ken prim ha ma pignas gant an diri* (VAZA 153).

Dre astenn, pelloc'h evit ur benveg pe un dra, e c'haller ober gant unan bennak evit seveniñ un ober, hag a zo lakaat an den-se da emdreiñ. Sed amañ gant an droienn OBER GANT ub. :

*pevar bloaz am boa nemetken pa stagas va mamm d'ober gant he fennhêr un denig desket* (VAZA 18),

*krediñ a rae dija dezho e rajent ganin ur beleg* (VAZA 40).

Ur skouer all zo roet gant Jules Gros :

«*Kaer am-oa kaoud c'hoant d'ober eur skolaer gand ma mab, n'em eus ket gallet ober*», troet gantañ : «*j'avais beau désirer faire un instituteur avec (de) mon fils, je n'ai pas pu le faire*» (TDBP 7).

Sterioù all a c'hall bezañ gant "ober GANT".

*ne ouie ket war an taol petra ober gant e jiboez* (VAZA 88)

Ur jiboez zo tapet gantañ a-baouez... ha n'eo nemet ur poñsin.

*redek a raent war o seulioù en ur vlejaj: Bê, bê, bêêê! evel 'po divije d'ober gant givri* (VAZA 95)

Ha traoù all zo gant Jules Gros en e bennad «*GAND sert à relier le verbe à son régime dans de nombreux celticisms*» (TDBP 14).

#### ch) Abeg :

GANT a c'hall degas renadennoù abeg :

Displegañ a ra Kervella zo anvioù-gwan ha na vez «*renadenn ebet morse ouzh o heul ha re all ne c'hallont ket bezañ implijet hep renadenn, da skouer an anvioù-gwan dezho ur stumm-verb evel goubet, tuet. Lod zo o devez ur ster disheñvel hervez ma vezont implijet o-unan pe gant ur renadenn*» (YBBK 521). «*Renadenn an anv-gwan a vez staget outañ atav gant un araogenn, peurvuiañ DA, a-wechoù unan all*».

Sed amañ ur skouer m'emañ disheñvel talvoudegezh an anv-gwan, *sot* (skrivet *sod* abalamour d'un ui-koukoug moarvat) diouzh m'emañ hep renadenn pe gant ur renadenn evel amañ :

*pegen sod 'oa Breizhiz e-pad ar brezel gant kenvroidi an aotrou Churchill* (VAZA 96)

GANT a zegas ar renadenn abeg amañ, homañ o vezañ renadenn an anv-gwan.

Padal e "sot DA stagañ" hag a dalvez "sot-nay", DA a zegas un renadenn doareañ d'an anv-gwan, kreñvaat a ra ha neket merkañ an abeg a ra.

Meneg a ra Jules Gros eus GANT «*après quelques noms (substantifs ou adjectifs) exprimant un sentiment*» (TDBP 13).

*faezh on gant ar gozhni hag al labour* (VAZA 46)

Amañ e tegas GANT ar renadenn abeg met hep cheñch ster ar ger *faezh*.

*ur bourd e oan krog da vezañ faezh gantañ* (VAZA 97)

Heñvel eo aze, graet en deus ar skrivagner gant un anaforenn : displeget eo GANT e trede gour unan a adkas da *ur bourd* lakaet e deroù al lavarenn.

*kalz berzh a rejomp gant hor sonerezh hag hor c'hoariva* (VAZA 97)

GANT a zeu da heul an droienn verk "ober berzh" da zoareañ an abeg.

*Kae kuit gant ar vezh, bourev milliget, anez-se e vi lazhet!* (VAZA 166)

"Gant ar vezh!" zo ul lavarenn anezhi he-unan a glever stank, berr-gomz anezhi diouzh a zispleg Ernault : «*il y a là une ellipse; c'est quelque chose comme '(vous devriez rougir) de honte'*» hag e keñveria gant ar saozneg (*fie*) *for shame*, hag ar c'hembraeg (*ffei ou ffwrdd*) *rhag cywilydd*» (Ernault, 2001, 114). Adkavout a reer mennozh an abeg neuze, evel er skouer-mañ ma kaver ivez un droienn heverk e brezhoneg :

*Biz Kamm, daoust ha ma veze ar peurliesañ ken dibreder hag ur vi nevez dozvet, a lavare neuze, ur sac'had droug ennañ: "Va Doue ivez 'ta gant homañ! (VAZA 17).*

Ur skouer damheñvel a zo roet gant Jules Gros amañ : «*A, ma èrè didiou ! Gand ar goz waskenn vil-mañ ! Oh, nom de nom ! (quel désagrément) avec cette vilaine toux !*» (TDBP 6).

*N'eo ket eñ, kuita, a zo kiriek, ha gant se n'eo ket dleet dezhañ bezañ wazh a gement a zo c'hoarvezet (VAZA 63).*

Kement hag "abalamour da se" e talvez *gant se* amañ : *se* a ra dave da zeroù ar frazenn a zo abeg ar pezh a zeu da heul *gant se*. Favereau a dro gant ar galleg «par conséquent» (GBFF 832). *Gant se* pe *gant-se*, an daou a gaver en destenn gant ar memes ster, a c'hall bezañ lakaet e deroù ar frazenn : dave a ra neuze d'ar pezh a oa displeget er frazenn gent.

*ne baouezen ket d'ober gwad fall ha tremen a raen gant hanter-voued, kement ha ken bihan ma teuas an hini gozh, gant an druez he devoa ouzhin, a-benn d'ober d'an den dirollet se plegañ d'he c'hoant (VAZA 51)<sup>10</sup>*

GANT a zo amañ stagell isurzhiañ e deroù un islavarenn-doareañ hag a verk an abeg : abalamour d'ar pezh a zispleg an islavarenn eo e teu a-benn anezhi ar vamm-gozh.

Lod verboù a vo doareet gant an araogenn GANT pa vo anv eus merkañ an abeg. Niverus int ha setu un nebeud skouerioù :

*setu-me prest da nijal gant al levenez (VAZA 45),*

*Ac'hanta daoust d'ar gor-ifern-se, e kenderc'he va mamm, war bennoù he daoulin e-kreiz an hent abaoe seizh eur diouzh ar beure, da boanial gant he faneradoù glazur ha bleunioù (VAZA 43),*

*ne baden ket gant ar c'hoant goulenn digantañ daoust ha gwir e oa kement-se (VAZA 37).*

Kaoz zo aze eus koll pasianted. Hon araogenn, dirak un ak., goude un ag. pe ur vb., «*a dalvez da c'heriañ abeg ur stad, ur santad, ur santadur, un emzalc'h*» (GBAHE I.D.3).

*ne c'houzañve ket gant ar riv, rak gwisket e oa dezhañ ur gorfenn stamm hag un tamm bragoù voulouz (VAZA 26)*

Amañ ar verb *gouzañv* a dalvez kement ha «souffrir» e galleg. Gwelet DEVRI hag ar skouer tennet eus *Buez ar Zent* Perrot, e 1911: «*en devoa kalz da c'houzañv gant ar boan izili*» (DEVRI, *gouzañv*, II.) Fent zo e tro-pluenn deskivadennoù J. Priel, pa zeskriv er pennad-mañ ar pezh a zo e ti e c'houeont Yann Dremel, hag er skouer-mañ an Aotrou Doue tached

---

<sup>10</sup> e VAZA 1975, p.49 eo skrivet mat «*an den dirollet-se*» gant ar varrennig-stagañ, met unan zo lakaet ivez da «*an hini-gozh*».



war ar pikol kroaz a zo e ti an den-se.

#### c'h) Danvez :

Gallout a ra GANT, lakaet dirak un anv-kadarn, ha goude un anv-gwan pe ur verb, ober anv anv eus un danvez ac'h a d'ober un dra bennak (GBAHE I.D.4) :

*Hag e ti ar rouanez, **gant dour ha n'eo gant gwin gwenn e vez aozet ar soubenn*** (VAZA 148)<sup>11</sup>.

Lakaet eo *ar soubenn* e fin ar frazenn met gallet e vije bet skrivañ : "hag e ti ar rouanez e vez aozet ar soubenn gant dour ha n'eo ket gant gwin gwenn" kement ha bezañ diouzh an urzh gerioù kinniget e geriadur *An Here*. Evit ar soubenn e c'haller ober hep araogenn ivez : "soubenn al laezh", "soubenn ar c'harotez".

*he savadurioù, ha zoken ar re vrasañ, an darn vuiañ anezho **graet gant brikennoù*** (VAZA 152)

*mirout a ris e-pad bloavezhioù **un tamm eus e groc'hen am boa itriket ober gantañ ur yalc'h vutun eus ar freskañ*** (VAZA 98)

Kaoz zo aze eus kroc'hen ur balum nevez higennet gant ur vag all. Ur yalc'h GANT kroc'hen balum a fell dezhañ ober. Da deurel evezh zo e ranker ober gant an araogenn GANT ha neket lavaret na skrivañ "ur yalc'h \*E kroc'hen balum" a vefe ur fazi. Sachañ a ra Kervella evezh an den war «*ar c'hemm a zo etre : ur skeudenn graet gant koad, "koad" o vezañ ur renadenn danvez, hag : ur skeudenn kizellet er c'hoad, "koad" o vezañ ur renadenn-lec'h. Frazennoù evel : an daol zo graet e koad, hag a gaver e levrioù a zo da zeskiñ brezhoneg, a zo fazioù argasus*» (YBBK 723).

*teir pe beder c'haoued gant orjal arc'hant, hag enno ur bagad perokidi ha krakperokidi* (VAZA 125)

N'eus verb ebet amañ met talvezout a ra "graet gant orjal arc'hant". Kaoz zo gant Priel eus ar pezh a zo en-dro d'ur sultan, emir pe impalaer.

#### d) Lec'h :

*Kenderc'hel a raemp e-keit-se **gant hon hent*** (VAZA 142)

GANT a servij ivez da zoareañ al lec'h : pa vez implijet «*gant ur verb a denn d'an dilec'hiañ*» e talvez «*d'ober anv eus an egorenn a zilec'hier enni*» (GBAHE F.3).

---

<sup>11</sup> Un ui-koukoug a zle bezañ moarvat hag e tlefe bezañ skrivet "n'eo ket gant gwin". N'eus "ket" ebet e VAZA 1975 kennebeut (VAZA 1975, p.161).

Vallée a ro evit «*Mont gand e hent suivre sa route (aller avec sa route)*» (Vallée, 1926, p.198). *kaset e voemp 'ta holl, sonerien ha strollad da zont ar C'hleber gant an hent-houarn war-du Toulon* (VAZA 83)

Ma vije bet skrivet "kaset gant an tren" e vije bet renadenn benveg pe doare. Renadenn lec'h eo *gant an hent-houarn* met gwall danav eo ar vevenn : renket hon eus ar skouer *va zad o pignat gant ar viñs teñval* (VAZA 46) e-mesk ar renadennoù-benveg uheloc'h, met geriadur *An Here* a lak «*pignat gant an dereziou*» er rummad-mañ (GBAHE F.3).

Setu ur skouer all :

*ar salioù bras pe vihan, ma krogas Napoleonig da zeskiñ enno komz ha kerzhout, pazennoù kignet an diri ma pignas ken alies ganto* (VAZA 130-131).

Seul vui e c'haller renkañ hemañ e-mesk ar renadennoù lec'h ma fell d'ar skrivagner lakaat war-wel al lec'h ma voe *Napoleonig* araokañ.

## 4. Lavarennoù divizout

E-touez an islavarennoù-doareañ emañ ar re a verk un diviz hag a c'hall bezañ degaset gant meur a stagell, "gant ma" o vezañ unan anezhe (YBBK 649 K.g).

*Gant ma paeje ho kerent pemp lur warn-ugent all er bloaz, desket e vije deoc'h tresañ ha livañ, pe seniñ n'eus forzh petore benveg* (VAZA 52)

«*Goude gant ma e kaver atav un ober, ur stad war ziviz, da lâret eo ne c'heller ket bezañ sur e vefe gwir*» (GERVEN, B20). Aze, ne c'haller ket bezañ sur e vo desket kement obererezh arzel a zo kinniget er skouer-se : anez paeañ, ne vo ket graet. An ober merket el lavarenn degaset gant GANT a rank bezañ sevenet evit ma vefe sevenet an ober merket el lavarenn all. Heñvel eo er skouerioù da heul.

*forzh ne rae gant ma tremenjemp hep klask tennañ arc'hant diouzh e yalc'h* (VAZA 73)

*gant ma laosko ganin ar gozhni nerzh da genderc'hel gant va eñvorennoù, displegañ a rin deoc'h da vloaz peurrest va zammig buhez* (VAZA 172)

Gwelet a reer gant ar skouerioù-se e c'hall bezañ implijet ar stumm-se en amzer dremenet koulz hag en amzer da zont.

«*Pa vez an hevelep rener d'an div renadenn, e c'heller lakaat ur renadenn anv-verb e-lec'h an islavarenn : gant dont du-mañ, e c'heller komz ganin*» (YBBK 798). Er skouerioù roet

uheloc'h n'eo ket posupl neuze : n'eo ket heñvel ar rener en div lavarenn kinniget evit pep skouer. Favereau a ro skouerioù all : «*gant klask mad* en cherchant bien» ha «*gant ober pinijenn* à condition de faire pénitence» (GBFF 838).

## 5. Oc'h ober un dra bennak a bad

Dirak un anv-verb pe un anv-kadarn a denn d'un ober, GANT «*a dalvez da c'heriañ emeur oc'h ober udb. a bad*» (GBAHE I.C.3).

*pep hini diouto a veze bremañ gant e labour, ha chom a raen du-hont va-unan* (VAZA 107)

*seniñ keit ha ma veze an admiral gant e verenn* (VAZA 115)

Dont a ra GANT goude ar verb "bezañ" hag e verk ar pezh a ra Favereau «*l'occupation*» anezhañ (GBFF 834).

Gros a ginnig daou isrummad, o tisplegañ e teu peurliesañ goude ar verb "bezañ" pe goude ar verb "chom" : da gentañ ur ster fetis evel er skouerioù-mañ, ha da eil ur ster difetis a c'hallo bezañ troet diouzh an dro e galleg gant «*s'occuper de, être occupé de, penser à, songer à, faire quelque chose à l'intention de*». Ar skouer-mañ a ro : «*Henez a vez gand e labour, na vez ket gand traou all*» : «celui est occupé de son travail (*pense à son travail*) il ne pense pas à autre chose».

Hag ar skouer-mañ : «*Pa vo debret ho lein... -Me n'on ket gand leinou*», troet gantañ «*les déjeuners ne m'intéressent pas*» (TDBP 11 b).

Gwelet a reer e skouer Gros div skouer damheñvel ouzh re Priel, pa zo kaoz ivez eus labour evit an eil hag eus pred evit egile. Met n'eo ket tre ar memes ster.

## 6. Renadennoù verb dieeun

E-maez ar re bet gwelet er pennadoù a-raok zo kalz verboù all hag a vez degaset renadennoù dieeun dezhe gant an araogenn GANT (GBAHE I.F). Setu un nebeud anezhe, ha lod all a zo kinniget er pennad "8. troiennoù".

**bezañ, chom berr gant :** *ne chomen ket berr gant ar gerioù, ha dre-se galvet e voen da jubennour* (VAZA 93)

Gallout a reer gwelet aze un implij eus GANT evel un astenn da ster diazez an emheuliañ.

**c'hoari gant :** *daoust ha goût' ouie zoken **petra 'c'hoarie ganti**, pe c'hwistim<sup>12</sup> hag akuit a-walc'h e oa war e vicher?* (VAZA 41)

Kaoz zo eus mamm Priel, klañv-bras, hag eus ar mezeg war he zro. Jules Gros : «*c'hoari (par altération de c'hoarvezoud) : arriver*» (TDBP 14). El lodenn "7. stummoù dic'hour" e vije gallet renkañ ar skouer-se. N'eus ket kaoz a "emheuliañ pe darempred meur a dra pe a zen, tra-den" (hon lodenn 1) evel a vefe gant "piv 'c'hoari ganti" avat.

**paouez gant :** *c'hoarzh, ha skrign, ha garm, ha youc'h, ne baouezent ket gant o safar* (VAZA 87)

Dirak un anv e reer gant an araogenn GANT : «*paouez gant un ober bennak*» (GBAHE, **paouez 2/ I.B.1**). Met dirak ur verb eo an araogenn A pe DA a zeu goude "paouez" (GBAHE **2/ II.2**) : "ne baouezent ket DA safarat" neuze (pe "A safarat").

**plediñ gant ub., udb. :**

*ret e oa **plediñ** hep an disterañ dale **gant ar c'hlañvour*** (VAZA 85)

*ne oa ket peurechu va nav bloaz pa grogis **da blediñ gant ar c'hoariva*** (VAZA 28)

**skeiñ gant :**

*Eno, e troas e penn ur samourai trelatet **skeiñ gantañ un taol sabrenn*** (VAZA 146)

«*Renadennoù skeiñ a c'hall bezañ degaset gant gant, ouzh (§629) pe war*» (YBBK 643b).

Meur a skouer eus implij ar verk "skeiñ" a gaver en eñvorennoù Priel. Diouzh stumm ar verb er skouer-mañ skouer e vo graet gant an eil araogenn pe gant eben, pe gant hini ebet zoken.

*n'ouzon ket **petra am bize graet, skeiñ ivez moarvat*** (VAZA 51)

Verb gwan eo amañ, n'eus renadenn tra ebet ouzh e heul.

Verb tre e c'hall bezañ ivez. «*Ar verboù kreñv pe verboù TRE eo a re re a c'hall lakaat an ober da dremen war ur renadenn-dra pa vezont en tu-gra*» (YBBK 208). Ar verboù tre eeun a zeu an araogenn ouzh o heul, hep ma vije ezhomm araogenn ebet evit he liammañ oute, hag ar verboù tre dieeun a implij un araogenn da liammañ ar verb hag ar rennadenn.

«*N'eus ket ur c'hemm bras e gwirionez etre ar verboù tre hag ar verboù gwan, ha kalz a verboù gwan a vez implijet evel verboù tre*» (YBBK 214). "Kouezhañ" n'hall bezañ nemet gwan, met "sevel" a c'hall bezañ gwan ("sevel a ra bemdez da seizh eur") ha tre ("sevel a ra tiez war an aod").

---

<sup>12</sup> «*Daoust hag-eñ*» (notenn embannet el levr evit *c'hwistim*)

*goût 'ouie skeiñ ludu da c'houlou e dan* (AMAH 489).

Amañ n'eus araogenn ebet da liammañ ar verb *skeiñ* ouzh e renadenn *ludu*, er stumm tre eeun emañ.

*abred a-walc'h e teuio an Ankoù da skeiñ war va skoaz* (VAZA 94)

*skeiñ war feskennoù noazh o c'heneil* (VBRU 356)

Er stumm tre dieeun eo *skeiñ* en div skouer diwezhañ, an araogenn WAR a ra al liamm, ha neket GANT.

Ur skouer all hon eus gant an araogenn rannadus WAR-DU :

*Ha setu-ni bremañ er mor Baltel o skeiñ war-du Reval, ur porzh en digor pleg-mor Bro-Finn* (VAZA 144).

Er skouer gentañ hon eus roet, gwelet a reer *skeiñ* evel verb tre diouzh meur a stumm : *un taol sabrenn* zo renadenn tra eeun hag ur renadenn tra dieeun eo *gantañ*.

«*Ar verb skeiñ a c'houlenn bezañ heuliet gant GANT pe WAR mar deo verb tre (...skoet en deus gant e vreur, skeiñ war an tach). Evel verb gwan e c'hall bezañ lakaet ouzh ouzh e heul (aet eo ar c'harr da skeiñ ouzh ar voger)*» (YBBK 629). Ha gwelet hon eus e c'hall bezañ verb tre hep araogenn ebet.

Da deurel evezh zo d'ober an dibaboù mat avat, ha "skoet en deus \*ac'hanon" evel a c'haller klevet war porzhioù skol, diwar-benn deskrivañ ur chikan bennak bet etre daou vugel, a zo ur fazi. Nemet ha deuet e vije a-benn eneber an hini a gomz da zougen anezhañ war-bouez e zivrec'h ha da skeiñ anezhañ en ul lec'h bennak all pelloc'h.

### **tremen gant udb. :**

*tremen a raen gant hanter-voued* (VAZA 51)

*spi hor boa da sevel betek Montreal pe Gebek. Allas, rankout a rejomp tremen gant Sidney, en enezenn Kap a Vreizh* (VAZA 97)

"Tremen gant udb." e GBAHE (p.1317) : «*kaout e walc'h gant udb. (nebeut anezhañ prl.<sup>13</sup>)* » hag e DEVRI : «*se contenter*». Disheñvel-mat diouzh "tremen HEP" eta a dalvez "chom hep". Gwelet a reer amañ adarre roll mil bouezus an araogenn : dioutañ e vo ster ar frazenn pa chom digemm ar frazenn a-hend-all. Ha "rankout a rejomp tremen DRE Sidney" a dalvezfe emañ Sidney war hent ar pal degouezhout hag a zo pelloc'h. Padal e frazenn Priel ec'h eo aze e chom ar vag a-sav.

---

<sup>13</sup> peurliesañ

## 7. Stummoù dic'hour

*Met evit **stagañ ganti** e-giz-se, ret e veze da gentañ pellaat diouzh Brest (VAZA 115).*

Kaoz zo a-raok eus «*ul labour tenn, start ha poanius*» a zo d'ober gant an ofiserien hag ar vartoloded. «*Stagañ ganti : en em lakaat da labourat, d'ober udb.*» (GBAHE, **stagañ, II.2**).

*tremen bec'h he deveze o **skoulmañ ganti** (VAZA 71)*

Amañ, *skoulmañ ganti* a c'haller treiñ e galleg gant : «*boucler les fins de mois*».

«*El lavarennoù dic'hour a seurt gant ar re-se eo e kaver a-wechoù stummoù gwregel kemmesket gant ar raganvioù-gour : glav a zo ganti ; brav emañ ganti ; noz eo anezhi ; penaos emamp ganti ? emañ o vont outi, h.a. » (YBBK 220, **Evezhiadennoù, III** ).*

En div skouer uheloc'h bet dastumet en eñvorennoù Priel e reer eus verboù tre verboù dic'hour. Kaoz zo eus ar verboù dic'hour el lodenn gouestlet d'an araogenn DA ivez. A-wechoù e c'hall bezañ, aze ivez, ezhomm eus ar gendestenn evit kavout ster ul lavarenn bennak : e "mont a rae plaen ganti" e c'hall GANTI bezañ aze evit ur stumm dic'hour pe da verkañ an emheuliañ, ma vez kaoz, da skouer, eus "mont plaen asambles ganti war an hent, daoust d'an amzer diroll".

*kammed **ne c'hoarvezas ganin** gouzañv war ar seurt bigi dre lien an disterañ diazeamant (VAZA 83)*

*e stumm-se e **c'hoarvezas ganin** treiñ a-ziwar ar galleg prezegenn hon admiral (VAZA 93)*

Gwelet hon eus ur stumm dic'hour all gant "c'hoarvezout DA" el lodenn gouestlet d'an araogenn DA.

GANT a vez lakaet da heul anvioù-kadarn hag anvioù-gwan «*exprimant un sentiment*» (TDBP 13) :

*Siwazh! **kerse bras eo ganin** o vezañ n'am eus ket gallet kaout darempred gantañ (VAZA 25)*

***gwell eo ganin** tremen hep komz diouti (VAZA 95)*

***gwelloc'h eo ganin** tevel war ar skrapadennoù, ar c'hignadennoù ha dreist-holl war an drein em daouarn (VAZA 16)*

Diforc'hañ a ra Kervella an implij eus GANT diouzh hini DA evel-mañ : «*GANT a c'hell bezañ lakaet da c'houde al lavarennoù dic'hour, keñver-ha-keñver gant DA. Hemañ a verkfe muioc'h un nerzh diavaez, tra ma verkfe GANT emañ ar stad meneget dindan youl ar renad*» (YBBK 645). Un dibab a-berzh ar skrivagner eo *tremen hep komz diouti* : eus New York zo kaoz, ha levrioù e-leizh zo bet skrivet diwar-benn ar gêr-se «*gant nouspet skrivagner pe*

*veajour*» emezañ. Ha diwar e youl e tav war ar pezh a zo bet c'hoarvezet gant e zaouarn. Ma vije bet abalamour d'an aon bezañ krozet dezhañ gant e vamm en dije gallet skrivañ "gwelloc'h eo DIN tevel".

Da ziwall zo memes-tra. DA ha GANT a c'hall bezañ lakaet o-daou a-wechoù, hep na vefe ar stumm dic'hour gant an daou avat. Se a c'hoarvez gant "mar plij". Hep araogenn e vez implijet stank, ha gant an div araogenn-se e c'hall bezañ implijet ivez. «*Mar plich ganeoc'h* s'il vous plaît (*si cela vous est agréable*), (*mais kement hennez mar plich d'eoc'h* prenez celui-ci s'il vous plaît» (Vallée, 1926, p.198), ma zo ur stumm dic'hour gant GANT, hag ur renadenn-dra dieeun gant DA.

*Ostaleri ha ti-butun a oa gant va zad Erwan-Vari Dremel (...) ha gant va mamm Ann-Mari an Aubin. Mat e oa ar stal ganto* (VAZA 13)

Da dostaat ouzh "mat eo ar jeu gantañ". Gallout a rafe bezañ troet gant «leur affaire fonctionnait bien».

## 8. Troiennoù

Kalz a droiennoù brezhonek a zo gant an araogenn GANT (Vallée, 1926, p.198). Menegomp un nebeud :

*erru-mat on ivez gant va breudeur daoudroadek pe bevarzroadek* (VAZA 19).

Kement ha "deuet-mat" e talvez, gant al loened er skouer-mañ. Evel hon eus bet gwelet a-raok e c'hall cheñch ster un anv-gwan pe anv-gwan-verb diouzh ma vo lakaet un araogenn da heul pe get : disheñvel eo ster ar gerioù "erru" ha "deuet" pa vezont o-unan. Ha «*petra zo arruet ganit ?*» en deus ivez un dalvoudegezh all : «*que t'es t-til arrivé ?*» (TDBP 14).

*Brav a-walc'h e teue gantañ ha pedet e veze zoken gant aotronez – Anatol ar Braz ha Botrel da skouer – da livañ sent en o zi* (VAZA 26).

Kaoz zo eus disoc'h, brav en degouezh-mañ, ar pezh a reer, a-fet livañ aze. Jules Gros : «*deuet eo ganti ! c'est venu avec elle (ça y est : elle a réussi !)* (à dire le mot, à chanter la chanson, à faire ce qu'elle tentait de faire) (TDBP 14). Ur skouer all gant Vallée : «*gwasat brezoneg a zeu ganti ! Quel mauvais breton elle parle ! (vient avec elle)*» (Vallée, 1926, p.198). Hag unan all gant Priel amañ :

*graet o devoa kement-se, emichañs, evit dougen bri d'ar Vikel Vras ha d'an Aotrou 'n Eskob, hag e gwirionez, deut oa ganto* (VAZA 37).

***ma rankas hor beleg sachañ gantañ e skasoù*** (VAZA 92)

«*GAND sert à relier le verbe à son régime dans de nombreux celticisms*» (TDBP 14) hag e kinnig Jules Gros meur a skouer da heul ar verb "sachañ" :

«*Sach da droad ganit, tire ton pied avec toi (à toi)*». «*Ha poan dezi o sacha he gar ganti, (...) (elle traînait la jambe). Sachit an nor ganeoh, tirez (fermez) la porte derrière vous.*»

En hon skouer, an droienn a ra gant ar ger "skasoù" evit skeudennaouiñ an divhar hag ar fed mont kuit buan. Adkavout a reer ster diazez an emheuliañ.



# OUZH

## 1. Egor

«OUZH a verk an tostaat, ar stagañ ha DIOUZH ar pellaat an diforc'hañ» (YBBK 592) :  
daoust ha ne veze ket un drugar evidomp-ni, sonerien, **tostaat ouzh** ar pennoù bras,  
prezidanted, rouanez, ha zoken impalaerien? (VAZA 118).

Anat deoc'h e oa difennet strizh da gement den a-ziavaez **tostaat ouzh** al lec'h sakr-se. (VAZA 168)

OUZH a c'hall merkañ un darempred a nested hep na vefe ur verb liammet gant se :  
*peogwir e oa ul levier amerikan **ouzh rod ar stur*** (VAZA 95)

Amañ, evel pa vezer "ouzh taol", n'eus ket a zilec'hiañ fetis pe difetis, estreget hini ar vag a  
gas al levier staliet difiñv warni. E yezhadur Favereau : « *la juxtaposition* » (GBFF 846).

Taolomp pled ouzh ar skouer-mañ :

*hag ar paourkaezh plac'h da redek **ken ma c'hoarzhe an diaoul ouzh he zreid*** (VAZA 111)

Geriadur *An Here* a ro evit «*c'hoarzhin ouzh ub., udb.*» ar sterioù «*mouschoarzhin outañ*»,  
«*gwiskañ un neuz plijet, laouen*», «*dedennañ c'hoant ub. bennak, plijout dezhañ*» (GBAHE,  
**c'hoarzhin**, II.A.1, 2 ha3). Heñvel eo e Devri : «*c'hoarzhin ouzh ub. : «sourire amicalement  
à qqn.»*.

An araogenn DA a dalvez d'un implij all : «*c'hoarzhin da ub. : ober goap outañ*» (GBAHE,  
**c'hoarzhin**, II.A.1, 2 ha 3) ha (DEVRI, **c'hoarzhin**, II.1). Evel en droienn-mañ degaset gant  
WAR : «*c'hoarzhin war chouk ub. : rire de qqn.*» (DEVRI, **c'hoarzhin**, I.A.2 ha 3).

Muioc'h diouzh emzalc'h an diaoul e vefe, dreist-holl e degouezh ar pennad : kaoz zo aze eus  
tad Jarl Priel en doa fent o kinnig d'ur c'hlasker bara, na ouie ket komz fraezh ha na rae nemet  
beogal, mont, en eskemm d'ur bannac'h lagout, da bokat da gement koantenn a wele o tremen  
er bourk. Kerkent e rae se ar c'hlasker-bara hag e sponte ken buan all ar goantenn-se.

Gant-se, OUZH n'eo ket renadenn ar verb "c'hoarzhin" aze, renadenn lec'hiañ an anv-kadarn  
*diaoul* eo kentoc'h.

*soroc'h an dour ouzh ar garreg* (VAZA 108)

Amañ n'eo ket an nested pe an tostaat ouzh ar garreg zo deskrivet, an darempred a-stok an hini eo, hemañ o produiñ soroc'h.

Verboù hag a verk ar stekiñ a vez degaset o renadenn gant OUZH :

*he zal harpet ouzh hini he mamm* (VAZA 48).

Ur ster all a gaver e Devri evit «*harpañ ouzh : résister, tenir tête à*». N'eo ket eus se zo kaoz gant Priel amañ : deskrivañ a ra momedoù diwezhañ e vamm pa dennas he huanadenn diwezhañ war varlenn e vamm-gozh.

An darempred a-stok a c'hall bezañ kreñvoc'h :

*menel a rae 'ta er gêr; ha zoken d'ar Sul, gant e revrig peget ouzh e dorchenn* (VAZA 32).

Gallout a reer "pegañ WAR" met gant OUZH e verker ar stagañ a zispleg Kervella, hag aze e lakaer war-wel ne fiñve ket kalz an den deskrivet.

Alese, dre skeudenn, ha n'eo ket liammet gant ar c'horf :

*a-viskoazh e pegas an dienez ouzhin evel greun louzaouenn an tign ouzh gloan an deñved* (VAZA 73).

Stag mat e vez an tign OUZH al loened ken eo start distagañ anezhe DIOUZH al lec'h ma vezont. Er skouer-mañ eo mamm-gozh ar skrivagner a gomz, o tisplegañ na pegen start eo en em zizober DIOUZH an dienez.

*“Ouzh ar groug, ar c'hrouger!”* (VAZA 165)

Gwelet hon eus el lodenn DA : *torfedourien o kerzhout d'ar groug* (VAZA 55). Gant DA hag a verk ar fiñv. Er skouer-mañ, avat, gant ar re a eztaol kement-se eo mennozh ar stagañ a zo a-dreñv, gant ar pal ne vefe ket an den evit en em dennañ alese.

*e garr brav gant daou varc'h gwenn stag outañ* (VAZA 57)

Reiñ a ra Kervella ur roll skouerioù eus verboù ar verk an tostaat pe gevreañ gant OUZH, hag eus verboù enebet, o verkañ ar pellaat pe zigevreañ gant DIOUZH, en o mesk : «*stagañ ouzh... distagañ diouzh...*» (YBBK 626). Ha da ouzhpennañ : «*evel ma klot ar verboù e klot ivez an anvioù-gwan : tost ouzh, pell diouzh (...) stag ouzh, distag diouzh*» (YBBK 627). Diouzh a lenner e geriadur *An Here*, evit a sell ouzh ar verb "stagañ", an araogenn WAR ivez a c'hall bezañ implijet da heul ar verb "stagañ", gant talvoudegezh OUZH pa vez «*d.b. ar bigi, al loened a stlej ur c'harbed*» : «*staget e vo ar marc'h war ar c'harr*» (GBAHE I.A.7)

*ar c'hroazioù lugernus gant kleier munut e-pign outo* (VAZA 53)

Adverb e c'hall bezañ "e-pign" hag amañ eo kentoc'h un droienn araogenn deveret, evel ar re a zo deskrivet pelloc'h, goude an aoragennoù eeun, el lodenn gouestlet d'an araogennoù deveret. Evit ar pezh a sell ouzh ar skouer-mañ, deskrivañ a ra ar skrivagner prosesion an 19 a viz Mae, aozet bep bloaz e Landreger evit gouel Sant-Erwan, hag ar c'hroazioù gant kleier staget oute neuze.

*Evit pezh a sell ouzh o chupenn, dibrenn e veze laosket dalc'hmat, en desped d'an teir nozelenn wriet outi* (VAZA 34)

Mennozh ar c'hevreañ, al liammañ a zo aze gant ar verb "gwriat" : liammet eo an teir nozelenn ouzh o chupenn, ha merk an trede gour unan benel zo en araogenn, da glotañ gant hini ar ger *chupenn*.

*o zavañjer (...) dantelez e-leizh warnañ (...), lagadennoù seiz pe voulouz ouzh pep godell* (VAZA 34)

Er skouer-mañ e teskriv dilhad ar merc'hed, ken kaer o zavañjer zoken ha ma vije *un draig aozet a-ratozh da gas d'ur mirdi*, ha n'eus ket ezhomm eus ar verb evit kompren eo gwriet pe brodet al lagadennoù. OUZH a zegas ar renadenn-doareañ hag a verk al lec'h d'an anv-kadarn *lagadennoù*. Ur skouer damheñvel diwar-benn dilhad a gaver gant Jules Gros : «*honnez a oa eur mouchouer kaer ganti, eur pez brodadenn ouz e gorn, celle-là avait (portait) un beau châle, dont la pointe était ornée d'une grande broderie*» (TDBP 1,a).

Met ober a ra Priel gant WAR ivez da heul "gwriat" :

*Gouzoug ebet n'en devoa ar c'haezh-mañ ha dre-se 'oa dare da vougañ (...) ha kel lies gwech ma kroge da gomz gant e vouezhig raouliet ha manous, am beze aon na strinkje kuit kement nozelenn wriet war e wiskamant ruz-tan* (VAZA 121)

## 2. Heñvelded

Un doare nested eo an heñvelded hag OUZH a implijer da verkañ anezhi.

*Heñvel mik ouzh ar glizh, na dav nemet pa vez skuizh* (VAZA 86)

Gant an droienn saourus-se e komz Priel diwar-benn ur c'hlakenner.

E lodennoù all hon eus gwelet penaos renadenn an anv-gwan a stager bepred outañ gant un

araogenn, DA alies, re all a-wechoù (**YBBK 521**).

*un drailhenn chokolad rodellet, heñvel evel pemp kwenneg ouzh... heu... va fidamdoustik, ouzh ar pezh m'ouzo'c'h!...* (VAZA 123).

Kement ha bezañ gant ar skouer-mañ e c'haller teurel pled ouzh an droienn *heñvel evel pemp kwenneg* (pemp gwenneg). Gant souezh, a c'haller kompren, e teskriv Priel er pennad-mañ ar regennadoù podoù kambr madigoù a gaved e kement stal-gwestell Lisbon... hag an drailhenn chokolad «*e diabarzh al lestr-se*».

*Aotre 'voe roet dimp da vale war gein al loen-euzh-se, heñvel ouzh un enezennig* (VAZA 98).

Kaoz zo aze eus ur pikol balum nevez higennet.

### 3. Rannoù ar c'horf

OUZH a c'hall talvezout «*da c'heriañ perzhioù korf an dud, al loened*» (**GBAHE I.A.2**) :

*e veze techet ar grennarded d'ober goap diouzh ar re a zouge an disterañ bouchig barv ouzh o groñch* (VAZA 95)

Amañ emeur gant ur perzh d'ar c'hroñj, d'ar c'houlz-se bepred, a-fet blev.

En ur skouer all e ra Priel gant WAR, avat : *ur c'hozhiad, warnañ struj ha barv ur ribler tec'het evit ul lajad eus ar "maquis"* (VAZA 130). Aze zo kaoz eus neuz, en ur geñveriañ gant an dudenn bennak ijinet gantañ, daoust ma oar n'eo ket ur ribler a seurt-se zo a-dal dezhañ.

Ur skouer all zo amañ :

*Hag ar c'houignoù 'ta, fritet e soav maout krog emichañs da voutañ, hag a bege spontus ouzh teod ha staoñ!* (VAZA 125)

Met disheñvel eo an traoù pa zegas OUZH ur renadenn lec'hiañ d'ar verb "pegañ", ha pa vefe al lec'h-se lodennoù eus ar c'horf.

Skouerioù all a gaver gant Kerrain m'eo disheñvel ar stumm ivez : «*klevout ouzh an anoued, sentir le froid*» ha «*mervel e izili ouzh ub. être engourdi, paralysé*» da skouer (**Kerrain, 2018, Levrenn 11, 19**). Hag un toullad gant Jules Gros ivez : «*Sell aze hag a zo eur hein outañ ! En voilà un qui a un dos (large) ! Hemañ, 'vat a zo eun daoulagad, outañ ! eh bien ! celui-ci, il en a une paire d'yeux (grands, noirs, vilains, etc...) Honnez a veze eur vizaj fuloret outi (...)* Ar haz-se a zo eun troh lost outañ, ce chat-là a une très grande queue» (**TDBP 1**).

## 4. Darempredoù

OUZH a vez implijet da c'heriañ e-leizh a draoù a verk darempredoù war an tachennoù-mañ : enebiezh, diarbenn, oberoù all troet war-du ub. pe udb., santadoù, emzalc'hoù all liammet gant un dro-spered. Un toullad skouerioù a seurt-se a gaver en oberenn Priel.

### A) Enebiezh :

Goude anvioù-gwan pe verboù zo e verk OUZH an enebiezh (**GBAHE B.1**) :

**difenn ouzh** : *er mare-se e fellas d'Emile Combes difenn ouzh beleien Breizh-izel na rafent en iliz gant hon yezh* (VAZA 59)

Setu ar pezh a zispleg Kervella evit sachañ evezh an den diwar-benn drougimplij an araogennoù : «*Ur fazi a vez graet alies a-walc'h eo lakaat da e-lec'h ouzh dirak renadenn ar verboù-se.*<sup>14</sup> *Goude hiniennoù anezho, gwir eo* (mirout, kuzhat, difenn, stlepel, teurel) *e c'heller ivez lakaat da, hogen gant un dalvoudegezh disheñvel-krenn* : ar brezelour-se a zifennas e vro *D'* ar roue *OUZH* an enebourien» (**YBBK 628**).

Ne hañval ket Priel ober bepred diouzh an doare-se. Amañ daou skouer ma ra gant DA :

**Difennet groñs e oa bet d'an holl vigi, bras pe vihan, loc'hañ eus ar porzh ha merdeñ el lenn** (VAZA 144),

*Dre-se 'ta e voe bet difennet strizh d'hor martoloded mont da vale kêr* (VAZA 166).

E geriadur brezhoneg *An Here* e kaver ar stumm a glot gant Kervella : «*difenn OUZH ub. A, DA, ober udb. : berzañ outañ ober an dra-se*» (**GBAHE, difenn 2. I.D.2**) ha n'eus ket meneg a "difenn DA ub." gant ar ster-se neblec'h.

E Devri avat, gant ar ster "berzañ" e kaver skouerioù tennet eus geriadur Ar Gonideg gant an daou stumm-mañ : "difenn udb. OUZH ub." ha "difenn udb. DA ub" (**DEVRI, difenn, I.A.2 ha 3.**). Hag ivez, gant ar memes ster ha tennet eus ar geriadur ar Gonideg ivez, ar stumm "difenn OUZH ub. da" : «*divenn a rear ouzon da brezecq*» (**DEVRI, difenn, II**)

Daoust ha stumm ar frazenn eo a zo kaoz e ra gwechoù zo Priel gant "difenn OUZH" ha gwechoù all gant "difenn DA" ? Er skouer gentañ gant *beleien Breizh-izel* eo liammet gant un islavarenn, *na rafent en iliz gant hon yezh*. En div skouer all e teu anvioù-verb, *loc'hañ* ha

---

<sup>14</sup> Dont a ra e evezhiadenn da heul ur roll «*verboù a verk an evezh, ar vignoniezh, an enebiezh h.a. : sellout, ar-vestiñ, selaou, estlammiñ, teurel evezh, sentiñ, disentiñ, ober gaou, noazout, mouzhat, stourm, enebiñ, herzel, mirout, difenn, stlepel, kuzhat, anzav, koves, c'hoarzhin...*»

*mont* da heul. Pe DA a vefe liammet gant ur stumm dic'hour e darempred gant "bezañ difennet", da geñveriañ gant "bezañ ret" ? Ur skouer all, avat, a lenner dindan e bluenn gant an araogenn DA hag a zo stummet diouzh ur stumm all :

*dindan boan da vezañ toullgofet gant Senegaliz oc'h ober gward war bep pondalez, e tifennas dezho klask tu d'en em siliennañ kuit war n'eus forzh petore digarez* (AMAH 379).

Amañ eo displeget ar verb difenn ha n'eo ket liammet gant un islavarenn : gant an anv-verb *klask* kentoc'h.

Hag amañ e ra Priel adarre gant OUZH :

*Hopala emezon, en ur skrabañ va fenn, bremaik e vo kerse ganin mar stagan gant an holl draoù-mañ difennet groñs ouzhin.* (AMAH 506).

Seblantout a ra Priel degemer an daou zoare, OUZH ha DA, hag ober diouzh an degouezh gant an eil pe egile.

Niverus eo ar verboù a verk an enebiezh hag a ra gant OUZH. Setu un nebeud anezhe :

**enebiñ ouzh** : *gedourien gouest d'ober diouzh ma tegouezhje, ha d'enebiñ raktal ouzh ur gwall-daol na vije moarvat biken anezhañ* (VAZA 166),

**kuzhat ouzh** : *ar vougasenn euzhus-se, ken tev, ken divoull hag ur vantell stoub kouezhet warnoc'h en ur serr-lagad, hag a guzh ouzhoc'h, mor, oabl hag all* (VAZA 99).

Ur ster diarbenn eo a zo roet gant geriadur *An Here* evit «*kuzhat udb. ouzh ub.*» (GBAHE B.2). Met amañ, enebañ a ra ar vougasenn ouzh gweled an den.

**nac'h ouzh** : *gant ur vouezhig flour, daoulagad dic'hoarzh en e benn, ha warnañ stumm un den a zoare, netra n'hellent nac'h ouzh un ibil eveltañ* (VAZA 160)

**ober gaou ouzh ub** : *goude m'en devoa e dad-laer graet gaou ouzh ur bern tud* (VAZA 62)

**stourm ouzh** : *brezeliañ, mont a-benn d'an enebour da zont ha stourm outañ* (VAZA 114)

Stourm A-ENEP a c'haller gant ar memes ster. Stourm EVIT eo ar ster kontrol. Ouzhpenn d'ar stumm dieeun, a ra gant an araogennoù-se, e kaver e Devri ar verb "stourm" dre ur stumm kreñv eeun, hep araogenn eta, hag a dalvez kement ha "tagañ", «*attaquer*» : «*da vont da stourmi kear Lannuon*» diwar ur skrid gant ur beleg eus Gwened moulllet e 1847 (DEVRI, **stourm 2, II**).

Ar pep brasañ eus ar verboù-se a gaver meneget en evezhiadenn Kervella (en notenn gent) ha ne ra ket Priel gant DA, er c'hontrol d'ar pezh a ra, e degouezhioù zo, evit ar verb "difenn".

Ouzhpenn d'an droienn-verb "ober gaou ouzh" a zo :

**treiñ kein ouzh** : *troet en devoa kein ouzh Doue e yaouankiz, ha kemend-all a fae a rae 'ta war e vro "garet" ha war yezh e gavell* (VAZA 22).

Vallée a ginnig OUZH evel araogenn evit «*rapport physique de proximité, d'opposition, de direction*» (Vallée, 1926, p.194). Al lavarenn-verb *treiñ kein ouzh* a c'hall klotañ gant cheñch tu pe enebañ en un darempred fizikel. Amañ emeur kentoc'h gant enebiezh a-fet emzalc'h.

## B) Diarbenn :

E degouezhioù zo eo tanav ar vevenn etre enebañ ha diarbenn ha renket hon eus el lodenn enebañ verboù a c'hall geriañ an diarbenn. Termeniñ a ra geriadur *An Here* an diarbenn evel ur skoilh, ar pezh a lak un harz da dremen ub., udb., da frankiz, da youl ub. (**GBAHE, diarbenn**).

Evel diarbenn e c'haller ober gant louzoù OUZH ur c'hleñved bennak evel a ra meneg Favereau eus se : «*le traitement*» (**GBFF 848**).

Amañ da heul emeur gant traoù all :

*pec'hed e vefe war zigarez un toullad gwenneien **herzel ouzh** un den yaouank evel dout da gas e studi da benn* (VAZA 67),

*den ne vane da **virout ouzh** an intañv d'ober diouzh ma troje en e benn* (VAZA 50),

***piv a virfe ouzhoc'h** da vezañ isrener ul laz-seniñ?* (VAZA 78),

*pa brene ur vaouez **ar mouchouer bras** gant pimpilhòu hir ha rodellet **a dlee padout outi ha marteze ouzh he merc'h o buhez-pad**, evel-just e tibabe al liv a gare* (VAZA 34).

Er skouer diwezhañ eo lakaet war-wel ar fed e rank ar mouchouer, a wiske ar merc'hed, kaout ur vuhez keit hag hini un den pe meur a hini zoken. Derc'hel en desped d'an amzer. (**DEVRI, padout, II.1** : «*padout ouzh : résister à*»).

GANT ivez a c'haller lakaat goude ar verb "padout" met disheñvel e vo ar ster. "Ne baden ket gant gor an hañv" da skouer, o talvezout "ne c'houzañven ket". An abeg a zegas GANT goude ar verb padout : ur skouer all tennet eus VAZA zo el lodenn db. GANT.

Skouerioù all a ro Jules Gros m'eo implijet OUZH, neket evit enebañ en ur vont d'unan bennak, met kentoc'h evit ober ma ne c'hoarvezfe ket un dra bennak :

«*Ar yer n'eus toull stouvet ebed outo, il n'y a aucun trou de bouché contre les poules (elles passent partout malgré les clôtures)*» ha «*Yann a zoñje dezañ e-noa klenket mad e arhant ouz al laeron, Jean pensait avoir bien rangé son argent (caché) à l'abri des voleurs*» (**TDBP 2**).

Aze ivez evel e skouer Priel diwar-benn «*ar mouchouer bras*» n'eus da heul tamm renadenn ebet ouzhpenn a vefe degaset gant ar patrom DA + anv-verb, evel m'emañ er c'hontrefed er skouerioù a-raok gant "herzel" ha "mirout".

CH) Oberoù all troet war-du ub. pe udb. :

*Leuskel a raen an dud da zrailhañ traoù a bep seurt e-dro din: “Kalvez, kereour; liver, sakrist? Kit da vale!” a lavaren ouzhin va-unan, “ken buan all e vefen troc’her-moc’h!”* (VAZA 63)

OUZH «*s'emploie après divers verbes exprimant une communication par paroles, rires, pleurs, regards*» (TDBP 4). N'eo ket «komz sonet» amañ evel-just met daoust da se, ha pa vefe eztaolet outañ e-unan, en e ziabarzh gant aon na vefe degemeret fall e gomzoù rust, ec'h eo OUZH an dud-se hag a ginnig micherioù a bep seurt evitañ e karfe lavaret an dra-se.

Amañ da heul avat eo sklaer zo anv a gomz sonet gant gerioù distaget :

*“fae eo ganin komz ouzh ur penn-gast evel-doc’h!”* (AMAH 407).

Gallout a reer komz OUZH pe GANT ub. met ne gomzer ket \*DA ub. Ober gant DA a vefe ur fazi diwar levezon ar galleg<sup>15</sup>, nemet m'eo «komz da ub. eus, a, diwar-benn udb. : *displegañ e soñj, ur gudenn, h.a., da ub.*» (GBAHE, komz).

*Neb a roe dek gwenneg aluzon d'ur paour e veze sellet outañ evel ouzh ur foeter a beadra!* (VBRU 186).

Pelloc'h, er pennad 5 e welimp e c'hall OUZH bezañ renadenn ar verb-mañ gant ur ster all.

Estroc'h evit gant ar verb *sellet*, an araogenn OUZH a zegas renadennoù verb a verk an evezh (YBBK 628) :

*un dornad saverien o fri e-sell d'arvestiñ ouzh ar proesion war-lein ur c'hleuz en ur vandrouilhat gwestell hag avaloù-orañjez* (VAZA 53).

*Arvestiñ* a c'hall bezañ implijet evel verb tre eeun a zispleg Kervella (YBBK 628 **evezhiadenn II**). Evit ar pezh a sell ouzh Priel avat, un toullad skouerioù zo ma ra gant "arvestiñ OUZH" ha ne ra ket gant an eil stumm.

*eveshaat ouzh ar splujerien (...) gedal ouzh an darzherien* (VAZA 114)

Dedennus eo gwelet n'eo ket OUZH un araogenn ret gant *gedal* a zo ur verb tre, ha ne gaver ket meneg ebet eus "gedal OUZH" e Devri, GBAHE ha GMFF. Met aze, gant OUZH e pouez war an evezh, dres, pa zo kaoz eus ur boelladenn roet d'ar soudarded.

Lavarennoù-verb a ra ivez gant OUZH da c'heriañ an evezh, evel "ober van ouzh" a zeu meur a wech :

*ne reas kalz van nag ouzh ar c'hirri-tram a rae kement a dodilhon, nag ouzh an engroez martoloded* (VAZA 76),

---

<sup>15</sup> Gant-se "Komzit brezhoneg \*d'ho pugale", da skouer, zo ur fazi.



*ne raen ket muioc'h van ouzh dazont ar c'henwerzh eget ne ra ul louarn ouzh ur gaolenn (VAZA 117).*

Setu unan all :

*Na person na kure ne daolas fed ouzh al lezenn-se, hag evit gwir, laosket e voe pep hini d'ober evel ma kare (VAZA 59).*

"Teurel fed WAR" a gaver e Devri (**DEVRI, fed**) ha Priel a implij an droienn gant an araogenn-se ivez en e skrid. Met ne gaver ket "teurel fed OUZH" e Devri, na kennebeut e GBAHE (GBAHE, fed), VALL ( VALL, attention), TGBP (TGBP, fed). Meur a wech e teu an droienn-se gant OUZH en eñvorennoù Priel avat.

OUZH a dalvez da c'heriañ darempredoù all, e-maez an ezteurel pe an evezh :

*Kapri, an enezenn a blije kement d'ar broc'h kozh Tiber<sup>16</sup>, mouzhet ouzh e bobl hag e vro (VAZA 128),*

*darn 'zo a vroc'has da viken an eil ouzh egile (VAZA59),*

*ha pa vefe aour an orjal anezhi, biken evn n'en em dommo ouzh e gaoued (VAZA 51).*

En em dommañ a c'haller "ouzh an tan" hag afer zo eus nested hag eus tommder fizikel. Er skouer-mañ e vez implijet ar verb "en em dommañ" dre skeudenn hag eus darempred zo kaoz. «*En em dommañ ouzh ub., udb. : s'attacher à qqn, qqc*» (**Devri, tommañ, III.B.1**).

Heñvel amañ ma komz Priel anezhañ e-unan hag eus he darempred gant e wreg nevez :

*ne voe ket roet e Brest nemeur amzer da Charlez Tremel ha da Janed Branchereau d'en em dommañ an eil ouzh egile (VAZA 165)*

*daoust ha n'am eus kavet biskoazh abeg da glemm ouzh ar skolaj (VAZA 51)*

Meur a araogenn a c'haller lakaat da heul klemm ha diouzh implij hini pe hini eo disheñvel ar ster. GANT a zegas an abeg : «*klemm gant ar boan-dent*». WAR zo evit un implij all : «*klemm war e stad, e yec'hed*» a dalvez kement ha «*diwar-benn e stad, e yec'hed*». Ha «*klemm ouzh ub. : displegañ dezhañ ar pezh a gaver abeg ennañ*» (**GBAHE, klemm 2**). Ne gaver ket er geriadur implijoù gant DA. Taolomp pled ouzh an diforc'h gant ar galleg "*se plaindre A quelqu'un*". DA a gaver e Devri gant ur ster all avat : «*klemm da ub. : plaindre qqun*» gant ur skouer tennet eus Feiz ha Breiz e 1869 : «*goasa-ze, klem a ran did*» (gwazh a se, klemm a ran dit). Kavout a reer ur meneg e geriadur *An Here* memes-tra evit merkañ an abeg, ouzhpenn d'an hini gant GANT : «*klemm eus, a , diwar-benn ub., udb. : abalamour d'ar pezh a c'houzañver diwarnañ*» gant ar skouer «*klemm a ra eus e amezeien*». E skouer Priel e tle

---

<sup>16</sup> An impalaer Roman

bezañ se ar ster, met ober a ra gant OUZH e plas EUS, A pe DIWAR-BENN. Ur skouer all a gaver pelloc'h en e eñvorennoù :

*dont a raen da soñjal ur wech ouzhpenn e oan-me ur mondan hep leve marteze, met ivez hep an disterañ abeg **da glemm ouzh e blanedenn** (VAZA 151).*

Sklaeroc'h c'hoazh eo aze penaos ne glot ket an implij a ra Priel eus OUZH gant an hini kinniget e geriadur *An Here* : "klemm ouzh" n'eo ket "displegañ da".

Hag amañ e ra gant DIOUZH, un araogenn all neuze :

*gwech ebet e-pad ar pevar ha daou-ugent vloaz aet e-biou – ul lajadig, kuita? – n'am eus bet abeg **da glemm diouzh an degouezh iskis** a liammas da viken ur Breizhad hag ur “Rusianez” eus Rochefort-war-Vor (VAZA 165).*

En ul lodenn all hon eus gwelet e c'hall bezañ mesket A, EUS, OUZH, DIOUZH e Treger hag e lec'hioù all. Gallout a rafe kement-se bezañ un displegadenn.

***sentiñ** a ris raktal **outi** (VAZA 45)*

Kontañ a ra Priel e oa bet lavaret gant e vamm-gozh mont *d'an iliz da bediñ dirak an Itron Varia Lourd* pa oa klañv-bras e vamm. Gant verboù zo evel hemañ eo ret diwall diouzh levezon ar galleg na ra ket gant ar memes araogenn. Skouerioù a ro Vallée gant "komz ouzh", "noazout ouzh", "sentiñ ouzh", "anzav ouzh" hag e sach evezh an den : «*l'emploi de **da** ou de **eus** dans ce cas serait une faute contre la langue*» (Vallée, 1926, p.194).

Amañ e tegas OUZH ur renadenn da anvioù-gwan, ha neket d'ur verb evel a-raok :

*graet e veze evelkent anezhi ur plac'h **feuls ha** zoken **gouez a-walc'h**, da vihanañ **ouzh ar re na ouient ket ober diouti** (VAZA 17),*

*ur wech **kustum ouzh an todilhon**, diroc'hal a raemp a heli gentañ en hor gwele-skourr (VAZA 116).*

Aze eo ur stad a zo merket.

C'H) Santadoù, emzalc'hoù all liammet gant un dro-spered :

Oberoù troet war-du unan bennak pe un dra bennak a c'hall dont diwar santadoù liammet gant un dro-spered.

*ne baouezen ket d'ober gwad fall ha tremen a raen gant hanter-voued, kement ha ken bihan ma teuas an hini gozh, gant **an druez he devoa ouzhin**, a-benn d'ober d'an den dirollet se plegañ d'he c'hoant (VAZA 51)*

**truez am boa outañ** evel-just ha war an dro fent a rae din un tammig (VAZA 65)

En div skouer diwezhañ e kaver ar ster kinniget gant Favereau : «l'égard» (GBFF 847).

*kaer en devoa hennezh strivañ d'am c'halonekaat, un tamm **disfiziañs a vagen ouzhin*** (VAZA 76)

Amañ emeur gant ul lavar-verb all, savet gant ar verb "magañ" ha neket gant "kaout" met a zo degaset e renadenn gant OUZH ivez.

Lavarennoù-verb gant "bezañ" zo ivez :

*Ne veze tamallet din nemet daou draig hepken: da gentañ, **bezañ**, hervez ma krede d'ar gelennerien, **re glouar ouzh ar jedoniezh*** (VAZA 61)

Evel er skouerioù gant *gouez* ha *kustum* e tegas OUZH ur renadenn d'an anv-gwan, "klouar" amañ, kemmet e *glouar*.

Implijet e vez OUZH da verkañ santimantoù :

**daoust ha m'am boa kas ouzh Renan** (VAZA 22).

Emeur gant al lavar-verb : "kaout kaz ouzh"<sup>17</sup>. Un toullad skouerioù eus lavaroù-verb a verk santadoù pe santimantoù, hag a rank bezañ heuliet gant OUZH a zo roet da skouerioù gant Kervella : kaout foug, joa, heug, doñjer, kas, droug, avi, gwaziri (YFFK 630).

**Gwarizi a vagen ivez outo o vezañ ma 'z aent bemdez da di ar skolaer** (VAZA 31)

Evel evit an disfiz gwelet a-raok, e c'haller KAOUT gwarizi pe MAGAÑ gwarizi hag OUZH eo an araogenn a vo implijet. Heñvel eo gant an droienn "kemer gwarizi OUZH ub." (dont da vezañ gwarizius), ar pezh a ziskouez n'eo ket diouzh ar verb eo graet dibab an araogenn amañ, met diouzh an anv a verk ar santad pe ar santimant. En degouezh-mañ e c'haller treiñ OUZH evel a ra Jules Gros gant «envers, à l'égard de, pour, après un substantif, un verbe ou un adjectif marquant un sentiment de bonté ou de bienveillance à l'égard d'un être quelconque» (TDBP 3).

## 5. Renadennoù verboù all

Gwelet hon eus ar verb "sellet ouzh" pa vez anv eus an ober graet gant an daoulagad. Ur ster all a zo :

*koll amzer ho pije graet o lakaat war an tabier dirak an houad-mañ un danvez bennak **na***

---

<sup>17</sup> skrivet *kas* e VAZA koulz hag e VAZA 1975.

*selle ket rik ouzh e venveg, an hirvombard, pe ouzh ar gensonerezh: Doue, brezel, istor, lennegezh, douaroniezh, n'intente ger eus ar seurt sorc'hennoù (VAZA 162).*

N'eus liamm ebet gant ar gweled aze : sellet ouzh ub., udb. a c'hall ivez talvezout kement ha "concerner" e galleg. Db. talvoudegezh *lakaat war an tabier*, gwelet Ernault ha Vallée e Devri evit "dont war an tabier" : «venir sur le tapis, en parl.<sup>18</sup> d'un sujet de conversation» (**Devri, tabier / tablier**).

*douget a-walc'h e oa hon eskob da gement tra a selle ouzh Breizh (VAZA 60)*

*brav tre e teue ganin evit pezh a sell ouzh an deskamant er c'hloerdi (VAZA 61)*

An droienn «*evit pezh a sell ouzh*» a zistro meur a wech e skridoù eñvorennoù Priel hag e c'haller treiñ anezhi e galleg gant "*en ce qui concerne*". Kavet e vez stank ivez gant ar gemell "ar", d'ober «*evit ar pezh a sell ouzh*». En eñvorennoù Priel e kaver an daou stumm : *siwazh din n'intentan na bu na ba evit ar pezh a sell ouzh ar seurt teñzorioroù (VAZA 128).*

*Bez' e oa, bodet ouzh hor gortoz a-wel d'ar gêrbenn el lec'h m'emañ ar stêr Taj en he ledanañ holl listri ar rouantelezh (VAZA 120)*

*mar bije bet gantañ ur sabrenn evel hini an ofiserien ouzh e ambroug (VAZA 121)*

*Ober a raen va fabor ouzh he c'hlevout evel pa vijen bet ken digas ha den (VAZA 159)*

*ha pa vefes feuket ouzh va c'hlevout, n'out ket par din, na tost, evidon da vezañ hervezout un azen (VAZA 162)*

Er peder skouer-se ec'h adkaver ar patrom boutin-mañ : OUZH + raganv-gour perc'hennañ + anv-verb. Renadenn-dra eeun eo ar raganv-gour perc'hennañ bewech. Emeur gant ar stumm-ober :

ouzh hor gortoz : o c'hortoz ac'hanomp,

ouzh e ambroug : oc'h ambroug anezhañ,

ouzh he c'hlevout : o klevout anezhi,

ouzh va c'hlevout : o klevout ac'hanon.

Ar patrom-se da lavaret eo «*ar stumm-ober en deus el lavarenn karg ur renadenn doareañ, pe gentoc'h un doareenn peogwir e vez dalc'hmat ar verb bezañ*». Ha «*pa vez renadenn eeun ar stumm-ober ur raganv-gour*» (*hor, e, he, va* amañ) «*dirak an anv-verb*» (*gortoz, ambroug, klevout* amañ) «*e vez skrivet ouzh e-lec'h O pe oc'h*» (**YFFK 752**).

Ar renadennoù-doareañ a verk ur c'hempred en ober, evel a zo e-barzh "labourat ouzh ar gouloù" (**YBBK 631**). Evit pezh a sell ouzh ar skouer gentañ : "bezañ bodet" ha "gortoz" zo daou ober kempred.

---

<sup>18</sup> parlant

## 6. Troiennoù

*Darn, eme an dud, a sell gwell verr ouzh o bleud hag ouzh o brenn; houmañ 'vat a sile ar yod, evel ma lavarere, dre lostenn hec'h hiviz (VAZA 22).*

Meur a dra gant "sellet ouzh" hon eus renket e lec'hioù disheñvel dija. Gant un dro-lavar emeur aze : «*sellet berr, pizh* : mirout a zispign» ha «*sellet berr* : teuler evezh» a zispleg geriadur *An Here (GBAHE II.B.3)*. Kaoz zo amañ eus ur plac'h pizh.

*ur gwasteller dizimez anezhañ, a oa un den mat ar stal gantañ, ha ne oa ket stag e groc'hen ouzh e gein (VAZA 74)*

Hemañ, avat, n'eo ket un den pizh. E plas an droienn gant *stag* e kinnig Jules Gros un droienn damheñvel, gant an anv-gwan "peg" : «*Chesuz ! An dostenn-ze ! Honnez a zo peg he hrohenn ouz he hein*» (**TDBP 1b, Pega, pég**).

Etre daou anv-kadarn heñvel e talvez OUZH «*da sevel troiennoù-adverb a verk un darempred diouzh an daou du*» (**GBAHE A.3**) :

*gwall brim e teuis a-benn da zeskiñ e vez aesoc'h bevañ e-skeud un admiral eget skoaz-ouzh-skoaz gant un tammig korporal (VAZA 147).*

Kement hag "an eil e-kichen egile" e talvez an droienn-se ha dre skeudenn e c'haller implijout anezhi gant ur ster all : «*bezañ skoaz-ouzh-skoaz : en em skoazellañ an eil egile*» (**GBAHE, A.3**).

Meur a droienn evel-se o deus meur a ster, fetis pe difetis diouzh an degouezh :

*Kerkent ha ma teuas an itron da c'houzout he dije da vezañ tal-ouzh-tal gant ar seurt lakez an Droug-Spered, raktal e skaras d'ar Porzh-Gwenn gant he bugale hag an holl vitizhien (VAZA 21).*

Ernest Renan, a ra lakez an Droug-Spered anezhañ, ha ne fell ket d'an den en em gavout a-dal dezhañ e mod ebet.

*Ha biken ne zeuin a-benn da c'houzout kement-se, kent ne vin adarre, kuita Mammig, tal-ouzh-tal ganeoc'h? (VAZA 47)*

Aze emeur muioc'h war an dachenn speredel pa ra Priel anv eus e vamm hag ar mare ma adkavo anezhi goude ar marv.

Teurel a reer pled en teir skouer-se e teu GANT, un araogenn all, da heul an troiennoù *skoaz-*

*ouzh-skoaz* ha *tal-ouzh-tal*. Emeur gant troiennoù-adverb a zo troiennoù araogennoù deveret ma c'haller ober gant an anv-se.

*kement hini a zeuas bete du-mañ ar Yaou a zisklêrie e-leizh e c'henoù: Ma! frankaat a ra dezhi, ouzh a ra!"* (VAZA 45)

Kontañ a ra hon skrivagner penaos e oa gwashaet da stad he mamm, bet kouezhet klañv, hag ar pezh a lavare an dud goude ma oa bet roet louzoù dezhi gant ar mezeg.

Souezhus eo ar bomm *ouzh a ra !* Amañ, ha n'hon eus kavet meneg ebet e lec'h pe lec'h hag a dalvezfe da reiñ un displegadenn gadarn. Gallout a reer soñjal, abalamour d'ar gendestenn, e talvez "ken e ra !", "hag e ra !" pe marteze emeur aze gant un doare stumm-ober krennet diwar "ouzh en ober a ra".

# WAR

## 1. Egor

Degas a ra WAR renadennoù a denn d'al lec'hiañ, gant fiñv pe hep fiñv.

Implijet e vez stank an araogenn-mañ da resisaat lec'h unan bennak, un dra bennak pe un ober bennak en em gav ar peurliesañ a-us d'ub. pe d'udb. all hag o kaout stok outañ.

*setu ma krogas kement ha diverraat e amzer d'ober war an doubier e-tal e asied boullouigoù munut gant minvig (VAZA 148)*

Ur seurt araogenn enep DINDAN eo WAR amañ, daoust ma vez aliesoc'h WAR ha DIWAR araogennoù enep an eil e-keñver eben. Ar boullouigoù en em gavo war an doubier, hag an doubier dindan ar boullouigoù.

*ur paotr brav e vijen bet war gein ul loen-kezeg (VAZA 135)*

Amañ ivez emañ al loen-kezeg dindan ar paotr. Met taolomp pled e vefe troet gant «À dos de cheval» e galleg, pa vefe graet gant «SUR la nappe» evit ar skouer kentañ. Vallée diwar-benn WAR : «on l'emploie notamment assez souvent dans des expressions où l'on a en français "en" ou "à"» (Vallée, 1926, p.196).

Danvez liammet gant ar mor a zeu gant Priel e VAZA abalamour d' e vicher d'ar mare-se : *savet eo bet Stockholm war deir enezenn e penn pellañ al lenn vras Maëlar (VAZA 150), bez' e veze ul laz-seniñ war bep lestr-admiral (VAZA 83), abalamour da betra n'hoc'h<sup>19</sup> ket chomet war vor?* (VAZA 171).

Amañ ivez ma ra ar galleg gant «EN mer» e ranker ober gant "WAR vor" e brezhoneg peogwir emeur aze war-c'horre an dour. "ER mor" a dalvezfe e-barzh (evit pesked da skouer, pe an *Titanic* e fin he buhez). Ken gwir all eo e reer gant WAR evit lec'hioù all ma zo anv a verdeiñ :

*da vageal war al lenn Maëlar (VAZA 151),*

*chom a rejomp war eor pell diouzh Mogador (VAZA 123)*

Stag ouzh hec'h eor eo ar vag. N'eus termen ebet a ra dave d'ar vag ent-resis er skouer-se met

---

<sup>19</sup> Ui-koukoug e plas "n'oc'h"

kaoz zo eus al lestrad e-barzh ar verb displeget en eil gour lies. Pelloc'h evit tachenn mor pe ar verdeiñ, WAR a dalvez «*stag ouzh (udb.)*» «*db. ar bigi, al loened a stlej ur c'harbed*» (GBAHE I.A.7).

WAR ne verk ket bepred un dra bennak a-us d'udb. all. Talvouezout a ra ivez «*da lec'hiañ orin ar pezh a lenner, a weler*» «*gant ar verb lenn, gwelet*» (GBAHE I.A.11) :

*ma lennis war ar Petit Var* (VAZA 122),

*e lennis war ur skritell peget ouzh dor ur gambrig*: M. Lhéritier, premier valet de chambre de l'Elysée...(VAZA 136).

Alese, dre astenn e kaver WAR gant verboù all, evit ar pezh a denn d'ar skrammoù da skouer : *d'am meno klevout pennoù bras ar bed-mañ o pasaat pe o tistrevial evel c'hwi ha me, ha sellout outo o tremen war ur skramm, a zo daou dra disheñvel-tre* (VAZA 135).

Amañ zo kaoz eus traoù all a c'haller gwelet pe sellet oute ivez:

*patrom ar barrez, treset ha livet war ar mogerioù* (VAZA 26).

Ha setu skouerioù all, ma zo anv a savadurioù ha ma n'eus ket kaoz eus un dra bennak a-us d'unan all :

*skritelloù peget war an tiez* (VAZA 165),

*n'eus na kaerder na meurded war he ziez hanter wenn pe louet* (VAZA 152).

Gant anvioù-verb hag anvioù-kadarn «*pour marquer direction et disposition*» (Vallée, 1926, p.197) :

*Mont a rae a-wechoù war ziskenn ar menez a-gleiz pe a-zehou, hag e weled neuze ur c'hrec'h digoad gant douar gounit, prajoù pe barkeier* (VAZA 149).

Kaoz zo eus beaj ar vag en ur fjord.

*an diwezhañ soner war du kleiz an hanter-gelc'h* (VAZA 145)

N'eus fiñv ebet aze. Disheñvel eo amañ, er skouer hon eus lakaet en digoradur :

*jilgammat war an daou du a rae ar paourkaezh, krennoc'h eget ur c'hornandon ha tort daonet war ar marc'had; hervez ma lavarere dre amañ, aet e oa e gofen e gein* (VAZA 32).

Taolomp evezh ec'h eo "war-du" pe "war-zu" araogenn gevrennek, e stumm araogenn rannadus evel "war-lerc'h" a ginnigomp el lodenn goustlet d'an araogennoù-se. N'eo ket gant se emeur er skouer diwezhañ-mañ.

*Tachaires Gonzague eus Arcachon, ur c'heneil dalc'hmat war va seulioù ha ne guzhen ket nemeur a dra outañ* (VAZA 130)



Kompren a reer aze eo troet ar paotr Tachoures Gonzague da heuliañ Priel e kement degouezh a zo. Da geñveriañ gant an emheuliañ a zegaser gant GANT : "ur c'heneil dalc'hmat ganin".

Splann eo ar fiñv degaset gant WAR e degouezhioù zo :

*ar marmouz a grap war n'eus forzh peseurt gwezenn (VAZA 110)*

Gwelet hon eus ec'h eo WAR ha DIWAR araogennoù enep (gw. lodenn DIWAR). Ma c'hall krapat ar marmouzed war ur wezenn bennak e c'hallont diskenn diwarne.

*war ar brein e nij a bell brini hor bro, hag e Jameston ne baoueze ket da blavañ guped hag evned preizh all, rak ur flaer spontus a save eus an dismantrou gant an domm a rae (VAZA 90)*

Da heul ur c'hren-douar e kont kement-se. Amañ eo "nijal eus/a ... WAR" ha neket "nijal eus/a ... DA".

*Ur pennadig kent na grogas an deiz da sevel, pa grede d'an dud war vale e oa sorennet va mamm (VAZA 47)*

Dirak un ak. : «*termen a dalvez da ober anv eus dilec'hiadur un den, ul loen*» (GBAHE I.A.10).

E meur a lodenn gouestlet da araogennoù all, OUZH hag E da skouer, hon eus gwelet e c'hall bezañ liammet araogenn pe araogenn gant termenou a denn da lodennoù eus ar c'horf. Gant WAR e c'hoarvez ivez :

*Lakaat a ris war he barlenn va samm levrioù (VAZA 62)*

Kement ha "harp ouzh (udb)", "stok ouzh (udb.)" e talvez WAR «*dirak un anv a dalvez da aroueziñ ur rann eus ar c'horf pe draoù en em harp ar c'horf warno*» (GBAHE I.A.2).

*ne vane ken e yalc'h va zad muioc'h a wenneien eget a blu war gein ur silienn (VAZA 63)*  
*koef Fouenant war he fenn (VAZA 77)*

*daoust ha ma touge tri galoñs war bep brec'h (VAZA 78)*

Gwelet ivez "war e grabanoù" er pennad "7. Troiennoù".

Goude verboù zo, geriañ a ra WAR «*un ober a denn d'un dilec'hiadur, d'un durc'hadur*» (GBAHE I.A.9). Setu un nebeud skouerioù :

**parañ war** : *Ne zichañs ken din parañ va selloù war vouchoueroù lirzhin gwechall (VAZA 36).*

E Devri emañ "parañ war" gant an dalvoudegezh «*diriger (son regard sur)*» o kinnig skouerioù gant "daoulagad" ha "selloù" (DEVRI, parañ 5). Lec'hiañ ar selloù en egor neuze.

En e stumm gwan e c'hall ar verb bezañ implijet ivez, gant ur ster all ha na verk ket al lec'h : "parañ a ra an heol".

**skeiñ, c'hwistañ war** : *c'hwistañ war an daboulin vras* (VAZA 83)

Gwelet ivez ar pennad diwar-benn an araogennoù lies a c'haller implijout gant "skeiñ" el lodenn diwar-benn an araogenn GANT.

**sachañ war** : *bez' e oad o sachañ war va brec'h* (VAZA 47).

En desped d'an enebiezh WAR / DIWAR a gaver alies e c'haller bountañ war ub. ha sachañ warnañ ivez, gant implij WAR bewech.

**stlepel war** : *darn zoken a stlepe warno vioù pe frouezh brein* (VAZA 95)

**treiñ war** :

*treiñ war du-mañ-tu* (VAZA 114)

Diwar-benn ur vag eo ar skouer diwezhañ. Met amañ n'eo ket a-fet egor emañ an durc'hadur : *hemañ a glaske ober yalc'h dre droc'hañ blev ha lemel barv, henhont a droe war ar vicher gere pe gemener* (VAZA 116)

### Troiennoù :

WAR a servij da sevel adverboù neuziañ : «*war-eeun, war-lerc'h<sup>20</sup>, war-raok, war-gil, war-grec'h, war-zinaou, war-ziribin, war-sav h.a.*» (YBBK 541 k).

*da zistreiñ d'he bro war ul lestr-kenwerzh, pe dre nij, pe war-neuñv*: en ur ger, er stumm a blijfe dezhi ar muiañ (VAZA 104)

Taolomp pled ouzh an araogennoù disheñvel a zo implijet evit merkañ an doare : WAR ul lestr kenwerzh, DRE nij, ha WAR-neuñv.

*Goude gouelioù Meksiko; e skojomp war-du an hanternoz* (VAZA 95)

"War-du" ha "war-zu" zo araogennoù-kevrennek. Gallout a ra ober gant stummoù deveret gant skoazell an araogenn E, "war-zu ennout", "war-zu ennañ"... Ha diouzh an eil doare, evel araogenn rannadus, "war ma zu", "war da du"... (DEVRI, war-zu/war-du, II).

Er skouer a ginnigomp e verk an dilec'hiadur, evel a ra "war-eeun" amañ :

*mont a rejomp alese war-eeun da New-York* (VAZA 95).

An droienn "war-eeun" hec'h-unan, hep na vefe un araogenn all war he lec'h ("war-eeun DA", "war-eeun GANT") n'eo ket araogenn avat. Adverb eo ha sterioù all zo dezhi : en amzer, «*tout de suite, sans délai*», «*régulièrement*», ha diwar heñvelidigezh «*directement, sans intermédiaire*», «*exactement*», «*en place, à sa place*» (DEVRI, war-eeun).

---

<sup>20</sup> "War-lerc'h" a c'hall bezañ araogenn gevrennek ivez (gw. al lodenn "araogennoù rannadus")

*ken lemm e lagad hag hini un naer o c'hedal war-lein ur c'hleuz (VAZA 80)*

Adverb hag araogenn e c'hall bezañ war-lein (**DEVRI, war-lein**), hag araogenn eo amañ, liammet m'emañ ouzh *ur c'hleuz*, lakaet war he lerc'h.

«*Pa vez un doare klud (un doenn, ur wezenn, ur skabell..), ma raer un ober hag a chom stag ouzh ar glud-se, ec'h implijer WAR ; ma raer un ober hag a zo e bal en diavaez eus ar glud-se, ec'h implijer DIWAR*» (**GERVEN, B4**). N'eus fiñv ebet er skouer-se er c'hontrol d'ar skouer-mañ :

*ar re, niverusoc'h c'hoazh, o devoa pignet gant mil boan war-lein an torgennoù tro-dro d'ar porzh (VAZA 169)*

En hon skouer gentañ, an ober gedal a chom stag ouzh ar seurt klud a zo eus ar c'hleuz. Gant an araogenn enep "diwar-lein" e c'hallfed skrivañ "ur soudard o tennañ DIWAR-LEIN ar c'hleuz war e enebour", gant an enebour en diavaez eus ar glud-se. Ur skouer evel-se a gaver pelloc'h en eñvorennoù Priel :

*Daoust da se e chomis ul lajad da sellout diwar lein derezioù an ti-hent-houarn ouzh an traoù hag an dud en-dro din (VBRU 217).*

Bez' emañ *an dud en-dro din* en diavaez eus ar glud a zo eus *lein derezioù an ti-hent-houarn*.

*Edo Soaz Sapeur war he gwele abaoe un toullad deizioù (VAZA 65)*

Un droienn skeudennet eo "bezañ war e wele" amañ, da c'heriañ eo klañv ar plac'h.

*n'in ket war ar roll (...) ne dalv ket ar boan lakaat va anv (VAZA 67)*

Gwelet hon eus e vez implijet WAR evit geriañ ar pezh a lenner, a weler, gant ar verboù "lenn", ha "gwelet". Pa lakaer e anv en em gaver war roll ar re a zo enskrivet, dres ar pezh na fell ket da Briel aze. Gallout a reer treiñ e galleg gant «je ne m'inscrirai pas». Ha gant-se e kaver bremañ a-hed ar bloaz arzourien WAR roll festoù-noz hag abadennoù all, ha WAR ar roll e vezont lakaet a-raok na vefe embannet pe bostet an disterañ bruderezh zoken.

## 2. Amzer

Merkañ a ra WAR an amzer, e meur a stumm.

*war ar pemdez diouzh ar mintin, adal eizh eur bete nav eur hanter, e studie hag e pleustre pep hini gant e venveg (VAZA 79)*

Favereau : «*l'étalement dans le temps*» (GBFF 863).

*war ar pemdez koulz ha d'ar Sul e veze war e benn un tog du* (VAZA 108)

Taolomp pled ouzh al lies m'eo an araogennoù a zegas renadenoù-amzer, en daou skouer-mañ paneveken : *war, diouzh, adal, bete, da*.

*Mar bize d'hañset dimp tremen dre amañ, n'eo ket war greiz an deiz, met un nozvezh diloar* (VAZA 142)

Mennozh ar prantad zo aze, an hini ma vez deiz, («EN journée» e galleg), pa vefe implijet "e-kreiz an deiz" evit ur mare resisoc'h e-kreiz ar prantad-se («au milieu de la journée» e galleg). Sklaer eo amañ ivez :

*a-hed an noz e veze gwelet ken sklaer ha war greiz an deiz, bennozh d'ar gouloùioù enaouet eus traoñ da nec'h an ilizoù* (VAZA 144)

p'eo lakaet keñver-ha-keñver gant ur prantad all, *a-hed an noz*, degaset gant un araogenn all, *a-hed*.

Ouzhpenn da c'heriañ ar mare ma c'hoarvez un ober bennak e c'hall merkañ ar pezh en em gavo prestik\_ : «*l'imminence*» (GBFF 864).

*p'edomp war-nes bezañ roustet ganto, e tiredas Alamaned* (VAZA 96)

An araogenn-gevrennek-mañ a dalvez «*o vont da*» (GBAHE I.B.5).

Ar memes mennozh zo amañ :

*E stumm-se ne oan ket evel-just war var da rastellat madoù gant ar c'hoariva* (VAZA 29)

Ur ster all en deus "war var" anez e lakaat dirak "DA". «*bezañ war var : être en danger*» (DEVRI, war-var, 4), ar pezh na glot ket gant hon skouer evel-just.

Degas a ra WAR renadennoù a verk degouezhioù liesseurt, evel a skriv Jules Gros : «*des rapports de circonstances très divers*» (TDBP 13).

*Tostaat a rae dija an termen ma rankjen tennañ ar bilhed, war arvar da vezañ soudard war-droad pe war varc'h, ha neuze kenavo d'ar mor!* (VAZA 76)

En arvar e vezer pa vezer liammet gant udb. na ouzer ket mat, resis, pe pa vez anv a zañjer zoken (GBAHE, arvar).

Dirak un anv-verb ivez e c'hall WAR merkañ ar pezh a zo da zont :

*n'ez poa ket lavaret din e oas war zimeziñ gant ur Rusianez eus Moskov* (VBRU 182).

Er skouerioù da heul, evel a zispleg GBAHE, emeur gant anvioù-verb a dalvez da verkañ ur c'hemm (gant ar verb "mont" alies) hag an araogenn a dalvez d'ober anv eus padelezh ar c'hemm (GBAHE I.B.6) :

*evidon da vezañ aet war goshaat, n'am eus ket c'hoazh kavet an tu da binvikaat gant ar vicher-se (VAZA 29),*

*e teuas stad va mamm da vont ken buan war washaat (VAZA 44).*

Fall eo stad yec'hed ar vamm, ha falloc'h-fallañ e teu da vezañ, betek ma varv nebeut war-lerc'h en destenn.

Vallée a ra anv eus «*changement progressif*» (Vallée, 1926, p.197).

*Ur gêr vrav meurbet e oa er mare-se kêrbenn Bro-Sveden, ha moarvat kenderc'het he deus abaoe da vont war gaeraat (VAZA 150)*

*e Landreger e kavis pleg da vont war wellaat (VAZA 68)*

Kervella a dosta «*ar verboù en -AAT gant WAR dirazo*» ouzh ar stummoù «*war greskiñ*» evel «*gwelloc'h-gwell pe gwelloc'h-gwellañ*» (YBBK 562).

Kement ha chom gant hon skouer e c'hallomp degas displegadenn Kervella a gaver en e bennad «*stummoù all diwar an anv-verb*» : «*gant bezañ ha mont da verboù-skoazell hag an araogenn WAR e vez savet ur seurt stumm araokaat pe greñvaat* : bezañ war gozhiñ, mont war wellaat. *Ar verboù en -aat o tont diwar anvioù-gwan-doareañ, dreist-holl eo a c'hell bezañ lakaet evelse er stumm-araokaat*» (YBBK 186).

En holl skouerioù uheloc'h ec'h eo ar patrom "WAR + vb. en -aat" ac'h a da sevel adverboù-verb a zo anezhe renadennoù-doareañ da verb "mont" (YBBK 725).

Amañ eo dirak un anv-kadarn eo lakaet WAR :

*war gresk e oa aet va gopr (VAZA 91)*

Posupl e vije bet skrivañ "war greskiñ" e plas *war gresk*. Favereau a ginnig skouerioù gant WAR lakaet dirak verboù hag ivez dirak traoù all : «*l'augmentation*» (GBFF 865).

*seul belloc'h ma kerzhen war-raok gant ar studi VAZA 61)*

Adverboù neuziañ savet diwar an araogenn WAR hon eus meneget er pennad "1. Egor". Daoust m'emañ aze da zoareañ ar verb "kerzhet" ec'h eo liammet *war-raok* er skouer-se gant mennozh an amzer, pe gant un ober a bad en amzer.

WAR a lakaer dirak an anv-verb da zeskrivañ emeur gant an ober-se :

*ne ouient ket e oan-me war selaou (VAZA 44)*

N'eus ket anv a gemm, nag a greñvaat aze, emeur kentoc'h gant WAR «*marquant une occupation, un travail*» (TDBP 3), evel amañ :

*e-keit m'edon war va studi (VAZA 98)*

Lakaet e vez ivez «*dirak gerioù evel labour, micher, h.a.*» hag e talvez «*d'ober anv eus un oberezh a bad*» (GBAHE I.B.4).

### Troiennoù :

*war an taol e chomis gant va genoù digor bras* (VAZA 65)

«War an taol : diouzhtu, da geñver darvoud pe zarvoud» (GBAHE I.B.1).

*neb a bare e selloù war ar seurt roue a dlee war an taol bezañ broudet da vont a-du gant ar republikaned* (VAZA 121)

Fent Priel, o tont goude : «*biskoazh betek-henn n'am eus gwelet divalavoc'h den eget e Veurded Carlos II*».

Lakaet dirak ur ger a denn d'un darvoud pe d'ur mare e talvez WAR "da vare" a zispleg GBAHE :

*p'edo war he zremenvan* (VAZA 65)

«Bezañ war e dremenvan : *bezañ e par ar marv*» (GBAHE I.B.2). Ar marv zo da zont prestik. Da dostaat ouzh skouer *war zimeziñ*, uheloc'h, ma zo anv eus udb. plijusoc'h...

*ar gwraez krog mat da vont war an oad* (VAZA 34).

«*War an oad : âgé*» (DEVRI, oad, I. 6) ha gant "mont" dirak e tegas mennozh an emdroadur : «*Mont, dont war an oad : dont da vezañ kozh*» (GBAHE I.B.3).

## 3. Neuz, blaz, kleñved

Un displegadenn dedennus a ro Jules Gros diwar-benn un dra hag a zo heverk er yezhoù keltiek. WAR «*suit les mots exprimant l'aspect, la couleur, le goût, la maladie. Ce war rappelle que dans l'esprit des anciens Celtes ces caractères étaient placés sur le sujet (extérieurs au sujet), que le sujet en était revêtu. Ils s'expriment encore de la même façon en gallois et en gaélique à l'aide de la préposition ar (sur)*» (TDBP 2).

E-mesk ar skouerioù roet gant Jules Gros e c'haller menegiñ : «*Ar herh a oa kouezet ar mergl warno, la rouille était tombée sur (avait attaquée) l'avoine*» ma kaver mennozh ar seurt gwiskamant diavaez.

Meur a skouer a zo e skrid Priel, dreist-holl pa gont diwar-benn yec'hed fall e vamm, ha pa zeskriv boued en em gav gantañ e-kerzh e veajoù.

Lies eo ar stummoù a c'haller ober gante. Gallout a ra bezañ degaset gant gerioù evel "liv" ha

"sin", da skouer, heuliet gant un anv all a zoareo an neuz, ar strollad anvioù-mañ o vezañ lakaet a-raok an araogenn.

*eviti da vezañ o loeniñ a-hed an deiz, morse ne zeue **liv ar skuizh warni*** (VAZA 17)

*soñj am eus koulskoude e oa **liv ar yec'hed warnañ*** (VAZA 25)

*liv* : anv-kadarn (1), *ar yec'hed* : strollad-anv doareañ (2), *warnañ* : araogenn displeget gant gour an den deskrivet (3) da heul (1) + (2)

Er skouer gentañ gant **liv ar skuizh warni**, e (2), an anv-gwan *skuizh* zo lakaet da anv-kadarn.

Un anv-verb a gaver a-wechoù en eil plas, gant ar memes roll doareañ an anv-kadarn. Diwar-benn ur glañvourez :

***Sin gwellaat a zo warni*** (VAZA 44)

(2) : *gwellaat*

Un doare all zo d'ober gant un anv-kadarn hepken, e plas gant ur strollad (1) ha (2). Ar germell amresis zo implijet amañ pa oa resis er skouerioù a-raok.

*hag **ur struj<sup>21</sup> warni**, va Doue! Gwennoc'h eo eget ar goarenn wennañ* (VAZA 47)

Gallet en defe skrivañ "ha liv ar struj warni" met gant ar stumm berroc'h-mañ e tegas primoc'h ar mennozh, ha pouez.

Er skouer da heul emeur gant ur sistem all, hep anv-kadarn. Dont a ra an araogenn diouzhtu goude ar verb bezañ er stumm nac'h amresis, *n'eus ket*, lakaet e deroù ar frazenn.

***N'eus ket warni bezañ pareet!*** (VAZA 44)

Diwar-benn ar memes klañvourez, bepred, e vamm.

Keñveriomp anezhañ gant ar frazenn uheloc'h. *Sin gwellaat zo warni* a c'hallfemp lakaat er stumm nac'h evel-henn : "N'eus ket sin gwellaat warni" pe "N'eus ket warni sin gwellaat".

Tri zamm en urzh-mañ ac'h afe d'ober ar frazenn. (1) verb er stumm-nac'h, (2) araogenn displeget diouzh gour an den deskrivet, (3) strollad anv + anv-verb gant *sin gwellaat*, p'eo *bezañ pareet* anv-gwan-verb kevrennet er skouer all.

Ur skouer all a ro Jules Gros :

«sorghenn he mamm a oa warni, (...) *elle était obsédée par le désir d'aller retrouver sa mère*» (TDBP 2).

---

<sup>21</sup> notenn ar skrivagner VAZA 1975 p192, *struj* : *très mauvaise mine* ; notenn an embanner VAZA 2022 : *Struj* : *Neuz*

Ar sorc'hennoù a c'hall treiñ da gleñved spered a-wechoù gant lod.

*ur bern moc'haj, blaz an diaoul warno ha na raent na droug na vad d'ur bugel ken yac'h ha den* (VAZA 39)

Gallet en dije ar skrivagner implijout an araogenn GANT : "blaz an diaoul ganto". Hag en ober a ra pelloc'h en e eñvorennoù : *blaz an diaoul 'oa gant ar yod-mañ!* (VBRU 238).

Pa vez blazet mat an traoù e c'haller ober gant WAR kerkoulz all : «*blaz vad zo warno (...)* (*ils sont un bon goût*)» (TDBP 2).

Sellomp ouzh an doare m'eo stummet lavarenn Priel :

*blaz* : anv-kadarn (1), *an diaoul* : ger-mell + anv-kadarn (2) o toareañ an anv-kadarn kentañ, ha *warno* : araogenn (3) displeget er gour a glot gant ar pezh a zo doareet, *moc'haj*.

E (2) e vefe bet posupl implijout un anv-gwan simpl, evel "fall" pe gevrennek, evel "fall-daonet", da skouer : "blaz fall-daonet warno". E (1) ma reer gant un anv-gwan verb ("blazet") e vimp gant ur stumm all avat : "blazet fall-daonet", hep araogenn eta.

Ar skouer-mañ, hon eus gwelet da-geñver plediñ gant un araogenn all, a zo stummet mui-pevui diouzh memes patrom hag ar skouer a-raok (VAZA 39), nemet an araogenn zo lakaet en eil plas :

*ur c'hozhiad, warnañ struj ha barv ur ribler tec'het evit ul lajad eus ar "maquis"* (VAZA 130)

Neuz ar c'hozhiad zo deskrevet, o keñveriañ anezhi gant hini *ur ribler tec'het evit ul lajad eus ar "maquis"*. Hir eo ar renadenn goude *warnañ* aze : 12 ger ac'h a d'ober anezhi.

## 4. Darempred pe levezon meur a dra, a zen, tra-den

Gwelet hon eus e c'hall DINDAN geriañ un darempred a veli, a urzhaz.

WAR «*sert parfois à exprimer le fait d'être soumis à quelque chose de désagréable, à une contrainte physique ou morale, à une domination ou à une évaluation*» a zispleg Jules Gros (TDBP 9).

*e ziskred war an holl dud, ha zoken ar re nesañ dezhañ* (VAZA 146)



Kaoz zo eus un impalaer. WAR a zegas aze ur renadenn d'an anv-kadarn "diskred".

Amañ e teu splann mennozh al levezon :

*un draig hep levezon evel-just war zibun darvoudoù ar bed* (VAZA 158).

Aze ivez eo lakaet WAR goude an anv-kadarn, da zegas ur renadenn dezhañ. Estroc'h evit gant anvioù-kadarn e c'hoarvez avat.

Verboù :

Goude verboù zo e talvez «*da c'heriañ un darempred etre meur a zen, etre tud ha traoù zo, etre meur a dra*» (GBAHE I.C.14). Setu un nebeud :

**c'hwitout war** : *c'hwitet he deus va mamm gaezh war an dra-mañ* (VAZA 18).

Ur renadenn-dra dieeun zo degaset d'ar verb goude an araogenn liammet outañ. E GBAHE e kaver ivez "c'hwitout GANT", gant ar memes ster : pal c'hwitet (GBAHE, c'hwitout).

**fiziout war** : *dre-se n'em boa ket da fiziout an dro-mañ war vreudeur ar C'hourtez* (VBRU 179).

Fiziout EN ub. ivez gant ar memes ster (DEVRI, fiziout / fiziañ, II.1) daoust ma lavar Kervella penaos «*prederiañ ha fiziout a vez aliesoc'h degaset o renadenn gant war*» evit gant E (YFFK 622). Gwelet pelloc'h : "prederiañ". Kavout a reer ivez, gant ar verb-se ha mennozh ar fiziañs, "fiziout udb. en ub." ha "fiziout" dirak un islavarenn : «*fiziout a rae e troje an traou da vat*» (DEVRI, fiziout / fiziañ, I.2).

**gwaskañ war** : *Kent na vanas va mamm klañv kaer war he gwele, e waske evelato war e si, rak karout a rae e wreg a greiz kalon* (VAZA 50).

Eus si al lonkañ zo kaoz.

**huchal war, blejal war** :

*gwell abred e huche warnon Koko, peroked Fulup ur c'hozh vartolod evel Biz Kamm, o chom e tu all an hent: "Alo 'ta, Jarlig, poent eo mont d'ar skol!"*(VAZA 18),

*abaf ken ne oa ket evit blejal «Chou 'ta» war ur yar* (VAZA 23).

Keñveriañ "huchal WAR(-LERC'H) ub.", «*komz kreñv evit bezañ klevet gantañ, evit sachañ e evezh*» gant "huchal DA ub." : «*e c'helver*» (GBAHE, huchal, II).

**poanial, poaniañ war** :

*Rankout a rae 'ta poaniañ war e gozhni da c'hounit e vara (VAZA 15).*

Gallout a reer gouzañv poanioù o "poaniañ GANT ar remm" (**GBAHE, poaniañ, II.1**), «*poania DINDAN ar yeo hag en hualou*» (**Meurgorf, poaniañ, 1923**). Gallout a reer ivez "poaniañ GANT ub. pe ul loen bennak" gant ar ster «*kemer poan oc'h ober war e dro*» (**GBAHE, poaniañ, IV**), "poaniañ DA ober un dra bennak", evel en eil tamm hon skouer, ar pezh a dalv «*strivañ da, lakaat e holl nerzh da*» (**GBAHE, poaniañ, V**), hag amañ eo poaniañ WAR e gozhni a ra, en desped pe dreist dezhi eta. Ur skouer all a gaver e Meurgorf, dindan pluenn Taldir-Jaffrenou e 1944 : «*Poania a rae herra ma c'helle war ar vicher-se gant an esper e kavje eur wech bennak da doulla*» (**Meurgorf, Poaniañ, 1944**).

Ur skouer damheñvel amañ gant Priel :

*daoust din poanial warno, mentoniezh, lizherjedoniezh, tric'hornventouriezh, ne oan ket evit ar seurt gastach (VAZA 61).*

**pleustriñ war** : *n'o deveze ket ar sonerien nemeur a dra d'ober; diouzh ar beure pleustriñ war ar binvioù e-pad un eur pe ziv (VAZA 115).*

**prederiañ war** : *prederiet am eus a-zevri war gement tra a selle ouzh va beaj ha dimeziñ (VBRU 181).*

Mat eo gouzout e talvez ivez "prederiañ" ober war-dro ub., ul loen bennak pa vez verb tre eeun (hep araogenn) ha gant ar ster-se e c'haller ivez "prederiañ ouzh ub., ouzh ur c'hleñved" (**DEVRI, prederiañ**).

**tevel war** : *gwelloc'h eo ganin tevel war ar skrapadennoù, ar c'hignadennoù ha dreist-holl war an drein em daouarn (VAZA 16).*

Ur stumm hep araogenn (vb kreñv eeun) a gaver ivez e GBAHE gant ar memes ster : «*tevel ur pec'hed, ar wirionez*» da skouer (**GBAHE, tevel**). Tevel DA ub. avat zo reiñ peoc'h da ub., chom hep komz dirakañ (**DEVRI, tevel**). "Tevel a ra ar glav" ivez pa ra un ehan, hag aze e vezer gant ar verb en e stumm gwan.

**tennañ war** : *N'eus ket sentusoc'h paotred eget ar Rusianed, ha stagañ a reas o fuzuilherien da dennañ ken ma foeltre war ar vagig diheñchet (VAZA 167).*

El lodenn d.b. DA hon eus gwelet en deus "tennañ DA" ur ster all.

Ar verboù "skeiñ", "sachañ", "stlepel" lakaet dirak WAR hon eus gwelet er pennad "1. Egor".

### Lavarennoù-verb :

Evel gant verboù, lavarennoù-verb a dalvez da c'heriañ un darempred etre meur a zen, etre tud ha traoù zo, etre meur a dra.

*bennozh da ganfarded ar polis a lammas evel bleizi war vourzh, hag a lakaas o fav war an holl vagad* (VAZA 167)

Adkavout a reer mennozh Jules Gros : «*le fait d'être soumis à quelque chose de désagréable, à une contrainte physique ou morale, à une domination ou à une évaluation*» (TDBP 9).

*e reas ar jeneral gouarnour lakaat ar prenn war ar c'hlañvdi ma voe darbet d'am gwreg mervel ennañ* (VBRU 260)

Disheñvel eo ster "prennañ war ub." pa zo ur pal mirout ouzh an den a vont er-maez (GBAHE I.A.13).

*goude ma voe bet lakaet ar werzh war e vereuri Poull ar Raned, e sachas e skasoù e-maez ar vro* (VAZA 49)

Ouzhpenn d'ar verb "lakaat" a c'haller sevel lavarennoù-verb gantañ. Setu unan gant ar verb "ober" :

*troet en devoa kein ouzh Doue e yaouankiz, ha kemend-all a fae a rae 'ta war e vro "garet" ha war yezh e gavell* (VAZA 22).

Kaoz zo eus Ernest Renan.

### Dic'hour :

Er pennad 6 e vo gwelet skouerioù all gant renadennoù, ouzhpenn d'ar pezh hon eus kinniget amañ. Met a-raok klozañ gant ar pennad-mañ taolomp ur sell ouzh un dra bennak all : WAR a vez implijet da sevel lavarennoù dic'hour ivez (YBBK 636).

Lakaet goude un anv-kadarn pe anv-gwan, implijet e vez e troiennoù zo da verkañ doare pe stad ub. pe udb.

**(bezañ) herr war :** *Ne oant ket hanter-hent pa zeuas en arbenn dezho ur vaouez, herr warni* (VAZA 46).

Herr pe tizh warni, heñvel eo ar ster. Araogennoù all a c'haller ober gante : «*gand herr, herr braz enn-an*» (DBTG, p.290).

**(bezañ) berr war ub. :** *berr e veze warni o pignal gant an diribin* (VAZA 20).

Berr e veze war hec'h anal.

### **(bezañ) skrap war :**

*adal ma krogent da zareviñ, fret ha skrap a veze warno ken ma veze* (VAZA 16).

O komz eus sivi al liorz.

### **(bezañ) tenn war :**

*jistr premier jus da gloukañ ken na vefe tenn war o begel...* (VAZA 110).

«*Lakaat / bezañ tenn war e vegel : manger plein le ventre*» ha «*bezañ laosk war e vegel : avoir le ventre creux*» (DEVRI, Begel, II). N'eo ket gant ar boued solut e vez leun kof an den aze, met heñvel eo ar mennozh gant an evañ. N'eus ket afer a lonkañ avat amañ :

*kement ha ken bihan ma 'z oa tenn warnomp gant ar fent, ha mil aon hor boa rak daoudortañ da c'hoarzhin dirak ar paourkaezh tad-kozh* (VAZA 143).

Kement a skriñ hag a c'hoarzh gante ma teu poan gof dezhe.

Hag evel gant araogennoù all e kaver lavarennoù gant WAR er stumm dibersonel :

*tri bloaz goude, dre giañ warni evel-just, e oan deut da vezañ ofiser* (VAZA 79).

## 5. Dave

Stagell isurzhañ e c'hall bezañ WAR.

*re vil, war a grede dezhañ, e veze graet d'an Aotrou Doue en ilizoù, ha hervezañ re griz holl e oa ar veleien* (VAZA 26)

Ober a ra ar skrivagner dave d'ar pezh a gred d'e c'houeont, ha n'eo ket gwir bater. Ur stumm dic'hour a zo eus *war a grede dezhañ* gant an araogenn DA a zo lakaet enni ar gour. Disheñvel eo er skouer-mañ :

*Da serr-noz, hervez 'gleven, e rae meur a foeter-bro un tammig revrad, met war a gredan, nag an Aotrou Doue, na sant Erwan venniget ne selle re verr an naontek a viz Mae ouzh levez druezus an dud kaezh-se* (VAZA 56).

Er skouer-mañ ivez e tegas an oberour e sell, gant un tamm fent personel.

Savet e vez bepred diouzh ar patrom-mañ. war : araogenn (1), a : rannig-verb (2), grede/gredan : verb displeget.

«*War a" a c'hall talvezout kement ha "hervez ma"*» (YBBK 636).

. «*Le gallois a le même idiotisme : ar a welaf : war a wean – ar a glywaf : war a glevan*» a zispleg Gros e «*WAR à, selon, d'après, suivant*» (TDBP 10).

DIOUZH ivez a c'hall bezañ stagell isurzhiañ, dirak ar rannig-verb a (**GBAHE, diouzh**).

WAR a c'hall ivez ober dave, hep na ve stagell. Favereau : «*la référence*» : «*war o meno*, à leur avis (**GBFF 866**).

WAR a vez implijet da geñveriañ :

*n'am boa nemet **ur bloavezh warnañ*** (VAZA 118),

*gant **daou veudad ouzhpenn war e vent**, kolladenn ar merc'hed e vije bet, met a-drugarez Doue ne veze ket gwel dechet da c'hoari loupenn<sup>22</sup>* (VAZA 160).

Gros : «Sur, en sus de, de plus que» (**TDBP 12**).

Kement-se a gaver en doare kontañ a zo e brezhoneg : "unan warn-ugent", "daou warn-ugent", ma taoler pled ouzh "war" aet da "warn" evel e displegadenn an araogenn : "warnon", "warnout"...

«*Noter aussi l'emploi de **war** dans certaines expressions pour marquer préférence, supériorité*» (Vallée, 1926, p197) hag e ro Vallée skouerioù all evel "prizout war", «*estimer plus que*», mettre au-dessus de, ha "talvezout war", «*valoir plus que*». Ha GBAHE : «*(db. an oad, ar vent, an dalvoudegezh) En tu all (d'ub., udb.), muioc'h eget (ub., udb.)*» (**GBAHE, I.C.7**).

Pa reer anv eus ment, amañ :

*lakaet am boa em spered ne drojen ket na zoken **war ledander un ivin** a-ziwar va roudenn* (VAZA 64)

eo eus muzul an hed zo kaoz. Gwelet war an dachenn-se an araogenn-gevrennek "war-hed" : *digor eo **war hec'h hed** dor ar gambr* (VAZA 46).

*ar benveg end-eeun e oan bet **ur mailh warnañ** e kloerdi Landreger!* (VAZA 78)

Ober a ra *warnañ* dave d'ur benveg. E-keñver ober gant ar benveg-se e oa bet ur mailh. Ur skouer all zo gant "mailh war" a vo kavet er pennad 6.

*N'on ket bete vremañ dare, na tost, da vezañ **war ar poent-se** trec'h d'ar seurt aotronez* (VAZA 77)

---

<sup>22</sup> Loupenn : «*redek ar marc'hed*» (notenn e VAZA)

Anv a ra Priel eus e skritur diaes da lenn, «*ha gallout a rafe renerien Al Liamm testeniañ*», o keñveriañ anezhi gant hini «*ur c'homis noter pe grefier lez-varn*»

Tostaat a c'haller ouzh ar skouer-mañ :

**War ar c'hraf-se da vihanañ e veze va c'henseurted a-du ganin** (VAZA 155).

Ur skouer all gant "war ar c'hraf-se" a vo gwelet er pennad 6.

## 6. Renadennoù all

Er pennadoù a-raok zo bet kinniget skouerioù niverus ma tegase WAR ur renadenn bennak evit implijoù liesseurt. Diouzh meur a stumm e c'haller ober gant WAR : «*war après adjectifs, noms, verbes*» (GBFF 871).

Anv-gwan, doareen :

*Daoust ha goût' ouie zoken petra 'c'hoarie ganti, pe c'hwistim hag akuit a-walc'h e oa war e vicher ?* (VAZA 41)

"Bezañ akuit war udb." a dalvez kement ha "bezañ barrek war udb." (GBAHE, akuit).

Ur renadenn d'an anv-gwan akuit a zegas WAR aze. WAR «*goude doareennoù evel troet, kreñv, taer, h.a. (...) a dalvez d'ober anv eus tuadur bred an dud*» (GBAHE, I.C.2).

Anv :

Kement-se a varregezh a c'hall bezañ merket gant un anv-kadarn a vo degaset ur renadenn dezhañ gant WAR ivez.

*ur mailh war ar skiantoù* (VAZA 13)

*ur mailh war hon yezh* (VAZA 21)

*goude kreisteiz e veze graet skol dimp war ar sonlennadur* (VAZA 79)

WAR a zegas ur renadenn-doareañ da skol. Gallout a reer gwelet se ivez evel ur renadenn-doareañ d'al lavarenn-verb "ober skol".

Verb :

*Na zoken ur vi ne vefe roet war dermen da dud 'zo; hemañ 'vat a ouie touellañ ur marc'hadour pe un ostizez (VAZA 160)*

Ar skouer-mañ a oa bet gwelet dija el lodenn d.b. DA :

*diwar va ali, ez eas raktal en ur stal-levrioù ne oa ket anavezet enni, hag eñ da "brenañ" – war dermen, evel-just! – tri bikol levr war an dro (VAZA 162).*

"War dermen" : «à crédit» (DEVRI, termen, II).

*rom ar vro a zo ken gwenn, ken sklaer ha dour; tamm ebet ne denn war ar moc'haj damc'hell, liv an hañvoez warnañ, a werzher dre amañ dindan an anv-se (VAZA 87)*

Disheñvel ster "tennañ war" diouzh hemañ kinniget er pennad 4. : «stagañ a reas o fuzuilherien da dennañ ken ma foeltre war ar vagig diheñchet» (VAZA 167).

Anv zo aze eus keñveriañ daou evaj, n'eus darempred ebet an eil gant egile, "tennañ war" a zo aze da c'heriañ un hevelebiezh... n'eus ket en degouezh-mañ hervez Priel.

**touiñ war le** : *touiñ a ri war le da vezañ leal da viken en e geñver (VAZA 147)*

*«An adverbou-neuz (pe doare ma komzer ez-strizh) a respont ouzh ar goulenn penaos ? pe c'hoazh e pe zoare ? e pe giz ?» (YBBK 639).*

WAR dirak un ak. a vez implijet da sevel adverbou a verk ar stad, an doare (GBAHE I.C.9) : *Heug am eus betek-henn diouzh ur boultrenn villiget am beze da gas d'an traoñ bep beure war-yun gant ur veskennad Valaga (VAZA 39),*

*Bezit en anv Doue war evezh gant ho skritur! (VAZA 69).*

Gwelet ivez "war-neuñv" ha "war vale" er pennad "1. Egor".

**keit ha m'emaon war ar c'hraf-se** – kemenerien ha dilhad d'ar Sul – marteze gwellañ tra 'oufen ober eo disklêriañ peseurt gwiskamant a veze (VAZA 33)

pa oa a-raok o teskrivañ gwiskamant unan bennak a-raok. Ha pa oa o komz a-raok eus amzer yen Moskov :

*keit ha m'emaon war ar c'hraf-se, n'eus ket nemeur a dud ken kizidik ha me ouzh ar yenion (VAZA 33).*

Gallout a reer "bezañ GANT ur gaoz", a c'hall bezañ meur a graf enni, ha "WAR ur c'hraf", oc'h ober dave d'udb. resis amañ.

Da geñveriañ gant skouer Favereau : «mann da laret war ze» (GBFF 871).

Renadennoù da lavarennoù-verb e tegas WAR ivez

*Siwazh, ranket am boa ober va c'hañv war ar gensonerezh, ur gevrenn a denne kalz re d'ar jedoniezh (VAZA 117)*

Keñveriañ gant "tevel WAR udb." pe "gwaskañ WAR e si" a zo bet gwelet er pennad 4.

## 7. Troiennoù

*Daoust ha ne oa ket ken kaer, gwelet e veze "chal tapis" Landreger war chouk ar merc'hed koeñvet gant al lorc'h ha na blije dezho nemet ardoù war ardoù: itronezed eus kêr na raent ket fae war holl c'hizioù o bro (VAZA 138).*

Ar patrom ak. + WAR + ak. a verk an nested. Evel a weler en ur skouer all, pelloc'h en e eñvorennoù :

**Kornedad war gornedad e vutunen (VBRU 207).**

A-vec'h achu gant ur c'hornedad e vutune unan all. Tost en amzer emañ an traoù amañ, met e diavaez an amzer e c'hall WAR merkañ an nested, evel e-barzh "bern war vern" pe «elec'h m'eo bet douaret e dud koz ha lec'h m'en em gav o c'horfou gwisk war wisk» (DEVRI, II, 1).

Un toullad troiennoù sonn zo savet diwar WAR.

*pa voe bet lidet hec'h obidoù war an ton bras (VAZA 50)*

Merkañ a ra an doare.

*A-zruilhadoù e tirede ar saverien o fri d'ar gousperoù war zigarez skrignal hag ober goap (VAZA 27)*

Merkañ a ra an abeg, gant ar mennozh n'eo ket un abeg mat, evel er skouer-mañ ivez :

*pec'hed e vefe war zigarez un toullad gwenneien herzel ouzh un den yaouank evel dout da gas e studi da benn (VAZA 67).*

*ur gravatenn seiz du, ken moan war vete nebeut hag ul las botez (VAZA 34) (war bouez nebeut)*

Tostaat a c'haller ouzh "war-bouez nebeut". E Devri emañ "war-vete-nebeut" gant barrennouigoù-stagañ, evel troienn-adverb sonn (DEVRI, war-vete-nebeut). Taolomp pled ec'h eo ivez "war-vete", un araogenn-gevrennek : «war e vete» (DEVRI, war-vete, 2), homañ o vezañ savet diwar div araogenn eeun, "war" ha "bete(k)".



*bez' e veze da greisteiz ha d'an noz, n'eo ket gwelien met ur soubenn eus ar c'hentañ, un dailhenn vrav a gig bevin pe leue gant avaloù-douar, fav, piz pe louzoù all diouzh ma veze koulz ar bloaz, ur werennad jistr war ar marc'had ha bara gwenn sof-kont (VAZA 52).*

Kement hag "en tu-hont da se" pe "ouzhpenn" e talvez.

*truez am boa outañ evel-just ha war an dro fent a rae din un tammig (VAZA 65)*

Kaoz zo eus daou ober a c'hoarvez er memes mare : kaout truez hag ober fent. Ingal e ra Priel gant an droienn-se. E GBAHE e kaver an droienn «war un dro : *en ur wezh*». (GBAHE, I.B.1) met n'emañ ket "war an dro". Ne gaver ket "war un dro" e VAZA. Dre ziv wech e teu e VBRU (222, 279) en drilogiezh a-bezh (VAZA, VBRU, AMAH), ha naontek gwech e teu "war an dro" enni.

Ne vez ket merk an amzer pe ar c'hempred bepred gant Priel avat :

*n'eus mann war an douar hag a dalvfe bezañ lakaet kemm-ouzh-kemm gant an dour glas, ken kuñv, ken tev ha ken treuzwelus war an dro, a gousk eno, el lec'h benniget-se (VAZA 127-128).*

Nag amañ e VBRU :

*ur ger hag a dalv war an dro e rusianeg evit "gastaouer ha lonker" (VBRU 304).*

Devri a ginnig : «*war an dro : ensemble, du même coup*» (DEVRI, tro 2 III.A.4).

"War an dro" a c'haller kinnig ar memes talvoudegezh dezhañ ha "hag ivez", pe «à la fois» e galleg, pa vefe kempred en amzer pe get. Hag un afer dibab a-berzh ar skrivagner e seblant bezañ, Priel o kavout gwelloc'h ober gant "war an dro" evit gant "war un dro" hag o deus ar memes ster.

Setu un nebeud troiennoù all n'int ket sonn.

*ret mat e vo da hemañ lemel e dog brav, anez-se e ranko kerzhout war e grabanoù par fello dezhañ diskenn a-ziwar ar pont da vont diwar skouer ar rouanez all betek kambr ar c'haoterioù (VAZA 154)*

Kerzhout pe bezañ war e grabanoù :

*skignet e veze zoken skeudennoù flemmus-tre ma weled warno Fallières war e grabanoù o lipat botoù an impalaer labezet a wad (VAZA 166).*

Troienn-adverb a c'haller treiñ e galleg gant «à quatre pattes» (DEVRI, kraban, III.) Er skouer gentañ eo renadenn-verb hag en eil ec'h eo renadenn d'an anv *Fallières*.

*div wech diouzhtu e fellas din **mont war renk ar saoznegerien** galvet da Bariz (VAZA 117)*

Gallout a reer tostaat "mont war ar renk" ouzh "mont war ar roll", gwelet e-mesk troiennoù ar pennad 1, pe "lakaat e anv war ar roll", nemet ne vezer ket sur da vezañ degemeret pa c'h eer war ar renk.

Ha kement-se a weler gant un droienn all a zeu nebeut war-lerc'h en e skrid :

*div wech **e kouezhas va lipenn war va lapenn** (VAZA 117),*

rak kaoz zo eus ar pezh a zo c'hoarvezet dezhañ goude bezañ aet war ar renk. N'eo ket bet degemeret ha "bezañ dipitet" e talvez "kouezhañ e lipenn war e lapenn".

# Araogennoù deveret

## A-benn

*A-benn un toullad devezhioù, kimiadiñ a reas diouzhimp peurrest ar skouadrenn (VAZA 123).*

«Dirak un ak., un adv. a dalvez da aroueziñ ur mare, ur pennad amzer» e talvez d'ober anv eus un termen (GBAHE, I.A.1).

*A-benn nav miz e paouezis da vezañ un deskard; bez' e oan bremañ ur soner penn-kil-ha-troad, martolod ar c'hentañ renk (VAZA 83).*

Amañ ivez eo lakaet A-BENN dirak ur strollad anv a verk ur pennad amzer, *nav miz*, ha fin ar prantad-se eo an termen a verko an tremen eus ar statud *deskard* d'an hini *soner penn-kil-ha-troad, martolod ar c'hentañ renk*.

En div skouer-mañ e c'haller treiñ A-BENN gant «au bout de» e galleg (DEVRI I. A.5).

*spi am boa da vezañ a-benn pemp bloaz warn-ugent ur c'hentañ-mestr e-maez a garg (VAZA 73)*

Disheñvel eo amañ. N'emañ ket A-BENN dirak padelezh ur prantad met dirak ur poent en amzer : hini e bemp bloaz war-ugent. Gallout a rafe bezañ troet e galleg gant «à mes vingt-cinq ans». Devri : «*au moment de*» (DEVRI, I.A.1). Ar gendestenn, hag ar skiant vat amañ, a heñcho war ster pe ster.

En holl skouerioù-se ec'h eo A-BENN un araogenn amzeriañ.

*a-benn ar fin e oan brudet a-walc'h e Landreger ha tro-war-dro (VAZA 68).*

Kontañ a ra Priel diwar-benn e zarempredoù kentañ gant ar c'hoariva e Landreger : *plijout a raemp d'an arvestourien diredet e-leizh eus kêr hag eus ar parrezioù nesañ, rak netra n'o deveze da baeañ a zispleg a-raok.*

Gallout a ra bezañ gwelet *ar fin* evel fin e abadennoù. Met "a-benn fin" zo ivez un droienn-

adverb savet diwar an araogenn-gevrennek A-BENN.

En holl skouerioù-se, n'he deus ket A-BENN ezhomm eus un araogenn all war he lerc'h. Sellomp ouzh skouerioù all.

*A-drugarez d'am mamm, ampart e oan a-vihanik evit pezh a selle ouzh kanañ ha lenn notennoù; dont a ris 'ta a-benn eus tri pe bevar fennad tennoc'h-tenn (VAZA 78)*

Kaoz zo eus un arnodenn solennadur. EUS zo lakaet da eilaraogenn da A-BENN evit degas ar renadenn *tri pe bevar fennad tennoc'h-tenn*. Ne c'hall ket ober A-BENN hep EUS.

*kement ha ken bihan ma teuas an hini gozh, gant an druez he devoa ouzhin, a-benn d'ober d'an den dirollet se plegañ d'he c'hoant (VAZA 51)<sup>23</sup>*

Gant ar verb "dont a-benn" emeur c'hoazh met amañ eo gant an eilaraogenn DA, ha neket EUS, e rank A-BENN ober evit degas ar renadenn *ober d'an den dirollet se plegañ d'he c'hoant*. Ur strollad-verb eo ar renadenn ha neket ur strollad-anv. Heñvel eo ar ster : «réussir à» (DEVRI, II.B.3).

*deskiñ d'ar vartoloded ha d'an ofiserien o micher gwirion, da lavarout eo; brezeliañ, mont a-benn d'an enebour da zont ha stourm outañ (VAZA 114)*

DA eo ivez a implijer en droienn "mont a-benn d'ub." gant ar ster «affronter quelqu'un, tenir tête à quelqu'un» (Kerrain, 2021, Levrenn 2, 4).

Mat e vo teurel evezh ouzh ar c'hemm ster a zo diouzh an eilaraogennoù implijet, DA pe E, dirak ul lec'h gant "mont a-benn" : «*mont a-benn d'ul lec'h bennak : war-eeun di*» gant DA, met «*mont a-benn en ur c'hleuz, (...), en ur voger : mont da skeiñ e-barzh, percuter, heurter*» gant E(N) (Kerrain, 2021, Levrenn 2, 4). Gwelet al lodennoù diwar-benn DA hag E, gant "mont e(n) kêr, en ti" pa vezer tost, ha Vallée : DA «*pour marquer situation, direction, orientation*» hag E «*pour indiquer qu'il y a mouvement pour aller dans*» (Vallée, 1926, p.192 ha 193). GBAHE a ro ur ster heñvel evit OUZH hag E gant «*mont a-benn en ub., udb. ; mont a-benn ouzh ub., udb. : stekiñ outañ (...)*. An daou garr zo aet a-benn an eil ouzh egile» (GBAHE III.A.1).

E-leizh a dalvoudegezhioù all a vo kavet d.b. A-BENN e TDBP, DEVRI hag e levrenn Mark Kerrain meneget uheloc'h.

---

<sup>23</sup> E VAZA 1975 p49 : *an hini-gozh hag an den dirollet-se gant barrennigoù-stagañ*.

# A-du

Gwelet hon eus gant A-BENN e c'hall an araogenn-se en em harpañ war un araogenn all, graet eilaraogenn anezhi gant Kervella, evit degas ur renadenn bennak. Ma c'hall an araogennoù eeun hon doa gwelet da gentañ er studiadenn-mañ (DA, DINDAN... WAR) kemmeskañ «*gant ar raganv-gour renet dieeun evit ober ur ger hepken*» (YBBK 583), «*kalz araogennoù zo avat ha ne gemmeskont ket rag-eeun gant ur raganv. Degaset e vez hemañ gant un araogenn all ha gant houmañ eo e kemmesk ar raganv*» (YBBK 585). Gant-se, ma ne c'halle ket A-BENN bezañ merket ar gour enni rag-eeun ec'h eo heñvel gant A-DU ha gant an araogennoù a reomp araogennoù deveret anezhe amañ, hag a ginnigomp el lodenn-mañ. Favereau a ra gant «*prépositions dérivées*» (GBFF, p.418-421).

*Tamm ebet ne oa mamm-gozh a-du gant ar re a dabute diwar-benn va micher da zont* (VAZA 63)

Gwelet hon eus meur a eilaraogenn da vont gant A-BENN : DA, EUS, E. Gant GANT e ra A-DU aze.

*a-du ganin e vije bet moarvat war ar c'hraf-se* (VAZA 60)

*mar doc'h a-du ganin trubuilh ebet n'ho po* (VAZA 82)

Er skouerioù-mañ emañ merk ar gour en eilaraogenn GANT, evel displeget gant Kervella.

Gant an hevelep soñj hag ub. e talvez er skouerioù-se, db. an dud (GBAHE I.A.2)

Meur a zoare a zeu gant Priel da bouezañ :

“ Le Moi est haïssable ”, *eme ar C'hallaoued, ha war ar c'hraf-se da vihanañ a-grenn on a-du ganto* (VAZA 11)

*en ur gimiadiñ diouzhin ne voent ket evit tevel e oant a-grenn a-du ganin* (VAZA 72)

Stag eo "a-grenn" ouzh ar verb "bezañ", hag e talvez "da vat".

*a-greiz kalon e oan a-du gantañ* (VAZA 130)

*A-grenn* hag *a-greiz kalon*, pe "a-greiz-kalon" (DEVRI, a-greiz-kalon), zo adverb o-daou, hag e c'haller teurel pled int savet o-daou diwar an araogenn A.

*a-dal ma rae avel a-du, e c'helle va mamm-gozh klevout fraezh-mat cholori ar skolidi o c'hoari goude merenn er porzh bras* (VAZA 40-41)

Evel gant A-BENN e c'hall A-DU bezañ implijet hep na vefe deveret gant un eilaraogenn. Anv-gwan eo amañ, o toareañ *avel*. «*Avel a-du : vent favorable*» (DEVRI, I. B.4). Pelloc'h evit an *avel*, pa vez anv a amzer e talvez «favorable» (DEVRI, I. B.1).

P'emaomp gant keñveriañ A-BENN gant A-DU, teurel pled e c'hall an eil bezañ ster enep egile : «*avel a-benn : vent contraire*» (DEVRI, a-benn, III.C.5)

## A-dreñv

Evel anv-gwan a c'hall bezañ implijet A-DREÑV ivez.

*adal ar Sul war-lerc'h e krogis gant an abadennoù er porzh a-dreñv* (VAZA 82)

*diskenn gant diri ar skeulig a-dreñv* (VAZA 148-149)

Hag amañ, en un droienn implijet e brezhoneg pemdez :

*o fenn a-dreñv ken ledan ha talbenn un dumporell* (VAZA 116)

"Penn a-dreñv" a dalvez kement ha "foñs", diwar-benn tud. Ha Kerrain a ro ivez «*an divjod a-dreñv: ar feskennoù*» (Kerrain, 2021, Levrenn 2, 4).

«*A-wezhioù e vez heuliet araogennoù zo gant da dirak an anvioù-kadarn ; da a vez arveret evel ul liamm etrezo hag ar raganvioù-gour neuze*», hag A-DREÑV zo en o mesk (YIBR, 64).

Gerven a sach evezh an den war «*gwenodenn risklus an eilaraogennoù. E brezhoneg ez eus araogennoù hag a zo un torr-penn, dre ma ne vez ket frammet er memes mod ar pezh a zeu d'o heul hervez ma vent lakaet dirak un anv pe dirak ur raganv : dirak ur raganv e ranker lakaat un araogenn all (eilaraogenn) ouzhpenn*» (GERVEN, B29). Evit A-DREÑV, kement ha lakaat kemm e kinnig «*laosket 'm eus ma oto a-dreñv an ti, laosket 'm eus ma oto a-dreñv dezhañ*» hep DA dirak "an ti" ha gant DA goude. Displegañ a ra ivez penaos «*en un tamm mat a lec'hioù (Leon, Nord-Kerne, Treger, Cf. J. Gros) e vez implijet a-dreñv evel adverb hepken, hag evit an araogenn e klever a-dreg<sup>24</sup>, da skwer : Bi ? Chomet e oa a-dreñv (adverb). E*

<sup>24</sup> E TDBP : «*A-DREG, préposition, derrière*», «*A-DREÑV, adverbe, en arrière (...)* ce mot n'est jamais confondu avec le précédent» (TDBP, p. 137)

*velo ? Sur out n'eo ket chomet a-dreg an ostaleri ? (araogenn).» Kinnig a ra neuze daou stumm da zisplegañ an araogenn «a-dreg» : an eil war patrom a-raok, «adregon, adregout, etc.» hag egile «souezhusoc'h, mes kalz stankoc'h, 'm eus aon, ma vez implijet an anv "ar c'hein" evel ur sort eilaraogenn : a-dreg ma c'hein, a-dreg da gein etc.»*

N'eus bet kavet implij ebet eus "a-drek" pe "a-dreg" gant Priel en eñvorennoù embannet aze. Evit a sell ouzh ar c'hemm a zo lakaet etre A-DREÑV dirak un anv-kadarn ha dirak ur raganv, d.l.e. gant an eilraogenn DA pe hepti, ne vez ket splann gant Priel a ra ar peurliesañ gant DA dirak anvioù-kadarn :

*Dre ar porzhioù hag al liorzhoù **a-dreñv d'an tiez e c'haloupe ar gov Pipi Berrot hag e zarbarerien** (VAZA 42)*

*“Piv an diaoul eo ar vaouez en he sav **a-dreñv d'ar paotr kozh?**” (VAZA 59)*

Ur skouer a gaver pelloc'h en e eñvorennoù hag a glot gant ar pezh a zispleg Gerven :  
*ur c'hozh bank **a-dreñv ar c'hinkladur** (AMAH 497)*

Lakaet eo an anv-kadarn *ar c'hinkladur* diouzhtu da heul *a-dreñv*, hep skoazell DA.

Nebeut e vez implijet A-DREÑV gant raganvioù-gour. E fin e eñvorennoù e kaver ar skouer-mañ :

*an holl a sante **a-dreñv dezho** skeud o c'helenner* (AMAH 485)

E VAZA ne gaver nemet an div skouer-mañ :

*peurzisheñvel e seblante bezañ e wiskamant e-keñver d'e gerent ha d'e jeneraled hag admiraled **en a-dreñv dezhañ** (VAZA 147),*

*un tammig **en a-dreñv dezho** un torkad duked-veur ha jeneraled* (VAZA 145)

hag e weler emeur an div wech gant an droienn "en a-dreñv da", A-DREÑV o vezañ aze anv-kadarn (Kerrain, 2021, Levrenn 2, 5).

E Devri, evit a sell ouzh A-DREÑV evel araogenn, ne gaver skouer ebet gant DA pa vez dirak un anv-kadarn, a-raok an XXvet kantved. Ar skouerioù kinniget gant "a-dreñv da" zo tennet diouzh skridoù deroù an XXvet kantved e bro-Leon.

# A-us

Evel evit A-DREÑV ec'h eo DA an eilaraogenn evit deverañ A-US.

Ar skouer-mañ zo bet kinniget el lodenn diwar-benn DINDAN :

*forzh pegement a drouz hag a reuz a save e-dro hag **a-us dimp** pe dindanomp (VAZA 116)*

*kel lies a vouchouer a bep seurt liv, gant ar c'hatiolennoù gwenn-erc'h o plavañ **a-us dezho** (VAZA 36)*

Amañ e ra dave merk an trede gour lies a zo e *dezho* d'ar mouchoueroù a zo meur a hini anezhe gant *lies a dirak*. Dilhad hengounel a zeskriv Priel, ar gatiolenn o vezañ koef vras Landreger. Hag ar mouchouer n'eo ket danvez da c'hwezhañ e fri : ar «*pezh dilhad tric'horniek a dalvez d'ar merc'hed da c'holeiñ o chouk d'en em ziwall diouzh ar riv*» an hini eo (**GBAHE, mouchouer, 1**).

*ar menez-tan Vesuvio (...) en em skign **a-us dezhañ** ur rod-heol hag a gresk, hag a deuz hag a flammin adarre evel pa vefe kalon ar rannvro o tarlammat goustadik du-hont, e sioulder ar maezioù moredet (VAZA 128)*

An trede gour unan gourel kemmesket gant DA e *dezhañ* a ra aze dave d'ar *menez-tan Vesuvio*.

DA a vez implijet ivez dirak un anv-kadarn :

*Roet e voe din 'ta un higenn hag ul linenn, ha me da chom ur pennad brav ken didrouz hag ur sac'had gwinizh, gant va fenn stouet ganin **a-us d'ar mor**. (VAZA 100)*

*ur menez **a-us d'ar fjord** (VAZA 153)*

*ur c'hozh kastell **a-us d'ur porzhig dister** (VAZA 142)*

*kement a herr e oa war al lestr ma weled noz deiz an tan o flammañ **a-us d'e siminalioù** (VAZA 85)*

A-US zo bet kavet 37 gwech en eñvorennoù Priel, 36 gwech diwarne lakaet dirak DA. Ur wech eo bet kavet en ur stumm all :

*Ne oa ket c'hoazh peursanket hon eor e lec'hid al lenn, ma stagas kanolioù ar c'hreñvlec'h kludet ken uhel **a-us kêr** da dennañ a-voleadoù (VAZA 120)*

Un nebeud skouerioù a gaver evel-se e Devri gant A-US : "a-us an nor", "a-us ma fenn" (**DEVRI, a-us, I.1**), hag e GBAHE hag a-gas A-US war-du A-UC'H : "a-uc'h ar siminal"



**(GBAHE, a-uc'h, I.1).**

Adverb e c'hall bezañ A-US ivez, evel e «*eunn ti koz hag e oa enn-han daou bez braz diadraou, ha diou gampr vraz a uz*» tennet eus *Bue sant Ervoan Landreger* skrivet e 1867 (**Devri, a-us, II**) hag e "sellet a-us" «*regarder au dessus de soi*».

E skouer *Bue sant Ervoan e Landreger*, teurel pled diwar dremen ouzh "diadraou" pe "diadraoñ" savet diwar : di + A + traoñ/traou (**Devri, diadraoñ / diadraou**), gant an araogenn A adarre.

Dre vras, nebeutoc'h e vez implijet A-US hep DA memes-tra, diouzh a skriv Kerrain : «*a-us a-wechoù, a-us da peurliesañ (evel e Vallée 211)*», en ur ober dave da c'heriadur Vallée (VALL, p.211). Kement-se a glot gant implij Priel neuze.

An holl araogennoù deveret hon eus kinniget el lodenn-mañ zo araogennoù kevrennek savet diwar an araogenn A. Gwelet hon eus ne reer ket evite gant an hevelep eilaraogenn bepred. Kement-se zo ken gwir all evit araogennoù deveret all, pa vefent araogennoù kevrennek savet diwar A pe diwar araogennoù eeun all.

Niverus-bras int hag ul lodenn anezhe a c'haller kavout e yezhadurioù Kervella (**YBBK 616**), Favereau (**GBFF 769-772**), Hemon (**YBBH 204**), a-hed levr Jules Gros (**TDBP**) hag e levrennoù Mark Kerrain hon eus meneget, paneveken.

# Araogennoù rannadus

M'eo disheñvel an doare ma verker ar gour en araogennoù deveret diouzh an hini ma reer en araogennoù eeun, eo disheñvel c'hoazh ar stumm ma c'hoarvez gant ar re a reomp amañ araogennoù rannadus anezhe : «*an araogennoù-se a zo stummet gant unan eus an araogennoù eeun E, WAR pe DIWAR hag un anv*» (YBBK 587). Kinnig a reomp amañ peder araogenn stummet gant E, WAR pe DIWAR neuze : DIWAR-GOUST, E-TOUEZ, WAR-DRO, WAR-LERC'H. Teurel pled int savet gant un araogenn eeun hag un anv-kadarn (YBBH 202).

## Diwar-goust

*Evit ar pezh a selle ouzh pakañ boued, gant ne vije ket **diwar e goust**, pe evañ ken ma strake, nag e Priel na moarvat neblec'h all ne oa hini ebet eveltañ* (VAZA 108)

Setu sekretour ti-kêr *Job ar Ruzig* deskrivet gant Priel evel unan hag a garge kof sof-kont, kement ken *gwech ebet ne gave ar soubenn na druz na fetis a-walc'h*. Kement-se tout gant ma n'eo ket eñ hennezh a ziyalc'he, ha ne rae ket peogwir e veze o kousket e ti un dintin d'ar skrivagner.

Disheñvel ar jeu gant an den-mañ :

*alies-tre e c'hourc'hemenne d'ar c'homiser diskenn ur chopinad ouzhpenn da gement den war vourzh, hag evel-just **diwar e goust*** (VAZA 142)

Hag e tispleg da heul : *gant se 'ta, ne oa ket ken pizh ha ma krede da ganfarded Pariz.*

*Degouezhout a reas dimp, sonerien ha martoloded, bezañ pedet da brejañ da di Vari C'hlazioù war ur menez a-us d'ar fjord, gwech **diwar-goust ar roue**, gwech a-berzh an ti-kêr* (VAZA 153)

Sammet e oa koust ar pred gant ar roue aze. P'emeur gant ar skouer-se e c'haller gwelet e ra gant un araogenn-gevrennek all ivez, *a-berzh*", gant ar memes ster : orin ar prof (GBAHE, a-

**berzh, 2).** Ne ouestler ket ur pennad a-bezh da "a-berzh" met ur ger a vo diwar he fenn e fin al lodenn-mañ memes-tra.

En teir skouer-se zo anv eus mizioù ub. (**GBAHE I.1**).

En hini diwezhañ zo ur renadenn eus *ar roue*. Met gwelet a reer en div skouer gentañ penaos «*pa vez renadenn ar raganv-gour e vez lakaet ar stumm renet (pe an anv-gwan perc'hennañ) dirak an anv-kadarn*» (**YIBR 66**) : "koust" eo an anv-kadarn, "e" ar raganv-gour hag ober a ra d'ar ger "koust" kemmañ e "goust". Diouzh ma cheñch ar raganv-gour e c'hallo cheñch ar c'hemmadur neuze :

«*Un dakenn laezh livrizh*» emezañ, *ha meur a hini all ouzhpenn, diwar va c'houst, anat da bep hini* (VBRU 321)

«*Laezh-livrizh : lait doux, bourru*» (**DEVRI, laezh-livrizh, I.1**). Implijet amañ gant ur serjant evit komz eus an alkool *Pernod*.

N'emeur ket gant patrom an araogennoù deveret hag a oa : araogenn + eilaraogenn eeun + renadenn, pe araogenn + eilaraogenn eeun kemmesket gant ar gour.

Emeur gant ar patrom-mañ : araogenn eeun + raganv-gour perc'hennañ + anv-kadarn. «*Pa vez lakaet an araogennoù-se dirak ur raganv-gour, e tistrann an araogenn wirion diouzh an anv, hag e vez merket ar gour gant an ANV-GWAN PERC'HENNAN lakaet dirak an anv-se*» (**YBBK 587**).

*Setu-me diboaniet diwar-goust nebeut a dra, war-dro un ugent realad gwerzh butun* (VBRU 209).

Aze n'eo ket lakaet DIWAR-GOUST dirak an hini a samm ar c'houst : dirak live ar c'houst eo, *nebeut a dra*. E GBAHE e kaver evit hon araogenn ar ster (db. an traoù) «*dre dennañ gounid eus (udb.)*. Deuet eo pinvidik diwar-goust an arc'hant : *dre dennañ gounid eus e arc'hant*» (**GBAHE, II. B**).

"Farsal pe c'hoarzhin diwar-goust ub." a c'haller ivez hag e talvezo DIWAR-GOUST kement ha DIWAR-BENN pe WAR. Pelloc'h evit un afer mizoù e c'hall bezañ mennozh an noazout. «*Aux dépens de*» a gaver evit DIWAR-GOUST e Devri (**DEVRI, I**). GBAHE a ro skouerioù "brezeliañ diwar-goust ub.", «*graet en deus an dra-se diwar-goust e zevezh : lakaet en deus e amzer d'ober an dra-se e lec'h labourat war e vicher*» (**GBAHE, II.1**).

# E-touez

E plas ar stumm E-TOUEZ e kaver ivez e brezhoneg ar stummoù E-TOUESK hag E-MESK (TDBP, p.192-193). E-TOUESK n'eo ket bet kavet e VAZA, er stumm-se pe er stumm merket ar gour enni. E-MESK en em gav meur a wech dindan bluenn Priel, met gant ar gour kemmesket ne gaver nemet "en o mesk" en e eñvorennoù klok. Gant-se e vo kinniget amañ skouerioù eus ar stumm E-TOUEZ en deus ar memes ster hag ar re all : «*parmi*» (DEVRI, e-touez / e-touezh).

*Bez' e oa e-touez ar sonerien tud na zisplijent tamm ebet din* ((VAZA 129)

Evel gant DIWAR-GOUST eo lakaet an araogenn-gevrennek dirak ar renadenn, *ar sonerien amañ*.

Hag evit merkañ ar gour e reer diouzh ar memes doare hag evit an araogennoù rannadus all : «*rannet e vezont, ha dirak an anv-kadarn e vez lakaet ur raganv-gour-perc'hennañ*» (YBBH 202) evel er skouerioù da-heul.

*evel-just hini en hon touez ne oa na kar na par da Rothschild na da Vanderbilt* (VAZA 122)

*Dont a rae ivez da brejañ e straed Aiguillon darn eus va c'henseurted sonerien, hag en o zouez ar c'harter-mestr Victor Savigny, ur c'heneil eus Pariz* (VAZA 160)

Amañ ivez e weler e c'hall dont ur c'hemmadur diouzh an dro, hag er skouer-mañ "touez" zo lakaet d'empred e zouez gant "o" lakaet dirakañ.

Danvez pleustriñ war ar c'hemmadurioù a zo gant an araogennoù.

Mat eo teurel pled ouzh un dra bennak all. DIWAR-GOUST hon eus kinniget a-raok a c'hall kemmeskañ gant an holl c'hourioù, gourel, benel, unan, liester : diwar ma c'houst, diwar da goust, diwar e goust , diwar he c'houst...

Abalamour d'e ster, E-TOUEZ ne c'hall en ober nemet gant gourioù lies : "en hon touez", "en ho touez" hag "en o zouez" neuze.

Daoust ma n'eo ket bet kavet ar stumm-mañ gant Priel e c'haller ivez menegiñ evezhiadenn Kervella memes-tra : «*bez' e c'heller lavarout ivez : en un douez, en ur gichen, an daou anv gwregel TOUEZ ha KICHEN o vezañ anavaezet hepken el lavarenn-se*» (YBBK 541).

Amañ n'eo ket liester an anv-kadarn a zo lakaet da renadenn dirak E-TOUEZ, evel ma oa e skouer kentañ ar pennad-mañ, met meur a zen a zo e-barzh *ar strollad* evel-just :

*pa veze graet anv dioutañ e-touez ar strollad ne veze klevet nemet Tad-kozh ac'hann ha Tad-kozh alesont (VAZA 142)*

Kaoz zo aze eus Fallières, prezidant ar Republik d'ar c'houlz-se, a oa deuet mat gant ar vartoloded diouzh a zispleg Priel. Er skouer-mañ, dre astenn, e c'hall bezañ roet talvoudegezh GANT da E-TOUEZ (GBAHE, 3).

## War-dro

*Pebezh levenez eta a darzhas en hor c'hreiz pa glevjomp e talvez ur mil reis war dro dek real en holl d'an holl (VAZA 122)*

"Tost da vat" e talvez hon araogenn-gevrennek amañ (GBAHE I.C). Devri : «(en plt d'un nombre, d'une quantité) À peu près, environ» (DEVRI, I.C.2).

Heñvel eo er skouer-mañ p'emeur war tachenn an amzer :

*ur gwaz yaouank a-walc'h, war dro tregont vloaz (VAZA 124)*

A c'haller keñveriañ gant skouer GBAHE «*Ur paotr seitek vloaz pe war-dro*» m'emañ WAR-DRO e stumm adverb avat : gant "war-bouez nebeut" e c'hallfe bezañ erlec'hiet (GBAHE II.B) pe gant "war-vete-nebeut" hon eus gwelet el lodenn d.b. an araogenn WAR.

Ma kaver WAR-DRO dirak an oad e c'hall bezañ kerkoulz all dirak an eur ivez : "war-dro pet eur" (TDBP, p.276). Ha kement-se a c'hall bezañ astennet da dachennoù all, o vezañ WAR-DRO, goude anvioù-kadarn, un «*termen a dalvez da c'heriañ ar pezh a denn an ober dezhañ. Paeet en deus an dispignoù war-dro an ti : an dispignoù a denn d'an ti*» (GBAHE I.D.3).

*daou zeskard a dlee a-hed ur sizhun ober war-dro ar re all ouzh taol : degas ar boued, ar bara, ar gwin, skaotañ traoù merenn pe goan, hag all (VAZA 79)*

An droienn "ober war-dro ub., udb." he deus ar ster "plediñ gantañ" (GBAHE I.D.1).

Ingal e teu en eñvorennoù Priel, hag aliesoc'h pa vez anv a yec'hed, prederiañ :

*Kozh, kalz re gozh e oa an aotrou Gwezenneg, ar mezeg a rae war he zro (VAZA 41)*

*Evit pezh a selle ouzh an admiral, gwech ebet ne lakeas troad e-maez e gambroù (...) : klañv 'oa, emezo, hag e wreg oc'h ober war e dro. (VAZA 95)*

Gwelet hon eus penaos e vez rannet an araogennoù rannadus evit lakaat ar raganv-gour

perc'hennañ e-kreiz, ha n'eur ket souezhet e vefe graet diouzh an doare-mañ amañ ivez gant WAR-DRO savet diwar araogenn eeun + anv-kadarn, rannet e WAR E DRO : araogenn eeun + raganv-gour-perc'hennañ + anv-kadarn, kemmet diouzh an dro.

*den ne oar da be vare e teuio war e dro al laer diarc'hen ma reer dioutañ an Ankoù* (VAZA 128)

Er memes lec'h e ro GBAHE "ober" koulz ha "dont", dirak "war-dro ub., udb.", evit ar ster : «*e brederiañ, e dresañ*» (GBAHE I.D.2). N'eo ket eus se zo kaoz amañ evel-just, pa zo anv eus *an Ankoù*. Kavout a reer ivez e GBAHE «*dont war-dro ub., udb. : e zaremprediñ*» (GBAHE I.A.3) ha na glot ket tre kennebeut all. Kerrain avat a astenn ster "ober war-dro ub., udb." da droiennoù verb all : «*bezañ, ober, mont, dont war-dro ub. pe udb: plediñ gantañ*». Kerrain, 2018, Levrenn 13, p.8). Dre skeudenn e c'haller kompren e pledo an Ankoù gant an den... E Devri e kaver ivez an droienn-adverb : «*mont war-dro : s'approcher*» (DEVRI, III.5). Ha pa vefe araogenn en hon skouer, ha gant ar verb "dont" e plas "mont" e c'haller soñjal er skeudenn-se ivez.

E stumm adverb, dres, e kaver "war-dro" pe "war dro" ingal dindan bluenn Priel. Peadra zo da gaout douetañ war ar fed e vefe sklaer an traoù e-keñver ober gant ar varrennig-stagañ pe get, amañ ivez. Daoust ha distabil e oa gant Priel dre skrid ? Daoust hag an embanner eo en deus degaset cheñchamantoù, ha diwar-se, daoust hag ar memes reolenn zo bet gantañ bepred pe uioù-koug a vije chomet ? Ret e vije bet lakaat an dorn war skridoù orin Priel evit reiñ ur respont asur, met n'eus ket bet gallet gwelet anezhe.

*tud e-leizh eus ar parrezioù war dro ha zoken eus ar Roc'h* (VAZA 75)

Anv-gwan *parrezioù* eo *war dro* amañ, evel en «*ar broioù war-dro*» (Kerrain, 2018, Levrenn 13, p.9).

Evel adverb e kaver WAR-DRO meur a wech en droienn-adverb "bezañ war-dro".

*Un deiz bennak, o vezañ ne ouie ket e oan me war dro, e tegouezhas din he c'hlevout o klemm evel-henn: "Mamm gaezh," emezi, "panevet d'am faotr bihan, biken ne chomfen gant hennezh!"* (VAZA 50)

Kontañ a ra ar skrivagner ar pezh en deus klevet digant e vamm a rae meneg eus e dad, pa oahi o soñjal ne vije ket klevet ar gerioù-se gant ar mab. Tost e oa-eñ avat. Devri : «*ici, dans les environs proches*» (DEVRI, III.4)

*Ha pa zegouezhe da Ganaam bezañ war-dro e gwirionez e hope warnañ ar mammoù : “Sellit òta, erru eo Kanaam a bako ac’hanoc’h en e sac’h!”(VAZA 110-11)*

Ar memes ster a c'hall bezañ amañ pe unan all zoken, resisoc'h, hag a gaver e Devri ivez evit «bezañ war-dro : être en tournée» gant ur skouer dedennus tennet eus *Le Mirouer de la mort* skrivet e 1575, «*An ancaou so voar tro*, tr. "*La mort est en tournée*"»(DEVRI, III.3).

N'eo ket eus an Ankoù zo kaoz amañ met eus un dudenn a rae doan d'ar vugale memes-tra, hag a oa implijet gant ar mammoù pa ne oa ket fur o bugale. Mennozh an droiad a zo degaset gant ar skrivagner ivez pa gomz eus ar c'hlasker bara-se : *Tremen a rae alies e Priel ur c'hlas-ker-bara a rae d'an holl vugale krenañ dirazañ* (VAZA 120).

Gwelet hon ivez "war an dro" ha "war un dro" el lodenn d.b. an araogenn WAR.

## War-lerc'h

*pebezh dudi pa groge tud an eured da vont e-maez an iliz war-lerc'h ar sonerien* (VAZA 35)

An «araogenn a dalvez da c'heriañ an heuliañ» (GBAHE I.A.1).

Sellomp ouzh ar skouer-mañ ma zo kaoz gant Priel eus ur paotr a ouie evañ sof-kont hag ober chervat evit netra (VAZA 160) :

*abred e sante Toto c'hwezh fall gant an amzer, ha skaret kuit e veze bep tro, gwech da Giberen, gwech da Doulon pe Cherbourg, gwech e lec'h all,ha bremañ, tudoù, kit da redek war e lerc'h...* (VAZA 161)

Start e oa redek war e lerc'h rak aet e oa ar paotr Toto ur pennad a oa. Hon araogenn a dalvez aze «à la poursuite» (DEVRI I.B.1).

Div skouer all :

*Met n'aen ket va-unan, tudoù ,ur c'heneil yaouankoc'h egedon a rede war va lerc'h* (VAZA 19)

*Un dro bennak, e teuas war va lerc'h el liorz* (VAZA 19)

Eus ar memes keneil zo kaoz : ur c'hilhog a blijte dezhañ ambroug ar skrivagner da vont d'ar skol, da gentañ, ha betek e liorz goude.

*Bale a ris eus an traoñ d'an nec'h war-lerc'h ur c'hozhiad* (VAZA 130)

WAR-LERC'H a c'hallfe bezañ erlec'hiet gant "da-heul" aze, un araogenn-gevrennek all. En Aiacciu emañ Priel hag e vad a ra eus e vezañs e Korsika evit mont da welet *an ti ma teuas ennañ er bed Napoleon*, diskouezet dezhañ gant ar paotr kozh-se.

"Mont", "dont", "redék", "bale" zo verboù a verk an dilec'hiañ. Ha pa vefe anv eus lec'h eo mat teurel evezh ouzh ar pezh a skriv Mark Kerain e *Le guide du bretonnant*, kuit d'ober fazioù : WAR-LERC'H «*n'est pas composée du mot **lec'h** (lieu) mais de **lerc'h***» (GBMK, p.70).

Gant verboù all e vez implijet ivez :

*pa zegouezh d'an diaoul kamm leuskel ul louf, sed aze moarvat ar flaer a van war e lerc'h*  
(VAZA 126)

Anv a ra a-raok eus seier leun a amann troet hag a zivizont teurel er mor abalamour da c'hwezh ar foeltr a zo gante. Trede gour unan gourel ar raganv *e* a ra dave d'an anv-kadarn *louf*. Jules Gros a ra «*après, derrière, à la suite de*» evit an araogenn WAR-LERC'H (TDBP, p.277) ar pezh a c'hall degas renadennoù doareañ en egor koulz hag en amzer. Un tamm eus an daou zo aze.

*bep tro e vane war hol lerc'h al lodenn vrasañ eus ar bitailh kinniget dimp, rak gwell-zebre-rien eo an dud dre ma pellaer war-du an Hanternoz* (VAZA 153)

Ne oant ket evit ar boued kinniget dezhe abalamour m'eo kustum tud an Hanternoz da zebrñ muioc'h evite a zispleg Priel, ha gant se e veze kalz war an daol. Gwelet GBAHE gant ar verb "chom", dre skeudenn : «*chom war-lerc'h (ub., udb.) : na vezañ kaset gantañ, na mont gantañ*» (GBAHE I.C.3). Aze, ne veze ket kaset pep tra d'an traoñ gante.

En div skouer diwezhañ gant Priel ec'h eo udb. a chom war-lerc'h, met ub. a c'hall war-lerc'h ivez : «*chomet on war-lerc'h an tren : c'hwitet em eus sevel ennañ*» (GBAHE I.C.3) ha Devri : «*louper, rater*» (Devri I.B.2).

*ken foulet ha yer o pakañ buzhug war-lerc'h un arar* (VAZA 166)

Kement hag "a-dreñv" e talvez WAR-LERC'H aze (GBAHE I.A.2).

*ar paourkaezh merzherien, ar c'hezeg o sachañ war o lerc'h o bouzelloù* (VAZA 93)

Deskriavañ a ra hon skrivagner ur redadeg tirvi, *un dra a zedenn kement a dud koulz e Bro-Spagn hag en he zrevadennoù gwechall en Amerika ar C'hreisteiz* (VAZA 92-93). An tirvi eo a ra *paourkaezh merzherien* anezhe, ha gant kezeg e veze kaset o c'horfoù pelloc'h. «*Sachañ udb war e lerc'h, tirer sur qqc, tracter qqc*» (Kerrain, 2018, levrenn 13, p.19).

*gant pep hini e veze graet diouti "Soaz Sapeur", dre ma 'z oa bet gwechall he zad "Sapeur"*



*o vrezeliañ n'ouzon ket pelec'h an diaoul war-lerc'h Napoleon kozh* (VAZA 15)

Ne verk ket WAR-LERC'H an amzer amañ : tad Soaz Sapeur, d.l.e. tad-kuñv Jarl Priel en doa brezeliet da vare *Napoleon kozh*. Skeudenn penn an arme a zle bezañ aze, gant ar soudard o vezeliañ a-dreñv en ur mod, ha pa ne vefe ket a-dreñv en ur mod fizikel, o vezañ ma chome gwechall, koulz ha ma reont bremañ, ar pennoù bras e diavaez an dachenn emgann.

Gwelet hon eus e c'hall WAR-LERC'H degas renadennoù-doareañ da verboù liesseurt. Estroc'h evit verboù e c'hall doareañ.

*P'edo hor bag o tistokañ diouzh al lestr war-lerc'h hini an admiral* (VAZA 124)

Aze eo *al lestr* a zo doareet : WAR-LERC'H zo un araogenn liammet outi ha neket ouzh ar verb *distokañ*.

War ar memes patrom met gant ar raganvioù "eben" hag "egile" liammet ouzh an anv-gwan "eil" :

*ur regennad bigi an eil war-lerc'h eben* (126)

A c'hallfe bezañ troet e galleg gant «les uns à la suite des autres». Hag en ur skouer hon eus gwelet en ul lodenn all :

*pleustradegoù a bep seurt, da skouer: tennañ war listri kozh, kerreg en donvor, pe razelloù stlejet gant bigi dre dan, leviata, treiñ war du-mañ-tu, ha tu evit tu, ar skouadrenn a-bezh pe dre rann listri an eil war-lerc'h egile* (VAZA 114)

"An eil GOUDE egile" a c'haller lavaret ivez : «*tour à tour*» (DEVRI, eil 1. I.3).

Ouzhpenn da vezañ araogenn e c'hall WAR-LERC'H bezañ adverb pe talvezout da sevel troiennoù-adverb.

*Ar Merc'her war-lerc'h, e c'hoarvezas din klevout er marc'had an amann ur gemenez eus Priel* (VAZA 58)

Merkañ an amzer a ra. Ur garg a anv-gwan en deus WAR-LERC'H aze (Kerrain, 2018, le-vrenn 13, p.22).

*An deiz war-lerc'h da eizh eur e tigoras dirazomp dor vras skol ar fourrierien* (VAZA 77)

Ur renadenn doareañ stag ouzh an droienn-adverb *an deiz war-lerc'h*<sup>25</sup>, zo lakaet d'he heul da resisaat an eur, *eizh eur*; ha degaset eo gant an araogenn DA.

*goulennet e voe diganimp an deiz war-lerc'h goude kreisteiz piv a felle dezhañ lakaat e anv war roll ar vachelourien da zont* (VAZA 66)

Gant un araogenn all, GOUDE, eo degaset ar renadenn.

---

<sup>25</sup> Gant "an deiz war-lerc'h" hag "en deiz war-lerc'h" e c'haller ober (DEVRI, II.A.3).

*An deiz war-lerc'h beure mat e tifloupas eus pevar c'horn ar vro, ha dreist-holl eus Penn-ar-Bed, tolpadou gwazed a-wellforzh (VAZA 57)*

Ar pred amzer, *beure*, zo lakaet diouzhtu goude *an deiz war-lerc'h* amañ, hep araogenn na ger all ebet. Ur stumm all, disheñvel, zo amañ :

*Kerkent hag echu an abadenn-se, netra n'hon deveze d'ober betek an deiz war-lerc'h ar beure.* (VAZA 80)

Ar ger *ar* a zeu diwar "a'r" : "ag ar" pe "eus ar".

Adverb eo WAR-LERC'H amañ, padal gant "an deiz war-lerc'h Nedeleg" e vefe araogenn.

Gant Jules Gros e kaver skouerioù a verk an abeg ivez : «*Me ne zebran ket a granked : me a vez sammet war o lerh*». (TDBP, **War-lerh**). Ha WAR-LERC'H a c'hall geriañ ar pezh a zo bet en udb. evel e-barzh "ur varriken war-lerc'h sistr" pe «*ar park-mañ a zo war-lerh kerh, dans ce champ-ci il y a eu de l'avoine*».

Un nebeud araogennoù-kevrennek hepken zo bet kinniget diwar un toullad mat a zo e brezhoneg, savet diwar an araogenn WAR, "war-c'horre", "war-benn", "war-gaout" (TDBP, **War, 17**) pe diwar re all evel E, "e-kichen", "e-kreiz" (GBFF 777) ha DIWAR, evel "diwar-benn", "diwar-lerc'h". Un nebeud araogennoù rannadus all a zo, savet diwar A (GBFF 775). «*An araogennoù o kregiñ gant A a gemmesk gant ar gerioù perc'hennañ en un doare luzietoc'h*» (YBBK 588). "A-berzh" a c'haller menegiñ. Nebeut a zanvez a zo e VAZA gant "a-berzh", ha div skouer hepken a gaver gant an araogenn-se merket ar gour enni, o-div gant an trede gour unan gourel, "eus e berzh" : *kinnig a reas din zoken e yalc'h-vutun da gouchañ va c'horn: ur vadelezh dreist-muzul eus e berzh, hervez e sekretour* (VAZA 81) ha *kemennet en devoa 'ta d'e vab, ar priñs danvez-roue, da zegemer Fallières eus e berzh* (VAZA 150). Gwelet a reer e teu ar raganv-gour e-kreiz an araogenn met A en deroù a zeu da vezañ EUS. «*A-wechoù avat e vez kemmet an araogenn eeun ha lakaet un all en he lec'h : a-berzh, eus va ferzh ; a-zivout, war va divout*» (YBBH, p.120). Evit homañ diwezhañ e c'hall bezañ DIWAR zoken : «*komz a rae diwar o divoud*» : kement-se a c'hoarvez pa vez «*kollet gant an araogenn A he zalvoudegezgh strizh*» (YBBK 588) hag a zo evel evit EUS, «*an orin, an dilec'hiañ pa veneger al lec'h-orin*» (YBBK 592).

Gant DA e c'haller ober meneg eus "da-heul" ivez (GBMK, p.53).

A-raok klozañ gant ar pezh a sell ouzh an araogennoù-kevrennek e vo mat sachañ evezh an dud a zo o teskiñ ar yezh gant ar pezh a zo da-heul.

Lod a c'hall bezañ araogenn pe adverb diouzh an dro, an dra-se hon eus gwelet, gant WAR-DRO da skouer.

Gerioù all savet gant "WAR-" n'hallont bezañ nemet araogenn, WAR-DU da skouer, pe n'hallont bezañ nemet adverb, evel WAR-RAOK, ha pa vefe anv ar c'hlub mell-droad *War-raok Gwengamp*. Evit WAR, paneveken, e vo kavet skouerioù all e yezhadur Kervella a ra adverboù doareañ anezhe, evel "war-eeun", "war-gil", "war-sav" (**YBBK 541 k**) hag e levrioù all a reomp meneg anezhe ingal en hon studiadenn.

Ha re all a zo araogennoù-kevrennek a c'hall mont en-dro diouzh an daou stumm : deveret pe rannadus. Evel-se emañ kont gant WAR-DU : «*an araogennoù etrezek, etramek, war-du a vez lakaet EN da eilaraogenn dezho dirak ur raganv : dont a rae etrezek ennañ*» (**YBBK 621**) ha (**YBBK 585-587**).

# Klozadur

**Da betra lenn skridoù kozh ?** a lavar lod. Ma ranker derc'hel da broduiñ e brezhoneg, hag ober ma vo danvez modern evit ar yaouankizoù, hag evit ar re all, da zedennañ d'al lenn e brezhoneg, hon eus gant studi yezh Priel ur respont d'ar goulenn-se. E 1934 e oa bet graet meuleudi d'ur skrivagner all, Jakez Riou, gant Roparz Hemon : *«Na truilhek evel brezoneg darn eus ar skrivagnerien-bobl, na reut evel darn eus ar skrivagnerien "uhel". Eur yez d'ez hec'h-unan, stag-mat ouz yez ar werin, adstummet avat gant ijin nerzus an arzour»* (**RIOU, 1934, kentskrid**). Kement-all a c'hallfe bezañ skrivet diwar-benn Jarl Priel. Ha pelloc'h evit se e kaver en eñvorennoù Priel un dachenn beuriñ fonnus evit a sell an araogennoù.

Dibar eo ar yezhoù keltiek gant o araogennoù displeget. War tachennoù all e kaver dibarded ivez, evel gant implij an araogenn WAR da c'heriañ an neuz, al liv, ar blaz, ar c'hleñved, pa oa diouzh spered ar Gelted kozh kement-se evel ur gwiskamant diavaez lakaet war an den. Ha gant ar c'hemm a ranker lakaat etre implij an araogenn DA pe ar verb KAOUT, evit ar berc'henniezh, hag hini an araogenn GANT evit ar pezh a zo dibad, pa ra ar galleg evit kement-se holl gant ar verb «avoir».

Bep a gontell suis zo eus an araogennoù eeun hon eus studiet, gant implijoù liesseurt evit pep hini anezhe. Evezh zo da deurel avat, rak evel evit kement ostilh mat a zo, talvoudous e vint gant ma vo graet gante evit an implij a zere oute. Gant-se e c'hallo marteze hini pe hini tennañ danvez diouzh ar c'hounskrid-mañ evit ober implij anezhañ war tachenn an didaktelezh, ha skoazellañ an danvez brezhonegerezed ha brezhonegerien da zeskiñ hon yezh. Skarzhañ fazioù evel *\*sellet ac'hanon*, hag a glever stank siwazh, pe *\*blev du zo gantañ* (nemet ha kaoz a vefe eus ur berukenn), ma vo graet mat gant ar stummoù a zere : "sellet ouzhin" ha "blev du zo dezhañ"<sup>26</sup>. Diwar-benn an araogennoù e lavar Mark Merrain : *«ces petits mots, en breton comme dans toutes les langues, ont toujours une importance considérable et ne sont jamais d'un abord facile pour le novice. L'utilisation qui en est faite est donc un bon révélateur du degré de maîtrise de la langue»* (**GBMK, p.53**). Gant Jules Gros, en e labour meur diwar-benn an araogennoù, eo sklaer an traoù war ar pezh a c'hall touellañ pe lakaat diaes ar c'hallegerien hag ar gallegerezed pa gomz eus *«l'abîme qui sépare souvent les formes d'expressions de la pensée bretonne de celles de la pensée française et le rôle qui y jouent les*

---



<sup>26</sup> Skouer tennet diouzh fazioù lakaet war wel gant Mark Kerrain e *Le guide du bretonnant* (GBMK, p.64;66).

*prépositions (...). Leur étude est indispensable à quiconque veut connaître parfaitement la langue bretonne» (TDBP, p.124).*

Panevet d'un nebeudig traoù evel ar meskañ a c'hall bezañ etre EUS, OUZH ha DIOUZH e degouezhioù zo dindan pluenn Priel, dister e skoaz an niver bras a skouerioù hon eus studiet, e weler e klot ar pezh a lenner digant hon skrivagner gant ar pezh a gaver er yezhadurioù hag el lennegezh a bled gant an araogennoù. «*S'agissant de structures fondamentales et pérennes de la langue bretonne (et du celtique en général), il est frappant de constater combien les divergences dialectales sont ici minimales*» a zispleg Favereau en e bennad digeriñ diwar-benn an araogennoù (**GBFF 729**). Gant Priel hag a ra war an dro gant ur yezh yac'h hag un implij stank eus an araogennoù hon eus neuze danvez prizius da studiañ an dachenn-se, ha da wellaat e anaoudegezh eus ar brezhoneg hag e varregezh d'ober gantañ.

# Stagadenn

Golo kaier ar pezh c'hoari *En-dro da Vari-Sent* liammet gant Priel diwar fiseleenn, ha dindan, reizhadennoù dornskrivet gantañ :





Deroù ar pezh, diwar skriverez Jarl Priel, gant reizhadennou.

*Thaliques*

D'ur Breizhad a galon,  
va e'heneil yaouank Ronan Huon.

(Kement-man a e'hoarvezas bez 'e vo prestik tregont vloaz,  
ha marteze biskoazh.)

ar H

Ur gambr, e ti Fanch Kilgarzh, dandost da voure'h Kamlez. En don,  
er c'horn dehou ha stok ouzh ar voger, ur gwele gant stignou hir  
a-us dezhan. Bountet eo al linsellou e lost ar gwele, ha ruzet  
eo ar valenn-biket a-rez ~~ad~~ planchod. War an tu dehou, un nor,  
hag entu all ur prenestr a zaou stalaf. Bez 'ez eus e-kreiz ar  
gambr un daol vras hag endro dezhi ur gador ha div skabell.

Du-man ha du-hont, bez 'ez eus meur a dra a-stlabez : war ur gador,  
e-tal ar gwele, ur votez koad mastaret gant pri melen ; he farez  
a zo dindan ar gwele. Mar an daol, mesk ha mesk, bez 'ez eus ur  
bernig asiedou lous, ur skudell, un irvinenn, ur vozad avalou-  
douar kriz, ur grib, ur e'hozh-pot houarn gant ur gwispon, ha  
me oar ! ... Ouzh ar mogerioù, bez 'ez eus, steket gant tachou-  
botoù pe spilhoù, div pe zeir zaolenn : ur bagad saout o peun  
en ur prad, ul lestr teir-gwern dre lien dindan ur barr-anzer  
hag engann Gravelotte e-pad brezel 70. War an tu dehou ar

prenestr, ar e'halender degaset d'an tiez gant paotr al lizherou  
war-dro deiz kentañ ar bloaz, hag entu all, ur pinsin dour ~~benniget~~  
benniget gant ur bodig beuz kras ha gvenvet. E-kerzh an hanv emomp,  
goude kreisteiz war ar pemdez, merenn a zo paket n'eus ket pell.

*à la  
legne*

Pa sav ar gouel, eman Fanch e korf e roched, ledet war e wele.  
Kilgarzh a zo un denig sioul abaf ha tastermer ; un nebeudig a  
leve en deus ha bevan a ra gant kalz a vec'h diwar e ganvez.  
FANCH (ul levrig en e zorn, o lenn a vouezh uhel). Redek a

↑  
tastermer

# Levrlennadur

- An Here, 2001. *Geriadur Brezhoneg*. Sant-Tonan : An Here.
- BRUGALÉ, Cécile, 2001. An islavarennoù e-barzh oberenn Yeun ar Gow. [Kounskrid Master]. Skol-veur Roazhon 2.
- CHALM, Eugène, 2022. *La grammaire bretonne pour tous*. 5vet embannadur. An Alarc'h Embannadurioù, Sant-Tonan.
- DENIS, Gwendal. 1988. Fanch Eliès-Abeozen (1896-1963) : sa vie, son oeuvre. [Tezenn]. Skol-veur Roazhon 2. <https://theses.fr/1988REN20018>
- ERNAULT, Emile, 2001. *Articles de linguistique bretonne*. Skol, Speied.
- FAVE, Visant, 1998. *Notennou yezadur*. Emgleo Breiz, Brest.
- FAVEREAU, Francis, 2016. Geriadur Meur Francis Favereau. [enlinenn] <https://www.skolvreizh.com/geriadur-meur-francis-favereau/>
- FAVEREAU, Francis, 2018. *Grammaire du breton contemporain - Yezhadur ar brezhoneg a-vremañ*. Skol Vreizh, Chasnais.
- GERVEN, Yann. Kentelioù yezhadur Yann Gerven, [enlinenn] <https://www.reseau-canope.fr/tes/yanngerven/index.php?p=listenn>
- GROS, Jules, 1996. *Le Trésor du breton parlé (Éléments de Stylistique Tégorroise) - Première Partie - Le Langage figuré*. Are embannadur. Emgleo Breiz – Brud Nevez, Brest.
- HEMON, Roparz, 1979. *Yezhadur berr ar brezhoneg*. Al Liamm, Ar Baol.
- HEMON, Roparz, 2000. *Yezhadur istorel ar Brezhoneg*. Roparz Hemon. Lakaet e brezhoneg gant Alan Dipode (titl orin : *A historical Morphology and Syntax of Breton*). Hor Yezh, Sant-Tonan.
- HUPEL, Erwan. 2010. Gwalarn : Histoire d'un mouvement littéraire en Bretagne. [Tezenn]. Skol-veur Roazhon 2. <https://theses.fr/2010REN20026>
- JOUITTEAU, Mélanie. Arbres. Les prépositions. [enlinenn] [https://arbres.iker.cnrs.fr/index.php?title=Les\\_prépositions](https://arbres.iker.cnrs.fr/index.php?title=Les_prépositions)
- KERRAIN, Mark, 2010. *Le guide du bretonnant*. An Amzer embanner, Lassay-Les-Châteaux.
- KERRAIN, Mark, 2017. *An araogennoù e brezhoneg. Levrenn 7. Evit*. Sav-heol, Reuz.
- KERRAIN, Mark, 2018. *An araogennoù e brezhoneg. Levrenn 11. Ouzh, Ouzhpenn.. Evit*. Sav-heol, Reuz
- KERRAIN, Mark. 2018. *An araogennoù e brezhoneg. Levrenn 13. War-benn War-dro War-zu*. Sav-heol, Reuz.
- KERRAIN, Mark, 2021. *An araogennoù e brezhoneg. Levrenn 2. Abalamour, Abaoe, A-barzh, A-benn, ... A-zrivilh*. Sav-heol, Reuz.
- KERVELLA, Frañsez, 1976. *Yezhadur bras ar brezhoneg*. Al Liamm, Staol. (Embannadur kentañ gant Skridoù Breizh e 1947).
- LE BIHAN, Herve, KERVELLA, Divy, 2000. *Geriaoueg ha notennoù yezh Yeun ar Gow*. Hor yezh.
- LE CLERC, 1908. *Grammaire bretonne du dialecte de Tréguier*. Imprimerie-Librairie-Lithographie René Prud'homme, Sant-Brieg.
- LE GLEAU, René, 1983. *Dictionnaire classique Français-Breton*. Al Liamm, Kintin.



- MENARD, Martial, 2012. *Dictionnaire Français-Breton*. Palantines, Vicenza (Italia).
- MENARD, Martial. LE BIHAN, Herve, KERVELLA, Divy. Devri : Le dictionnaire diachronique du breton. [enlinenn] <http://devri.bzh/>
- Meurgorf, Ofis publik ar brezhoneg. Dictionnaire historique du breton. [enlinenn] <https://niverel.brezhoneg.bzh/fr/meurgorf>
- MOAL, Stefan. 2014. Ur studiadenn gant Stefan Moal diwar-benn an oberenn *An Dour endro d'an Inizi* gant Youenn Drezen. [kentel Master 2 "Lennegezh ha kevredigezh" diwar danvez ur brezegenn da geñver an devezh-studi "Douar ha dour" d'ar 05/04/2014]. Skolveur Roazhon 2.
- PRIEL, Jarl, 1975. *Va zammig buhez*. Eil mouladur. Al Liamm, Staol
- PRIEL, Jarl, 2022. *Va zammig buhez. Va buhez e Rusia. Amañ hag ahont*. An Alarc'h embannadurioù, Brest.
- RAOUL, Lukian, 1992. *Geriadur ar skrivagnerien ha yezhourien*. Al Liamm, Kintin.
- RIOU, Jakez, 1934. *Geotenn ar Werc'hez*. Skrid ha Skeudenn, Brest.
- ROUZ, Bernez, 2020. Drezen-Riou-Kerrien : hadenn ar yezh o kellidañ e Bro-Spagn. [enlinenn] <http://www.tresor-breton.bzh/2020/11/21/drezen-riou-kerrien-hadenn-ar-yezh-o-kellidan-e-bro-spagn/>
- VALLEE, Francois. 1926. *La langue bretonne en 40 leçons*, 7vet embannadur. Imprimerie-librairie Prud'homme, Sant-Brieg.
- VALLEE, Francois. 1980. *Grand dictionnaire français – breton suivi du «supplément»*. Avec le concours de E. Ernault & E. Le Roux. Eilvet embannadur. Kevredigezh Vreizhat a sevenadurezh, Sant-Brieg.
- VALLEE, François, 2014. *Dictionnaire du breton du Trégor-Goëlo et de Haute Cornouaille*. SEBILLE KERNAUDOUR Herve (ren.). An Alarc'h.